


Jil EWAN

**AR FEIZ
DRE AR MEIZ**



SKRIDOU KRAVEZEL

**IMBOURC'H
2002**

Jil EWAN

**AR FEIZ
DRE
AR MEIZ**

SKRIDOU KRAVEZEL

**IMBOURC'H
2002**

IMBOURC'H, KELOUENN A STUÐI

Rummad nevez

Niverenn 3/2

Trede bloavezh ha tregont

Cost 2002

αααααααααα

TAOLENN

Blenlavar	p.0
Trugarekadenn Jil Ewan	p.1
Karlavar d'ar skridoù kravezel	p.III
Dennad kentañ	p.V

αααααααααα

Skodenn-vloaz : 60 euro, adal ar bloaz 2003, o reiñ
ar gwir da zegemer bep bloaz peder niverenn a studi
a gant pajennad, peder oberenn stag outo, ha peder
niverenn eus "Kannadig Imbourc'h", da gas da : Y.
Ollivier, 8 leurgêr ar Marchiz, 56 230
Kistredberzh. Priz an stagadenn-mañ : 20 euro.

Kas ar skridoù d'an hevelep chomlec'h evit ar
geloouenn a studi, ha da Yann Mikael, evit ar
"Channadig", 12 straed Rene-Giraud, 44 130, Blaen.

αααααααααα

BLENLAVAR D'AN OBERENN DA HEUL

Emañ Per Even, - diouzh e anv-pluenn *Jil Ewan*, - aozer an oberenn-mañ, o paouez tremen e-kreiz miz Du 2002, goude ur c'hleñved hir, hep bezañ gwelet e labour o tont er-maez.

A-c'houde dibenn ar brezel diwezhañ ez anavezen hor mignon. Hag eñ ganet e Goudelin, e-tal Lanvollon, e bro Oelo, e 1919, e oa bet oberiant en emsav en e gorn-bro adal ar brezel. Hag eñ brezhoneger henvoazel a-vihanik ivez, - ur perzh a zo kollet diwar vremañ, hag abaoe ugent vloaz bennak, moarvat, - e oa dedennet, da gentañ, gant diorreadur ar yezh arnevez ha skiantel, o tennañ ampled evit se eus labourioù Kis-Saded evit ar pep muiañ.

Abaoe deroù ar bloavezhioù seikont e kenlaboure gant ar gelaouenn "*Imbourc'h*" - adal ar bloaz 1973 em boa embannet un droidigezh diwar ar gelc'helenn *Humanæ Vitæ* savet gantañ, - o tegas dezhi pennadoù gouestlet da wirionezioù ar feiz kristen, savet, dres, en ur yezh pinvidik ha resis. El levrenn-mañ enta e vo kavet an darn-vuiañ eus ar pennadoù-se embannet e-barzh *Imbourc'h* abaoe un tregont vloaz bennak.

E 1974 e oa bet moulet ivez er gelaouenn-mañ un oberenn all, a bolitikouriezh ar wech-se, a-zivout kevangevreadelouriezh hag a vo ivez adembannet hep dale, adaozet ha kempennet gant ar skrivagner e mizioù diwezhañ e vuhez.

Emberr, spi hon eus, e ouestlomp un niverenn eus
ar gelaouenn da eñvor ar brogarour kristen-mañ, feal ha
gredus e vezo bet hor c'heneil, Per Even, a-hed e vuhez.

Roet Doue peoc'h ha joa d'e ene, ha ra vimp-ni
kalonekaet gaant e skouer en hor striv da gas pelloc'h an
ervenn boulc'het gantañ evit adsevel ur Vreizh kristen
dre he yezh end-eeun.

Youenn OLIER

&=&=&=&=&=&=&

*Mil Bennozh Doue a lavaran da
Yann Mikael, va c'heneil mat eus Blaen
evit al labour-skannañ dispar en deus kaset da
benn e-pad pell evit reiñ he stumm d'an
oberenn-mañ.*

*Anez d'e vadelezh ha d'an aketusted en
deus degaset gant e labour, e vije bet diaes din
embann va levr.*

Bennozh Doue dezhañ c'hoazh ur wech!

Jil Ewan

Skridoù Kravezel

Raklavar

Gant an oberenn-mañ eo bet fellet ganin plaenaat un nebeud kudennoù diazez o tennañ d'ar gelennadurezh kristen deuet da vezañ estrenoc'h-estren da galz a vrezhonegerion hiziv an deiz. Krefen int hag a zlefe bezañ bet displeget da vihanañ d'ar vrezhonegerion desket a vefe bet barrek gwechall da zegemer digant ar gloer kentelioù-stummañ en ur yezh resis. Siwazh, re lezirek e oa ar veleion, an darn vuiañ anezho, en amzer dremenet, evit plediñ da vat gant yezh Vreizh. Houmañ, chomet yezh al labour war ar maez, oa kalz re skort evit m'o defe an dud gallet tennañ gounid anezhi e sell da zoonaat gwirioneziou ar feiz. Kement ha ken bihan ma n'o deus ar gristenion vrezhoneger dastumet da neuze nep kelennadurezh vastus en o yezh wirion.

Evit ar remziadoù erouez ez eo disheñvel emichañs an traoù, o vezañ ma chomont pell diouzh an Iliz ha, dre se, diouzh pep kelennadurezh kristen, zoken e galleg. Kenderc'hel a ra Spered Doue avat da c'hwezhañ diouzh ma kar ha war neb

a gar. Rak gantañ eo e vez roet ar feiz e gwirionez, neket gant seurt skridoù drezo o-unan. Ha spi am eus e vo gwelet ar vrezhonegerion nevez a vo gavallet gant gwered ar Spered Santel, hag Eñ kanttroer ar c'halonou, oc'h ober o mad eus va skridoù evit endonañ fulenn ar feiz o tiwan en o c'hreiz.

Liesdoare eo endalc'had al levr-mañ, evel ma welor, graet ha maz eo gant pennadoù o tennañ da vuhez Doue, d'ar C'hrist pe d'ar c'herrinou koulz ha da brederiadennoù a bep seurt diwar-benn ar speredelezh.

Un oberenn gouestlet d'ar studi eo avat, ha va brasañ levez e vefe gwelout al lennerion o prizañ ivez ar strivoù am eus dispaket evit herouezañ diorredigezh ar brezhoneg en un domani kalz re zilezet, siwazh, gant lizheradur hon c'helaouennoù.

Jil Ewan



An Diskuliadurezh pe *Emell Doue en Istor an Denelezh*

Sellomp un tamm ouzh istor an denelezh, ha klaskomp hag-eñ ne vije ket un dra bennak o tiskouez en dije Doue keñveriadet ouzh an denion evit komz outo war-eeun.

Arvest an istor denel avat ne vez ket atav gwell hetus da welout, pa ne darzh dirak ho selloù nemet skeudenn pobloù niverus o tianaout an Doue Speredel Unseurt hag Aneil, skeudenn kenelioù o c'horzañ ur vordilh doueed heñvel ouzh an dud, pe c'hoazh, o stouñ dirak sterenoù pe arrizhoù graet gant mein pe goad. Ne welomp enta nemet ur bern tud, hag i divarrek da sevel betek anaoudegezh an Doue gwirion, Hemañ, koulskoude, oc'h erzerc'haat ouzh o foell dre berzh an traoù krouet gantañ.

Bez' e welomp ivez ur vostad kravezioù oc'h ober, lod anezho, gant arlidoù denlazhus pe hudur, war zigarez ur gouloc h da ren ouzh Doue. Hag hiziv an deiz, peseurt arvest a vez o tibunañ bemdez dirak hon daoulagad, mar n'eo ket hini skarennoù ken denlazhus ha biskoazh, hini azeul an arc'hant, an drouknerzh hag al loustoni dindan gement stumm a c'heller empentiñ, - ur gouloc'h hennezh enta o kemer lec'h an hini reizh ha santel bet degaset dimp gant ar C'hrist Jezuz, Hon Salver ?

Diwar-henn e vez peadra, - dres en abeg da c'hwitadenn hañvalus ar vuhez kravezet hiziv an deiz, - d'en em c'houlenn hag-eñ ne vije, marteze, nemet lennegezh hepken arroudennoù ar Bibl oc'h embann e vije deuet Doue da gelenn an dud war-eeun, diwar-bouez un diskuliadurezh graet evit salviñ mab-den. En ur ger, skridoù o tennañ da re

ar Veda, lakaomp, setu pezh a c'hellfe bezañ danvez ar Bibl, ha tra ken.

Da gentañ : c'hwitadenn ar gravez d'ar mare-mañ ne lavar ket e pado, dre m'he deus gouzañvet enkadennoù ken gwazh all war-hed ar c'hantvedoù, hep dezhi mont da get.

Da eil : keñveridigezh ar Veda ouzh ar Bibl ne lavar ket kennebeut e ve heñvel tonkad an eil gelennadurezh ouzh eben. Klaskomp avat gouzout perak, dre sellout pishoc'h c'hoazh ouzh an istor, ouzh buhez Israel gozh gant he darlavaridi, ouzh degont ar C'hrist Jezuz, Hon Salver, hag an Ebestel aet d'e heul, ouzh hini ar verzhherion gristen, ouzh buhez ar feizidi abaoe daou vil vloaz, hag ar sent niverus en o renkoù. Ar pezh a verzhomp, en un doare fraezh, eo ur bern devoudoù strewet war skramm an amzervezh hag o tougen merk un emell bennak eus Doue e par istor an Denelezh.

E penn pellañ an henamzer, e weler, emichañs, pobl an Hebraed, ganti, abaoe Abrac'ham, anaoudegezh anat eus an Doue Speredel hag eus arc'heboù diazezek al Lezenn Divezel aet d'ober an dek gourc'hemenn, ar re-mañ, emezi, deuet dezhi digant Doue e-unan, war-bouez dezhañ *keñveridiñ* ouzh Moizez, Pennvlenier an Hebraed. Hogen, petra oa eus hen vroad an Hebraed, nemet ur boblig dister ha dic'halloud, izel ganti he sevenadurezh e-skoaz hini varzhus pobloù liesdoueat hag arrizhataer an nemorant eus an denelezh... Ur vroadig avat oa anezhi, ha hi o terc'hel start he c'hrog peurliesañ, nemet pa c'hoarveze ganti treiñ kein da Zoue rak neuze, bep taol, e veze trec'het gant ar pobloù all amezek, enebet outi. Kerkent avat ha ma tistroe d'he Doue dindan levezon un Darlavariad bennak, e save Israel ken sonn ha biskoazh en he flom, trec'h-kaer hag e savete war he douar ! Ken ma c'heller lavarout ez eo hemañ da heul, hep mar ebet, merk anatañ emell Doue e buhez an

denion war dir ur vro lavaret : *Israel, dalc'hmat e darempred gant Doue dre hantererezh he Darlavaridi !* Amañ e kaver, evit gwir, doare an Diskuliadurezh fraezh roet gant Doue, ha setu perak e rankomp bremañ gwelout an endalc'h anezhi.

Da gentañ, gloaz don an natur denel bet kollet ganti *he dreistelezh hag he divarvezh dre berzh he fec'hed*, pezh a zo doare hen skrivagner ar Bibl da gomz diwar-benn an denelezh desellet gantañ, en amdroadurezh e c'hrez, evel un nouez hiniadel (Adam), gwasket gant ar pec'hed, hep dezhi gallout dont da vezañ peurvad, - eviti, koutskoude, da vezañ en he donañ, galvet d'ar beurvadelezh, - nemet p'he devo tizhet kaout ar rezid klok a vo ivez he divarvezh. Rak, hervez testeni Israel bepred, ez eo bet krouet Adam, an den "*diouzh derc'henn Doue hag an heñvelidigezh outañ*", pe gentoc'h, hervez kenedc'heriadur an holl stervarnourion hiziv an deiz, "*e-sell diouzh an heñvelidigezh outañ*", pezh a dalv, eme an holl feizonourion ivez, kement hag e-sell diouzh e berzhiadur e *Buhez Doue* e-unan. Hogen, penaos e c'hallfe mab-den, dres mat, diraez hevelep dere gwennvedik hep skoazell, eleze, hep emell Doue adarre ? Ha setu perak emañ Israel o kelenn, ouzhpenn, donedigezh ur Salver diwar dras Abrac'ham ha David, anezho mein-diazev e par ar feiz en Doue gwirion.

Doueveladus eo neuze mab-den, evel ma lavar ar Reizhvriaded gant gwir abeg. Ac'hano doujañs vras ar gristeniezh evit an nouez-den, kalz a-raok nep koaliad evodet eus reizhiadoù andoueat, evel hini ar Riez C'hall.

Gwelout a reomp neuze Darlavaridi evel Izaiaz o tegemenn donedigezh ar Salver rakveneg, hag o reiñ, zoken, *manelioù resis diwar-benn e vuhez hag e varv*. Ha setu ma c'hanas, bevas ha marvas ar C'hrist Jezuz, evel m'o

doa diouganet an Darlavaridi, meur a gantved kent dezhañ dont war an douar.

Tremen a reas Jezuz enta e vuhez e-touez an dud, o pareañ ar glañvourion, o lieskementiñ boued evit an engroez war e dro. Treiñ a reas dour e gwin da geñver un eured, kerzhout war an doureier, azbevañ tud varv, seveniñ burzhudoù brasoc'h eget nep darlaviariad bennak bet o tegemenn e zonedigezh. Ha kelenn a reas ur goaliad o keverdrelinkañ kement dezev ha preder e ve gouest spered an den da vagañ pe da spurmantañ. Hep ket a var, ez eo ar C'hrist ivez *Komz Doue keddenet, ar Gwerv*, evel ma kredas sant Yann ober anezhañ. Ya, Eñ oa, e-touez an denion, *Kefleunder an Diskuliadurezh* chomet evel goloet hag amguzh betek neuze.

Renet en deus ar Gwerv ur vuhez peursantel ha d'an trede deiz war-lerc'h e varv ez eo dasorc'het, evel m'en doa roet d'anaout. Kavet e voe goullou ar bez ma voe gourvezet e gorf, evitañ da vezañ bet serret gant ur pikol maen bras, kostet a zo kaeroc'h, gant milourion. Emziskouez a reas Jezuz da destoù niverus o deus lezet war o lerc'h, diwar-benn an darvoud, skridoù a zo miret ganimp, en o mesk an tri aviel kendremmek ha lizheroù sant Paol, bet skrivet pemp bloaz warn-ugent pe dregont diwezhatoc'h, hervez an enklaskoù rikañ war dachenn an istorouriezh. Rak, re anat eo, n'eo ket e ken berr amzer e vije bet gallet ijinañ ur vojenn o vont ken uhel all dreist da spered mab-den. Merkomp c'hoazh ez eo bet kadarnaet gwirded o lavaredoù gant an ebestel, hag i testoù d'an darvoudoù, war-bouez dezho ren buhezioù santel, ha dreist-holl skuilh o gwad evit kantgadiñ pezh a wedent bezañ gwelet.

Hevelep testoù ne oa ket anezho tud hegreidik un disterañ tamm, rak, e-pad pell e oant chomet hep krediñ e komzoù ar C'hrist.

Baraneion na trezerc'hidi ne oa ket anezho kennebeut, ne veze ganto na kumujenn na letaerezh e-keñver ar vourevion o doa kroaztachtet o mestr, heskinet ma oant ganto ivez, int o-unan.

N'eus anezho enta na lorc'heion na brabañserion pa vezont o tanevellañ pegen amoet, gwan ha trantellus e oant a-raok ar Sulgwenn, ha penaos, adalek neuze, e oant bet treuzneuziet gant nerzh Doue, betek mont da gelenn, gant ken bras mestroni, ar goaliad o doa degemeret, ma n'ergrenent mui na taranoù spontus Lezvarn gravezel Jeruzalem, na garvderioù Gourheizh hollc'halloudek ar Romaned. Hag ar pezh a gelennent ne oa ket ne vern peseurt azesk eeun hag aes en dije gallet n'eus forzh piv imbroudiñ, rak, ken uhel oa pezh a gelenne hevelep tud, hag int anderc'haviant, ma n'o dije ket gallet brasañ prederourion an henamzer, zoken, henn meizout

Seurt kelennadurezh n'eus ket anezhi, koulskoude, unan da loaviñ : n'emañ ket o kinnig ur Salver a vefe ur pennvrezel kantrec'hus, nag ur brenin galloudus, na, kennebeut, ur prederour meur. Ne ginnig nemet ur Salver ganet en un tiegezh distroñs, unan o kelenn gouziadurezh n'en doa ket ranket deskiñ. Ur salver enta e stumm un den bet marvet etre daou laer ouzh ur groaz roman, anezhi mezhusañ benveg boureviañ ar mare-hont, un den, c'hoazh, bet gwerzhet hep abeg ebet a ve reizh, evit magañ kasoni brasañ arc'hveleg an douar, dre berzh laoskentez derc'houezour ar Gourheizh roman e Jeruzalem.

Darvennout a ra neoazh testoù Dasorc'h ar C'hrist ur feiz divrall e gwirionezioù o sevel ken uhel dreist ar poell ma vezont kavet souezhus ha droukskogus, zoken, gant ar yuzevion hag ar baganed. Ouzhpenn ma vezont ivez, gant keverdiblegusted, o c'houlenn digant pep feizad un doare santelezh diaes da bleustriñ, ur santelezh feukus ha, diwar se, darsavus evit speredoù hon amzer, unan o chadennañ

pep droukyoul, o c'houzañv poan, o wallgas anien an den hag e c'hoantoù, ur santetezh, pa lavarín mat, enebet-krenn ouzh buhez ha boazioù ar bed pagan.

Ha setu ma weler :

- An testoù e kont, anezho tud paour ha dic'halloud o kemer penn o hent da vont dre ar bed holl evit e ganttreiñ, evit gouniñv ar vadeziant e kement lec'h ma tremenont ; en ur ger, evit hadañ hevelep santelezh trelankel d'an denelezh.

- Pobl Israel, bet ganti kroaztchet Jezuz, distrujet dezhi kêr Jeruzalem, evel m'henn degemennas ar C'hrist e-unan, ha strewet e kement korn dre ar bed evit kantvedoù, hep ganti, panevet he hennadelezh, na tir, na beli d'he ren, tonkad iskis, hep ket a var, evit un tudad bet dibabet e gwirionez gant Doue !

- Kezar, hollc'halloudek e Roma, o tistignañ heskinerezh diouzh ar garvañ da ziskar an Iliz bet savet gant testoù Dasorc'h ar C'hrist.

- Merzherion dre vilmiliadoù, o haeriñ o feiz hag izili an Iliz niverusoc'h-niverusañ bemdez o kreskiñ, daoust da feulsterioù an heskinerezh. N'o devez ar gristenion galloud ebet, ha, tra souezhus, ne c'hell impalaer Roma netra enep dezho, petra bennak m'emañ ar bed holl dindan e veli !

A zo kaeroc'h : setu bremañ ugent kantvedad maz eo bet savet an Iliz gant Jezuz, ouzh hec'h ober tud ken gwan, ha ken pec'hidik, zoken, maz eus bet gwelet en he fenn eskibion ha betek pibion o reiñ ar skouer fall. Nemet e chom an Iliz divrall atav, daoust da hevelep gwanderioù, hep m'he dije biskoazh troet an disterañ pik diouzh ar gelennadurezh deuet dezhi digant ar C'hrist hag an Ebestel.

Ya, an hevelep koaliadurezh o plavañ uhel a-us da bep poell, an hevelep santelezh trec'h da nerzhioù mab-den eo, - alies dre c'henou tud andellezek - e vez an Iliz, diblegus-kaer, o kelenn dirak ar bed, hep morse kemmañ siseurt en he lavar.

Ouzhpenn maz eus anezhi, diouzh maz eo bet savet gant ar C'hrist, ur c'horf unan, santel hag hollvedel, atav o c'henel sent wirion a vez doujet gant an holl, dre ma vezont o kemer skouer diwar Jezuz hag an Ebestel, dre ma vezont o testeniekaat e kavjont andon o santetezh e tir an Iliz. Lodek int enta, en ur stumm, en Diskuliadurezh douevel, rak, evel ma lavar sant Ambroz : "*Diwar oberoù ar sent eo e teuer da welout ez eo Doue, evit gwir, an hini e vez dezhañ hevelep gwazourion.*"

Ha setu penaos e talc'h Ar Burzhud da vleuniañ e liorz an Iliz !

Berzh a ra kement renad a vez o toujañ an Iliz hag hec'h alioù, tra ma kouezh ar reuz war nep hini bennak a zalc'h d'he heskinañ. Anat eo an dra dimp, tud an ugentvet kantved war e dalaroù, test ha maz omp bet eus koemp herrek an div gevelouriezh naziour ha kevunour, bet an eil ken gwazh hag eben o heskinañ dalc'hidi pep Diskuliadurezh douevel. En amgin, ar groaz, anezhi dismegusañ benveg-arteizhiañ ar veli roman zo deuet da vezañ arouez enebrann ha keheladur, gant uhelidi ha gouvriaded, gant kefredelourion ha gouziaded o stouñ dirazi d'he azeuliñ dre ar bed holl.

Gant gwir abeg emañ neuze Iliz ar C'hrist, anezhi kevangorf ar gristenion bet ha da vezañ, o haeriñ e teu dimp diganti Diskuliadurezh Doue hag e vez-Eñ o komz

ouzhimp, moarvat, diwar-bouez gerioù, hogen kemend-all ivez, diwar-bouez buhez hag oberoù.



Ar Bibl en e Bez

Mammenn hon Feiz Kristen,

Pa brederier war levrioù an Testamant Kozh (A) e kejer gant kalz kudennoù lennegel ha hanezel. Bennozh d'ar studiennoù bet renet diwar-benn ar rizhennoù lennegel (1) a gaver ennañ, e weler anat pegen liesdoare ha pinvidik eo an danvez anezhañ. Ken anat all e vez dimp ivez talvoudegezh lod eus Levrioù an Testamant Kozh evit a sell ouzh hanez an Hebreed. Koulskoude n'eo ket diwar e berzhioù lennegel na hanezel e vefe tu da gretaat an Testamant Kozh, na d'unvaniñ kenetrezo al Levrioù e korf un dastumad graet da vezañ miret. Ar pezh a roas tu da seveniñ unvanded an dastumad ha da reiñ sol d'al Levrioù eo an talvoudoù hag ar ster kravezel, ster ar feiz a gaver enno. Setu pezh o deus kredet e pep mare ar gristenion koulz hag ar Yuzevion.

Netra nemet o vraslenn, zoken, an Testamant Nevez, e weler e chom an Iliz kristen e dalc'h strizh an Testamant Kozh. Troidigezh c'hresianek an Testamant Kozh eo a veze arveret gant ar gristenion, ha frankoc'h 'oa houmañ eget an Destl (2) hebreat bet degemeret e diwezh ar c'hantved kentañ goude Hon Salver. Anavezet mat 'oa an Testamant Kozh gant aozerion an Testamant Nevez. Koulskoude ne vez gant an Testamant Nevez meneg ebet eus Hezra, Nehemia, Kanenn Salomon, Kohelezh nag Ester, ha gant al Levrioù-se, dres, eo e voe kement a drubuilh o kas gouzout ha dleet 'oa o c'hlenkañ e-barzh an Destl. Hogen, diouzh an tu all, e kaved gant an Testamant Nevez arroudoù eus al Levrioù na oant ket bet degemeret gant an Destl hebreat. Restet e vez, da skouer, *Diskuliadur Eliaz* gant I Kor 2,9, Enoch I, 9, gant Lizher Judaz, 15. Pezh a ziskouez e vire an Iliz Veure pep

frankiz e keñver pep destl savelek, petra bennak ma chome an Testamant Kozh, diwar anadurezh, Bibl an Iliz.

Darbenn a reas ar Gristenelezh an Testamant Kozh, ha pa zeuas ar mare da sevel destl ar skridoù kristen, e voe graet div rann anezho ; an Testamant Kozh hag an Testamant Nevez. Ne voe ket aes avat evit lakaat holl renerion an Iliz d'asantiñ d'an diskoulm bet degemeret. Ar brasañ gourzhenebiad e seurt keñver a voe Markion (3). Kalz levezon en doa hemañ, nemet e voe taolet an anaoue warnañ gant Iliz Roma war-dro 144 goude Hon Salver. N'eus tu ebet ken da gaout krog war oberennoù klok Markion, nemet e ouezer kalz diwar-benn e gelennadurezh dre ar pezh a zo bet lavaret en e sigur ha dre arroudoù eus e skridoù bet embannet gant ar re a stourmas outañ. Labourat a reas Markion war an enebadur anataet gant an Abostol Paol etre al Lezenn hag an Aviel, etre ar c'hreud hag ar spered. Diwar-henn e tevarmas Markion, evel bongoa, edo Skritur ar Yuzevion diac'hinel-krenn da hini an Diskuliadur kristen. War roll ar skridoù kristen a zo deuet betek enomp diwar e zorn, e weler ez eo dianzavet-krenn gantañ an Testamant Kozh en e bezh. Moarvat ne lavar ket Markion ne oa diskuliadurezh ebet gant an Testamant Kozh, na kennebeut ne oa ket hemañ unan gwirion. Hogen, evitañ ne oa ket anezhañ un diskuliadurezh-dieubiñ o tont digant Doue evel Tad an Arloz Jezuz-Krist. Pounner e pouezas warnañ levezon an daouegezh hellenat, o haeriñ e oa disheñvel Doue an Testamant Kozh diouzh hini an Testamant Nevez, disteroc'h ma oa hennezh eget Doue an Arloz Jezuz-Krist. E seurt giz e oa daou Zoue, an eil evel krouer ar bed tremeniat ha drouk, egile evel gwarezour, o virout an denion diouzh fallagriczh hevelep bed. Doue ar reizh hag ar Vam eo Doue ar bed-mañ, hag un Doue, tad karantezus, an hini a vez anavezet diwar-bouez ar feiz kristen. Setu m'edo neuze div ziskuliadurezh o stourm an eil ouzh eben. Kalz tabut a voe gant ar c'hudennoù-se hogen dre berzh an anaoue a voe taolet warno, e teuas mennoziou Markion da vezañ sellet evel un disivoud.

N'eo ket dre ma tivizas an Iliz mirout an Testamant Kozh en he Destl Kristen ma voe diluziet pep kudenn evit kelo. Reoù grevus a chome c'hoazh. Degemer an Testamant Kozh a gase, dre heulret, da studiañ an darempredoù etre an daou Destamant, ha diwar se, da dermenañ an doare gwirion da blaenaat an Testamant Kozh. Hogen ken ec'hon eo seurt tachenn ma n'eus ket tu amañ, emichañs, da vont warni. Ne vo graet enta nemet sklaeraat ar c'hrefen o tennañ dezhi.

Ret eo, da gentañ, gwelout e voe degemeret an Testamant Kozh gant an Iliz kristen dre ma krede-hi start e oa deuet ar C'hrist da gefleuniañ ar Skriturioù. Diogelet-kreñv eo gant ar C'hrist e-unan, zoken, ez eo bet deuet, hervez ar Skriturioù, da seveniñ gerioù hevelep Skriturioù. Hag anat eo, diwar lenn *Oberoù an Ebestel a vez o reiñ dimp kentañ danvez-prezeg ha kentañ kiminiadezh an Iliz, edo pouezek lec'h hevelep diogeladenn e kelennadurezh an derou. Dre m'edo neuze ar C'hrist o kefleuniañ an diskuliadur bet roet dindan ar renad kozh e oa ret ivez krediñ edo un ere didorr etre an daou ziskuliadur.*

An hent a gemerjod evit soliañ an darempred etre an eil Kefle hag egile a voe klask gwelout an daveoù diastal d'an Arloz Jezuz Krist e skridoù an Testamant Kozh. Dinodiñ a reas hevelep striverezh dindan daou stumm da blaenaat an Testamant kozh. Diouzh un tu e kaver an doare damegelour (4) na ra tamm forzh ebet eus gwirded hanezel ar pezh a vez danevellet gant an Testamant Kozh, nemet a ro da welout ur skeudenn dre vras eus ar C'hrist, eus an Iliz pe eus buhez ar gristenelezh en ur mare resis. Perzh an Testamant Kozh ned eo ket e dalvoudegezh hanezel an hini eo, hogen *ar ster speredel a gaver ennañ. Seurt doare a c'heller gwelout en e varr uhelañ pa weler, da skouer, penaos eo bet awenet Kanenn Salomon. O vont gant hevelep hent e kreder ivez ez eo ar Werc'hez Vari pe an Iliz an eienenn gloz, an eienenn siellet. Gant sant Paol o teskrivañ treizh hanezel ar Mor Ruz evel badeziant Pobl Israel (I Kor 10, 2), e kaver adarre an hevelep doare da blaenaat ar Bibl.*

Diouzh an tu all e kaver an doare rizhelour (5) o tiogeliñ ez eo an Testamant kozh skeudenn an 'Testamant Nevez. Brasoc'h eo, un tamm, preder seurt doare gant an dachenn hanezel eget maz eo preder egile. Ar gwan avat, amañ adarre, eo ne dalvez ket ar skeudenn kement hag ar pezh maz eo ar skeudenn anezhañ. Pouezek e vez atav an aberzhoù a gaver en Testamant Kozh, nemet e seller ouzh o fouezegezh war-bouez dilezel o zachenn hanezel evit o deveizañ, traken, evel darbaroù o ragaozañ Aberzh ar Groaz. Kejañ a reer gant seurt doare, peurgetket, o lenn al *Lizher d'an Hebreed* maz eo merket mat gantañ an diforc'h a zo etre nevedenn an douar ha nevedenn an neñv, houmañ hep bezañ diwar dom an den (8,5 ; 9,24). Dre ma n'eo ket gwella droet an damegelour da deurel re vras evezh ouzh hanez an Testamant Kozh, nag ouzh disoc'hoù an enklaskoù bet graet evit adkavout ar roudoù anezhañ war e dachenn diles, e kav da lod ned eo ket reizh an doare rizhelour e-keñver an Testamant Kozh. Ha padal e vir hemañ e lec'h hag e bouez e par ar Bibl. Hogen kefridi gantañ pep stervamour zo mestroniañ ster gerioù an Testamant Kozh en o frantad ha war o zachenn diles. Forzh penaos, arabat dezhañ kennebeut enkañ e labour da seurt kefridi nemeti. Ret eo dezhañ c'hoazh klask diskouez ar ster a vez gant e destenn war dachenn ec'honoc'h ar preder war-hed ar c'hantvedoù ha lakaat ivez war-wel levezon hevelep ster war ar speredoù e-doug prantadoù all disheñvel. Keit ha ma vez an Testamant Kozh e kont, an hent nemetañ da vont gantañ d'e studiañ zo sellout ouzh e liammadurezh gant an Testamant Nevez, sev, ouzh hanez ar silvidigezh kristen.

Atav e ranker lakaat ar pouez war an devoud emañ kefridi ar stervamour, pa vez o plediñ gant an Testamant Kozh, klask kompren an dafar anezhañ, sev, evel un diskuliadur digant Doue ha bet roet gantañ d'an denezh en ur prantad ha dre greiz amveziadoù goubarzhel. Ret e vez dezhañ mont d'an Testamant Kozh gant ur spered digor ha darev atav da zegemer kement a gaver ennañ. Ur fazi grevus e vefe evitañ devarn an Testamant

Kozh en e bezh ouzh sklerijenn an Testamant Nevez; ha klask darblegañ rizhoù ar C'hefle Nevez da rizhoù ar C'hefle Kozh. Dlead kentañ pep stervamerezh gwerzh e anv zo lenn an Testamant Kozh war-bouez chom war e dachenn dezhañ, en e saviadelezh, sev, en e *Sitz im Leben*.

Diazezel ha penndalc'hel, zoken, e vez neuze kement studienn ouezoniel ha hanezouriel a vez renet e seurt keñver. Ne c'haller ket deveizañ neges *Levriou an Destl*, na ster an diskuliadur a gaver enno, anez klask gouzout gant petra eo graet e gwirionez, a belec'h ha penaos, e voe savet seurt Levriou, penaos ez int bet klenket en un dastumad, penaos ha perak e voe degemeret hemañ gant an Iliz, penaos e tleer klask kompren an diabezh ha pep tra. Gant ar gudenn ziwezhañ e weler anat ne c'haller ket dispartiañ kefridi ar gouezoniour nag an hanezour diouzh hini an douevoniour. Diouzh un tu all e tleer ivez meizañ ne c'haller ket studi ar c'hudennoù douevoniel mont hep imbourc'h don war ar c'hudennoù gouezoniel ha hanezouriel.

Kefridi an douevoniezh, evit un darn, zo plaenaat al liammadurezh a gaver etre div rann an diskuliadur o tont digant Doue. Ha n'eur ket evit troc'hañ seurt kefridi diouzh kement studienn ouezoniel pe hanezouriel a zo. Moarvat e vez tu da liammañ kalz darvoudoù ha mennoziou o tennañ d'an eil rann ha d'eben ; arabat avat kreizañ hepken war an elfennoù a c'haller liammañ, ha dilezel kement pezh all strewet dre an Testamant Kozh. Ret eo studiañ hemañ evel m'emañ, hag en abeg d'e dalvoudegezh hec'h-unan. Gant ober endhu, e c'haller, goude se, mont war-raok da liammañ ouzh rannoù-diskuliadur o tennañ d'an Testamant Kozh rannoù all a bep seurt o tennañ d'an Testamant Nevez. Hollandiouerus eo ar gefridi-mañ ivez, dre ma vez ur poell-argant o redek etre an daou ziskuliadur hag o kas eus an eil d'egile. An hevelep Doue eo hini an Daou Gefle. Setu perak, pa studier al labour bet graet gantañ en e bezh, dre an eil Gefle hag egile, n'eus ket da vezañ souezhet un disterañ e kavjed an hevelep patromoù ha rizhoù amañ hag ahont. Dont a ra

perzhioù Doue d'ar gouloù, bennozh d'an diskuliadur a ro diwar e benn, eñ e-unan, dre lodennoù disheñvel al Levrioù Santel. Eno dres emañ an diforc'h etre stervamerezh ar Gristenion ha hini ar Yuzevion. Plaenerezh ar re-mañ ne fell dezhañ kaout d'ober nemet gant an Testamant Kozh hep muiken; tra ma klask hini ar Gristenion, diwar endalc'h an Testamant Kozh, eren ster hennezh ouzh an argerzh hollek. Mamenn hon Feiz Kristen eo ar Bibl en e bezh.

Notennoù

(1) "**Rizhenn lennegezhel**" a dalv kement ha "patrom-lennegezh" ; ar varzhoniezh, da skouer, evit a sell ouzh ar Salmoù. Teurel pled ne lavarant ket *lennegezh*, rak ur "rizhenn" ne c'hall ket bezañ lennegezh, hogen "lennegezhel", sev o tennañ da draoù al lennegezh.

(2) **Destl hebreat**. Ster ar ger 'destl' zo 'reol' ("kanôn" e gresianeg), 'reolenn'. Talvout a ra enta da venegiñ hollad skridoù ar Bibl dellezek da vezañ lakaet war roll ar reoù 'reoliek', sev ar skridoù a ranker sellout evel awenet gant Doue. Disheñvel eo an destl hebreat diouzh an hini kristen.

(3) **Markion**. Prederour gresian ha paramantour pinvidik (85-160).

(4) **Damegelour**. "Dameg" a dalv e brezhoneg (diwar ar c'hembraeg) kement hag *allegoria* e gresianeg. An damegelouriezh zo skol ar stervamourion a fell dezho deveizañ skridoù ar Bibl evel un aridennad damegoù, o reiñ ur ster speredel d'al Levrioù santel hep ster istorel ebet.

(5) **Rizhelour**: "Rizh" a dalv, e brezhoneg arnevez, kement ha *tupos* e gresianeg. Ar rizhelouriezh zo skol ar stervamourion a fell dezho deveizañ skridoù ar Bibl war-bouez ober eus an Testamant Kozh rizh hepken, eleze, patrom ha skeudenn, hepken, an Testamant Nevez, hep klask, neoazh, dre bennaenn, gwallegañ ster istorel an Testamant Kozh, evel ma ra an damegelouriezh. Koulskoude ne c'haller ket lavarout ne gaver ket damegelouriezh

tamm pe damm gant ar rizhelouriezh, peogwir e talc'h ivez ar rizhelourion da geal ar *skeudenn* hag ar *sumbolaion* (argel).

Sant Tomaz Akuino zo gantañ tri ger evit menegiñ an doare da blaenaat ar Bibl : 1) *allegoria* o klotañ ouzh damegelouriezh ; 2) *tropologia* ; 3) *anagogia*.

Ster *tropologia* zo « troiennelouriezh », eleze, ur skol-blaenaat o deveizañ ar Bibl adalek an troiennoù (skeudennoù, arouezioù, argeloù) a gaver dre al Levrioù Santel ; studi an troiennoù bible an hini eo. Tech an droiennelourion a vefe derc'hel d'an droienn evel troienn, eleze, derc'hel d'ar ster fetis, hep ken all. Hemañ eo si bras Testoù Jehovah, evel ma oar an holl.

Ster *anagogia* zo « hontrizhelouriezh », eleze, ur skol-blaenaat o deveizañ ar Bibl war-bouez sevel diwar ar rizh fetis d'an hini speredel. Skouer : Jeruzalem desteriet evel *Keoded an Dibabidi*. Hemañ zo doare lod eus an damegelourion a vez techet da vont re bell war dachenn ar speredelaat.

Teurel pled e ran gant *damegelour*, *rizhelour* ha n'eo ket gant *damegour*, *rizhour* evit diskouez ez eus gant ar stervamourion-mañ emzalc'hioù meneget dres gant an trolost *-elour*, eleze, ur meni kealiadurezh o tisochnañ war skolioù-plaenaat disheñvel.

(A) **Testamant Kozh ha Testamant Nevez**. Bez' e c'heller arverañ ivez : "*Hengefle*" ha "*Nevezkefle*", pe "*Hengevamod*" ha "*Nevezkevamod*" ; pe c'hoazh "*Hengeventrac'h*" ha "*Nevezkeventrac'h*", (an daou rumm a dermennoù-mañ o vezañ bet stummet hervez an troiennoù kembraek o klotañ ganto : "*cyfamod*" ha "*cyfathrach*").



An Eztaol-Feiz Diazezek

Gant va studienn gentañ, em boa diskouezet e oa soliegezh diarvar d'un Diskuliadurezh o tont dimp eus perzh un Trehontvoud anvet ganimp Doue. Ma c'heller dezastum ac'hano ez eo heboell krediñ ennañ.

Krediñ avat zo seveniñ un eztaol-feiz, sev un eztaol-glenadiñ ouzh kement a zo bet diskuliet gant Doue, dres en abeg d'e holiegezh ha d' e wiriegezh pa vez o tiskuliañ.

Hogen, tra maz eo anadurezh an ergorenn, war dachenn an eztaol-anaout, an hini a vez an abeg anfreuzadus, d'hon meiz da c'hlenadiñ ouzh ur wirionezenn skiantel bennak, abeg resis hag anforc'hellek hon eztaol-feiz diazezek eo gwiriegezh ha holiegezh Doue e par an Diskuliadurezh, hervez ma lavar dimp Sant Yann (III,33) : *Neb a vez o tegemer e destenabez a vez o kedanaout gwiriegezh Doue*, pe c'hoazh Sant Ambroz : *Komz Doue eo ergorenn hon feiz*. Gant gerioù all, komz Doue eo **hon laka da grediñ** er pezh a vez diskuliet ganti.

Gant hon meiz ez omp deuet da welout e oa heboell krediñ. Ur c'hammed kentañ etrezek dor ar feiz e oa seurt emell meizel. Hogen, mar kredomp d'ar mare-mañ, ez eo dre berzh ur sklerijenn digant Doue oc'h ober dimp krediñ ennañ. Setu perak emañ Jezuz hag e Iliz o kelenn ez eo ar feiz frouezh ur c'hed, ur road gradus digant Doue, ur c'hras, pa lavarin mat, o trelankañ galloud hon natur. Seurt gras a vez stag enta ouzh komz Doue oc'h ober dimp krediñ pa vezomp ouzh re c'hlevout.

Feiz an neb a gred e Jezuz, Mab Doue, anezhañ Alfa hag Omega an Diskuliadurezh douevel, *ne vez ket o tont*, evel

ma lavar dimp adarre Sant Yann (I, 12-13) *eus youl an den, hogen eus Doue hepken.*

Ar feiz zo neuze un eztaol digant honreiz, hemañ sklerijennet gant Doue, dimp da c'hlenadiñ ouzh e gomz. Nemet e vez heboell hag emyoulek seurt eztaol. Heboell e vez, peogwir e tiskouez honreiz dimp ez eo heboell krediñ. Emyoulek e vez ivez, peogwir ez eo un emell meizel e gourc'hemenn honreiz, houmañ durc'haet ouzh Doue evel Pennfinvez.

Amañ avat e talv ar boan ober un tamm displegadenn ouzhpenn.

Pa vez honreiz, war dachenn ar skiant, o tont d'anaout tra pe dra, war bouez dezhañ goubarañ, dezvarn ha poellata, raktal e vez gwelet o c'hlenadiñ outañ en un doare emdarzhek, en abeg d'an anadurezh a bar warnañ. Disheñvel ar gont avat pa vezomp, en abeg d'un destenabez gwerzh he gwarant, o krediñ en un dra na c'hellomp ket anaout drezomp hon-unan, dianat ma vez evidomp. Dre ma ne vez ket anat neuze an ergorenn dezhañ, ne c'hall ket arreiz glenadiñ outi war an taol en un doare emdarzhek. Mar bez restet an dra dimp avat gant un test gwerzh e warant, e teu neuze arreiz da zezvarn ez eo heboell krediñ en e gomz. Hag krog raktal ar reiz ivez diwar se da ziskouez dimp e c'hallfe a-walc'h ur mad bennak, bennozha da destenabez an hentez, bezañ stag evidomp ouzha hevelep anaoudegezh na c'hellomp ket koulskoude diraez drezomp hon-unan.

Evit ategañ va c'hraf, e lavarinn ned on bet biskoazha e Los Angeles. Revoud kêr Los Angeles enta n'eo ket anat evidon tamm ebet, ha n'emañ ket va reiz drezañ e-unan evit glenadiñ ouzha hevelep gwerc'henn. Hogen, dre maz eo stank niver testoù a vez o kemenn din revoud Los Angeles, e kav din ez eo heboell soñjal emañ Los Angeles o revout. Ma teu neuze va reiz, war c'hourc'hemenn va reiz, da haeriñ, evit kel kêr Los Angeles, ez eus anezhi e gririonez.

Liammet eo enta diended pep kredenn ouzha talvoudegezh an testenioù a vez o reiñ sol dezhi. Diended ar reiz dreistnaturel avat a vez o trelankañ pep diended skiantel, diazezet m' emañ war desteni Doue na c'hell faziñ na touellañ.

Bras eo moarvat arc'hwel ar reiz e par an eztaol-feiz. Ha dirak kement darvoud a vez o tiskouez hollc'halloudegezh Doue pa vez-Eñ oc'h ambroug ar C'hrist hag e Iliz, ne c'hall honreiz nemet haeriñ ez eo heboell krediñ en o c'helennadurezh. Dreistdiraez eo avat evit an den ar gwirionezioù a gaver gant seurt kelennadurezh, pa n'o deus evit e reiz tamm anadurezh ebet. Dezhañ reiz da c'hlenadiñ outo, e rank e reiz emellout ha, lusket gant Doue, e c'hall houmañ dougen e reiz da grediñ.

Tu zo bremañ d'ober un deskrivad eus tarzh ha kresk an eztaol-feiz e par an ene. Daou lankad a gaver gantañ evel gant kement gread eyoulek a zo : lankad an dezvennerezh ha lankad an divizerezh.

An dezvennerezh eo ar reiz o treiñ en holl d'an holl etrezek Doue evel Pennfinvez. Renet e vez-hi davetañ gant e c'hras e-skeud un erlusk dreistnaturel o trelankañ pep galloud e par an den. Ha ken bras e vez warni neuze bount ar c'hras, ma ne c'hall nemet c'hoantaat madelezh an diskuliadur douevel ma tenn dezhañ. Hogen ur prof neñvel eo seulabred hevelep dezvennerezh, graet ha maz evit prientiñ an ene da gaout ar reiz. Gouez d'ar skrivagner gall Pascal : *Va c'hlas ne rajes ket, anez dit bezañ va c'havet.*

Diwar seurt dezvennerezh e vezer douget d'ar mennozhañ : krediñ, mar tro e penn Doue diskuliañ. Ha setu ma teu neuze an testenioù a vez o tegas kelennadurezh ar C'hrist hag an Iliz, eleze kelennadurezh ar reiz a vez, da skouer, ur prezegour o kinnig. Ha dre ma vezer, diwar reiz, o klask krediñ, e taoler evezha bras ouzha an neges a glever.

Kregiñ a ra neuze an eil lankad : hini an divizerezh. Gwelout a reer ar reiz oc'h arsellout hag eñ e ve poellus krediñ. Klask a ra gouzout ha gwarantet eo dilested ar gefridi delodet d'ar C'Hrist ha d'an Iliz, dre berzh ar skoazell o tont dezho digant an Hollc'halloudeg. Aet keid-all war an hent, e verzher neuze an abegoù da grediñ oc'h anadiñ, eleze pezh a vez anvet, e yezh ar feizoniezh, abegoù ar gredadusted. Hag o tisoc'hañ gant e zivizerezh, e tezvarn ar reiz, gant devriegezh, ez eo heboell krediñ, pezh a vez anvet dezvarn ar gredadusted. Pelloc'h ez a c'hoazh avat, rak, dre ma vez an ene, diwar neuze, tre dindan grog ar c'hras ha dindan sklerijenn Doue, e tezvarn fraeshoc'h c'hoazh a se ar reiz ha divizout **e rank ar wech-mañ krediñ da vat**, pezh a vez anvet dezvarn ar gredendalc'husted. Pengennet e vez neuze an eztaol-feiz diazezek, atav dre berzh kenemell ar youl hag ar reiz, diouzh un tu, ha, diouzh an tu all, emell gras Doue.



Kenevezouriezh

Dont a ra "kenevezouriezh" diwar an henvrezhonek "kenevez" (difennerezh), degaset war dachenn ar feizoniezh evit envel ar skiant a denn *da zifenn* ar gwirioneziou kristen, dre berzh arguzennoù ar poell nemetken. Krouiñ feiz avat ne c'hall ket ar genevezouriezh ober. N'eus anezhi nemet un hent daviti, rak seurt feiz, evel m'hon eus gwelet endeo, ned eo, e dibenn-dezrann, nemet frouezh labour Doue e diabarzh an ene. Anat eo e c'hall ar Spered-Santel, pa vez o c'hwezhañ lec'h ma kar, tremen dreist da nep arguzenn bennak diazezet war ar genevezouriezh hag enskuilh feiz dreistnaturel e diabarzh an ene, hep skoazell den.

Ar pezh a ra pep kenevezour, avat, eo degas poell an den d'ar gread am eus anvet *dezvarn ar gredadusted*, da geñver ur pennad bet savet ganin (kv. *Imbourc'h*, 307). Gant hevelep dezvarn e tezastumer ez eo heboell krediñ. Hogen dezvarn ar gredadusted hag ar feiz dreistnaturel enskuilhet, - houmañ ziwezhañ oc'h ober d'an ene glenadiñ ouzh ar gwirioneziou diskuliet, en abeg da destenabez Doue *hep ken all*, - ez eus etrezo un islonk a chom dic'haoliadus evit spered mab-den. Rak disheñvel eo ar feiz dreistnaturel diouzh an diogelenn. Denel eo pep diogelenn, tra ma teu ar feiz dreistnaturel digant Doue. "*Ra vo soliet ho feiz*" eme sant Paol, "*n'eo ket war furnez an denion, hogen war c'halloudegezh Doue...*" (I Kor 2-5)

Ret eo neuze anzav n'eus nemet an eneoù rakwelet gant Doue evel barrek da zont da grediñ a gement a vago, e

gwirionez, feiz dreistnaturel e-doug o buhez, daoust, na petra, ma ne baouezo Doue morse da vroudañ pep den da grediñ, rak mennad an Doue-Krouer eo e vefe salvet kement den a zo. "*Doue*," eme dimp sant Yann (3,17) "*n'en deus ket kaset e Vab er bed evit barn ar bed, hogen d'ar bed da vezañ salvet gantañ.*" Ha n'omp ket hep gouzout, abaoe daou vil vloaz, pegen uhel eo bet savet ar priz, war Groaz ar Mab, evit silvidigezh kement den bet, da zont, pe donket dezhañ dont war an douar. Sant Paol, diouzh e du, gant Tim, I 2-4, eo fraezh e gomz ivez e seurt keñver : "*Doue*," emezañ, "*a venn ma vo salvet an holl dud, ha ma teuint d'anaout ar wirionez.*"

Skiant an Abostol, ha netra ken, setu petra eo ar genevezouriezh, klask ha ma ra pep kenevezour kelenn komz Doue bet degaset dimp gant ar C'hrist ha skignet bremañ dre ar bed gant an Iliz.

Ur wech klevet ar gomz gant unan bennak e labour neuze ar c'henevezour d'ober diouzh ma tisoc'ho meiz ar c'hlever war dezvarn ar gredadusted. Henezh eo trevell kentañ an abostol war dachenn ar poell. "Kenevezouriezh diavaezel" a vez graet anezhi e kement ha ma striv da ziorren e spered pep klever an abegoù 'diavaezel', eleze, poellel, da grediñ, war-bouez dezhi klask savelañ dilested kefridi ar C'hrist hag an Iliz. Studiet e vo ganti, diwar se, doare an diouganou hag ar burzhudou, istoregezh buhez ar C'hrist, ha hini an Ebestel Gentañ, talvoudegezh an Avielou, emled ar feiz kristen, doare ar verzherion hag ar sent, kewirded ar bongoalioù, gant komzoù ar C'hrist, ha gant reoù an Ebestel gentañ.

D'an ene avat da vezañ dedennet gant arguzennoù ar genevezouriezh ha da vezañ fedek ouzh an abegoù anezhi, e

rank unan kefreñ en e greiz ar c'hoant da grediñ, magañ youl gant an ezhomm eus sklerijenn Doue, ha diskouez dezhañ e klot an Diskuliadurezh kristen ouzh hevelep ezhomm. Hounnezh, dres, eo kefridi un doare kenevezouriezh all, anvet gant ar feizoniourion "kenevezouriezh diabarzhel" anezhi ur skiant pleustrek o klask an tu da zegas an ene da gaout c'hoant da grediñ.

Da dizhout seurt pal, e ranker, neuze, komz kentoc'h ouzh kalon ar c'hlever, dre ma vez renet ar braz eus an dud, neket gant ar poell, hogen gant an trivli.

An arguzennerezh gwellañ a vo neuze an hini ma vo mesket ennañ tachenn ar genevezouriezh diavaezel gant hini ar genevezouriezh diabarzhel, evel ma vez kont pa studier, da skouer, hanez dall'haned an Aviel (Yann 9). Rak, diwar burzhud ar pare, evel diogelenn o kadarnaat doueded ar C'hrist, e weler ivez feiz an den dall o tarzhañ, pa lavar : "*Anez da henezh (bet ouzh va fareañ) dont eus Doue n'en dije gallet ober seurt ebel*".

Ret eo gouzout, dreist-holl, ez eus ur genevezouriezh arbennik evit pep ene, dre maz eus evit pep unan un hent goubarel d'e gas davit ar feiz. Evit e gavout, e ranker, da gentañ, dizoleiñ elfennoù-gortoz, eleze, kement a zo mat, gwir ha yac'h e don pep ene. Kavet eo bet seurt elfennoù-gortoz gant an Ebestel Gentañ e-touez ar baganed. Intret e oa preder hag iziunadoù kalz pobloù rakkristen gant seurt elfennoù, ha n'omp ket hep gouzout e klaske sant Paol, da skouer, reiñ ar C'hrist d'anaout da baganed Atene, war-bouez dezhañ menegiñ an *Doue Dianav* bet ganto, kaerañ pezh a zo, savet un delwenn dezhañ war ribl unan eus straedoù kêr.

O vont larkoc'h ganti, e c'hello ar c'henevezour komz ivez diwar-benn Doue erouez e don an ene, dre m'emañ eno, evel krouer hollvezel, o reiñ dimp revoud, buhez hag oberiegezh, hervez komz sant Paol, adarre, d'Ateniz, pa lavar : "*Evit gwir, n'emañ ket, Eñ, pell diouzh pep hini ac'hanomp, rak Ennañ e kavomp buhez, lusk ha bezoud*" (Ob. 17, 27-28).

Moarvat, ne oa ket estren kennebeut seurt elfennoù-gortoz da Gelted Walarn Europa, hon gourdadou, pa weler pegen aes ha buan e kengantaezas o Drouized gant beleion an Dreinded Kristen ha gant o c'helennadurezh diwar-benn ar Salver Jezuz, Hemañ ken deglevus e gomzoù d'ar galon vrezhon, pa vez da skouer, oc'h embann, dre Aviel Yann (I, 6) "*Me eo an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez...*" Pe c'hoazh, dre Aviel Mazhev (II, 28 - 30) : "*Deuit davedon, kement hini ac'hanoc'h a zo skuizh hag o plegañ dindan ar bec'h ha me ho tisammo. Kemerit warnoc'h va yev ; deskit diganin ez on kuñv hag uvel, ha c'hwi 'gavo diskuizh d'hoc'h eneoù, rak flour eo va yev ha skañv va bec'h.*"

Ur skiant dreistnaturel e rank pep kenevezouriezh bezañ, unan avat a chom skort ha divastus, dezhi poellelezh ha furnez an diogelennoù degaset da geñver pep avielerezh, o vezañ ma vez brasoc'h dalc'hmat levezon gras Doue war spered an avielidi eget an abegoù meizel kadarnañ o klask dougen da grediñ. Sed a zo bet gwelet mat gant ar skrivagner gall Blaise Pascal, pa gomz diwar-benn "Doue deglevus d'ar galon, naren d'ar poell." Rak diended ar feiz n'he deus netra d'ober gant diended an abegoù da grediñ. Diended ar feiz a zo unan dreistnaturel, o trelankañ pep diended poellel. E gwirionez, skiant Doue hec'h-unan eo a vez roet gant ar feiz, dre berzh ur sklerijenn dreistnaturel enskuilhet ennomp hag a vez o sklaeriañ an ene.

Gras Doue o tevoudañ an eztaol-feiz ne labour ket, evit kelo, *enep*, hogen *dreist da natur an den*, war-bouez hec'h eswelaat ha doujañ outi hep he distrujañ. Mar labourfe enep natur an den, e tistrujfe e rezid, pezh a zo andezevus-krenn pa vez kont eus Doue. Ouzhpenn, ma vefe gwelet an holl feizidi da neuze o c'hlac'hariñ, dre ma ne c'hellfent ket tremen hep merzout, - en ur stumm bennak, o defe kollet o rezid - hogen, daoust hag-eñ ned eo ket ar gin a stader dre ar bed e-touez ar feizidi c'hredusañ ?



Buhez Doue

Goude dimp bezañ studiet Diskuliadurezh Doue koulz hag ar feiz a ra dimp stagañ outi, e klaskimp bremañ gwelout gant petra eo graet endalc'hed hevelep Diskuliadurezh ha, da gentañ, pezh a lavar hounnezh diwar-benn buhez Doue e-unan.

Tostaat a reer ouzh keal Doue p'en merzher evel ar Boud, ha gentañ en e greiz, ar Vuhez war an uhelañ derez a vefe tu da veizout : ur vuhez ankemm ha dizalc'h diouzh kement a zo krouet. Doue zo spered ha n'omp ket hep gouzout e vez graet buhez pep spered gant anaouderezh ha karantez. Hogen, ken kevrinus hag e vuhez kondonel hec'h-unan e chom evidomp doare an anaouderezh hag ar garantez e par Doue. Doare mab-den d'anaout zo hini ur gomz diabarzhel ha dezevel. Eno eo e kaver buhez diabarzhel spered an den. Evit pezh a sell ouzh Doue avat, petra eo seurt buhez diabarzhel ? Daoust ha dezevout a ra Doue evel ma reomp-ni ? Dic'hallus eo d'ar poell-den hon sklerijennañ war hevelep kraf.

Pezh a c'hellomp atodiñ c'hoazh evelkent eo e tle buhez Doue, evel buhez dizalc'h-krenn, bezañ hini un nouez, peogwir dec'hmegañ Doue zo dec'hmegañ ur Boud, gentañ en e greiz reizid. Pa vez reizid, c'honvat, ha reizid, gant ur boud bennak, e vez un nouez anezhañ ivez. Hogen eus petra e c'hoarvez nouezelezh Doue ? Bouc'h e van c'hoazh poell an den dirak seurt goulenn.

Komz Doue anvet Gwerv

N'eo nemet bennozh d'an Diskuliadurezh kristen ma teuo dimp pep sklerijenn ret war ur gudenn evel hounnezh ha, da gentañ, digant Aviel Yann, an Abostol tostañ da galon Jezuz ar C'hrist, Aotrou Meur an Diskuliadurezh : "En derou", emezañ, "edo ar Gwerv, hag ar Gwerv oa gant Doue, hag ar Gwerv oa Doue. Adal an derou edo gant Doue."

Bez' ez eus, enta, ur Gwerv, eleze, ur Gomz Diabarzhel da Zoue. Sol anaouderezh Doue, - heñvel, en ur stumm, ouzh hini an den, - eo neuze ar Gomz-hont anvet Gwerv, ha, war un dro, ez eo sol an anaouderezh anezhañ e-unan ivez, ez eo diazez ar pezh a vez anvet ganimp lomañ dezev, prederenn. Emanout a ra Doue enta war-bouez genel e Werv. Seulabred e spurmantomp un tamm gwelloc'h doare buhez kondonel Doue.

Gwerv an den avat, lomañ, pe, mar kerit, an dezev dedaolet gantañ, ur gwezhriad ned eo ken digant e vez, eleze, un darvoudenn o tegas kemm en e voud war-bouez e wellaat. E gin, pa vez kel eus Doue, gant e voud ankemm, ne vez mui kont eus darvoudenn ebet. Doue zo Gwered Glan : ne vez gantañ tremen ebet eus ar galloud d'ar gwered. Kement ha ken bihan maz eo evitañ ober kement ha bezout.

Emanaouderezh Doue evel ober ha gwezhiañ zo neuze kevatal gant e vezoud. Pezh a dalv da lavarout ez eo Doue ivez Gwerv Doue, ha sed ar mennoz amañ emañ Yann, forzh penaos, o kadarnaat, pa vez o tiskleriañ : ". . . Hag ar Gwerv oa Doue."

Doue, Tad ha Mab

Penaos ez eo ar Gwerv kevatal gant Doue ? Dre maz eo Gwerv Doue, ne c'hall ket bezañ krouet. Ne ra neuze nemet bout kenelet, genel, handarzhañ diwar Doue hep bout graet. Amañ ivez e talv an tri ger rakveneget kement ha bezout. Ur sklerijenn avat a zo degaset dimp c'hoazh war doare seurt kenelerezh, pa lavar dimp an Aviel ez eo ar Gwerv "Mab Doue ha Doue kevatal gant e Dad". Doue zo, neuze, Tad keneler ha Mab kenelet war un dro, hervez an haeradenn-mañ digant Jezuz e-unan : "Neb a'm gwel a wel an Tad."

Haeriñ hanvoud un Tad hag ur Mab zo, koulskoude, haeriñ ivez div nouezelezh disheñvel. Setu perak e ra Jezuz gant ar gerioù Tad ha Mab evit geriañ ha diskuliañ div nouez diforc'h e par ar solwez. Ar Mab zo kensolwez gant an Tad. An Tad hag ar Mab ne reont, neuze, nemet an un Doue hepken, eleze, an hevelep Doue unan, dezho an un hennad hag an un trafadelezh. Gouez da Jezuz adarre, pa lavar dre Yann : "Evel m'en deus an Tad ar Vuhez emañ e-unan, endhu en deus roet ivez d'ar Mab kaout ar Vuhez ennañ e-unan.... kement a vez an Tad oc'h ober a vez ar Mab oc'h ober heñvelseurt."

Gwelomp un tamm evelkent petra eo nouezelezh an Tad ha nouezelezh ar Mab ; pe gentoc'h, klaskomp studiañ pelec'h emañ an diforc'h etre nouez an Tad hag hini ar Mab. Resizañ zo d'ober da gentañ pelec'h emañ an diforc'h a zo etrezo a-fet nouezelezh. N'eus diforc'h ebet, e gwirionez, etre an eil hag egile, nemet e par o c'heñverioù, evel Mab evit an eil, hag evel Tad evit egile. Eno e kaver andon e nouezelezh da bep hini anezho. Pep tra a zo unan e par Doue, hepket e par enebadur ar c'heñverioù rakveneget. Emañ an Tad o keneliñ ar Mab en e greiz evel Doue, ha

neket en diavaez dezhañ, evel pa vez o krouiñ, da skouer. Kenelerezh ar Mab zo ur gwezhierzh anfiñv ha trafadel. N'eus gantañ tremen ebet eus ar galloud d'ar gwered, o vezañ maz eo Doue Gwered Glan. Setu perak e ran uheloc'hik gant "kenelerezh" ha n'eo ket gant "kenelidigezh", ger resis e brezhoneg, o venegiñ dre e drolost end-eeun an tremen eus galloud da wered. Emañ neuze an Tad o reiñ d'ar Mab e voud kevan evel Doue, e solwez kevan, e natur gevan hag e vuhez kevan : ne chom gantañ *nemet e Dadelezh*. Nouezelezh an Tad zo neuze e dadelezh, ha nouezelezh ar Mab, e vabelezh. An un Doue int, ned int *nemet Tad ha Mab*. Setu perak e c'hall Jezuz c'hoazh lavarout dre Yann : "*Kement a zo d'an Tad zo din-me...*"

Pebezh diforc'h, neuze, etre tadelezh ha mabelezh e par Doue, diouzh un tu, hag e par an dud, diouzh an tu all. Lomañ, e bed an dud, ne vez ket ar mab, mab hepken : ur boud, ur solwez, un natur hag ur vuhez a vez gantañ, disheñvel diouzh reoù e dad. E par Doue, an hini a zo Mab, zo mab hepmui, daoust ha mab kefleun, koulskoude. Hogen dre maz eo ar Gwerv-Mab unvoud, unsolwez, unnatur hag unvuhez gant e Dad, ned eo, e penn kont, nemet an erzerc'had hag ar splannder anezhañ. Azon nouezelezh ar Mab douevel eo neuze seurt erzerc'had ha splannder.

Ur stadadenn all a refomp en diwezh : Doue n'eus ennañ nemet ur Gwerv hepken : *Unvab an Tad eo a ra Yann anezhañ*. E par e Werv emañ Doue oc'h emanaout en e gefleuned hag oc'h anaout kement a zo beziadus, koulz hag an holl Grouadelezh. Setu perak, goude bezañ lavaret : "*.... hag ar Gwerv oa Doue*" e kendalc'h Yann evel-henn : "*Pep tra zo bet graet gantañ ha seurt ebet eus pezh a zo bet graet n'eo bet graet heptañ...*"

Hevelep *Unwerv* zo neuze, neket eztaolad an Tad hepken, hogen, war un dro, eztaolad ha kenderc'her ar Grouadelezh ivez. Ken ma c'heller haeriñ emañ kement tra grouet o vezout a-holl-viskoazh, evel en e vammenn, e Gwerv Doue. "*Ennañ edo ar Vuhez*," eme Yann, evit disoc'hañ gant digoradur e neges, "*hag ar Vuhez oa sklerijenn an denion*." Pelloc'h e welfomp perak ha penaos e teuy ar Mab, war-bouez keddenañ, da vezañ, dres a-walc'h "*sklerijenn an denion*."



An Dreinded

N'eus, hervez ar Skritur Santel, nemet teir nouez douevel, ha ne c'hall bezañ nemet teir, dre ma ne c'hall bezañ nemet daou handarzharez e par ar boud Speredel ez eo Doue. Ha sed amañ ar perag hag ar penaos : bez' e kaver e Doue handarzharez e par ar Meiz a vez anvet kenelerezh ar Gwerv, ha neuze, handarzharez ar Garantez, anvet c'hwezherezh ar Spered Glan. Al liamm etre an Tad hag ar Mab ez eo ar Spered Glan ; Eñ eo ar garantez oc'h unaniñ an Tad ouzh ar Mab, hag ar Mab ouzh an Tad. Eñ eo skoulm an Doue triat a vez oc'h ezeviñ kelc'had an Dreinded Peurvoudel a zo, war un dro, Unded Peurvoudel.

Doue n'eus gantañ neuze nemet :

- 1) Un natur pe hennad hepken ha, diwar-henn, ur solvez nemetañ, ur vuhez nemeti, un drafadelezh nemeti.
- 2) Daou handarzharez : unan hervez ar Meiz, ma vez, gantañ, an Tad o keneliñ ar Gwerv, e Unvab, hag unan all, handarzharez ar Garantez, ma vez, gantañ, an Tad hag ar Mab o c'hwezherezhañ ar Spered Karantez, maz int gantañ unanet an eil ouzh egile.
- 3) Teir nouez : an Tad, ar Mab hag ar Spered Glan, - an Tad o vezañ ar Peurvon, ar Mab ar Gwerv kenelet dre berzh handarzharez meizel, hag ar Spered Glan c'hwezherezhet dre berzh handarzharez karantez.
- 4) Pevar daveerezh : an dadelezh hag ar vabelezh, o taveiñ, an eil, an Tad d'ar Mab, hag eben, ar Mab d'an Tad, dre berzh handarzharez meizel, ar c'hwezherezh o taveiñ an Tad hag ar Mab d'ar Spered Glan, koulz hag ar Spered Glan d'an Tad ha d'ar Mab.

5) Pemp naoudur : anc'hanadusted an Tad hag an dadelezh piaouel dezhañ ; ar vabelezh piaouel d'ar Mab ; ar c'hwezherezh boutin d'an Tad ha d'ar Mab, ha handarherezh ar Garantez piaouel d'ar Spered Glan.

Evel ma weler, lunanvaduret spis ha diferet resis eo gant an Iliz bongoal ar Spered Santel.

Atodomp c'hoazh n'emañ ket an Tad o vezout dre zaveiñ dezhañ e-unan, hogen d'ar Mab. Heñvelgont evit ar Mab, p'emañ o vezout dre zaveiñ d'an Tad ; hag evit ar Spered Glan ivez, p'emañ o vezout dre zaveiñ d'an Tad ha d'ar Mab en un douez. En amgin, pa lavaromp Doue, n'henn greomp ket dre zaveiñ d'unan all, rak desellout Doue en e grai eo a reomp da neuze. Emañ an niver enta da vezañ klasket e par an daveerezh etrenouezel nemetken, ha neket e solwez Doue, lec'h na c'heller kavout niver ebet.

Diwar-henn, e tleomp honniñ gant an Iliz :

- ez eus e Doue kevatalded etre an teir nouez, amparañ ma reont un Doue nemetañ hag ur c'hrouer nemetañ ;

- ez eus, gant pep nouez, hep dazrannerezh, holl hennad ha peurvoudelezh Doue ;

- ez eo Doue krouet ha Doue koulz hag an Tad, hep dezhañ, koulskoude, bezañ krouet, nemet kenelet ent trafadel ;

- ez eo ar Spered Glan krouer ha Doue ivez, evel an Tad hag ar Mab, hep dezhañ bezañ na krouet kennebeut, na kenelet, nemet o handarzhañ ent trafadel diwar an Tad hag ar Mab evel diwar ur Pennvez hepken.

N'eus na diac'hinegezh na dispoellegezh ebet gant bongoal an Dreinded . Bez' e vefe, anat eo, mar lavarjed, lakaomp, e vije un Doue nemetañ, ha tri Doue war un dro,

pe c'hoazh, mar lavarjed e vije e Doue teir nouez hag un nouez nemeti war un dro. N'eus dislavar ebet avat o tiogelaat ez eus teir nouez en un Doue hepken.

Padal, daoust d'an holl sklerijenn a c'hellomp degas amañ diwar diskuliadurioù ar Skritur Santel, e chom bongoal an Dreinded ur c'hevrin don-meurbet. Rak, petra bennak ma c'hellomp lunanvaduriñ ar bongoal gant hon meizadoù denel, ha, diwar-henn, argas diwar hon meiz pep dislavar ha dispoellegezh, bennozh da labour an douevoniourion, e van, evelkent, keal an Dreinded antreantus ha dihedizh da boell Mab-den. Dimp d'e vezout, e rankfemp anaout Doue en e grai, - sev, e kevrin e hennad, pezh a zo dic'hallus amañ war an douar. Ne c'hall poell an den komz diwar-benn Doue nemet dre gefivielezh, gant Doue ha gant ar c'hrouedennoù, diwar-benn meizadoù o tennañ, da skouer, d'ar boud, d'ar solwez, d'an hennad, d'an nouez ha d'an daveerezh. Arveret e vezont gant ar bongoal evit klask displegañ un dra bennak diwar-benn rinoù Doue, hep ober dimp o meizout.

Talvezout a ra, koulskoude, kevrin an Dreinded Santel da ziskouez dimp pegen dizalc'h eo Doue diouzh ar Grouadelezh. Dieub e vez Doue da grouiñ pe da na grouiñ. Dre ar grouadelezh avat e vez oc'h erzerc'hañ e frouezhusted er-maez anezhañ, ha pa n'anavezzer Doue nemet dre ar poell, e vez peadra d'ematersiñ diwar-benn ar pezh a vefe eus hevelep frouezhusted hep ar grouadelezh.

Ac'hanta, bennozh da Gevrin an Dreinded, e c'haller dont da vezout e vez Doue ken frouezhus all bepred en e drafadelezh hag e beurveudelezh evel Gwered Glan o keneliñ ar Gwerv evel diwar frouezhusted e vez, o reiñ ar Spered Glan kevret gant e Vab diwar frouezhusted o c'hengarantez, hevelep frouezhusted o tarzhañ diwar vuhez diabarzh an teir nouez. Ouzhpenn m'emañ pep nouez, en he

c'hevanroez, en div all, un anadenn a vefe tu d'envel e brezhoneg *kevemac'huberezh*, evel ma 'm eus merket en ur pennad kent war ar gelaouenn-mañ. Eno eo e kaver arouez ar Speredelezh hag ar frouezhusted peurvoudel, arouez ar vuhez peurvoudel hag ar gevrediezh peurvoudel.

Tu a vefe, koulskoude, da vezañ souezhet gant digenvezded Doue e-keñver e grouadelezh. Padal, pa seller ouzh kevrin an Dreinded gant daoulagad ar feiz dreistnaturel, e weler n'eo ket Doue, hogen mab-den e unan eo a zo digenvez, rak ne c'hall ket an den komz gant e gealioù, hag en diavaez anezhañ e-unan e chom estren outañ an dud all gouest da voulc'hañ un diviz bennak gantañ. Evel m'hon eus gwelet, disheñvel-bras eo an traoù e par an Dreinded Santel. Eno, e stern ar gevrediezh peurvoudel ha, diwar se, peurvat, e kavomp urzh ha hez eswel ar vuhez wirion maz eo galvet an denelezh ivez da gemer perzh enni.

Notenn Bouezus

Teurel evezh ne ran nemet gant al lostrann "*erezh*" evit envel pep ober e par an Dreinded, evel, da skouer, gant "*handarzherezh*", "*kenelerezh*" ha "*c'hwezherezh*". Arverañ lostrannoù all evel "*idigezh*", "*adenn*", h.a. a verkfe un tremen eus galloud da wered, pe eus gwered da c'halloud, pezh a zo gourzhenep da hennad Doue, Gwered Glan anezhañ, evel ma 'm eus bet tro d'henn lavarout endeo.



Doue An Tad

Lavarout ez eus un Tad eus Doue ha gantañ div nouez all ouzhpenn, ar Mab hag ar Spered Glan, zo bet ur gelennadurezh dic'houzañvus atav evit impalaered vBuzanton koulz hag evit an Islam da c'houde, hemañ bepred enebet, dre ma oa an impalaer derc'houezour Doue da gentañ da neuze ; c'hoant ebet n'en doa, avat, da glevout ober meneg eus *Tri oc'h ober Unan* e Doue. Ne oa ket bet seurt atalad evit ober an treuz ha kantvedoù zo bet ranket gortoz ken na voe degemeret mennozh an Dreinded ha, diwar se, hini an Tad gant sederni ha dudi en diwezh.

Chom a ra c'hoazh barrletadus seurt kredenn evit Muslimiz, evel raklavaret, hogen en eun doare digempoell a-walc'h evit kel an Tad, pa soñjont, da skouer, e vefe kousiañ, gant keal ar revelezh, keal Doue e-unan, war-bouez ober un Tad anezhañ, petra bennak ma kanont ken kaer all trugarez Allac'h, anezhi, pa ouzon, un druet tadek, par da hini ar gristenion.

Ur gudenn vras all, unan gevredouriek avat, ar wech-mañ, zo stag ivez ouzh un enebiezh a vez o ren hiziv an deiz e-keñver Doue an Tad : kalz tud n'o devez ken an disterañ c'hoant da gaout tad ebet. E "Frañs" (*Frañs Kuñv* : "*La Douce France*" gouez d'ar ganaouenn), ur vro bet emc'hourbannet war ar marc'had gant he renerion evel hini wirioù mab-den, ha diwar se, - pe laouen e ve pe ne ve ket, - bro an dleadoù kevelep ivez, setu ma kaver 25% eus he foblañs ha dezho darempred ebet ken gant o zad ; un niver bras anezho n'avevont ket zoken chomlec'h an den en deus roet ar vuhez dezho !

Ret eo c'hoazh desellout un dra all stag ouzh diskuliadur ar Bibl kemeret da ziazez gant ar gristenion. En ur embann tadelezh Doue, e vez ar gelennadurezh kristen, gant ar C'henelezh, o haerñ e kav da Zoue ez eo mat ha mat-kenañ, zoken, ar bed bet krouet gantañ, pegen fall ha kriz bennak e c'hall hennezh, evelkent, anadiñ dirak daoulagad an holl, gant ar gourfreuzioù, ar c'hevergolloù hag ar reuzeudigezh a vez atav o ren tu bennak war an douar. Aes a-walc'h eo kompren e vefe daraezus e gwirionez evit an dud klevout ober kont eus tadegezh Doue p'o devez da daliñ ouzh gwallskog an droug a weler o reuziañ kement-all ar grouadelezh.

Penaos ivez degemer tadegezh un Doue a vez o tegas e vab da vezañ kroazstaget evit adaozañ ur grouadelezh ken gwall stuziet all ?

Dirak ar pezh a vez warnañ tres an dislavar ha, zoken, an argarzh, ar gwellañ d'ober dimp neuze, da gaout an disamm eus hevelep diac'hinadegezh, n'eo ket, marteze, tamall ar gelennadurezh kristen, na taerñ outi, hogen seveniñ un azgwel war ar mennozioù hag an derc'hadoù a vagomp e-keñver keal an Tad, evit o glanaat ha, diwar se, dont da gaout doujañs ouzh Doue ha da soñjal ennañ en un doare dereat.

Dimp da zistremen pep gwallskog ha betek pep diaester-poelladiñ, e rankomp ematersiñ o kas gouzout hag-eñ ne vefe ket digembezus, e stumm pe stumm, gant peurwellded Doue, hon doareoù-ni d'erc'havaelañ ha desellout keal an Tad Neñvel, dimp, diwar eno, da zont da stadañ ez eo Doue kanforzh muioc'h tad, kanforzh gwelloc'h tad eget ne vern peseurt hini all war an douar.

Ret eo kompren ez eo disheñvel Doue, evel tad ar grouadelezh, diouzh Doue evel Tad e Vab, ar Gwerv gantañ kenelet. Disheñvel ivez hevelep Tad Keneler diouzh pep tad engehenter amañ war an douar. Setu pezh a fell din displegañ pa lavaran glanaat keal Doue. Arabat enta klask, e rez Doue, un tad a vefe par d'hon tadoù engehenter gant o bevennegezh, o berrventoù, hag o beiadurioù. Unvab an Tad, eme dimp sant Yann an Aviel, zo derc'h peurvat an Tad. "Ne ra," gouez dezhañ c'hoazh, "nemet unan gant e Dad." Lod eo kenelerezh an Unvab enta eus Kevrin an Dreinded, ha sed an abeg perak ez eo mat evidomp, brezhonegerion, kaout ar ger 'keneler' diforc'h diouzh 'engehenter'. Hogen n'eus nemet an Unvab, ar Gwerv e-unan, a gement a vefe gouest da lavarout e gwirionez petra eo kenelerezh e Dad.

Amañ war an douar, pa ne vez gant un tad bennak nemet ur mab hepken, ne lavarer ket 'unvab' evit aroueziñ seurt bugel, hogen 'mab pennhêr'. Ar Gwerv, Unvab ha Derc'h peurvat an Tad, zo kevatal d'an Tad : "Neb a'm gwel," emezañ "a wel an Tad." Setu perak e lavar sant Yann ne ra nemet unan gant e Dad. N'en deus ezhomm ebet eus hêrezh ebet, ha dre se, ned eo na hêr na pennhêr. Amañ war an douar, pa varv ur mab pennhêr, e kav d'e dud e kollont pep tra. Ac'hano, neuze dic'hoanag hag anken e gerent hag o c'hoant da virout na c'hoarvezfe netra gant ar vugale all a c'hellfent kaout diwezhatoc'h. E Doue avat n'eus gant marv ar Mab Ungenelet na koll nag anken ebet. Ha dre ma vez bepred kenasant etre Tad ha Mab, arabat ivez mont d'ijinañ nep krizder bennak e kalon un Tad a vefe drouktebet, lakaomp, da werzhañ e Vab.

Amzalc'hded ar Gwerv ouzh Doue an Tad zo evitañ e levenez evel Mab, tra ma ne vez c'hoant ebet gant nep mab

bennak, lomañ war an douar, da vout amzalc'h ouzh e dad. Setu perak ez eo bet buhez ha marv an Unvab ouzh kroaz un emro e par ar Spered Glan hag Eñ frouezh louerele an eskemm karantezus trafadel etre an Tad hag ar Mab, seurt frouezh louerele o vont d'ober Trede Nouez an Dreinded Santel, evel ma oar mat pep kristen desket. Diouzhtu e weler ne ra ket an treuz mennozh ar re a vez troet da damall d'an Tad un doare fallagriezh e-keñver e Vab, bet lezet gantañ, emezo, da drengiñ war ar groaz.

Dre berzh hoali douarel poanius an Unvab, deuet da vezañ krouadur denel, dre berzh e vuhez bet lamet digantañ dindan artez, e weler mat al liamm a zo etre poanioù ar groaz, - bet, avat, gouzañvet ent wirvozek gantañ, - ha poanioù ar grouadelezh. Evel m'en deus neuze talvezet reuz ar groaz da silvidigezh ar grouadelezh hec'h-unan, nammet ma oa bet gant ar Pec'hed. Nemet e talc'h houmañ, koulskoude, hervez ma lavar dimp sant Paol, da ziwaskañ "*poanioù ar gwilioud*", moarvat war-wel askoridigezh an "*neñvoù nevez hag an douar nevez*". E skeud hevelep reuz ha strafuilh, c'honvat, e talc'h ivez an denelezh da c'houzañv evel parzh kevanek ouzh ar grouadelezh. "*Hogen ret eo*", eme Jezuz hervez Lukaz (21/9) "*ya, ret eo e c'hoarvezfe seurt poanioù...*" N'eo ket an Tad enta dre c'henoù nep darlavariad bennak, nemet ar Mab e-unan, bet o vevañ en hon touez eveldomp, eo henn lavar. Ha falldeuet e vefemp o tont amañ da damall d'ar Mab e grizder en hon c'heñver, goude dezhañ kelenn fraezh e oa deuet da reiñ e vuhez evit hon silvidigezh. Klevomp kentoc'h e vouezh dre Lukaz (21/5-19) :

"*Arabat deoc'h bezañ spouronet, rak ret eo e c'hoarvezfe seurt traoù da gentañ...*" "*Da gentañ*", eleze hervez kenarroud an aviel, "*a-raok diwezh ar bed*". Hag

an traoù emañ Hon Salver o tegemenn zo dres an hevelep re dalc'hmat hag e pep lec'h, koulz en hon amzer-ni hag en e amzer-Eñ. N'eo ket hepken eus *brezelioù ha darsavadegoù* (Lukaz 21/9), hogen eus *tirgrenoù* ivez, bosennoù, naonegezhioù ha darvoudoù spouronus (Lukaz, 21/21-29) eo e vez kont, sev eus advedoù ha truegezh dibaouez, koulz lavaret. Evit a sell ouzh *an darvoudoù spouronus* rakveneget, soñjomp, da skouer, e gourfreuzioù Kreizamerika n'eus ket keit-se da vare un izelvan a reas distrujoù bras-meurbet (pe c'hoazh hiziv an deiz, e reuzeudigezh poblañsoù Kosovo). Haerñ a ra Jezuz, ar Mab emabertzhet evit ar gaezh denelezh, e rank seurt traoù c'hoarvezout araok diwezh ar bed. Arabat, emezañ, krediñ navitse e vez an diwezh o kinnig dont buan warnomp pa vezomp etre skilfoù ur gourfreuz bennak, pegen spouronus ha ballus peurvuiañ e vefe. "*N'eo ket diouzhtu e vo an diwezh*," eme Hon Salver (Lukaz, 21/9-10).

Ret eo dimp kompren diwar-henn ez eo lezet an droug da werediñ evit reiñ tro d'un urzh nevez da ziwanañ, unan kalz gwelloc'h eget hini vremañ er grouadelezh, chomet maz eo houmañ gloazet-don gant, pec'hed an den, eviti, neoazh, da vezañ salvet ivez gant kroaz an Den-Doue. Soñjomp ervat, ouzhpenn-se, ez eo kroaz ha poanioù Jezuz ar Mab ergeñver diheptreugus reuzeudigezh vab-den war an douar. Ret eo d'an droug c'hoarvezout e skeud gourfreuzioù par da reoù Kreizamerika rakveneget, evel ma oa ret ivez c'hoarvezout e vije kroazstaget korf-den an Unvab war venez ar C'hloppenn, e Jeruzalem.

Salv e veizfemp gwelloc'h diwar se, ne vez ket hon reuzeudigezh e devoud hon Tad neñvel, ha ni seul evurusoc'h en e gevrediezh ma klaskfemp, evel an Unvab,

bezañ an amzalc'hañ gwellañ outañ, dre maz omp galvet, ni ivez, da vezañ mibion dezhañ e klod an Dreinded.

Ya, kanforzh muioc'h tad, kanforzh gwelloc'h tad eget ne vern peseurt hini douarel eo, e gwirionez, hon Tad Neñvel, daoust d'an diavaezioù.



Ar Spered Glan

Goude bezañ komzet diwar-benn an Tad hag ar Mab e vez ar Skritur Santel, anezhi danvez an Diskuliadurezh gant an Avieloù ha skridoù liesseurt, o venegiñ, neket div, hogen teir nouez e Doue. Anat eo an dra diwar ar c'hemenn a ra Jezuz d'an Ebestel, pa lavar dezho : "*It enta da gelemn an holl vroadoù ; badezit-int en anv an Tad, ar Mab hag ar Spered Glan...*" (Mazh 18, 19). Un drede nouez a gavomp amañ neuze : ar Spered Glan.

Er bloaz 325 e oa bet goubannet gant Goursened Nikaea-Kêrgustentin, hiziv Iznik e Turkia, ne oa ket kenelet ar Spered Glan evel ar Mab gant an Tad, nemet e handarzhe diwar an Tad ; ha diwezhatoc'h e vo atodet gant Goursened Toledo e handarzhe diwar ar Mab ivez. Deuet omp da c'houzout, da geñver ur studiemn gent, e c'hoarveze buhez veizel Doue eus kenelerezh ar Gwerv. Hogen buhez diwar veiz ha karantez war un dro eo ivez buhez Doue. Warbouez emanaout en e Werv, evel en ur meleziour peurvat ; o tameuc'hañ "*splanned e Glodveurez*" e vez ar Mab oc'h emunaniñ outañ diwar-bouez Karantez keveskemm. Liammet eo enta an Tad hag ar Mab diwar-bouez un nerzh, ur c'hwezh, ur Spered karantezel oc'h amparañ an drede nouez.

Hogen, kaerañ pezh a zo, ur Garantez Solwezel eo ar garantez etrenouezel-mañ, ha mard eo solwezel, ne c'hell bezañ nemet kensolwez, kennatur ha kenvuhez gant an Tad hag ar Mab, rak pep tra o vezañ Doue e par Doue, ne c'hell hevelep "Spered-Karantez" bezañ nemet an un Doue gant an div nouez all. Ne c'hall ket bout un Doue distag. Mar

ned eo ket un Doue distag, ez eo, neozh, un nouez diforc'h, evel an div all. Gwelomp neuze penaos.

P'hon eus studiet pelec'h oa an diforc'h etre nouezelezh an Tad ha nouezelezh ar Mab, hon eus stadet ne oa ket da vezañ kavet e par ar boud, ar solwez, an natur pe ar vuhez, boutin ha maz int holl d'an eil ha d'egile. An diforc'h oa e par o c'heñverioù etrenouezel. Amañ, adarre, gant ar Spered Glan, ez eo heñvel an traoù, hag an diforc'h zo da vezañ klasket e par ar c'heñver degaset gant handarzharezhañ ar Spered Glan diwar an Tad hag ar Mab. Evel gant an div nouez all, ez eo ar c'heñver-handarzhahañ an hini a ra neuze nouezelezh ar Spered Glan. Eus petra avat e c'hoarvez handarzharezhañ ar Spered Glan, rak kenelerezh ar Gwerv zo ivez, forzh penaos, handarzharezhañ anezhañ.

Un dedenn kevatal eo, o tougen an Tad hag ar Mab an eil d'egile, pezh a vez anvet c'hoazh gant ar feizoniezh kristen *c'hwezherezh*. En diavaez eus an dadelezh hag ar vabelezh, anezho perzhioù piaouel d'an Tad ha d'ar Mab, ez eo boutin ha kevatal ar c'hwezherezh d'an eil ha d'egile. Kement a zo d'an Tad ha d'ar Mab zo, moarvat, d'ar Spered Glan ivez, hepket ar c'hwezherezh, koulskoude, rak pezh a zo piaouel d'ar Spered Glan hepken eo, dres, evel m'hon eus gwelet, ar c'heñver-handarzhahañ e stern an hevelep doueded.

N'emañ ket an teir nouez avat en diavaez an eil d'eben, nag an eil e-kichen eben, zoken, hogen unanet int ent trafadel en un doare ken strizh ma ne c'hellont ket bezañ disrannet, pezh a vez anvet c'hoazh e latin ar feizoniezh kristen kornogat gant *circumsessio*. Hag ar c'hendec'heriad gwellañ d'an anvad-mañ e brezhoneg a vefe c'hoazh, marteze, *kevamac'huberezh*, a c'hellfed displegañ evel *ac'huberezh trafadel* "ti" an eil nouez gant eben, peogwir e kaver atav pep unan e pep unan.

Hag Eñ Doue evel an Tad hag ar Mab, ned eo ket krouet ar Spered Glan, kennebeut ha ned eo ar Mab, rak arveret eo bet dres ar gerioù *handarzhahañ, keneliñ, ha c'hwezherezhahañ* gant an Iliz evit pouezañ war an devoud ez eo nouez ar Mab ha nouez ar Spered Glan kevatal da nouez an Tad, oc'h ober gantañ an hevelep Doue unseurt hag ankrouet.

Dre maz eo Doue Doue, eo emañ an Tad hag ar Mab o "c'hwezherezhahañ" ar Spered Glan, dre berzh ar Spered Glan emañ Doue enta, e skeud an un gwered nemetañ, oc'h emgarout e-unan hag o karout an holl voundoù krouet, derc'houezet e par an un Gwerv nemetañ. Ur Spered krouer, koulz hag an Tad hag ar Mab, eo, neuze, ar Garantez Solwezel anvet Spered Glan.

Goude bezañ studiet an teir nouez douevel, e vimp gouestoc'h d'endonañ, ur wech all bongoal an Dreinded Santel, eleze, kudenn unseurtelezh Doue, daoust da liested an nouezioù. Endonañ, avat, ne lavar ket displegañ, hogen deskrivañ, d'ar muiañ. Rak divarrek eo, lomañ, meiz an den da dreantiñ fetisted kevrin Doue.



Doue Krouer :

Penaos Deveizañ ar Grouidigezh

Ar peb retañ, kent studiañ ar grouidigezh, eo skarzhañ diouzh hon spered ken start ha ma c'hallomp, un toullad dec'hmegadurioù touellus a gavomp pa reomp gant gerioù evel evodadur, oberiadur ha derou evit klask plaenaat ar gudenn.

Alies e deveizer ar grouadelezh evel un evodadur eus Doue. Henezh avat ned eo na mennozh ar Yuzeviezh, na hini ar gristeniezh, rak, mar evodfe ar grouadelezh eus Doue evel maz evod ar stêr, da skouer, eus an andon, e rankfed lavarout e vefe ar bed ken retvezek ha maz eo Doue e-unan, peogwir, adalek ma vez mammenn Doue o strinkañ, e vez ivez gwazh dour o redek. Ouzhpenn ma rankfed c'hoazh lavarout ne vefe diforc'h ebet e seurt keñver, etre dour mammenn ha dour gwazh. Gant gerioù all, ne vefe ket eus an alled a ranker da gaout evit karout ha ne c'hallfe Doue neuze karout e grouadelezh, na mab-den, diwar-henn, anez an alled e kont.

Hogen diwar garantez Doue, dres, eo emañ ar grouadelezh ha mab-den o vezout, rak, eus an eil penn d'ar Skritur Santel d'eben, ne reer stad nemet eus garantez Doue evit e dud. Kement ha ken bihan ma n'eo ket *Levr ar C'heneliezh*, eleze hini ar grouidigezh eo a zo aet, da gentañ, da sevel ar Bibl, hogen *Levr an Ezloc'h* o tanevellañ dieubidigezh e dud eus kaezhnez Egipt gant un Doue dalc'hmat hollgarus en o c'heñver, pegen anfeleun bennak e vezent-i outañ. Ya, frouezh ar garantez eo ar grouadelezh

a-raok pep tra. Mard eus andon e Doue ez eo hini ar garantez an hini eo neuze, hag unan o toujañ bepred ar c'hrouedennoù tonket dezho, evel da vab-den, bezañ dieub. Pell emamp amañ diouzh pep evodadur anster, goular hag hollzoueat.

Ar grouadelezh avat n'eus ket un oberiadur anezhi kennebeut. Rak, o vezañ maz eo an den ivez un elfenn eus ar grouadelezh, mar befe kenderc'het evel gant ur poder, lakaomp, e vefe oberiet e rezid, na petra, war un dro gantañ. Ha ne c'haller ket haeriñ hevelep mennozh, anez da Zoue mont enep d'ur vriegezh den a zo, dres, frouezh e Garantez e-keñver e grouedenn.

Forzh penaos, fraezh eo danevell ziwezarañ ar Bibl war an divoud-mañ, pezh a zo kantroel a-walc'h, o vezañ ma tlee doare ar Skriturioù Nevet bezañ an heskoliañ gwellañ, war-bouez dezho derc'hel kont eus derez an diorreadur speredel, amañ lomañ, war an douar. Hag evit gwir, tra ma lavar an danevell goshañ 'oberiañ' hervez doare fetis ar poder, e ra an eil danevell gant ur ger nevez difetisoc'h o talvoud kement ha 'krouiñ', pezh a zo frouezh ar brederiadenn donoc'h bet renet, bep un nebeud, e-pad 700 vloaz dizwezhatic'h, dindan awen heskoliañ Doue, bepred doujañsus ouzh emdro gorrek ar speredoù.

Hogen ret eo deveizañ ervat talvoudegezh ar ger nevez : krouiñ n'eo ket, dre ret, ober un dra bennak. Hep mar ebet, pa lavarar emañ Doue oc'h ober henhen pe hennezh, e veizer war an taol emañ oc'h oberiañ ! Doue avat n'eus ket gantañ bezoud, diouzh un tu, hag ober, diouzh un tu all. Un hevelep gant e vezoud eo e wered. Emañ Doue neuze o krouiñ war-bouez bezout. Ne vez ket dav dezhañ enta ober un dra bennak evit krouiñ.

Dec'hmeget e vez ar grouidigezh - dreist-holl abaoe maz eo bet degemeret martezeadenn ar Big-Bang gant ar skiantourion, - evel ar chifrodenn gentañ bet ganti devoudet argerzhad an diorren alvezel. Kudenn an derou eo a stigner endhu, pezh na glot ket, avat, tamm ebet gant hennad Doue, hag Eñ ar Boud Peurblaen n'eus evitañ, d'ar ger "derou", ster amzerel ebet. Kement ha ken bihan maz eo fazi lakaat ar ger "krouiñ" en amzer dremenet. Bremañ eo emañ Doue o krouiñ. Hiziv, e gwirionez, emañ Doue o krouiñ kement ha biskoazh, paz eo kevastenn ar grouidigezh d'an istorvezh.

Mar befe ar grouadelezh avat un oberiadur anezhi, ne c'hallfed ket lavarout kement-all. An daol m'emaon o skrivañ warni, n'eus ket anezhi ur gwered emañ ar gloestrouer o kefleuniañ bremañ. Ouzhpenn ma vez oberidigezh un daol heuliad un obererezh rannet e par an amzer : troc'hidigezh ar wezenn da gentañ ; da c'houde, kempennidigezh an tammoù prenn diwarni ; hag en diwezh, frammidigezh an daol en he fezh. Ar gloestrouer n'eus ket anezhañ ur boud peurblaen, hogen ur c'hrouadur denel kenaozet, gant un derou hag un diwezh da gement a ra. Evit Doue avat, boud peurblaen anezhañ, e vez an derou o klotañ ent-voudoniel gant an diwezh. Ober, evitañ c'hoazh, zo kement ha bezañ. Setu.



Dispac'h an Aeled **hag** ***Eskoradur ar Pec'hed***

Studiet hon eus ar grouidigezh dre vras. Pa lavaromp krouidigezh avat, e soñjomp dreist-holl en traoù danvezel a gaver dre an alvez, er vevedelezh, en dud hag e kement a vez oc'h amparañ ar bed gwelus. Hogen ur bed all zo, unan speredel ha diwelus, krouet ivez gant Doue, da lavarout eo bed an aeled.

Bed an aeled eo ar bed speredel kentañ bet krouet en e rezid. An ael n'eus ket anezhañ ur meiz o poellata hag o tivizout goude prederiañ. Nadidik eo meiz an ael, pezh a dalv da lavarout e vez oc'h anavezout pep tra war an taol, hep ma rankfe enraogañ kammed ha kammed, evel ma reomp-ni, an denion. Kement ha ken bihan ma vez o tivizout ur wech evit mat, hep ma c'hellfe kemmañ mennozh na distreiñ da c'houde war bezh en deus divizet.

Setu perak - disheñvel o stad diouzh hini an dud hag i ret dezho dellezout ar vuhez peurbadel dre greiz diaesterioù o hoali hir pe hiroc'h, e spire d'an aeled bezañ bet krouet en o dere dibec'hed, evit stagañ war an taol ouzh o C'hrouer, hep striv na poan, e pep rezid ha karantez, dezho da voenat diouzhtu gwennvedigezh Doue. Ha sed a voe hag a zo bepred tonkad kement ael gwennvedik a zo. Hogen lod anezho, o kemer warno, dre lorc'hentez, kaout un evurusted naturel dizalc'h evito o-unan, o deus troet kein ouzh o c'hrouer hag ouzh e garantez en o c'heñver, hep ma c'hellfent goude se, dre berzh o genezh, dres a-walc'h evel

aeled, na gwellaat na kanttreiñ, lakaet ganto holl nerzh o
meiz hag o menn e tebet eswelled o hennad, hemañ, avat,
bevennek, forzh penaos, evel hini kement krouedenn a zo.
Dic'hallus oa neuze, diwar neuze, gortoz nep silvidigezh
bennak. Andigoll ha dilia oa o c'hoemp, diazveradus o stuz
dispac'hel. Daonet 'oant evit gwir, diwar gilversted o youl.

Drezañ e-unan ne gendouge o hennad seurt ebet a ve
dreistnaturel. Hogen, dre ma oant amzalc'h-glez ouzh ar
finvez dreistnaturel deverket dezho, setu ma choment stag
ouzh Doue atav, daoust d'o dispac'h, evit e garout hag e
gasaat war un dro. Kement ha ken bihan ma ne c'hallent ken
moenat an disterañ evurusted naturel. Gwashoc'h stuz n'eus
ket tu d'empentiñ, moarvat, rak, zoken war-lerc'h e bec'hed,
e c'hall an den bevañ ken evurus hag a-raok war an douar,
ouzhpenn ma c'hell c'hoazh kanttreiñ ouzh Doue, dre maz
eo disheñvel e hennad diouzh hini an ael.

War-bouez avat nac'h dre lorc'hentez ar prof graet
dezho gant Doue, o deus an drouksperedoù, dre berzh o
dispac'h, degaset en o c'hreiz un dizurzh hag ur
reuzedigezh a drebard hag a vo peurbadel. Nac'het o deus
an dere trehontek bet kinniget dezho da vare o
c'hrouidigezh. Hogen, evel m'emaomp o paouez displegañ,
ar peb gwashañ eo pezh a c'hoarvez da geñver pep
daonedigezh : kenderc'hel a ray aeled an dispac'h da garout
Doue diwar holl erlusk o boud, hag en un douez, e vezint
ouzh E gasaat evel profer brokus an urzh dreistnaturel.

Mennet o deus bezañ dizalc'h-glez evel Doue, ha setu
maz int tavantek e pep keñver. C'hoantaet o deus *ar
wennvedigezh naturel nemeti*, hag o nac'h ar wennvedigezh
dreistnaturel, trehontek ha peurvat profet dezho gant Doue,

n'o deus medet nemet dizurzh en o c'hreiz, diac'hinegezh ha
loes.

Youlet o deus aeled an dispac'h bezañ daonet ha dre ma
ne c'hell ket o youl kemmñ dre hennad, e talc'hont da
youliñ war an hevelep tu, sachet-disachet etre ar garantez
hag ar gasoni ; kement ha ken bihan ma ne c'hall o foan
nemet bezañ denevezet atav. Karet o deus o genezh betek
re, ha setu ma ne ro hemañ nemet loes dilia. Ne ray o
lorc'hentez nemet gourbaranañ dre warizi ouzh o c'hrouer.
Hag aet eo follentez Satanaz, Penn an Drougaeled, betek
goulenn digant Doue stouiñ dirazañ d'e c'horzañ. Moarvat
ne vez ket meiz an drougaeled - hag eñ ken lemm, - hep
gwelout diskiantegezh seurt erez, hag evelkent ne c'hellont
nemet peuryouliñ enni gant holl fallagriezh o spered.

Ar pec'hed oc'h eskoriñ war dachenn ar grouadelezh

Diwar dispac'h an drouksperedoù, e c'haller lavarout e
oa ar pec'hed oc'h eskoriñ dindan stumm diazezek al
lorc'hentez hag an naturelouriezh. Mat ha direbech eo,
moarvat, karout an natur, dre benn kement bezoud ha
daioni a zo deuet dezhi digant Doue. Rak mat eo-hi en
doare maz eo bet krouet : "Ha setu maz eo hennen
hollvat..." eme ar C'hrouer e Levr ar C'henelezh (Pennad I,
gwerzad 31, ar Bibl). Ya, mat-kenañ, gant ma ouezo an
natur evelkent e chom-hi bevennek hag anpeurvat, peogwir
e teu dezhi pep tra digant he c'hrouer. Pezh a dalv ivez da
lavarout e c'hall Doue, mar kar, he derc'haviñ uhel-kenañ ha
deverkañ dezhi un eswelled kanforzh brasoc'h eget an hini
a c'hellfe diraez drezi hec'h-unan.

Lorc'hentez ha naturelouriezh a vez, avat, adalek ma krog an natur da vagañ, e-keñver he bevennegezh, ur garantez hag un estlamm ken bras ma teu da beuremhetaat ha da beuremlorc'hekaat betek c'hoantaat bezañ ken dizalc'h. Diwar-henn e steuz emichañs diouzh spered ar grouedenn ar mennozh e c'hallfe Doue c'hoazh he feurwellaat ent dibenndermen, pezh a zo, e gwirionez, un taol kevergollus evit an natur.

Pa vez Doue o c'hervel e grouedenn da sevel e reizh an dreistnatur, e paouez neuze ar finvez naturel da vezañ ar finvez diwezhañ ha groñs nemeti. Durc'haet e vez ouzh ar beurwellded dreistnaturel, ha dont a ra da vezañ ar finvez diwezhañ nemeti, pezh a dalv da lavarout e tinac'her pep finvez naturel pa zinac'her ar finvez dreistnaturel.

Kalz grevusoc'h eo pec'hed al lorc'hentez hag an naturelouriezh eget ar pec'hed enep natur hepken, dre ma tiac'hin un urzh douevel-rik a vez o trelankañ, war-bouez kalz, an urzh naturel en he fezh, ha dre ma vez o tiouerekaat ar grouedenn diouzh ur beurwellded kanforzh uheloch eget an hini naturel. Hogen, pa bec'her ouzh an urzh dreistnaturel, e pec'her, en un douez, ouzh an natur, pezh a dalvez kement ha pec'hiñ ouzh ar finvez dreistnaturel maz eo durc'haet outi ; ken ma c'heller diogeliñ e labour an naturelouriezh war enep d'an natur hec'h-unan.

Droukrannadur ar grouadelezh

Setu maz eo droukrannet ar grouadelezh dre berzh pec'hed an Drougael end-eeun. An natur c'hlan, n'eus ket anezhi. N'eus, dre dra, nemet, diouzh un tu, an natur bet o tegemer prof hollgarantezus Doue, gant uvelded ha levenez,

sev, an natur bet derc'havet raktal e trehontegezh Doue ; tre diouzh perzhiañ en E Vuhez. Diouzh un tu all, war-bouez nac'h ar prof e kont, dre lorc'hentez ha kilversted, e kaver an natur o tegas enni hec'h-unan un dizurzh dibareadus. Ken maz eo rannet ar grouadelezh etre, diouzh un tu, tachenn douevel ar c'hrouedennoù derenet gant o c'hrouer e buhez e glod, ha, diouzh un tu all, ar bed, gant ar ster a vez an Aviel o reiñ d'ar ger-se, pa vez, da skouer, oc'h envel Satanaz *Brientin ar Bed-mañ*, ha pa nac'h Hon Salver pediñ evit ar bed, sev, evit bed an droug siet gant al lorc'hentez hag an naturelouriezh. Siegezh ar bed a vez adkavet da geñver an dizalc'hded c'hroñs a vez ar grouedenn o tiarc'hiñ eviti, pa fell dezhi tremen hep Doue, ha moenat he buhez naturel nemeti, hep liamm ebet gant he c'hrouer, - e berr gomz, pa glask emvastañ dezhi hec'h-unan.

Erzerc'hañ ha magañ hevelep spered eo a rae neuze brouderion andoueat an Dispac'h Gall pa zisklerient e oa mab-den dizalc'h-glez ha tonket dezhañ kavout e beurwellded, bennozh d'an Enraog Dibenndermen, hep ma rankje plegañ da nep lezenn douevel, hogen war-bouez krouiñ e-unan e breder hag e lezenn dezhañ, dres evel e bed aeled an dispac'h kentidik ! Pebezh dour fonnus da viliñ an emgarantez hiniadel ha bellgar ! Ha pa ziazezer seurt pennsturioù c'hoazh war geal ar riezvrizhvroad, pebezh dazoned kaer, na petra, da bep gourheizhegezh ha gwaskerezh da vleuniañ.

Daoust ha rannet an hollved e div diernaz kevenebet, e weler bepred, koulskoude, klod Doue oc'h anadiñ. Skediñ a ra e tiernaz Doue, lec'h ma vez ar c'hrouedennoù, stag ouzh o c'hrouer, o c'hourbannañ hag o kanañ e vadelezh gant ar vrasañ karantez. Klod Doue a spurmanter ivez avat e tiernaz *"Brientin ar Bed-mañ"*, dre ma weler an natur o

klask gant poan ha loes emvastañ dezhi hec'h-unan, pezh a ziskouez pegen ezhommek ha marnaoniet eo e gwirionez war imbourc'h an tralen. Bez' e vez keneiled Doue enta ouzh E glodekaat, brudañ ma reont e gouvran tiezh hag e voended. Hogen bez' e vez enebourion Doue ouzh e glodekat ivez, en ur stumm, dre berzh ar strivoù aner dispaket gant o youl dirak rezhded anvevenn o dezreadurioù prederouriel, da heul un damkanerezh a vez atav oc'h ober kazeg. Ken nerzhus e vez neuze klod Doue o skediñ, zoken e don an ene nañvek, *hogen hep gouzout dezhañ*, ma ranko un deiz holl skleurach ar c'hantved bet anvet *Kantved ar Sklerijennoù Gall* stouiñ dirak trec'h *al Luc'h Nemetañ* ma tarzhp pep sklerijenn diwarnañ.

Ha ni o paouez gwelout an holl reuz a zo deuet gant eskoradur an Droug, e penn-kentañ ar grouadelezh, e kendalc'himp diwezhatoc'h gant an istor anezhi, o studiañ kudenn Adam ha pec'hed an Denelezh dre vras



Kudenn Adam hag ar Pec'hed

Biskoazh n'he deus an Iliz termenet piv eo Adam. Evit an darn vrasañ eus an douevoniourion ez eo Adam an denelezh. E-lec'h Adam e vefe tu neuze da lavarout "adamelezh" ivez. Tu a zo avat da ober Adam eus ar pec'her kentañ.

Danevell ar C'heneliezh a zo war un dro frouezh ar Skiant bet prenet gant **Israel** ha frouezh ar predererezh renet gant Furion ar vro. Setu perak e vez ar Viblourion o klenkañ **Levr ar C'heneliezh** e rizhenn furnezel al lennegezh nevet awenet gant ar Spered Glan.

Pezh a fell da skrivagner ar *C'heneliezh* kinnig enta eo saviad an den e-keñver Doue hag e-keñver ar pec'hed, eleze dere n'eus forzh peseurt nouez-den, hini ar bloaz 2000 koulz ha hini ne vern peseurt prantad all. Pelloc'h avat e vo ranket studiañ pec'hed an den kentañ ha penaos e veiziañ ha meizañ e liamm gant ar pec'hed-hil. Pa gendalc'homp da lenn ar *C'heneliezh* e welomp e komzer dimp c'hoazh diwar-benn peurvadelezh Adam a-raok e bec'hed. Dre berzh ur seurt peurvadelezh - diaes avat e zeveiziañ evel ur stad, dre ma vöe, kentoc'h, un dihun meizel ha speredel, - e wel raktal an den kentañ pegen disheñvel eo diouzh boudoù all an natur, eleze diouzh an rakdenazonidi hag an denazonidi liesseurt, chom ha ma rae bepred, moarvat, aspadennoù anezho, koulz ha diouzh an holl spesadoù loened ha struzh o vont d'ober ar grouadelezh war e dro. Ha raktal ivez, e verzh en e greiz ur galv da wellaat kalz muioc'h. Ya galvet eo bet mab-den, adalek ma savas sonn war e dreid, gant e spered o tihuniñ, da vezañ pezh a zlee bezañ : ur boud rez e

pep keñver. Ar beurvadelezh e kont ne c'helle bezañ nemet deroù un dere, tonket dezhañ disoc'hañ war rezid klok mab-den e gougonez Doue. Rak hennezh eo ivez mennad ar C'hrouer pa lavar ar Skritur ez eo graet Adam *diouzh derc'henn Doue hag an heñvelidigezh outañ* ! Pe gentoc'h hervez deveizadur an holl stervarnourion hiziv an deiz, e sell *diouzh an heñvelidigezh ouzh Doue*. Hogen dont da vezañ heñvel ouzh Doue a zo ivez, hervez an holl feizonourion bremañ, dont da berzhiañ e buhez Doue, na mui na maes, pe evel ma lavaran uheloc'h, disoc'hañ e gougonez Doue.

Peogwir ne c'hall ket Doue avat krouiñ rezid an adamelezh anez dislavarout e garantez, evel m'hon eus gwelet endeo diagent o studiañ ar grouidigezh, e chome dieub an den e-keñver Doue gant an holl riskloù stag ouzh ar rezid. Penaos e rafe neuze evit dont da berzhiañ e buhez Doue ? Chom a rae ha chom a ra c'hoazh mab-den stag ouzh e wrizioù, a zo douarel, rak ster Adam eo hennezh, ha talvout a ra dres ar ger-se da zoareañ ar spesad anadet un deiz diwar skeuliadoù loenel niverus. Dre berzh ar saviad m'edo klenket ennañ, e weler e oa troet, kentoc'h, an den, evel holl voudoù all an natur da vevañ evitañ, kenteget evit Doue. Ken ma teue da vezañ hilgennet gant e rezid etre daou nerzh, an eil o sachañ war draoñ, hag egile o sachañ war grec'h.

Ha sed amañ penaos, gant an desach d'an traoñ, e teuer tre e dere pec'hedik an adamelezh.

Pa gefleunias an den kentañ e bec'hed kentañ, ez eo hepken e bec'hed hiniennel hepken a sevenas. Hogen perzh pep pec'hed ez eo dres dougen an hentez da bec'hiñ. Setu penaos e c'haller meizout emled ar pec'hed-hil deuet da vezañ stag ouzh hennad an den evel dianlenad an holl bec'hedoù sevenet abaoe an hini kentañ. Rak kement

drougobere a sevenomp a zo evel ur wagenn o fennañ hag o stankaat dre berzh an darempredoù denel. Dont a ra hollad ar pec'hedoù da gendaspegañ evit ober un doare kengorf gwallus. Moarvat ne c'hall den en em ziorren, anez kaout skoazell digant ar re all. Hogen ken douget eo pep den ivez gant e hentez d'adeiladiñ ha da ziskar, ma c'heller lavarout e vez lonket pep bugel gant kevrediezh ar pec'hed, adalek ma teu war an douar, daoust dezhañ bezañ digablus emichañs e pep keñver ; rak ne vez kablusted nemet pa vez koul. Bep maz aio neuze an den gant hent e vuhez, e ranko stlejañ war e lerc'h droukheuliadoù ar pec'hed-hil. Hogen, mard eo ar pec'hed-hil un namm pec'hedus diwar ar pec'hed kentañ, ez eo ar pec'hed hiniennel ur gwezhiad kablus a vez mab-den o kefleuniañ dre ma klask, da neuze, seveniñ e rezid enep lezenn divezel e greizon.

Perak avat ar pec'hed ? Moarvat, dre ma vez an den atav o klask ober gant un dra roet, pezh a gav dezhañ bezañ un dra dleet dezhañ. Hennezh eo an dere a gendalc'ho da vezañ e hini keit ha na ouezo ket ober e vad eus e rezid. Ha mennad an Iliz, pa gomz dimp diwar-benn ar gwall, bezet dindan stumm ar pec'hed hiniennel, pe dindan stumm ar pec'hed-hil, zo, dres a-walch, reiñ dimp da vezout ne c'hallomp ket anaout ster resis hon rezid, na kejañ gant gwir dieubour ebet, anez dimp anzav hon sklavelezh dindan ar pec'hed. Kentañ striv d'ober neuze eo uvelaat dindan hon drougoberoù, dres evel ma vennas an Den-Doue uvelaat, dre gemer warnañ bec'h holl bec'hedoù an adamelezh. Ha pa stignomp outañ ar goulenn o tennañ da c'houzout perak ar pec'hed, n'eo ket un ateb damkanel eo a gavomp digantañ, hogen gwelloc'h eget un ateb eo ar *gwezhiad* m'en deus gantañ treantet, hep termal, bed ar pec'hed, dre ar marv fetis ouzh ur groaz, dezhañ ur ster da vezañ studiet pizh ivez, mar fell dimp meizout ervat petra eo ar *garantez* o tieubiñ.

Rak respont Doue a zo atav *e garantez* ; ganti e vez kaset da benn douvelaidigezh an denion, war-bouez dezhi seveniñ *Kevrin Eil Nouez an Dreinded Santel, ar Gwerv Emdenet*, marvet diwar e emyoul evit dieubiñ diouzh kaezhnez ar pec'hed kement nouez-den bet ha da zont war an douar. Ya, Jezuz ar C'hrist, an Den-Doue, eo Penn an Adamelezh nevez deuet da zieubiñ an Adamelezh Kozh.



Ar Gwerv Emzenet

Evel m'hon eus gwelet gant kudenn an adamelezh hag ar pec'hed, respont Doue d'an droug a vez bepred hini ar Garantez kaset da benn gant marv gwirvozek ar Mab emañ bremañ o vont da studiañ an doare anezhañ evel Gwerv emzenet.

Emzenadur ar Gwerv zo c'hoarvezet, ret eo henn gouzout, diwar m'en deus Doue lezet ar pec'hed da vont evit ma vije trec'h an adamelezh nevez war an adamelezh kozh. Ha lidet e vez an nevezinti gant an Iliz pa vez o kanañ ar bomm kaer da heul :

*Pec'hed bemiget hag evurus
Bet o talvezout evidomp
Un dasprener ken bras
Ha peurvat...*

Setu ma vezomp neuze degaset gant seurt komzoù da greiz ar c'hevren a vann luc'h e sklerijenn war gudenn an droug. Ya, tu a vefe da Zoue d'ober diouzh ma ne vefe ket eus an droug war an douar nemet e vez lezet gantañ da c'hoari evit ma tiwanfe diwarnañ un urzh nevez kalz gwelloc'h.

Mar n'en dije graet ar C'hrist, evit gwir nemet adsevel pezh a oa bet dismantret gant ar pec'hed, un digolladenn ne vije bet ken eus e salvder ouzh kroaz, ha n'eo ket ur c'hantrec'h meur. Hogen ur c'hantrec'h meur, na petra, eo bet e c'hounid war an droug, dre m'en deus diazezet un urzh

nevez kanforzh uheloc'h, enframmet enni ar grouadelezh en he fezh, war-bouez dezhañ dastum pep tra ennañ e-unan, evit erzerc'hañ gougonez Doue. Rak skedusoc'h eo meurdez Doue gant salvder e groaz, anezhi ur grouidigezh nevez e gwirionez, eget gant krouidigezh ar bed. Ya, kalz mui eget un digolladenn eo bet neuze frouezh ar groaz.

Pennoberenn Doue eo, hep mar ebet, emzenadur ar Gwerv, pennoberenn e Furnez hag e Garantez anvent. N'eus netra brasoc'h enta eget ar Gwerv, Eil Nouez an Dreinded Santel o tont da vezañ den evit ma teufe an den e-unan da berzhiañ e natur Doue.

Bongoal an emzenadur

Klaskomp enta displegañ Kevrin an Emzenadur a-ziwar ar vongoal, evel ma tisoc'h diouzh ar gelennadurezh kristen.

Gant Jezuz an Aviel e kaver div natur : an natur-Doue, pe doueded, hag an natur-den, pe dended, strollet o-div e par un nouez hepken. Doue gwirion eo ar C'hrist-Jezuz, kefleun gantañ an doueded ; trafadel eo ha Krouer. Eñ eo ar Mab engehentet ent trafadel gant an Tad, ha Doue eveltañ. Eñ eo Eil Nouez an Dreinded Santel. Den gwirion eo ivez, ha den kefleun, dezhañ ur c'horf den, un ene-den, gant an holl c'halloudezhioù a gaver e pep den. N'eus dezhañ koulskoude nemet un nouez hepken ha n'eo ket unan evit pep natur.

Jezuz, Doue gwirion

Jezuz ar C'hrist zo Doue gwirion : sed ar gelennadurezh o tont dimp digant ar Skritur Santel, evel maz eo, da skouer, diskleriet gant ar Salm 2, gw. 7, pa lavar :

*Te zo va Mab,
Ha te ganet ganin
Hiziv an deiz...*

Da geñver e vadeziant e dour ar Jordan gant e genderv Yann e klever ivez mouezh an Tad o tregerniñ :

Setu va Mab muiañ-karet...

Ha ken resis all eo testeni e genderv, ar Badezour, pa lavar :

*An hini a zeu war va lerc'h zo tremenet dirazon
Dre m'edo araozon o vezout...*

Hogen Jezuz e-unan zo bet klevet o lavarout oc'h embann :

*Kent d'Abzac'ham bezout,
Ez on-me o vezout...
(Yn 8-58)*

Edo, emezañ, o vezout a-raok Abzac'ham, eleze, kent dezhañ bezañ ganet gant Mari, pezh a dalv da lavarout : ab ur viskoazh, ent trafadel hag a-raok an amzer.

Doue gwirion eo Jezuz, ha gantañ an hevelep solwez hag an Tad. Par d'e Dad eo, hervez Yann, (5-11), pe c'hoazh pa lavar (10-30) :

"Neb am gwel a wel ivez an Tad..."

Dre ma ne ra neuze nemet unan gant e Dad, ez eo sklaer ez eo-Eñ kensolwez dezhañ, eleze Doue eveltañ.

Kement ha diskouez c'hoazh ez eo Jezuz Doue, kendalc'homp gant ar pezh a lavar an Aviel hiroc'h diwar e benn.

Gant Mazhev (24-25) e klever ar Christ o tiskleriañ :

*"An neñv hag an douar a dremenno ;
Va c'homzoù din-me avat ne dremenint ket..."*

Gant an hevelep Mazhev adarre (9-6), gant Mark (2-10), ha gant Lukaz (5-24) en E glever oc'h embann en deus ar galloud da lemel ar pec'hedoù. Piv avat, anez dezhañ tremen da lu pe da drelatet a gredfe haerñ seurt traoù, nemet ha Doue e vefe, hep mar na marteze. Hag e gwirionez, n'eo ket lavarout hepken eo a ra Jezuz, hogen diogelenniñ ha defraeshaat ivez diwar-bouez oberoù louere. Rak pa lavar en deus ar galloud da zilemel ar pec'hedoù, en henn diskouez fraezh dre un taol-burzhud fetis ha taranus : *"Ac'hanta"*, liz dezhañ d'ar Farizianed, *"evit ma ouezfot en deus Mab an Den war an douar galloud da lemel ar pec'hedoù, m'henn lavar dit,"* emezañ d'an den seizet, *"sav alese, kemer da wele ganit ha kae d'ar gêr..."* Hag a-raok seveniñ ar moliac'h en doa graet ar goulenn-mañ ouzh e geveneberion : *"Petra zo an aesañ, pe lavarout : lamet eo diwarnout da bec'hedoù ; pe neuze, lavarout : sav ha kerzh ?"*

Amañ e weler ez eo Jezuz, Mab Doue, *ar Gwerv* diskuliet gant sant Yann an Avielour, evel *ar Gomz* atav o krouiñ evel m'en deus krouet ar bed, unanet gant e Dad hag ar Spered Glan.

Jezuz, den gwirion

Mard eo Doue gwirion, ez eo Jezuz den gwirion ivez, gantañ korf, ene, hag holl c'halloudezhioù mab-den. Sed a c'haller stadañ diwar gement a zo danevellet dimp gant an Aviel ; genel a ra Jezuz, kreskiñ, mervel ouzh kroaz, da heul un tremenvan euzhus. Komz a ra, kerzhout, debriñ, evañ, diskuizhañ. Mesatizet eo er gouelec'h. Dezevoù ha merzhadoù denel a zo gantañ ; spouron, p'emañ en e ankoù, karantez evit e vro, hag Eñ o leñvañ war Jeruzalem, karantez evit e geneiled, p'En gweler o ouelañ dirak bez Lazar. Ha setu pezh a veizer mat pa glever sant Yann o tiskuliañ dimp : *"Deuet eo ar Gwerv da gemer korf..."* Koulz ha sant Paol pa skriv : *"Emeskarzhañ a reas betek dont da gemer natur ur mevel ha da vezañ hañval ouzh an denion..."* Ha gant al **Lizher d'an Hebreed** e verk c'hoazh abostol ar broadoù ez eo *"deuet da vezañ izeloc'h eget an aelez"* (2-9) o wiskañ an natur-den. *"Buhez ar c'hig hag ar gwad zo bet bevet gantañ..."* (2-14), dre ma ranke dont da vezañ hañval e pep tra ouzh e vreudeur (2-17).

Jezuz anezhañ un nouez hepken

Jezuz n'eus anezhañ nemet un nouez hepken. An hevelep nouez eo Hennezh p'En gweler o haerñ hag o tiskouez ez eo war un dro Doue ha den. Ha sed amañ da heul kelennadur Goursened C'halkedonia war an divoud : *"Ret eo darbenn Unvab Doue gant e ziv natur, hag i digemmesk... Hep m'o defe paouezet an div natur-se da vezañ disheñvel en abeg d'an unvaniezh ; goubannañ a reomp ned eo ket bet Hon Salver Jezuz-Krist rannet na lodennet e div nouez, hogen e van-Eñ an hevelep Unvab nemetañ..."*

Doue kefleun ha den kefleun anezhañ, ez eo Jezuz un nouez hepken e div natur ; ha setu perak e vez anvet *Unvaniezh Nouezel* unvaniezh an natur-doue gant an natur-den, e par un nouez hepken. N'eus gant Jezuz nemet un nouez : nouez trafadel ar Gwerv, Unvab Doue. N'eus gant natur denel ar C'hrist enta nouezelezh denel ebet. N'eus ganti nemet nouezelezh ar Gwerv, e doare ma c'heller lavarout ez eo ar Gwerv un den.

Sant Ignad Antioc'heia a skrive da Efeziz ez eo ganet Jezuz div wech "*gant Doue ha gant Mari*", pezh a dalv da lavarout ez eus dezhañ div c'hanedigezh disheñvel : unan drafadel, diouzh maz eo engehentet gant an Tad, hag unan amzerel, diouzh m'en deus kemeret an dended e korf gwerc'hezel Mari. Ur grouadenn eo neuze unvaniezh an dended gant ar Gwerv, rak un dra grouet eo dended Jezuz. Oberenn an Dreinded en he fezh eo seurt unvaniezh, dezhi da sol nouez nemeti ar Gwerv, un nouez douevel anezhi enta.

Da geñver an emzenidigezh avat n'eus bet kemm ebet e par ar Gwerv, a zo Doue, hag eñ dalbezh digemm. An nevezinti zo da lakaat e par an dended bet krouet war sol an unnouez trafadel, eleze, diwar an natur-den bezañ deuet d'unvaniñ gant an unnouez trafadel. Ar Gwerv eo ar C'hrist-Jezuz, hag Eñ o vezout ent trafadel, daoust ma c'heller lavarout En deus kroget da hanvout e par e natur-den, dre maz eus bet un deroù d'e vuhez evel den. Ar C'hrist Jezuz n'eus ket ur grouedenn anezhañ. Dre maz eo Doue n'eus nemet an denelezh bet gwisket gantañ a gement a zo tra grouet.

Trec'h an adamelezh nevez war an hini gozh, dre berzh keddenadur ha kroaz ar Gwerv, Unvab Doue hag Eil Nouez an Dreinded Santel zo anezhañ ur c'hevrin a c'heller deskrivañ hep, siwazh, e veizañ. Danvez hon feiz dreistnaturel eo, neoazh, ha kraf diazez an diskuliadurezh kristen deuet betek ennomp, peogwir e vez o teskiñ dimp ez eo Jezuz Doue ha den en un douez, e par un nouez hepken.



Ster Gwirion Kroaz Hon Salver

Hervez ar C'hardinal Ratzinger : *"Feiz kristen dec'h ha hiziv"* (embannadur Mame), boztalañ, dizleañ, erlec'hiañ, reizhc'houzañv evit diverkañ an dismegañs graet ouzh Doue n'eo bet morse pal Hon Salver war e groaz. Neuze, deveizañ an Daspren hervez an damkanadenn o kelemm ez eo bet mennet marv Jezuz gant e Dad evit digoll gwarzh ar bec'herion en e geñver, a zo, emezañ, kinnig an traoù en un doare dismantrus evit an eneoù. Setu, koulskoude, pezh a zo c'hoarvezet, dreist-holl dre maz eo bet deveizet fall kelennadurezh Anselm Kergaent ("Canterbury"), 1033-1109, war ar c'hraf-se.

Doue an Tad, anat eo, n'eus anezhañ nag ur mac'homer nag un dialer. Ne c'halle ket, forzh penaos, dialañ al led renet outañ dre gas e Vab d'ar marv, rak neuze e vije deuet e varnerezh (1) da vezañ ur vevenn hag ur skoilh d'e garantez, pezh a zo dilavarus pa vez kont eus Doue an Tad bet diskelet dimp gant Jezuz, e Vab. E gwir, talvezout a ra seurt damkanadenn da lavarout n'en defe gallet Doue an Tad, hag Eñ koulskoude ar Garantez ent-krai, diskouez nep truez na trugarez ebet, ken na vefe bet digollet eus an dismegañs renet outañ gant an den pec'her, war-bouez kastizañ hemañ e tudenn e Vab.

Ret neuze klask penaos eo deuet damkanadenn an Doue kastizer da levezonañ ar speredegzh kristen.

Intret e oa buhez ar Yuzevion gristen ha hini sant Paol, da gentañ, gant douevoniezh an arlidoù hag ar gouloc'h diazezet war an aberzhoù loened graet evit afliñ barnerezh an Doue kastizer. Ha daoust ma oa emichañs e varv evit Jezuz ouzhpenn un arlid, e voe kinniget gantañ, neoazh, evel ur skeudenn eus arlidoù gwadek al Lezenn Gozh, pa reas dave, da skouer, ouzh taol e Goan Ziwezhañ, "*d'e wad skuilhet evit an engroez*". Pebezh diforc'h avat etre aberzh Hon Salver hag aberzhoù al Lezenn Gozh ! Rak pezh a glaske beleion hen Israel ober o lazhañ loened e oa amsaviñ pezh na c'heller ket amsaviñ : kinnig gwad chatal evel arouez vuhez, e-lec'h gwad ur mab-den evel arouez vuhez ivez, hogen skuilhet gant hemañ, emouez, ha dre garantez.

E devoud, an aergelc'h-se, krouet gant douevoniezh arlidel ha gouloc'hel al Lezenn Gozh, eo e tleer enta lakaat damkanadenn Doue an Tad o tarvennout gwad e Vab, deuet ma oa houmañ da vezañ gwirheñvel evit ar c'hristenva, hep ma vefe bet klasket evelkent ar gwir ster a oa da reiñ da groaz Jezuz.

Ret eo gant se distreiñ c'hoazh ha dalc'hmat war gomzenn hollbouezek Hon Salver, pa lavare : "*Neb am gwel a wel an Tad*." Karantez douevel an Tad ne c'hell bezañ nemet karantez douevel ar Mab ivez. Doue an Tad, diwar-henn, a weler en ur stumm e tudenn e Vab ouzh kroaz, p'emañ hemañ o vervel dre garantez evit an denion bec'her, dezho da gompren penaos ha betek pelec'h e tleont karout ha dougen int ivez o c'hroaz hervez komzenn Jezuz e-unan, mar fell dezho "*bezañ peurvat evel maz eo peurvat o Zad neñvel...*"

Marv an Den Jezuz, enta, eleze, marv an den evelomp diwar boanioù spontus ouzh kroaz, a oa an doare nemetañ

ha splannañ evidomp da brizañ talvoudegezh karantez an Doue-Jezuz en hon c'heñver. Padal, ne c'haller prizañ ervat nep karantez bennak, anez kaout ur prof d'he heul. Ha prof an Den-Doue Jezuz anezhañ melezeur karantez e Dad, a oa degas dimp, na petra, buhez peurbadel. Rak daoust hag-eñ n'en doa ket diskleriet mat seurt mennad pa lavare : "*Neb a vez o tebriñ va c'horf hag evañ va gwad e vo dezhañ buhez peurbadel*" ? Hogen, dres derc'hent e varv gwadek eo e profas e Gorf da zebriñ dindan spes ar bara hag e wad da evañ dindan spes ar gwin, ouzh taol e Goan Ziwezhan, pezh a dalve da skeudenniñ ervat e Varv a oa da c'hoarvezout antronoz, ha d'e skeudenniñ da viken adal neuze dre ar bed war aoterioù hon ilizoù. Rak anat e teu ar marv da vezañ, moarvat, pa vez disparti groñs etre korf ha gwad. Hevelebekaet enta prof e Varv ouzh prof e Gorf hag e Wad, setu dres pezh a reas Jezuz en un doare fraezh gant ensavidigezh ar Gevradiezh diouzh un tu, ha gant e Groaz, diouzh an tu all, buhez douevel ar Gevradiezh o teverañ evidomp diouzh buhez ar C'hrist aberzhet ouzh kroaz.

Peogwir ez eo neuze pal ar Vadeziant stagañ Mab-den ouzh ar C'hrist evel un ezel nevez dezhañ hag e berzhiadekaet e kevrin e Varv hag e Zasorc'h, e talv euvridigezh ar C'horf Kevradiel da vegañ buhez an ezel-hont, ur wech stag, ha pa van stag, dezhañ, mar kar, da vevañ, hep mui, diouzh rikted lavar, mervel da viken. Ern hon buhez peurbadel en tu-hont d'hor marv korfel, setu neuze pezh ez eo deuet ar groaz da vezañ evidomp. Hag e devoud seurt ked n'eus nemet un arbenn : karantez divevenn hon Doue benniget en hon c'heñver. Hogen, kaerañ pezh a zo, war-bouez keduniñ ouzh Korf Kevradiel e Salver eo e c'hall ivez kement kristen a vez o vuhezañ e feiz, moenat seulabred en e galon, amañ war an douar, rezid ha levezet ar vuhez douevel.

Pa lavar Jezuz neuze dre an Aviel ha dre skridoù sant Paol ne rae nemet sentiñ ouzh e Dad evit "*ober e vennantez*", henn grae moarvat, hogen war-bouez diskelañ Boud Trafadel e Dad evel m'emañ, e reizh e garantez, ha neket e reizh an dial, pa n'eo ket sentiñ a reas Jezuz evel pa vefe diwar un urzh bet digantañ da vervel d'e dregont vloaz evel ur bouc'h-bevez ! ...

Diskelañ e Dad, eleze diskouez e Dad evel *un diabezh a vez o nac'hañ bout an diabezh* a voe neuze, evit Jezuz, gwirvoziñ mervel, pezh a oa, na petra, "peurreiñ", ster hevelep ger arveret amañ e brezhoneg evit ar wech kentañ o vezañ, evel hini "par-donner" e galleg, da skouer, "reiñ kement a berc'henner", karout evel ma vez Doue o karout, - neuze, trugareziñ ha dilemel pep gwall. Rak, penaos en dije an Den-Jezuz roet muioc'h, evit "peurreiñ", eget war-bouez kinnig e Varv, peogwir, evel den e oa, dres a-walc'h, gouest d'henn ober.

Ne c'halle ar pec'hed enta bezañ dilamet nemet gant "peurro" Jezuz o vervel e gwirionez, evel ma reas ouzh kroaz, diwar emyoud. Rak "peurreiñ" a reas, o reiñ kement a c'helle reiñ evel Den-Doue ; Eñ, an diabezh, war-bouez dezhañ end-eeun nac'hañ bout an Diabezh ne rae, gouez da sant Paol, nemet emesteuziñ. Ha pa laverer "emesteuziñ" e c'hoglever, emichañs, ouzhpenn mervel ; gouzañv sklavach ha poanioù kriz o tennañ da lemel pep briagezh digant an aberzhad, pezh a oa, e gwirionez, pal pep marv ouzh kroaz dindan ar Romaned.

Dre ma ne oa neuze netra ken anezhañ, ur wech emesteuzet, ne oa kennebeut na dle na pec'hed e-keñver Doue o vezout. Salvete oa neuze an denelezh diwar an emntraekadur o tont gant huanad diwezhañ ar Ger

Emzenet. Gwalc'het e oamp gant hollangalloudegezh ar c'hroaztachadur o tiskelañ gwir hennad ha gwir ster an Hollc'halloudegezh a zo hini Doue.

Daoust hag e c'haller empentiñ ur garantez bennak a ve brasoc'h hag arzuneloc'h eget hounnezh, diskouezet dimp gant un Doue aet betek emesteuziñ war-bouez gouzañv ha mervel e korf un den gant ar mennad da wenvedikaat ha douvelaat krouedennoù dezhañ ? Setu kevrin boud hon Doue benniget. Setu kevrin hon daspren ha ster an droienn "marvet evidomp", eleze, marvet evit reiñ dimp e Vuhez, hogen gant ma strivjemp, emichañs, da lakaat seurt Buhez d'ober berzh evit hon silvidigezh da bep hini ac'hanomp.

Mar ne vije ket marvet, n'en dije ket ar Mab diskelet e Dad evel m'emañ, ha chomet e vije an traoù evel ma oant dindan al lezenn Gozh, gant aberzhoù-boztalañ forzh pegement, warno bepred liv an digoll douevel, eleze, digoll un doare Doue pagan, evit lavarout ar wirionez.

Gant ar groaz enta en deus diskouezet dimp Doue Jezuz-Krist ned eo ket e hollc'halloudegezh hini ur mac'homer, hogen hini ar Gwazour Diwaskidik bet diouganet gant Izaia (42, 1-31, 49, 1-9. 50, 4-11 ; 53. 1-12).

Pell omp amañ enta diouzh mennozh an Doue Kastizer a vez bepred, siwazh, o tistreiñ kement a dud dioutañ. Setu perak ez eo mantrus evit ar feiz evel ma lavar ar C'hardinal alaman uheloc'h gant gwir abeg. Ha koulskoude, urzh ebet, evel ma ouzer, ne c'hall dont digant nep tad gwirion bennak, nemet ha soliet e ve war e garantez evit e vugel. Ne c'hall Doue gourc'hemenn seurt ebet na ve karantez, hag evit ma vo trec'h ar Garantez e penn ar gont. Setu neuze ar mennozh

emañ dimp magañ e-keñver hon c'hentañ tad dimp, Doue Jezuz-Krist, pa vez hon anien, dindan levezon "brientin ar bed-mañ", ouzh hon broudañ d'ober pezh a zo fall, o vezañ ma vezomp degaset e seurt saviad da grouiñ hon-unan hon c'hastiz. Rak n'eur ket hep gouzout ez eo ar pec'her e-unan, ha neket Doue, a vez o seveniñ e gollidigezh pa bec'h enep d'ar Spered, eleze, pa vez gantañ distaolet karantez e Dad hag e Grouer, rak eñ e-unan an hini a vez neuze oc'h en em strinkañ en daonedigezh anvet ifern, hep ma c'hellfe Doue ober tra ken evitañ, peogwir e vez diwar-henn o tistrujañ Doue end-eeun, neket en e grai, emichañs, hogen evitañ-eñ, evel ma tistrujan, lakaomp, an aer evidon pa nac'han analañ.

Heñvel ar gont evit a sell ouzh ar Varn Gevredin. Rak taolenn Jezuz-Krist o varn ar re vev hag ar re varv, evel maz eo livet gant Mazh. 25, 31-46, n'eus anezhi nemet skeudennadurezh. Ha dre genheñveliezh hepken eo e tleer deveizañ amañ ar ger "barn". Talvout a ra da lavarout an deznadurezh a reno e diaouez an Dasorc'hed, o reiñ tro da zizoleiñ, e barr he sked, karantez Doue bet o c'hervel pep unan e vuhez-pad, o reiñ tro ivez da sellout Jezuz-Krist evel an dave diwezhañ, ma vo sonnet dirazañ pep den en e donkad diwezhel. Ouzh flac'husted ar sklerijenn a vo neuze o tiskelañ karantez Hon Doue evit pep hini ac'hanomp, ne c'hoarvezo enta e dibenn an amzerioù nemet un dra : dont e saviad speredel da vezañ peuranat ha peurateget da bep den. Rak arabat ankouaat emañ lankad ar varn ziwezhañ o ren endeo dre ma vez endeo rannet an denion a-geñver gant o gweredoù, mat pe fall, ha hervez komzenn Jezuz e-unan, pa lavar : "Neb na gred ket a zo barnet endeo..." (Yn. 3,18).

Hogen pa weler, evel m'hon eus graet uheloc'h, al liamm sebezus a zo etre ar groaz hag ar gevrardiezh, e komprener raktal ne c'hall mui ar c'hristen, eleze, an den

stag e gwirionez ouzh ar C'hrist dre ar Vadeziant, chom hep karout Doue hag e nesañ. Daoust d'e wanded amañ war an douar, ne vez ken c'hoant all ebet gantañ, forzh penaos, nemet chom feleun betek ar marv.

Disheñvel eo hiziv moarvat, diouzh pezh a oa gwechall, an doare da zeveizañ kroaz Hon Salver. Ra gouno neuze al lenner ar gelednadurezh wirion pa gavo gerioù, lakaomp, evel "barnerezh douevel" e korf levrioù bet embannet er grezioù kent, koulz ha troiennoù a rofe da grediñ e voe skoet Jezuz gant dorn e Dad, pezh a voe, siwazh, e-pad pell ar gredenn akoursek.



An Ifern

Chom hep talvoudekaat e dalant (Mazh. 25, 14-30), nac'h an oberoù korfel pe oberoù mat e gounid an nesañ (Mazh. 25, 31-46) zo evit un den nac'h betek ar mennozh a dennfe da dalvoudekaat e gevala speredel ha da seveniñ an disterañ tra e gounid "*ar re vihanañ*" bet hevelebet gant Jezuz outañ e-unan. Nac'hidigezh Doue eo, e penn-kont, seurt nac'herezh, pe c'hoazh, pezh a vez anvet "ar pec'hed enep ar Spered", herzel ma ra ouzh ar "mevel fall" da "dreantiñ levenez e Vestr" (Mazh. 25, 21-23), eleze, da voenat ar vuhez peurbadel.

Ret eo, emichañs, ma vefe grevus doare ar pec'hed da neuze, rak aes eo meizañ ne c'hell an emgoll dieiltroüs c'hoarvezout nemet ha nac'h a rafemp an disterañ luskad karantezel andiouerus, ha ni dirak un degont fetis en amgant ar skouerioù dezrevellet gant sant Mazhev e korf an arroudoù rakveneget.

Nac'h karantez ouzh an hentez e seurt amveziadoù zo, evit an den, ouzpenn nac'h en e zonañ e garantez ouzh Doue, disteurel hini Doue en e geñver ivez.

Hogen, daoust ha rezid a-walc'h en defe an den evit ma vefe kablus ? Mar ned eo ket rez a-walc'h da nac'h karantez Doue pe, gant gerioù all, mard emañ Doue o tunembreger e rezid hag ouzh e rediañ d'e garout, n'eus ken evitañ rezid ebet gouest da vezañ mestroniet gantañ. Ha mar ne weredomp ket en hon rezid ha diwar emyoul glok, ne vezomp ket atebek kennebeut eus kement a reomp enep karantez Doue ha hini hon hentez. Gant gerioù all, ne

c'hellomp ken bout atebek eus kement a reer anezhañ
"pec'hed enep ar Spered."

Seulseurt eo avat hon rezid, maz eo garanet, zoken,
c'hoarvezusted an Ifern en e frammadurezh. Ha dre maz
omp dieub da nac'h pep karantez ouzh Doue ha mab-den,
diwar-bouez hon rezid, - barrek maz eo, dre berzh e
c'hourveliegezh, da vont betek ar penn-pellañ, e
tefraeshomp, diwar-henn, c'hoarvezusted an
emzaonedigezh, anvet ifern.

Moarvat eo hogos andezevus seurt c'hoarvezusted, ha
padal, n'omp ket evit he dizarbenn nag he skarzhañ kuit,
anez dimp, dres a-walc'h, kemmanñ razh pezh a zo bet
kelennet dimp gant Jezuz diwar-benn Doue hag e natur, hag
anez dimp, ivez, war un dro, diskar briegezh e grouedenn
c'houbarel : an den.

Natur Doue zo karout. N'eus anezhañ, a zo kaeroc'h,
nemet karantez, evel ma lavar dimp sant Yann, bet an test
speredel tostañ d'ar C'hrist-Jezuz, a roas dezhañ
kelennadurezh don diwar-benn natur e Dad, eleze, diwar-
benn natur an Doue maz eo-Eñ, evel ma ouzer, kensolwez
gantañ. Dizarbenn, neuze, ar c'heal o tennañ da
c'hoarvezusted an Ifern, - dre ma tlefe an Hollc'halloudeg,
war debet, disgwallañ pep pec'hed, en abeg d'e garantez
c'hroñs ha didermen, - zo magañ mennoziou kamm diwar-
benn seurt karantez. Moarvat, gant "e zorn" o krouiñ, ez eo
Doue an Hollc'halloudeg, hogen an Hollanc'halloudeg eo
ivez gant "e galon" o karout.

Atav e vez Doue o trugareziñ hag o karout. Mar
klaskfe avat distrujañ an Ifern, a zo domani rezid e
grouedennoù emskiantek hag atebek, ne vefe ken o tougen

doujañs d'o briegezh na, diwar-henn, o vegañ karantez en o
c'heñver. Goulenn neuze digant Doue distrujañ an Ifern a
vefe koulz ha goulenn digantañ chom hep karout, pezh a
hañval bezañ diac'hinadel, evit ur gwel. Se a vefe goulenn
digantañ ivez kemmanñ e hennad ha nac'h bezañ Doue.
Disheñvel e vefe neuze diouzh pezh en deus desket Jezuz
diwar-benn an douevelezh wirion e par e Dad.

Distrujañ an Ifern a vefe, evitañ c'hoazh, hon rediañ d'e
garout ha, war un dro, moustrañ hon rezid, arouez ha
diazez hon briegezh peurbadel. Nemet, ne ra ket Doue
ouzhimp tamm ebet evel ma ra un tad ouzh e vugale pa
vezont o c'hoari las ha p'o laka da sentiñ. Evit Doue, n'omp
ket kañfardedigou. Pa c'hoarvez d'unan bennak lavarout :
me'z redio d'am c'harout, ne vez mui karantez en e galon,
rak gourlakaat ar garantez ned eo mui karout. Ha
dismegañs ouzh Doue e vefe ivez ardeurel warnañ ar
mennozh e c'hallfe hon rediañ, dezhañ, dre berzh e garantez
didermen, - hervez lod speredoù, - da gas an ifern da get.
Rak, un ifern, e gwirionez, e vez evitañ ivez gwelout ur
grouedenn garet dezhañ o vont da goll, dre ma ne c'hall ket
paouez d'he c'harout, hep, navitse, he rediañ da respont d'e
garantez-Eñ, - en ur ger, dre ma van dic'halloud-krenn, en
abeg d'e revil didermen ouzh rezid andestrihadus hag
andegetadus an emzaoner "e galon vaen".

Nann, Doue ne ra ket ouzhimp evel ouzh
kañfardedigou. Ne c'hall ket lemel diganimp ar rezid en
deus roet dimp, anez paouez da vezañ an Doue n'eus
anezhañ nemet karantez. Seurt rezid eo a ra meurded Vab-
den, pa vez oc'h emzaoniñ zoken, rak, da viken e chomo
war an nouez-den, kollet, zoken, ar siell ma oa bet
engwiriet ganti, adal an derou, da berzhiañ e buhez Doue.
Pebezh briegezh ! Setu perak e lavaren uheloc'hik ez eo

garanet c'hoarvezusted an ifern e frammadurezh hon rezid. Klask neuze dizarbenn seurt c'hoarvezusted a vefe, evit Doue, dre heulret, esteuziñ ar vriegezh hag ar c'hourveliegezh bet mennet gantañ koulskoude a-raok pep tra. Hag evit a sell ouzh an den, daoust ma ne c'hell ket, emichañs, distrujañ karantez Doue en he c'hrai, e c'hell, na petra, henn ober evitañ e-unan, dres evel maz on gouest da zistrujañ evidon, em c'hreiz, an aer a zo andiouerus din, hep, neoazh, he c'has da get war va zro, pa ne vennan ken analañ. Hogen nac'h karantez Doue hag he distrujañ e'm c'hreiz, evel nac'h analañ, setu dres petra eo an emzaonedigezh hag an ifern.



Adenkorferezh

Bremañ ma weler kreizennoù Boudaiz o sevel un tamm e pep lec'h dre Europa hag e Breizh, zoken, e tleer, a gav din, sachañ evezh ar gristenion war gudenn an adenkorferezh a vez kelennet gant dalc'hidi ar gravez-mañ, seul vui ma hañval al luskad skarennek anvet *New Age* (*Oadvezh Nevez*) ober e vad eus ar gredenn e kont ivez.

Keal an andenkorfañ gant ar voudaiezh n'eo ket unan dinoaz, pell ac'hann, o vezañ m'emañ e kevenebadur groñs gant div vongoal bennañ ar gristeniezh : hini an Daspren hag hini an Dasorc'h.

Petra soñjal neuze diwar-benn an adenkorfañ haeret gant Boudaiz evel un devoud a vefe boutin d'an denelezh kev an ?

Pa daoler pled ouzh ar pouez a vez roet gant ar voudaiezh d'ar meveriañ ha d'an embreger treouestlek, evit ma c'hellfe mab-den derc'haviñ yac'hoc'h ha glanoc'h davit an *Nirvâna*, gant tremen enta dre lies adenkorfadenn tebet glanaus, e tleomp, neuze, a gav din, ensellout pishoc'h doare seurt kudenn.

Buan e teuer da welout ez eo ansoliet kredenn an adenkorfañ, rak, anat eo e vez ar voudaiezh o klask diskouez e talvezfe ur meni kilemdroerezh kenkoulz ha pep blenemdroerezh (1), daou anvad ar re-mañ hag i gourzhebek, evel maz eo kaer gwelout.

Argilerezh eo evit gwir distreiñ d'ur stad c'hlennel all pa vez falloc'h eget an hini gent, tra ma vez gwellaidik, hep adenkorfañ, ar strivoù kristen a vez renet e stern ar pezh an eus anvet e brezhoneg *blenemdroerezh*, ur ger hemañ hep dezhañ e bar e galleg na, marteze, e kalz yezhoù all.

Keñveriet an eil ouzh eben, ez eo kevenep-krenn ar voudaiezh d'ar gristeniezh e par treug an treouestl evit pep hini anezho. Rak diazezañ ur vongoal eus o c'hravez war an adenkorfañ, evel ma ra Boudaiz, eleze, tremen dre ur steudad adenkorfadennoù evit, war debet, gwellaat ha tizhout hez an Nirvâna, zo diazezañ o c'hravez, e pep keñver, war ur c'hilemdroerezh n'eus anezhañ, e gwirionez, nemet ur steudad argiladennoù. Ha daoust d'ar pezh a reont evit ren buhezegezh-vat - peurgetket e par ar vanac'helezh, - ne zegas o strivoù netra dezho muioc'h eget mezvidigezh tachadoù izelañ an ene, pezh a gammgemeront, siwazh, evit speredelezh wirion. Amañ n'eus anv ebet, emichañs, eus mezventi gorfel o tizhout blein boutin ar bred, nemet eus mezventi vredel o tizhout, neoazh, blein ar spered krouet ennomp diouzh enebañs Doue.

Dre maz eo eztaolad un argilerezh, ez eo hañval enta haeradur an adenkorfañ ouzh pezh a lavarfe ur c'hristen, da skouer, mar degouezhfe gantañ embann e c'haller tizhout yec'hed speredel war-bouez distreiñ atav d'ur metou danvezel disperedelaus ! Rak un distro d'ur stad izeloc'h ha disperedelaus eo, evit gwir, pep adenkorfadenn ; re anat an dra evit kement poell-den yac'h a gaver koulz e Reter hag e Kornog an dirbellenn : distreiñ e buhez korfoù all zo distreiñ gant ar marv eus bed ar spered d'ur bed korfel a zo kevenep, forzh penaos, da vuhez ar spered. Perak avat e tlefe an anaon bezañ rediet, heñveldra dalc'hmat, da c'houzañv seurt buhezadur e stern kelc'htroioù danvezel-rik,

ha goude m'o deus dilezet bed an danvez dre berzh ar marv? Daoust hag e vefe ivez boudoù didralen bepred eus an anaon, goude dezho dilezel ar stern didralen edont o vevañ ennañ war an douar ? "*Didralen e vezint, hep mar ebet, keit ha na vint ket deuet da werc'helaat,*" a vo respont Boudaiz. Perak avat e tistrofent lomañ da werc'helaat hag i tostoc'h d'an tralen, pa vezont en tu all, dre ma vezont eno dizalc'hoc'h diouzh an danvez, endra splujetoc'h war an douar en didralen ? Daoust hag e kav an unan tommder d'e gorf war-bouez dezhañ pellaat diouzh an tan ? Daoust hag e ve hennezh an doare da vab-den da dralenaat ?

Splann-kaer eo ne c'haller ket tostaat ouzh nep hez eulavel, na pa ve anvet *nirvâna* zoken, diwar-bouez adenkorferezh diastal, dre ma vefe seurt buhezadur o tisoc'hañ, gant pep adenkorfadenn, war un didralen divarre, na petra, da vastañ da vab-den hez an tralen.

Petra soñjal avat diwar-benn devoudoù o tennañ da verkañ e vefe adenkorfadur diwar - da skouer, - anavezout en un doare emdarzhek traoù bet e piaou unan marv bennak, pe c'hoazh, e degont ur bugel bihan daou vloaz, poan gantañ o komz evit c'hoazh hag o tistagañ ken fraezh ha tra anv un den emañ, a zo kaeroc'h, o kejañ gantañ evit ar wech kentañ...

Mar ne c'haller ket lakaat seurt beziadoù war gont an adenkorferezh, e ranker, neuze, o lakaat war hini ur meni enpiaouerezh anvet gwechall *poziterezh*, sev, un doare *bedarvevaderezh*, hag eñ o perzhen d'ur bed adanvet *link* gant ar skiantourion a zo, d'ar mare-mañ, o klask gant araezadoù arnevez kaout krog war arbennoù an erzerc'hadoù anezhañ.

War gont ar *bed link-hont* eo e tlefed neuze lakaat ar gweredoù a dremen, gant Boudaiz, da "speredel", pa ned int, evit gwir, nemet tunvoneiz ar spered krouet ennomp, evel ma lavaran uheloc'hik, diouzh enebañs Doue. Ar pezh a ziskleriomp bremañ diwar-benn ar *bed link* zo pell diouzh bezañ sorc'hennoù, rak, anez o c'hedanaout, n'eus tu ebet da zisplegañ ar bern anadennoù a dalv, siwazh, d'an adenkorfelourion da soliañ o lavaredoù.

Evit kel, adarre, ar vugaligoù a vez Boudaiz o lakaat en a-raok evel, war debet, adenkorfidi, e ranker atodiñ e vez ar galloud-hennadiñ ha -deznadiñ a ziskouezont o steuziañ bep ma vrasaont ha ma vez o nouezelezh o nerzhekaat, ken ma vez dizarbennet ganto tamm-ha-tamm kement treuzensil hag enpiaouerezh a zo.

Aes eo, diwar se, gwelout ne c'haller ket displegañ kement a zo kuzh pe gevrinus diwar-bouez un adenkorferezh direvoud.

Sellomp bremañ ouzh un arvez all o tennañ da vezadur Boudaiz e-keñver boud mab-den. Emdouell e vije, hervezo, krediñ e vije padegezh gant nouez an den pa vez o tremen a vuhez da vuhez, war-bouez adenkorfañ. Evito ned eo an nouez nemet un derc'h deberzhel ha steuzidik. Ersezadel e vije, liz dezho korf an den koulz hag e spered, hañvalat hepken e dreüded speredel. Ne vije neuze gant ar gouzrec'h nouzel talvoudegezh ebet evel solwez ; ne vije gantañ hanvoud padek ebet.

D'ar gristenion a vije techet da grediñ er voudaiezh pe, hepken, e nep koaliad adenkorfelour bennak, e lavaromp diouzhtu ne c'hallont ket magañ seurt mennozioù ha, war un dro krediñ en un doare reizh ha gwirion, en Doue Bev bet

diskuliet d'ar bed gant e Werv emzenet, Jezuz ar C'hrist. Rak un Doue nouzel, eleze, padek eo an Doue Bev, ha nouezioù ken padek all, diwar-henn ivez, an denion bet krouet gantañ. Etrouezel eo neuze an darempredoù a vez etre Doue ha kement den a gred ennañ. Setu perak ez eus ur ster, e gwirionez, gant ar bedenn evel liamm etrouezel etre Doue hag an den.

Hogen pa greder e keal an adenkorferezh, peseurt kefridi a van en diwezh gant Doue ? Peseurt talvoudegezh a vez gant pezh a ra Doue, peogwir e vez pep adenkorfadenn e dalc'h saveleñ ar c'harma, saveleñ emmanuel an digoll evit kement a zo fall e par ar vuhez bet renet a-raok houmañ, hervez Boudaiz. Pezh a rafe Doue neuze a vefe chom da sellout, ha netra ken, hep ezhomm ebet dezhañ d'emellout e silvidigezh an den. E berr, silvidigezh hemañ ne vije ken e dalc'h nep ober douevel. Ezvevennet e vije enta pep gras evel prof silvidigezhus o tont digant Doue, tra ma fell dezhañ, koulskoude, hervez ar Skriturioù, ma vefe salvet kement den a zo (Rm 11, 13 & Tm 2, 4). Skarzhet e vije diwar se pep kelennadurezh kristen o tennañ d'an Daspren sevenet gant ar Garantez Nemeti, maz eo ar C'hrist Jezuz bet tachet ouzh e groaz evit *dilemel pec'hed ar Bed*, bet gantañ skuilhet e wad evit *afin* an denion, sev an holl dud bet ha da vezañ. Raktal e weler ez eo seurt koaliad gourzhenep da hini kement adenkorfelouriezh emskritellet kristen a zo, hag emichañs da hini ar voudaiezh, peogwir e vez an eil hag eben o krediñ e c'hall mab-den ober e silvidigezh e-unan, hep skoazell nep gras digant un Doue bennak.

Mar keñveriomp bremañ keal an dasorc'h ouzh hini an adenkorferezh, e welomp ned int tamm ebet diouzh an hevelep hennad. Ankeñveriadus-glez eo neuze an eil ouzh

egile. Evit henn diskouez, sellomp da gantañ ouzh doare dasorc'h Jezuz.

Distro Hon Salver d'ar vuhez n'eo ket bet heñvel tamm ebet ouzh hini Lazar, da skouer, rak azbevaet n'eo bet ken Lazar evit mervel adarre diwezhatoc'h. Hogen azbevaidegezh Lazar o sevel diouzh e vez, n'eo ket kennebeut un adenkorfadenn. Henn gwelout a raimp diouzhtu goude bezañ keñveriet an azbevadenn c'hoarvezet gantañ ouzh trec'h Jezuz e-unan war ar marv.

N'eus nemet ar ger dasorc'h a gement a glot e gwirionez gant distro Jezuz d'ar vuhez. Ar burzhudoù a reas Hon Salver war an dachenn-mañ e gounid un nebeut tud evel maz int dezrevellet dimp gant an Aviel, ned int enta nemet azbevadennoù par da hini Lazar. Dasorc'h Jezuz avat, evel patrom an hevelep dasorc'h a vo hon hini e diwezh an amzerioù, n'en deus netra da welout gant pezh a glasker, a-wechoù, hevelebekaet ouzh adenkorferezh. Rak goude bezañ marvet ha dasorc'het e tilezas evit mat an Aotrou Krist ar vuhez c'hlennel bet gwisket gantañ diagent. Diouzh un hennad disheñvel-krenn e oa hiviziken e vuhez goude an dasorc'h, petra bennak ma hañvale bevañ evel e geneiled, o tebriñ evelto, da skouer, evit diskouez ne oa ket un "tasmant" anezhañ.

Hag evelkent, par da Lazar, hemañ ken azbevaet e vir Jezuz ivez e dreüded, pezh nad eo tamm ebet doare an dud adenkorfet. Hep poan, - amzer dezho hepken d'azasaat ar feiz ouzh ar saviad, - ha setu ma c'hell raktal e dud eilanaout Jezuz evel an hevelep den ha kent an dasorc'h. Arall eo, hep ket a var, hep bezañ un den all, koulskoude, dre ma vir e dreüded. N'eo ket neuze peogwir ez eo distro eus ar marv ma tleer lavarout ez eus un adenkorfadenn kennebeut eus e hanvoud nevez. Rak chom a ra kement den tebet adenkorfet war an hevelep live-hanvoud atav, tra m'emañ Jezuz

dasorc'het war ul live-hanvoud nevez. Gant ar C'hrist bet gantañ trec'het ar marv, n'eo ket ken ouzh un den azbevaet eo e kejer, hogen ouzh *an Hini Kentañ Ganet* en ur stumm da vezañ den evel ma n'eus bet biskoazh anezhañ, un doare-den nevez en holl d'an holl. Rak den eo evit gwir, miret gantañ, na petra, an hevelep treüded hag an hevelep nouezelezh a oa dezhañ kent an dasorc'h.

E gin d'ar pezh a lavar ar voudaiezh, ne dremener ket dre varvoù niverus. Fraezh eo sant Paol war se gant al *Lizher d'an Hebreed*, pa vez o tiskleriañ (9, 27) : "*Hag evel bet merket d'an dud, mervel ur wech...*"

Mar ne varver neuze nemet ur wech hepken, n'eus ster ebet, re anat eo, gant keal an adenkorferezh o tegas marvoù war debet niverus. N'eus enta nemet an dasorc'h a gement a zo hervez ar wirionez prederouriel, hag ivez, feizoniel, forzh penaos, evel m'henn gweler, pa lenner an toullad arroudoù a gaver un tamm e pep lec'h dre skridoù an Abostol Paol hag an Aviel :

Rm. 6, 5.

"Mard omp deuet da vezañ unan gant ar C'hrist dre ur marv heñvel ouzh e hini, e vezimp ivez unan gantañ dre un dasorc'h heñvel ouzh e hini."

Rm. 8, 11.

"Mard emañ o chom ennoc'h Spered an Hini a savas Jezuz a douez ar re varv, an Hini a savas Jezuz a douez ar re varv a vuhezekaio ivez ho korfoù marvel dre ar Spered a zo ennoc'h o chom."

I Kor 15, &, 20, 22.

"Dasorc'h ar re varv, mar n'eus ket anezhañ, dasorc'h ar C'hrist n'eus ket anezhañ kennebeut. Hogen savet eo ar C'hrist a douez ar re varv, evel blenfrouezh ar re gousket. Evel ma varv an holl e par Adam, heñvelseurt ez advevo an holl ivez e par ar C'hrist."

Filip. 3, 20-21.

"Ni avat emañ hon bro en Neñvou, hag ac'hann e c'hortozomp hon Aotrou Jezuz-Krist evel Salver, Eñ hag a dreuzneuzio hon c'horf reuzeudik d'e lakaat kenstumm gant e gorf a glod."

Pezh a dalv da lavarout, dre un dasorc'h par d'e hini.

Kol. 3, 3-4.

"Rak c'hwi zo marv ha kuzhet eo bremañ ho puhez gant ar C'hrist e Doue. Pa zeuio ar C'hrist avat war wel, Eñ hon buhez, neuze, c'hwi a zeuio ivez war wel leun a glod en e ser.

Aviel Yann. 6, 44.

"Rak houmañ eo mennantez va zad m'en devo buhez peurbadel kement hini a wel ar Mab gant feiz ennañ, ha Me va-unan en dasorc'ho d'an deiz diwezhañ."

Ha n'eo ket hepken ar gristenion stag ouzh ar C'hrist Jezuz a vo gwelet o tasorc'hiñ, hogen an holl dud bet ha da vezañ, hervez ma tiskleir sant Yann an Avielour pa lavar (5, 28) e teuy kuit eus o beziou "ar re o devo graet ar mad o tasorc'hiñ evit ar vuhez, ar re o devo graet an droug o tasorc'hiñ evit bezañ barnet."

Gant *Oberoù an Ebestel* e kavomp ivez an hevelep kelennadurezh pa lavaront (24. 15), "e vo un dasorc'h evit an dud reizh koulz hag evit ar bec'herion."

N'eus ket enta div wirionez diwar-benn ar c'hudennoù-mañ. Evit an dasorc'h, hep ket a var, eo ez eo graet mab-den, goude dezhañ mervel ur wech hepken, diouzh skouer ar C'hrist, an Aotrou ha Salver. Rak Eñ, e gwirionez, eo an Aotrou Nemetañ, o tegas dasorc'h hollvezel, ha n'eo ket adenkorferezh. En ur stumm ez eo bet kedanavet e drehontelezh gant ar Yuzevion pa lavarent "*ne oa bet*

biskoazh den o komz eveltañ..." Eñ eo ar Gwery, eleze, *Lavar Solwezel* an doue Bev, rak, mar ned eo ket, piv, neuze, a gredfe, nemet ha trelatet-rik e vefe, embann evel m'En deus graet : "*Me eo an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez...*" (Yann, 4. 16). Ha war-bouez mont da heul Jezuz Hon Salver eo e kavimp hez gwirion, rak, evel ma lavar dimp, war-lerc'h sant Paol, ar mestr bras reizhvriat Serafim Sarov : "*N'eus mann a-us da hez ar C'hrist.*"

Ra brederio war se nep kristen bennak a vefe droukhoalet gant an adenkorferezh, anezhañ ur c'heal estren en holl d'an holl d'ar gristeniezh.

(1) "**Blenemdroerezh**".

Ar ger-mañ a gavan mat evit e gevenebñ ouzh 'kilemdroerezh', evel m'hon eus gwelet, o talvout kement hag argilerezh e penn-kont. Gant "blenemdroerezh" e hañval dimp klevout mouezh ar C'hrist war Venez an Evurustedoù, o youc'hal *gwennlusket* (gwenvedik, evurus war-raok), rak setu, war-bouez nebeut ster ar gomz arameek bet distaget, hervez Chouraqi, gant Jezuz ha bet troet en hon yezhoù gant "evurus", "gwenvedik" hepken. Ya, ober diouzh erbedadenn speredel wirion Hon Salver zo mont *gwennlusket*, - eleze, emdreñ evurus war-raok dreist da bep poan, diwask ha drouk'hoant davit an dasorc'h eulavel, ha neket chom da deukañ hag argilañ, e gwirionez, gant kilemdroerezh an adenkorfañ.



Dasorc'hidigezh Kristen ar C'horfoù

An displegadurioù a ro sant Paol diwar-benn dasorc'hidigezh ar c'horfoù zo frouezh burzhud bras e ganttro da geñver unan eus an ergerzhioù-kospañ e oa boas da ren a-enep d'ar gristenion. Rak goude dezhañ bezañ bet skoet d'an douar diwar e varc'h war hent Damask, dallet gant ur sklerijenn trec'h, emezañ, da splannder an heol, ha badet gant ar vouezh a gleve (*Oberoù an Ebestel, 9/3/6*), setu Saoul, diouzh e anv gwirion kentañ, o tont da vezañ dibabet gant Jezuz, Aotrou e ganttro ken estlammus, evel Abostol meur ar broadoù hag o kaout digantañ war-eeun diwar neuze endalc'hed klok E geennadurezh e-pad an nebeud deizioù ma chomas e Damask hep debriñ nag evañ (*Oberoù an Ebestel 9/9*).

Sked hevelep burzhud a verzher mat o welout gant pebezh nerzh e tiskouezo Paol e feiz p'en devo tro, kerkent hag ar bloaz 55, gant e Lizher kentan da Gorintiz (*I Kor 15-17/22*), ma tispleg dezho kudenn dasorc'hidigezh ar c'horfoù. Rak eñ, e gwirionez, eo an hini a vo da gentañ - a-raok aozourion an Aviel, zoken, - o skrivañ diwar-benn hevelep kraf.

Goude bezañ bet kanttroet enta en un doare ken marzhus ha dezhañ diwar neuze ken bras gouiziegezh diwar-benn kevrin ar C'hrist, penaos ne vije ket bet entanet Paol gant seurt kudenn : "*Mar n'eo ket dasorc'het ar C'hrist,*" emezan, "*ez eo aner ho feiz... Hag ivez, kollet ar re a zo marvet gant ar feiz er C'hrist. Mard eo evit ar*

vuhez-mañ hepken hon eus kredet er C'hrist, ez omp ar reuzeudikañ tud a zo. Hogen n'eo ket se ! Dasorc'het eo ar C'hrist evit gwir a-douez ar re varv, an hini kentañ eus ar re gousket...

Hag evel ma varv an holl e par Adam, ez advevo an holl ivez e par ar C'hrist."

Raktal e weler diwar-henn ez eo diazezet dasorc'hidigezh ar re varv war adsavidigezh ar C'hrist a varv da vev, lezet gantañ goull ar bez ma oa ennañ gourvezet e gorf marv, tri deiz goude bezañ bet sebeliet, ha hervez m'en doa diouganet.

Lavaromp diouzhtu, neoazh, n'eo ket heñvel an disterañ an dasorc'h ez eus anv anezhañ ganimp bremañ ouzh ar pezh a c'hoarvezas gant Lazar, pa voe hag en marv, adroet buhez dezhañ gant e geneil Jezuz (*Yann II, 39-45*), pe gant mab intañvez Naim (*Lukaz, VII, 11-16*). Rak distro an daou-mañ d'ar vuhez ne voe nemet azbevaerezh anezhañ, advavel ma reas an eil hag egile un toullad bloavezhioù war-lerc'h, evel n'eus forzh piv.

An Arloz Krist avat, goude dezhañ dasorc'hiñ, a zilezas evit mat ar vuhez c'hlennel, - rezizomp kentoc'h : ar beved bet gwisket gantañ e krozh e Vamm Vari. Klodouezet e voe neuze e natur-den evit ar vikenvezh. Hep gantañ, neoazh, ar sked a wiskas e gorf da vare klodouezadenn an Tabor, houmañ bet berrbad, forzh penaos, ha c'hoarvezet, emichans, evit diouzerchañ e c'hougonez da zont, evel Aotrou ar Vuhez e Rouantelezh an Neñvoù.

Tregemmet e voe enta e natur-den dre berzh Dasorc'h ar Pask, daoust ma hañvale ren e vuhez bepred en hevelep stumm hag an dud all, war-bouez dezhañ, da skouer, debrñ hag evañ evel e geneiled, kement ha diskouez, moarvat, ne

oa ket anezhañ ur spered, eleze, un tasmant, rak, emezan : "ur spered ne vez gantañ na kig nag eskern evel ma welit em eus-me..." (*Lukaz, 24, 39*). Ha dre berzh hevelep tregemmadur e vo barrek ivez da realañ en un doare burzhudus, o treuziñ, da skouer, pep dor ha pep moger, hep reiñ da c'houzout en a-raok, evel pa vo o gwelet naouiñ ribus e-barzh an ti ma oa repuget e geneiled ennañ, hag i dindan o spont rak ar Yuzevion.

E berr gomz, eskoridigezh ar pezh a vez anvet *korf klodus* gant ar feizoniezh eo a voe dasorc'hidigezh korf Jezuz, dezhañ hiviziken perzhioù o trehontiñ an egor hag an amzer. Ha sed a vo ivez perzhioù ar c'horfoù dasorc'het evit kel an dud chomet stag ouzh ar C'hrist. Ya, sed a ranker intent pa lavarer gant ar Greco : "*Gortoz a ran dasorc'hidigezh ar re varv...*"

En e Lizher da Gorintiz, restet uheloc'h, e tiskleir Sant Paol ez eo bet savet ar C'hrist a-douez ar re varv evel *blenfrouezh* ar re gousket, ger bet troet e brezhoneg plaenoc'h dre an *hini kentañ* eus ar re gousket.

Blenfrouezh ar re gousket a c'haller meizañ evel patrom hag arbenn an dasorc'h finvezel a c'hoarvezo avat evit ar re fall koulz hag evit ar re vat (*Yann V, 20 ; Oberoù an Ebestel, 24, 15*). Rak pep unan a ranko dont dirak Mab-Doue ouzh dor ar Rouantelezh en e gevanroez denel, dezhañ da zivizout e-unan e donkad a-raok mont diouzh e du, sklerijennet gant al luc'h o skediñ diwar Arloz ar Reizhded, ar Wirionez hag ar Vuhez.

Da c'hortoz an darvoud finvezel e kont, anvet c'hoazh ar Varn Diwezhañ, e vez an dud o tasorc'hiñ seulabred ent kerrinel, da geñver o ganedigezh kristen dre ar Vadeziant. Rak ur marv gwirion d'ar pec'hed eo an kez kerrin evit

genel da vuhez ar rad a zo buhez ar Mab e pep kristen, war-bouez da hemañ dont da vout un ezel nevez d'ar C'horf maz eo ar C'hrist ar Penn anezhañ. Dasstrolladeg izili seurt korf a zo hewel, emichañs, war an douar, e par an Ilizoù kristen. Ha disoc'h santelidigezh ar gristenion a gloto dres gant an dasorc'h finvezel emañ ar feizidi o c'hortoz e vo kaset da benn diouzh doare dasorc'hidigezh ar C'hrist end-eeun sev e par gwir gorfoù kig hag eskern ; rak dasorc'h et eo Jezuz e kevanroez e gorf den hag emañ en e Rouantelezh neñvel er stad ma oa pa lavare d'e dud, da geñver an emziskouez restet uheloc'h (*Lukaz, 34, 39*) ne oa ket, emezañ, un tasmant anezhañ, nemet edo eno dirazo gant e gorf kig hag eskern...

Gant an amzer o tremen avat, e vo gwelet, betek ar pevare kantved, lod kristenion o tarlakaat, moarvat dindan delanvad an nevegezh, e c'hoarvezo an dasorc'h e korfoù aezhennek ha dibafalus. Hogen krouadennoù nevez ne vefe ken diwar-henn eus ar seurt korfoù, hep dezho an disterañ kewirded gant korf gwerc'hel, kevan ha pafalus an Arloz bet emziskouezet d'e dud. Ken e teufe neuze an dasorc'h da vezañ gwengelek-rik !

Enepe seurt meizadur speredelour, e tleer derc'hel da deizadur gwerc'helour an dasorc'h, daoust ma ve arabat ankouaat e teuo, na petra, korf pep dasorc'had salvet da vezañ kenstumm gant korf klodus ar C'hrist (*Filip 5, 21*). Ne chomo nemet an drougion hep bezañ klodouezet gant dasorc'hidigezh o c'horf gwirion, daoust ma ne vo bet biskoazh ken lemmveiz all dirak diventelezh o fallagriezh, eleze, betek mont da ren o-unan an devarn ouzh o stuz kollus.

Ret c'hoazh ouzhpennañ e vo heñval-pakret ar c'horf dasorc'h et ouzh an hini a zo bremañ o vevañ. Anat-kaer eo ar wirionez-mañ pa studier ar feizoniezh kristen kezivik, - da skouer, pa glever sant Iranaios o tiskleriañ en e skrid "**Adversus Haereses**" : "*ez eo e par an hevelep korfoù bet marvet e vo sevenet pep dasorc'hadenn, rak anez d'ar c'horfoù bezañ heñvel ne vije,*" emezan, "*dasorc'h ebet evit ur re varv !*" N'eo ket aet an Iliz, koulskoude, betek haeriñ e ranko an danvez bezañ an hevelep hini evit ma c'hellfed lavarout ez eo an hevelep korf a vo dasorc'h et. Pa lavar enta e ranko ar c'horfoù bezañ heñvel e fell d'an Iliz difenn ar c'heal eus treüded pep nouez-den, evit ma c'hello houmañ kaout he lec'h gant he ferzhioù dezhi e buhez nevez an neñvoù.



Ster ar Silvidigezh Kristen

Alies e vez arveret ar ger "*silvidigezh*" gant an Iliz, ha moarvat emañ da lakaat war ar renk gant an termenoù kristen pinvidikañ an eulad anezho. Rak, n'eus nemet digeriñ ar Bibl d'ober evit gwelout diouzhtu pegen fonnus e teu war wel anvadoù evel "*silvidigezh*" ha "*dieubidigezh*", menegiñ ma reont en un douez danvez ur prof o tont dimp digant Doue hag an Anzav Meur m'emaomp o c'hortoz ar sevenidigezh anezhañ war hed ha betek dibenn an Istor.

Seurt silvidigezh zo hini Jezuz, anvet gant ar gristenion "*Ar Salver*". Ha ken boutin eo an dra zoken, e brezhoneg, ma lavarer primoc'h "*Hon Salver*" eget ne vern peseurt anvad all, pa venner menegiñ Mab Doue bet gwerzhet evidomp. Rak, deuet eo Jezuz evit "*selvel e bobl diouzh he fec'hedoù*", "*evit ma vefe gantañ salvet ar bed*".

Keloù mat ar Silvidigezh eo, - pep kristen henn goar mat, - neges ar C'hrist degemennet dimp dre hent ar prezegerezh Ar C'heloù Mat, sed an anv a zo bet roet atav gant Jezuz d'e brezegerezh. Ha "*Keloù Mat Rouantelezh Doue*" eo al lavarenn glok emañ Sant Mazhev oc'h ober ganti. E Lizheroù Sant Paol e kaver ivez dre galz arroudoù anezho troiennoù evel "*Keloù Mat Gras Doue*", "*Keloù Mat Hez ha Klod ar C'hrist*". N'eus kristen desket ebet kennebeut na vije hep gouzout e vez graet "*Aviel*", eleze "*Keloù Mat*" eus ar pevar levr a vez oc'h embann buhez ha kelennadurezh Jezuz-Krist. Diwar ar gresianeg e teu ar ger "*Aviel*". Hag eñ kouezhet kentoc'h e stuz un termen divlaz da vare Hon Salver, setu ma voe ardaolet gant ar skrivagnerion nevezkevamoudel un nerzh, ur sked hag un endalc'had levezet n'o doa bet biskoazh o far betek-henn.

War-lerc'h an Arloz ha war an urzh bet roet gantañ, e voe gwelet an Ebestel o seveniñ ar Gefridi : degas ar silvidigezh "*betek penn pellañ ar bed*". Ha pa c'hourbannont o "*C'hredo*" e vez ar feizidi o lavarout "*evit an denion hag evit hon silvidigezh ez eo diskennet Mab Doue diouzh an neñvoù...*". N'eus mar ebet enta : kefridi bennañ ar gristeniezh, (hep bezañ koulskoude an hini nemeti !) zo kefleuniañ silvidigezh peurbadel an dud, karet ha maz int gant Doue, Tad Jezuz-Krist.

Seurt silvidigezh avat, desellet evel solwez ar gravez kristen, peseurt ster a vez roet dezhi gant ar gredourion hiziv an deiz ?

Ya, petra eo ar "*Silvidigezh*" d'an ampoent evit ar gristenion, kaset-digaset ma vezont gant lanv o devezhioù peurvuañ sodellek ha dilufr ? Daoust hag e c'hallo ar respont a vo roet da hevelep goulenn broudañ en o c'halon ar c'hoant da vezañ salvet ? Ret e vefe dezho da gentañ, evel ma lavare Nietzsche "*livañ dremmoù salvetoc'h, int hag a lavar bezañ salvet ; ret e vefe dezho kanañ dimp kaeroc'h kannennoù...*" Ha goude ma ne blij ket nemeur din seurt komzoù a gavan diwiroc'h-diwirañ, o vezañ ma kejer bepred gant kalz kristenion, na pa vent da skouer heskinet, hag int leun dalc'hmat o c'halon gant levezet ar C'hrist o parañ, mar n'eo ket war o dremmoù skuizh dre berzh poanioù ar vuhez andenel a rener outo en o broioù-goulag, da vihanañ en o selloù glan ha karantezus, moarvat e tleer anzav, e vezer re dechet da welout ar silvidigezh kristen evel gopr ar rikted hag ar vuhezegezh vat. Kement ha ken bihan ma teuer da grediñ e vez kaset silvidigezh an denelezh da benn dre ar c'hantvedoù war bouez dasstrollañ un nebeud eneoù salvet hepmuiken diwar goust un eskarzh

divent-spontus. Sklaer eo ne vez neuze keal ar silvidigezh nag o vroudañ nag o vagaan nep goanag birvidik en hon c'hreiz.

Penaos e veze buhez et skiant ar silvidigezh gant ar c'hedunadoù kristen e beurevezh an iliz

Aes meizout e oa disheñvel ersav ar c'hedunadoù kristen e beurevezh an Iliz diouzh hini hon parrezianiz hiziv an deiz, rak, aesoc'h oa dezho tridal gant an treflamm, ken diarvar ha ma oa dezho edont o perc'hennañ un teñzor, pinvidik-espar, graet da vezañ kinniget d'an denelezh kevan. "Dall e oamp, ha setu, emezo, m'hon eus addesket gwelout sklaer". Hag evit gwir, leun e vez kalon ar gristenion gant al levezet da vezañ bet diframmet diouzh bed an deñvalijenn ha treuzplantet e bed ar sklerijenn. "Emaint o chom war o glenn, gant an neñv avat dezho da geoded". Setu perak ez int estrenion amañ war an douar. Hogen pell emaint diouzh bezañ dinerzh ha diskaret, pegen kriz bennak an heskinerezh hag an trubuilh o devez da ziwaskañ. Rak n'emaint ket hep gouzout emaint, war-lerc'h ar Yuzevion, o terc'houezañ "an trede remziad" pe c'hoazh "ar bobl nevez emañ ganti an dazoned en he dalc'h". Her a-walc'h int da c'hourbannañ "ez eo bet krouet an hollved evito". Oberenn "an eizhvet devezh" eo ar gristeniezh, sev ul labour o pengenniñ hini "ar seizh devezh" kent.

Dre ma vez hevelep diskleriadurioù, neket e devoud hiniadoù, hogen kedunadoù, e vez brasoc'h o dasson ganto diwar-se.

Mar sellomp bremañ ouzh buhez hiniadel ar gristenion gentañ, petra gaver pa daoler an daoulagad, da skouer, war enskrivadurioù-bez o c'herent hag o mignoned pe c'hoazh war o zraezioù pemdeziek ? Bewech e kejer eno gant

argeloù al Levenez, an Hez hag ar Goanag, da lavarout eo elfennoù-diazez ar silvidigezh kristen kefleuniet gant an div gentañ e Rouantelezh an Neñv ha krog amañ endeo war an douar gant an drede : ar Goanag. Pezh na vire ket, na petra, ouzh levenez ha hez da ren endeo war an douar e kalon ar gristenion, en abeg, dres awalc'h, da nerzh o Goanag ! Na pell emañ neuze hon stuz-ene dimp, kristenion vremañ, diouzh evurusted sioul hon breudeur e beurevezh an Iliz !

Moug a-walc'h evit gwir eo bremañ keal ar silvidigezh kristen e kalz eus lec'hioù meur ar gristenelezh kozh

Strafuih bras a grog ennomp pa glaskomp gouzout doare ar silvidigezh kristen war-bouez e geñveriañ gant iziunadoù an denelezh arnevez. Eneberezhañ ha betek doñjer zoken ouzh keal ar silvidigezh, setu gant peseurt gerioù e ranker livañ ersav meur a hini hiziv an deiz. Estreget ma vez pennañ redennoù an andoueadegezh kevoadek o stourm ouzh ar gristeniezh dre ma vez houmañ, dres a-walc'h, oc'h anadiñ evel kravez ar silvidigezh. Sevel a ra seurt mennoz c'hoazh da **Nietzsche**. Rak, en anv e gealiad o tennañ d'an dreistden, e vez hemañ o tizarbenn kement doare silvidigezh na vije ket diwar ul labour denel nemetañ : *"Bec'h, emezañ, d'an eorizh kristen ha d'ar gelennadurezh a vez o reiñ ar wenedigezh hag ar silvidigezh da bal ar vuhez !"* *"Pegoulz ha pelec'h ez eus bet gwelet un den, gwerzh e anv, gantañ doare hevelep eorizh kristen ?"*

Hiziv e kejer bepred, peurgetket er broioù feskadour gant ur mennoz kozh o klask diskouez ez eo diazezet keal ar silvidigezh kristen war ur meizadur o tennañ da sinac'hañ ha da vuturniañ an den. Reiñ a roer da grediñ e chom ar gristeniezh kravez al louaded, ar sioc'haned, ar

baourkaezhed, ez eus anezhi enta ur reizhiad o tiskouerekaat hag o tispletaat an den. Gant se, diouzh klevout lod, seul wech ma reer meneg eus kroaz ar C'hrist, e weler pep gouregezh ha dialusk o steuziañ.

Diouzh o zu, - petra bennak maz int krog hep mar da vezañ war vordo en o donañ, e talc'h atav ar varksourion da ziskouez ar gristeniezh evel un dec'hadenn dirak an engouestl, un nac'hadenn o tistreiñ an den diouzh e labour bedel ha goude ma tlefe bezañ un dieuber anezhañ war dachenn ar gevarzhelezh hag an armerzh, un arallekadur o treiñ an dud ouzh an neñv, dezho moarvat da gavout eno goudor klet, goudor anveziat, avat, siwazh a se ! Sed a lavaront ! Ha mar bez dizarbennet ken dibreder ar silvidigezh kristen gant an eil re ha gant ar re all, ez eo dien dre ma kav d'ur bern tud n'eo ket graet hevelep silvidigezh evit traoù an douar nag evit an denelezh vloc"hel, hogen evit hiniadoù hepken, hag int ouzhpenn bet digenvezet en un doare disreol.

N'eus ket avat nemet ar c'healreizhiadoù a vez o wariañ meizadur ar silvidigezh, rak zoken e metoù ar feizidi e vez klevet ivez lies hini o tistummañ ar gelennadurezh kristen diwar-benn ar silvidigezh, war-bouez dezho pe vrasaat pe zisteraat he fouezegezh e stern an Aviel.

Evit kalz kredourion ez eo diazezet keal ar silvidigezh kristen war gudenn ar pec'hed da zistrujañ. Evel pa rankjed koazhañ ar vuhez kristen d'un emgann ouzh ar pec'hed nemetañ ! Moarvat ez eus ul liamm diazezel etre keal ar pec'hed hag hini ar silvidigezh. Strishaat oberenn Hon Salver avat a vefe ardeurel warni kefridi nac'hel nemeti an dieubidigezh diouzh ar pec'hed. Rak ur gefridi verzhel, hag unan hep he far, zo ivez gant ar silvidigezh, dre ma teuy da seveniñ douegedneuziekadur an den hag ar grouadelezh.

War an tu enep, e kaver c'hoazh kristenion all na fell ket dezho klevout ober anv eus pec'hed-hil hollveziadel, dre ma

vefe hevelep diskar hag eskarzherezh oc'h emplegañ daspren ha donedigezh ur Salver.

Diaes e vefe, eme darn, keviunañ kelennadur ar pec'hed-hil gant emdroerezh argreskidik davit an dieubidigezh. Ankouaat a ra seurt feizidi, evit kel ar pec'hed n'eus ket anezhañ ur saotradur hiniadel da gentañ, hogen un torr e kevanroez an deniezh dre berzh disrog houmañ diouzh Doue. Ur gwel war ur bed torret, setu petra eo e gwirionez ar bedveizadur kristen.

Un oberenn garantez eo ar grouadelezh

Gant pennadoù kentañ ar C'heneliezh ez eo diskouezet ar grouadelezh evel un oberenn o tarzhañ diouzh karantez an Arloz Doue. Rak e devoud ar grouadelezh e kaver 'broud rez' ar garantez. 'Rez' a lavaran, dre ma chom dieub Doue da grouiñ pe da na grouiñ, emvastus evel maz eo. Hag a-raok pep krouadelezh ez eo gwalc'het e dadelezh endeo e par e Vab, anezhan derc'henn peurvat e solwez. Nag aes eo meizout avat e karfe Doue, evel Tad, kaout mibion all dezhañ, eleze derc'henoù hag enebañsoù all anezhañ ! Neuze "*greomp, emezañ, an den diouzh hon derc'henn hag hon enebañs*" (Gen 1, 26). Ratozh an Tad abaoe beurevezh ar grouadelezh a zo gervel d'ar vuhez boudoù all e vo tu dezhañ da gengantaezañ ganto ha da geveliñ ganto madoù diles dezhañ evel E ouezvoud, E levez, E glod, E garantez.

Span ebet ne vo d'an ober diwanet diouzh hevelep ratozh ha derc'hel a ray Doue da levezoniañ red an Istor, forzh penaos e vo kont, evit kas ar bed d'e dermen, eleze betek keduniezh (a) an dud gant Doue ha betek un unaniezh peurvat soliet war gengantaezerezh ha gwir garantez etrehiniennel.

Pal ar Skriturioù Nevet a zo bet diskuliañ ar c'hoant-krouiñ maget gant an Tad hag ivez diskouez e levezon war ar grouadelezh. Ha n'eo ket an dinac'h aroueziet gant 'nann' an denelezh trosezer da Zoue a harzo ouzh c'hoant-krouiñ an Tad da vezañ ken gwir ha ken gwerc'hek bepred, petra bennak ma ranko neuze disoc'hañ dre un hent dishenvel, hiroc h, poaniusoc'h ha dirgeloc'h evit seveniñ e vennad. Rak bez' e fell dezhañ bezañ kevan a pep unan ha pep tra, bez' e fell dezhañ selvel an denelezh hag ar grouadelezh kevan. Setu pezh a zo diskuliet splann dimp gant ar Bibl p'emañ o tanevellañ hag o kanañ oberoù meur Arloz an Neñv hag an Douar. Ha perak silvidigezh ar grouadelezh ivez en tu-hont da hini an denelezh ? Peogwir emañ liammet tonkad an eil ouzh hini eben, ar grouadelezh o vezañ bet kabestret en he fezh gant dinac'h an denelezh trosezer, eleze gant pec'hed-hil an denelezh. Setu perak, eme dimp Sant Paol, emañ "ar grouadelezh kevan o keinal betek hiziv gant ar gwentrou", seurt gwentrou o talvout eviti ivez da zieubidigezh ha da silvidigezh.

Azavioù Doue

Gant galvidigezh Abrac'ham enta e vo gwelet ratozh ha gwerederezh Doue o treantiñ an Istor. Kavout a reer oc'h amparañ steuñv Doue diwanet diouzh e ratozh an azavioù graet gantañ da 'Dad ar Gredourion' : da gentañ an azuned o tennañ da c'hanedigezh ur mab d'Abrac'ham, da c'houde an hini o tennañ da berc'hentiezh ur vro : Douar Kanaan, anvet Palestina diwezhatoc'h, hag en diwezh ur bennozh o tiazerc'hel ar bed en e bezh (Gen 15).

Ur C'hefle Kouvrant

Ar mab a vo Isaag hag en tu-hont dezhañ an diskennidi all o vont d'ober pobl Doue betek penn pellañ an hollved. Pobl Doue avat a vo da gentañ an Hebreed, dezho da c'hourdadoù Abrac'ham, Isaag, Jakob betek Moizez o dieubour hag o dezvour. Ha pa vo gwallet an dezv diwezhatoc'h e vo tro an Darlavaridi da zont da sevel o mouezh gant nerzh enep da glouarded ar vibion, hogen dalc'hmat evit atizañ ar Goanag Meur en o c'hreiz.

Moizez an Dieubour hag an Dezvour a vo dres ar benveg a dalvo da gefleuniañ ar steuñv rakveneget dre berzh ar C'hefle kouvran a vo skoulmet etre Doue hag E bobl. Rak n'eo ket mui war sol azavioù hep diviz gant un den hepken e vo liammet Doue hiviziken, hogen war sol un emglev karadek gant ur genel wirion : poblad an Hebreed : *"Diwar vremañ mar sentit ouzhin ha mar doujit da 'm C'hefle, eme Doue, e sellin ouzhoc'h evel va zud e-touez an holl bobloù ; e sellin ouzhoc'h evel ur rouantelezh veleion hag ur vroad arouestlet"* (Ezloc'h 19, 6). Hogen gant petra eo graet Lezenn ar C'hefle ? Gant ar feiz e Doue moarvat ha gant ar striv divezel ouzhpenn, rak diorreet a-walc'h eo bremañ an Hebreed evit meizañ ne dalvo ket nemeur o feiz dezho anez an oberoù kevelep. Diazezet e vo enta holl gravez Israel war ar C'hefle. Bennoz dezhañ, ha dezhañ hepken, e c'hallo ar bobl intent petra eo karantez Doue hag e reizhded, petra eo e rad hag e silvidigezh. N'eus nemet gantañ hepken e vo tu dezhi da gompren petra eo ar pec'hed. Rak war-bouez ober diouzh al lezenn eo e teuy ar feizidi da welout betek pelec'h e c'hallont mont, ha diwar se d'emouezañ ouzh o barregezh hag ivez ouzh o sempladurezh, eleze ouzh kement a vez oc'h amparañ pep gwall. Ha war-bouez arnodiñ he fec'hedoù e teuy Israel da verzhout an ezhomm o sevel enni da vezañ dieubet, diskarezet ha salvet.

An ezloc'h, arouez veur c'hoant Doue da selvel e bobl

Doare Doue da selvel Israel war an dachenn speredel a vo diskuliet dezhi da gentañ dre arouez un dieubidigezh korfel ha danvezel espar. E seurt giz eo e tiskouezo Doue d'e bobl ez eo Eñ Tiern Bev Israel, hec'h Arloz Nemetañ. Rak dieubet e vo an Hebreed diouzh o sklavelezh dindan Egiptiz. Hevelep dieubidigezh a vo dalc'hmat evit Israel arouez veur fealded Doue, arouez veur e drec'h war holl c'halloudoù an droug hag ivez merk e vennad silvidigezhus war E bobl.

Lezenn Veur an Tremen

Hogen e diawel ar steuñv douevel o tennañ d'ar silvidigezh, e kaver ivez un eulad kalz donoc'h c'hoazh d'an ezloc'h. Rak ar pezh a zo bet c'hoarvezet neuze a zo dezhañ un dalvoudegezh-skouer e-keñver an oberenn hollek sevenet gant Doue. Da lavarout ar wirionez, e kaver atav e diazez an amreal silvidik, bet kaset war-raok gant Doue, ar c'hevrin stag ouzh an tremen eus Egipt da Dir an Azav ha graet gant an teir elfenn da heul : an ezloc'h eus douar ar sklavelezh, treuzidigezh ar gouelec'h ha donedigezh ur poblad rez ha salvet e Tir an Azav. Ur c'hevrin hep ket a var, nemet ivez diazez istor pobl Doue, da gentañ e par kenel Israel, ha d'an eil e par an Iliz hec'h-unan, o vezañ maz eo e stern houmañ e vo kefleuniet en diwezh kevrin pobl Doue : Pobl ar C'hefle Nevez.

An Dalvoudegezh-Skouer

Moarvat ne oa kel evit israeliz, da geñver an ezloc'h, nemet eus Egipt, gouelec'h ha Kanaan. Kement darvoud a c'hoarvezas ganto neuze ne voe dezhañ enta stêr all ebet nemet hini an istor gwerc'hel ha douarel a vezent bemdez o vuhezañ. Treuzplaket avat e stern ar steuñv hag an desaverezh mennet gant Doue, e kaver gant hevelep istor un dalvoudegezh arouezel ha speredel graet da c'horren ha da ziorren atav pobl ar C'hefle.

"Se a c'hoarveze ganto evit talvout da skouer" eme dimp Sant Paol (1 Kor 10,11).

Hag evit gwir, beziadoù danvezel evel un "tir gant laezh ha mel o fennañ warnañ" ne c'halle, e par ar preder maget gant Doue, diouganañ hag aroueziañ netra nemet madoù disheñvel, kalz uheloc'h ha speredeloc'h an eulad anezho. Rak, steuñv Doue, pa seller outañ e par, ha dreist an azavioù graet d'Abrah'ham, e par ha dreist ar C'hefle skoulmet e grez Moizez pe c'hoazh e par ha dreist rouantelezhioù David ha Salomon zo gwerediñ diouzh ma teufe an denelezh da seveniñ gantañ unvaniezh hiniennel don ha da geveliñ gantañ ar madoù a zo e wir beadra. E Vuhez, E Spered hag E Garantez. Leunberzhiek e vo an den e seurt madoù pa vo "*kefleuniet an amzerioù ha tost Rouantelezh Doue*" (Mark 1, 15).

Mab Doue deuet da vezañ Den

Tremen a ray neuze pobl Doue eus amzer an degemenn hag ar prienterezh da hini ar c'hefleuniadur, eus renad an darlavariad da hini ar Mab, Unvab diles an Tad. Hennezh a vo an tremen meur, - neket ken moarvat eus Egipt evel gwechall da Ganaan, hogen eus ar marv d'ar vuhez, eus an amzerelezh d'ar beurbadelezh, eus an douar d'an neñv.

Aes eo reizout ne c'halle buhez diles Doue bezañ degaset, dimp gant ur Mesiaz bennak na vije bet nemet un

den glennel hepken anezhañ, eleze krouadur ur vaouez na mui na maes. Rak, dre ma oa kel evidomp dont da voenat betek madoù piaouel da Dad ar grouadelezh, piv nemet Mab hevelep Tad ent krai en dije gallet o degas dimp ?

O vezañ maz eo mennad an Tad enta perzhiekaat e grouadur en e vuhez, e ranke seurt perzhiekadur bezañ sevenet diwar-bouez un askenn war sol un diskenn : diskenn Doue davedomp betek hañvalout ouzh un eskarzhegezh (gant ster emeskarzherezh evel dres) e tudenn Jezuz bet ensammet gantañ hon dere, nemet ar pec'hed, ha betek hon ankoù, gouez da Sant Paol pa lavar (Fil 2, 6-9).

Eñ, kendere gant Doue,
ne sellas ket evel skrapvrient
emgevataliñ gant Doue.
Nemet ez emesteuzas
o kemer stumm ar sklav,
o tont da vezañ hañval ouzh an dud.
Hag o tremen evit un den
ez emeskarzhas
o sentiñ betek ar marv
hag ar marv war ar groaz !

Splann ar gentel enta : diskennet eo bet Doue betek ennomp da vezañ heñvel ouzhimp en holl d'an holl, nemet ar pec'hed, e par E Vab dimp d'askenn betek ennañ da vezañ heñvel outañ e par an hevelep Mab. Dre berzh emskarzhadur an Unvab Douevel o talvout war un dro d'hon Daspren ez eo bet kefleuniet neuze an dimezi etre Doue hag an denion, Doue o kemer an denelezh kevan en e garg. Aet al Lezenn Gozh e-biou, e krogas raktal al Lezenn Nevez da ren war ar c'halonoù gant marv ha dasorc'h an Tiern Jezuz. Dindan al Lezenn Gozh e kavemp daou dra : da gentañ Abrah'ham gant azav un hêrezh hag ur bugel-hêr,

pobl Doue, d'an eil Moizez gant an ezloc'h hag e dremen eus Egipt da Dir an Azav.

Dindan al Lezenn Nevez e kavomp c'hoazh an daou dra, n'eo ket c'honvat evel gwechall en o dirvoud, hogen en o gwirvoud, pe, mar karer, en o beziadelezh wirion. Rak an hêrezh diles, Tir gwirion an Azav eo ar vuhez peurbadel, eleze, buhez ar bed all, hag ar bugel-hêr eo ar wech-mañ Mab Doue, sev an Tiern Jezuz deuet da vezañ Penn an Denelezh ensammet gantañ natur houmañ ha tremenet evit hon selvel dre e emaberzh war ar groaz. An tremen zo, war sol Emgreudadur Mab Doue, hon askenn dimp betek briegezh an dere ma teuomp da vezañ mibion da Zoue hag izili d'an unvab deuet da vezañ den. Gant gerioù all, an tremen zo evidomp hon treanterezh e Rouantelezh Doue.

Gant seurt Rouantelezh e welomp o tont davedomp madoù ar silvidigezh en o c'hrai : distaol ar pec'hedoù, buhez peurbadel, emfenn ar Spered Glan, dasorc'h ar c'horfoù, unvaniezh gant Doue ha gant en denelezh en he fezh. Ne c'hallomp koulskoude kaout krog war seurt madoù nemet hag izili bev e vefemp d'ar Mab ha hanterour, Jezuz-Krist, izili bev d'E Gorf Kevrinel a zo an Iliz, evel kevanvod ar gristenion vev.

Saviad an Iliz

Seurt Iliz eo hiziv gwir pobl Doue, bepred o tec'hel diouzh Egipt hag o treuzañ ar gouelec'h gant he hent etrezek Tir an Azav. Nemet emañ etre daou saviad, diouzh un tu hini ar C'hefle Kozh, o tennañ d'ar prienterezh, d'an diouganerezh, diouzh an eil tu hini ar C'hefle Nevez o tennañ d'ar sevenerezh ha d'ar c'hefleunierezh da vare distro ar C'hrist emañ ar gristenion o c'hortoz. Gant eil donedigezh an Arloz e tegouezho neuze 'prantad an neñv ha an tir

nevez' : "ar marv ne vo ken anezhañ, kañv, garm ha gloaz ne vo ken anezho, dre maz eo tremenet ar bed kozh" (Diskul 21, 1-5).

Padal emañ an Iliz, adalek bremañ o vevañ diwar ar beziadoù diwezhañ dre maz eo bet graet eviti endeo gant ar C'hrist an tremen gwirion da Dir gwirion an Azav. Adalek bremañ enta emañ ganti en he c'herz klod an douevelezh, petra bennak ma n'he deus krog warni c'hoazh nemet en un doare darnel hag evel en amc'houlou hepken, 'en ur dijustell' gouez da Sant Paol. He labour bremañ a zo neuze strivañ d'ober d'he zro an tremen eus bed ar glenn da hini ar c'hlod leun e par he Mestr ha Salver Jezuz, dre hent ar feiz hag ar c'herrinou.

Bezañ salvet a zo bezañ dasorc'h het korf hag ene

Bez' e c'hallfe ster gwirion distro Jezuz d'e Dad bezañ distreset evidomp mar chomfemp hep e welout evel tremen ar C'hrist o sachañ an holl draoù davetañ (ha n'eo ket an denion hepken) evit o hevelebekaot outañ. Un oadvezh nevez an hini a zo bet digoret e gwirionez gant an Dasorc'h hag ar Gouraskenn. An tennad diwezhañ eo evit istor ar silvidigezh hag eñ o kenderc'hel gant e hent betek an deiz ma paro heol ar Gouezwel, da lavarout eo distro klodus an Arloz o sachañ pep tra davetañ. Rak, d'an danvez ivez, eleze d'hon c'horf ouzhpenn d'hon ene eo e vo dedalvezet ar silvidigezh. Ha gant Dasorc'h ar C'hrist e weler anat n'eo ket kevatal "divarvusted an ene" da "vuhez beurbadel". Ouzh Dasorc'h ar C'hrist ez eo kevanet endeo an danvez aet hag o vont d'ober korfoù an holl dud santel. Gant nouezdenion klok enta, n'eo ket gant eneoù hepken eo e vo poblet Bed Nevez ar C'hlod. Ne vo daonet nemet un danvez hepken : hini korfoù an daonidi, petra bennak, siwazh, maz eo bet

ensammet seurt korfoù ivez gant Jezuz war e groaz, nemet ez int bet, e vezont hag e vefont kollet dre youl nemeti ha gwall nemetañ an eneoù daonet.

En e glod e chom Jezuz bepred ar Salver

Arabat krediñ e chom ar C'hrist en diavaez d'an istor denel dre m'emañ bremañ diazezet evit mat e Levenez an Tad. Ken oberiant ha biskoazh e vez bepred o tregemmañ deiz goude deiz frammadurezh an denelezh, dre labour ar Spered Glan, evit he hevelebekaot outan, he degas d'an Dasorc'h, hag e seurt doare seveniñ e par e Gorf Kevrinel, an tremen meur eus ar sklavelezh d'ar frankiz, eus an dizunvaniezh d'an unvaniezh, eus ar pec'hed d'ar santelezh, eus ar marv d'ar vuhez.

Ar C'hrist arledet, c'hoant gantañ e vije kevanet outañ an denelezh en he fezh ha gant an denelezh an hollved, setu petra eo an Iliz.

Korf ar C'hrist eo an Iliz. Ganti e vez o tiskouez e talc'h da bleidiñ ganimp, hag Eñ ken erouez ha biskoazh oc'h ober war hon tro, ganti e vez o kas e labour war-raok. Kengreud ha kengorf eo ar C'hrist hag an Iliz. E penn kont, eme dimp sant Eosten, n'eus nemet un den o kreskiñ war ar blanedenn gant ar c'hantvedoù o tremen. Ha hennezh e vez graet ar C'hrist kevan anezhañ.

(a) *Amañ e talv "keduniezh" kement hag "union spirituelle intime", ur ster ha na gaver ket atav gant "communion".*



Petra eo ur C'herrin

Pa seller pizh ouzh ar c'herrinoù, ne c'haller ket chom hep bezañ skoet gant o diseurtiezh voniek. Lod n'o deus nemet un danvez hepken, Kerrin an Aoter avat zo dezhañ daou : ar bara hag ar gwin. Darn ne vez anezho kerrinoù e gwirionez, evel Kerrin an Aoter adarre, nemet ha kantouestlet e vefe o danvez, darn all evel ar Gouzoumenn a van didalvoud, nemet ha kantouestlet e vefe o danvez ivez, darn all c'hoazh e c'hall o danvez bezañ unan boutin, eleze nann-kantouestlet, evel an dour evit ar Vadeziant, lod ne c'hallont morse bezañ darbennet div wech, evel ar Vadeziant adarre, petra bennak ma vez tu da zarbenn lod all ken alies ha bemdez, mar karer, evel ar Gevradiezh.

N'eus ket ur stern hepken enta d'ar feizoniour da c'hellout klenkañ ennañ ne vern peseurt kerrin. Keñveliel eo keal ar c'herrin. Hag, evel ma ouzer, neketa, keñveliel e vez daou dra pa vez disheñvelded etrezo ouzh ar bon ha heñvelded e lod keñverioù hepken. Hogen, mard int ken disheñvel en o c'hrai, petra vez neuze o tegas unded etrezo, dimp da c'hellout komz difazi diwar-benn "ar c'herrin dre vras" ? Sed amañ ar respont a zo da reiñ da seurt goulenn : n'eus e gwirionez, nemet Ur C'herrin hepken, ha Jezuz Krist eo Hennezh. Rak, ar ster a zo da reiñ d'ar ger "kerrin" zo "rin meur" (ker, keur + rin) eleze gwerchenn veur rinek ha nevet. Ha piv eo seurt **Gwerchenn Veur Rinek ha Nevet Nemeti, Ar Rin Meur Nemetañ**, mar n'eo ket ar C'hrist an hini eo ?

Klaskomp c'hoazh resisaat keal ar c'herrin. Da betra e talv ar c'herrin, mar n'eo ket da gehentiñ gant Doue. Ur

benveg eo d'ober hantererezh etre Doue hag an den. Hogen
daoust hag eñ n'eo ket Jezuz-Krist an hini zo An
Hanterour Nemetañ etre Doue hag an dud ?

Ul louzoù ivez enep d'ar pec'hed eo ar c'herrin. Hogen
daoust hag eñ n'eo ket ar C'hrist al Louzoù Nemetañ, dres
dre maz eo hon Dasprener hag hon Salver Nemetañ ?

Reiñ dimp buhez douevel dre ar rad a ra pep kerrin.
Hogen daoust hag eñ n'eo ket Jezuz dres "Ar Vuhez"
(Yann, II, 25) ?

Gwerc'hennoù hewel ha glennel eo ar c'herrinoù. Jezuz
avat, daoust hag eñ n'eus ket anezhañ un den gwirion, deuet
eveldomp da vevañ war hon glenn, gant kreud hag eskern
eveldomp, oc'h evañ hag o tebriñ, o kousket hag o
c'houzañv eveldomp ? Tu a veze da genderc'hel gant seurt
keñveriadennou.

Unded zo enta etre an holl gerrinoù, peogwir e taveont
holl da Jezuz-Krist, ha peogwir emaint ivez o kenderc'hel
gant gwezhierzh Hemañ war an douar. Evel un astenn da
voud an Den-Doue war an douar eo pep kerrin, Jezuz-Krist
eo ar C'herrin Nemetañ, e giz meneget uheloc'hik, hogen
pep kerrin zo Jezuz-Krist ivez. Ha mard eus diseurtiezh
etrezo eo moarvat dre m'emaint o vastañ d'ezhommou
diseurt an dud hag e rankont diwar se kaout pep unan e
frammadurezh dezhañ.

Ar C'herrin zo un Arouez

Hervez pep despizadur feizoniel kantreol ez eo ar
c'herrin un arouez. Ya, nemet ur wech lavaret se, henn

disoñjer ken buan all, war a hañval, evit studiañ frouezh ar
c'herrin hepmuiken. Perak se ? Moarvat dre ma ne glasker,
zoken pa vezer un den speredel, nemet ar pezh a vez
talvoudus evit an unan. Un abeg all zo koulskoude : gant an
Ilizoù Adaozat, gant hini Galvin dreist-holl, ez eo bet lakaet
da fall keal an arouez hag an arouezegezh kerrinel e spered
ar Gatoliged : rak evit Kalvin, ne dalv ar c'herrin nemet evel
un arouez d'hon feiz. Ha peogwir e chom ar feiz evitañ
diazeg nemetañ hon silvidigezh, - salvet eur, emezañ, dre ar
feiz nemeti ha n'eo ket dre an oberoù, - sed-eñ, ken prim-all
ha klenkañ kerrin ar Gatoliged gant an oberoù. Ya, un ober,
gouez dezhañ, e vefe ar c'herrin, hag eñ heñvel ouzh ur
wikefre o tigeriñ d'ar Gatoliged dor ar baradoz, hep ma
rankjent degas na feiz na striv ebet ! Ac'hano an diskred bet
savet goude, bep un tamm, e spered hon feizidi, war geal ar
c'herrin, evito koulskoude d'anzav ez eo graet gant traoù all
estreget an arouezegezh meneget. Fazi an Ilizoù Adaozat
n'eo ket enta haeriñ e vefe ar c'herrin un arouez, rak gwir ha
pouezus-kenañ zoken eo seurt haeradenn. Ar pezh a zo da
damall dezho eo derc'hel d'ar meno ne vije nemet arouezioù
hep ken all eus ar c'herrinoù.

Evit spisaat an traoù e rankomp distreiñ d'ar mennoz-
diazeg displeget uheloc'h pa lavaromp emañ ar c'herrinoù o
kenderc'hel gant gwezhierzh ar C'hrist war an douar.
Gwell e vefe zoken lavarout emaint oc'h amparañ labour
Hennezh bremañ en hon touez, eleze labour hon silvidigezh.
Penaos avat en deus Jezuz degaset dimp ar silvidigezh, mar
n'eo ket war-bouez ober ha kelenn ?

War dachenn an ober e weler Jezuz o kemer korf, o
vervel hag o tiazezañ an Iliz gant an Ebestel. E-doug e
vuhez, e ra kalz burzhudoù, hag int arouezioù endeo dre o
ferzh.

War dachenn ar c'helenn, arabat dimp disoñjal ez eo ar C'hrist ar Gwery, eleze al "Logos", ar "Gomz", hervez ma lavar Sant Yann. E silvidigezh zo hini ar C'heloù Mat. Ober burzhudoù ne spire ket enta, ret e veze dezhañ komz ha degas ar wirionez d'an dud. Ouzhpenn un Dasprener ez eo Jezuz ur Mestr hag ur Skouer. Hogen, hemañ eo dres doare ar c'herrinoù ivez, graet ha maz int evit hon santelaat hag hon selvel, war-bouez hon sklerijennañ ha degas dimp kelennadurezh.

Penaos avat meizout ar c'herrinoù evel arouezioù ? Gant gerioù all, penaos e c'hall traoù ken danvezel ha maz eo an dour, ar bara hag all, mesket gant un nebeut komzoù ha meidoùdougenn ganto nerzh douevel ? Moarvat dre maz eo bet fellet da Jezuz e vije e seurt giz ha dre ma vez Eñ o kemer an traoù disterañ evit o douvelaat ha ganto douvelaat an denion. Hogen perzh un arouez zo dres skeudenniñ un dra bennak disheñvel diouzh pezh ez eo. Ar c'herrinoù n'eus ket anezho koulskoude forzh peseurt arouezioù. Bez' e kaver e par Istor ar Feiz, koulz evel e par an Iliz hag al Lidadurezh, arouezioù gwirion nad int ket kerrinoù evit kelo. An Darlavariad o terriñ ul lestr, lakaomp ; ar goulou bihan ruz o teviñ dirak an nevetlog, n'eus ket kerrinoù anezho. Dezhi da vezañ kerrin, e rank an arouez bezañ war un dro rinek, nevet hag arreet, pezh a dalv kement ha devedel. Nemet ez eo bezañ santelidik ar perzh retañ evit seurt arouez. Ur c'herrin zo neuze un arouez dreistnaturel o tiazerc'hel hon feiz, hon meiz naturel. Setu perak e lavarer ivez e vez ar c'herrinoù arouezioù-feiz, pezh a dalv da verkañ e vez ar c'herrin, evel ober neñvel, o tiazerc'hel feiz an den, hag evel ober glennel, o testenikaat feiz an den.

Dre maz int arouezioù eo e tleer displegañ petra eo ar c'herrinoù. Mar ne vije anezho nemet gwikefreoù o treuzkas ar silvidigezh, e vije trawalc'h deskiñ d'ar gristenion penaos ober arver anezho, hep ma rankjed kaout gouiziadur damkanel diwar o fenn. Kement ha reiñ ur skouer e c'haller lavarout e ouzer diouzh un ardivink-skinwel pa ouzer, lakaomp, diouzh ar stokelloù a zo warnañ, hep ma vije ret kaout gouiziadur donoc'h diwar benn ar skinardivinkerezh. Heñvelgont gant ul louzoù bennak : evit ober arver anezhañ, n'eo ket ret gouzout penaos na gant petra e vez graet, hogen penaos ha pegoulz e ranker mont warnañ. Displegañ ur c'herrin avat n'eo ket deskiñ penaos ober gantañ, hogen deskiñ **petra emañ oc'h arouesaat.**

Ha petra vez neuze ar c'herrin oc'h arouesaat ?

Emañ arouesâd ar c'herrin o taveiñ war un dro d'an erouezvezh, d'an tremened ha d'an dazoned.

1 - **An erouezvezh** - E par an erouezvezh e sellomp ouzh ar c'herrin e-keñver ar pezh emañ o reiñ dimp amañ nomañ, eleze e-keñver ar rad emañ oc'h engehentañ en hon c'hreiz. Doare seurt rad zo diskuliet dimp gant doare arbennik pep kerrin en e grai, dre berzh danvez ha furn pep unan anezho. E seurt giz, dre maz eo graet kerrin an Aoter, da skouer, gant bara ha gwin, e welomp ez eo ar rad stag outañ unan o tennañ war un dro da vogañ, d'unvaniñ ha da levenezekaat. Rad an "egingefleunvuhez" a c'hellfed ober anezhi, o vezañ ma vezomp ganti, dres a-walc'h, diwar-bouez he gwerc'h magadurel, o perzhiañ en ur vuhez leun, krog da vezañ peurbadel adal ar bed-mañ ha bet dellezet evidomp dre berzh aberzh Hon Salver aderouesaet bemdez war an aoter gant disparti kerrinel e gorf diouzh e wad.

2 - **An Tremened** - Gwriziennet eo ar c'herrin en un tremened. Chom a ra kevreet ouzh devoud e savelidigezh gant Jezuz, ha dreist-holl ouzh devoud ar Gouzañv war ar groaz ma tenn anezhañ e werc'h. Hogen tu zo da sevel uheloc'h c'hoazh betek an diouzerc'hioù biblek bet o tegemenn hag o prientiñ ar c'herrin kristen. Pa oar ur c'heduner bennak petra oa an Oan-Pask hag ar Mânn, e c'haller lavarout e vez gantañ gwelloc'h anaoudegezh eus Kerrin an Aoter eget gant nep piv bennak na oar netra diwar benn ar gwrizioù hep o far a gaver da seurt kerrin en atil istorek ar silvidigezh.

3 - **An Dazoned** - Peogwir e vez ar c'herrin o tougen gantañ "egingefleunvuhez", evel ma lavaren uheloc'hik, e ranko neuze seurt egin tizhout ar pal ma tenn dezhañ ha bezañ kefleuniet gant levez ar vuhez davoudel.

Diwar an evezhiadennoù-mañ e veizer gwelloc'h peseurt doare zo gant ar c'herrin evel arouez : n'eus ket anezhañ un arouez diouzh doare ar ger, da skouer, e-keñver ar c'heal, pe c'hoazh diouzh doare al luc'htres e-keñver an dudenn emañ o terc'hennañ. N'eus ket un derc'henn anezhañ. Ne vez ket "lennet" ur c' herrin evel ma lenner ur skrid bennak. Kaer e vez sellout ha selaou pa vez oferenn pe vadeziant, ne "weler" nag an aberzh gant an eil nag an "adc'hanedigezh" speredel gant eben. Hogen un arouez oberiat eo ar c'herrin evit neb a gemer perzh ennañ. Ha gwir gelennadurezh a vez o tont dimp digantañ diouzh ma lakaomp hon meidoù hag hon c'homzoù, sev hon gwezhiad diavaezel da glotañ gant hon ersav diabarzhel. Anat eo enta ne c'haller ket amañ c'hoazh dispartiañ buhez ar c'hredour diouzh buhez ar pleustrour. Pe neuze n'en dije mui ar c'herrin ster ebet evit ar c'hristen. Dre se n'eus ket anezhañ

arouez ur feiz bennak HEP oberoù, hogen arouez ar feiz DRE an oberoù.



Danvez ha Furm ar C'herrin

Gant petra eo graet arouez ar c'herrin ? Tu zo da respont : gant danvez ha furm, nemet e ranker diwall na ve treuzdevezet ster ar gerioù-mañ, ken forc'hellek ha maz int, petra bennak ma hañval an traoù bezañ fraezh d'ar c'hentañ selled. Dont a ra seurt diaester diwar an droukvesk a vez graet etre, diouzh un tu, ster boutin ar ger "danvez", - war-bouez enebañ traoù danvezel, lakaomp, ouzh traoù andanvezel, - ha, diouzh an tu all, ar ster prederouriel anezhañ. Gant prederouriezh Aristoteles, e talv danvez ha furm da verkañ ar penndevoudoù a vez boutin d'an holl grouadurioù, an danvez o talvout evel penndevoud andesaveletoc'h hag ar furm evel penndevoud desaveletoc'h. Evit henn reizout e kemerer peurvuiañ evel skouer koad an daol o verkañ an danvez anezhi hag ar furm bet roet dezhi. Ac'hano ne vez ket diaes dezastum e ve korfel kement danvez a zo. Pezh a c'heller avat dizarbenn gant ur skouer all evel houmañ pa vezer, lakaomp, war dachenn al lavar boutin oc'h ober ar goulenn da heul : "Petra soñjit-hu diwar-benn "danvez" va frezegenn ?" Rak, o komz amañ diwar-benn seurt "danvez", n'eo ket mui d'un dra gorfel e reer dave neuze, hogen d'un dra veizel ha speredel, peogwir ez eo graet "danvez" ur brezegenn gant kealiou, tra ma c'hoarvez he furm en eneb eus komzoù, sev eus traoù ar wech-mañ !

Un arouez eo ar c'herrin ha diouzh hennad an arouez e vo ivez kement danvez ha furm d'e genaozañ. An danvez e vo anezhañ un elfenn arouezel digefleunoc'h,

andesaveletoc'h hag ar furm unan desaveletoc'h, resisoc'h o kefleuniañ ar c'herrin hag o vastañ dezhañ boudelezh diles.

Moarvat e tleer desellout danvez pep kerrin ivez evel un ober denel kentoc'h eget evel un dra, petra bennak ma vez arveret traoù danvezel alies gant seurt ober denel. Diwar-bouez ar skouerioù da heul e vo tu da wiriekaat seurt haeradenn.

Danvez ar Vadeziant zo ur sebeliadenn (ober denel), hogen gant dour (tra) ha war un dro ez eus anezhi, emichañs, ur walc'hadenn evit glanaat, evit adc'henel hag evit kantouestlañ.

Danvez ar Gouzoumenn zo an eliadenn eoul santel hag an arloañ-daouarn evel araez-kantouestlañ ar roueed, ar veleion hag ar verzherion.

Danvez ar Gevradiezh zo ur pred gant bara ha gwin.

Danvez Kerrin an Askeviunadur anvet ivez Kerrin ar Binijenn, zo ur varnadenn soliet war oberoù ar penedour : an anzav-pec'hedoù, an eztaol-azrek.

Danvez Kerrin ar Glañvourion, anvet gwechall Nouenn, zo an eliadenn gant eoul benniget.

Danvez ar Briedelezh zo youl an den hag ar vaouez da vont an eil e dalc'h an all diwar-bouez ul liamm-eured.

Danvez an Urzh zo un treuzkas-galloud diwar-bouez arloañ-daouarn ha kantouestladur.

Moarvat e kaver ur ster argelek endeo, pegen diresis bennak e ve, gant an oberoù denel rakveneget. Diwar-bouez ar furm avat, - graet ha maz eo gant komzoù, - eo e teu pep kerrin da gaout e resister, e saveladur hag e gefleunder. Hag aes eo an dra da veizañ, - rak, dre ma chom forc'hellek pep meid ha pep ober en o c'hrai, e rankont bezañ resizet gant komzoù, pep dec'heriadenn o vezañ an doare-desteriañ perveshañ. Moarvat un taol-c'hwitell war ar straed zo dezhañ endeo ur ster skogus a walc'h, hogen diresis keit ha

na glevit ket mouezh an archer deuet war ho seulioù o tisplegañ fraezh deoc'h abeg e c'hwitelladenn...

Merkomp koulskoude, diwar vont, n'eus ket da hevelebekaat an danvez ouzh ur beziad korfel nemetañ, evel ma ne c'haller ket kennebeut hevelebekaat ar furm ouzh ur beziad speredel nemetañ, rak beziadoù korfel eo ivez ar c'homzoù : graet int da vezañ distaget gant an teod evit mont raktal da stekiñ ouzh divskouarn kreudel. Ha didalvoud e vefe nep kerrin bennak na c'hoarvezfe nemet eus komzoù soñjet na mui na maes, hep bezañ distaget gant an teod.

Gwir eo neoazh e vez beziadelezh speredel gant ar furm, rak speredel eo moarvat ster kement komz kreudel o vont d'ober pep kerrin. Ha petra bennak ma tle ar c'homzoù bezañ distaget gant an teod, - o vezañ maz eo ar c'herrin un arouez kreudel, dres evel maz eo Jezuz-Krist ar Gomz Emgredet ivez, - arabat ankouaat evelkent e vez pep komz kerrinel o werediñ dre berzh hec'h eulad, naren dre berzh e stumm. Setu perak e c'haller arverañ ne vern peseurt yezh evit liderezh ar c'herrinoù, gant ma vo salv an eulad.

Spisaomp c'hoazh an traoù diwar-bouez un nebeut skouerioù :

Ur sebeliadenn hag ur walc'hadenn eo ar Vadeziant, nemet e vez ar c'homzou o vont ganti o resisaat e tarzhe ac'hano un **Adc'hanedigezh** hag ur **C'hantouestladur** en anv an Dreinded Santel.

Ur varnadenn eo Kerrin an Askeviunadur, hogen gant an dizereadenn e spisaer e vez ar varnadenn o tisoc'hañ war **Esteuzidigezh** ar pec'hed, ha neket hepken war un digehuzad a chomfe hep distrujañ droug ar pec'hed.

Un treuzkas-galloud eo an Urzh, nemet e vez ar Bedenn-Gantouestlañ, distaget da geñver an arloañ-daouarn o resisaat ez eus kont eus **Galloudoù ar Velegiezh**.

Hag e seurt giz evit pep kerrin.

Gant petra eo graet ar furm ? Er pleustr e vez o c'hoarvezout eus ar pezh a vez anvet "dezgeriad kerrinel", bet savelet gant an Iliz evel retvezek d'ar c'herrin. Ha padal e vefe risklus desellout ar seurt dezgeriad evel unan hudel, o vezañ maz eo graet ar furm c'hoazh gant kement a vez o tegas dezhi resister ha sklaerder, sev ar pedennoù hag ar c'henteliadurioù o vont gant pep kerrin, hep ankouaat emic'hañs ar c'hatekizerezh kerrinel. Moarvat e c'hall seurt traoù ober diouer a wechoù. Hogen mard afent da goll e par an Iliz en he fezh, ar furmoù kerrinel ne vefe ken anezho nemet dezgeriadoù diveizadus o tierremmañ ar c'herrinoù, rak hep furm gouest da vezañ meizet, tamm kerrin ebet ken ! Diaes eo avat soñjal e c'hallfe se c'hoarvezout, hag arabat e vefe, war zigarez hepkoriñ pep hud, goulenn ma vefe meizet mat atav ar c'herrinoù, dezho da chom bev ha gwerc'hek. Rak, mard eo ar c'herrin un arouez ez eo ivez ur gwezhiad eus ar C'hrist.



Ar Vadeziant & Ar Gouzoumenn

Ar Vadeziant e oa seulabred anezhi a-raok Hon Salver hag arveret e veze gant Yann ar Badezour evit glanaat ar c'halonoù, hogen ne c'halle ket santelaat. Yann henn gouie mat pa lavare : *"Dont a ray unan galloudekoc'h egedon hag Eñ ho padezo gant ar Spered-Santel."* Setu neuze Jezuz, dre dra, o tont hag o tegemenn da Nikodem : *"E gwirionez m'henn lavar dit, den ebet ne c'hall gwelout rouantelezh Doue anez dezhañ genel a-nevez dre an dour hag ar Spered Santel"* (Yann 3.3-5). Un adc'hanedigezh eo enta ar Vadeziant kristen. Adc'henel a rankomp d'ar vuhez dreistnaturel, dimp da derriñ gant ar vuhez naturel kozh a zo stag ouzh dere an Adam pec'her, a-benn treantiñ buhez an Adam nevez ha dibec'h, Jezuz-Krist Hon Salver.

Danvez ar c'herrin-mañ eo an dour pa lavar Jezuz e-unan : *"Den ebet, anez dezhañ genel a-nevez dre an dour."* Hag anat eo e teu glanadur gant an dour, dre ma c'hell gwalc'hiñ. Ur c'herrin eo ar Vadeziant avat, eleze un arouez, dres dre berzh an dour mennet gant Hon Salver evel danvez dezhañ. Hogen, evel kerrin e vez ivez o seveniñ pezh a vez oc'h arouesaat, rak ar respont klok da Nikodem zo : *"den ebet, anez dezhañ genel a-nevez dre an dour hag ar Spered-Santel ..."* Gant sr Spered Santel eo e teu neuze ar rad a zo graet evit peurober labour an dour, sev evit santelaat ouzhpenn gwalc'hiñ diouzh ar pec'hed.

Bennoz d'ar Vadeziant e vez an den c'hoazh o c'hougevaniñ ouzh an tiegezh nevez maz eo ganet, hini an

Dreinded Santel, evit bezañ dehêret gant Doue ha dont da vezañ breur d'ar C'hrist, ar Gwerv Emzenet. Kement ha komz diwar-benn furm ar c'herrin-mañ, en he c'haver moarvat er c'homzoù bet merket gant Jezuz e-unan pa lavar d'an Ebestel : *"Kit enta da gelegg an holl vroadoù ; badezit-i en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel"* (Mazhev 28-19). Setu perak e kaver furm ar Vadeziant e komzoù al lid pa lavar ar beleg : *"Me az padez en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel."* Hogen n'eus ket nemet ar beleg a gement a vefe gouest da reiñ ar Vadeziant. Pa vez unan bennak e sell da vezañ badezet hag e taraz da vervel, e c'hall ne vern piv gouniñv ar c'herrin, pa ne vez beleg ebet war dro, gant ma weredo hervez mennad an Iliz.

Bez' e vez ar Vadeziant oc'h arouesaat marv ha dasorc'h ar C'hrist. Ha gwechall, evit merkañ marv ha dasorc'h, - hogen hiziv c'hoazh gant ar Reizhvriaded, - e splujed an hini a vadezed en dour, ar splujadenn o skeudenniñ, evel sebeliadenn, marv an den kozh hag an adsav diouzh an dour oc'h arouesaat an adc'hanedigezh liammet ouzh dasorc'h Jezuz, breur an tiegezh treindedel nevez, ma kavo ar feizad nevez, en e stern, ar vuhez peurbadel. Ar feizad a lavaran, rak dre ar feiz eo e vez ar yonidigezh o tont da vab-den. Setu perak e rank an oadour pe baeron ar bugel bihan, en anv hemañ, disklêriañ e feiz a-raok al lid, hag e-skeud seurt feiz, azaviñ e tiouero ar pec'hed.

Lazhet e vez neuze diwar-henn, e kalon an hini badezet, kement gwall ha pec'hed a zo, koulz ar pec'hed-hil stag ouzh an hêrezh adamek, koulz an holl bec'hedoù goubarzhel bet sevenet gant ar feizad nevez. Dre seurt glanidigezh dreistnaturel e teu buhez ar C'hrist da leuniañ an ene badezet. Muioc'h c'hoazh : enkorfet e vez e gwirionez ar "badezed" ouzh ar C'hrist hag Eñ diwar-henn o perzhiañ e marv hag e dasorc'h Jezuz, evel lavaret uheloc'h.

O lemel diwarnomp pep pec'hed, ne vez ket ar Vadeziant evelkent o taskor dimp na yoned kentidik Adam nag ar gevanroez. Chom a reomp e diazalc'h al laur, al loes, al labour poanuis ha rankout a reomp tremen dre ar marv korfel. Moarvat e vez keizet ha digrizet ar gloazioù diwar ar pec'hed gant ar briwerc'hioù enskuilh ha gant kedoù ar Spered-Santel stag ouzh rad ar c'herrin. Seurt gloazioù avat ne vint kleizennet evit mat nemet pa vo kefleun ha peurvat hon santelezh. Nag a strivoù neuze dirak ar c'hristen war wel perzhiañ, evel maz eo dleet, e poanioù Jezuz hag e varv!

Rak kenderc'hel da stourm a rank ober ar feizad ouzh e natur displeberet gant stuz an adamelezh hag eñ dalc'hmat en ardizh droukhoaladurioù niverus. Nemet e teuy d'emsantelaat bep un nebeud mar chom kewir ouzh gwered Doue hep enta distreiñ d'ar pec'hed grevus. Strivañ enep ar pec'hed zo mervel evel ar C'hrist ouzh kroaz. Ha sed aze, dres, arouez ha ster don ar splujadenn en dour.

Par d'ar mez, evel egin d'an dervenn, e kaver ivez e buhez ar feizad un egin evit ar santelezh e kerrin ar vadeziant. Reizh eo e teufe pep badezed da vezañ ur sant pa ne vez gantañ stignet skoilh ebet ouzh diorredigezh an egin. Ya, reizh eo e teufe ar vagadell da vezañ un oadour. Ganedigezh ur C'hrist all, setu ster ar vadeziant. Neuze, ouzhpenn gouzañv hon c'hroazioù ha mervel warno evel Hon Salver e-unan, e vo dimp ivez perzhiañ en e glod, warbouez dasorc'hiñ elveltañ da vuhez peurbadel e Rouantelezh. Ha setu, goude splujadenn ar marv speredel e dour ar vadeziant, arouez ha ster don an adsav diouzh an dour, hini an adc'hanedigezh dreistnaturel, liammet, evel ma lavaran uheloc'h, ouzh dasorc'h Jezuz, evit ar c'hlod hag ar wennvedigezh peurbadel.

Ar Gouzoumenn

Ar gouzoumenn ne c'hell bezañ meizet nemet e diazalc'h gwerc'hel gant ar vadeziant. Setu perak e stagan amañ raktal ar pennad war he divoud.

Savelet eo bet ar c'herrin-mañ gant Jezuz moarvat etre an Dasorc'h hag ar Gouraskenn, dre ma kreder ez eo da neuze e roas resisadurioù o tennañ d'ar re a c'helle gouñiv lod kerrinoù, sev an Ebestel da gentañ ha da c'houde an eskibion deuet war o lerc'h, ganto kefleunder ar velegiezh. Rak Pêr ha Yann, ket diskibled nann-ebestel, eo a vo kaset eus Jeruzalem da Samaria (Ob.8. 14-17) evit reiñ ar gouzoumenn da feizidi na oant c'hoazh nemet badezet.

Evel gant ar Vadeziant hag an Urzh e vez degaset gant ar Gouzoumenn ul louc'hanvegad andiverkus oc'h ober ne c'hall ar c'herrinoù-mañ bezañ roet nemet ur wech hepken.

Gant ar gouzoumenn e teu ar feizad, bet ganet d'ar vuhez dreistnaturel dre ar vadeziant, da vezañ ur c'hristen klok ha setu perak e ranker bezañ kouzoumennet da skouer, evit dont da vezañ beleg pe diagon.

Ar gouzoumenn zo lerc'hiad kemezel ar vadeziant. Gant Sant Tomaz Akwino (IIIa.q.72) ez eo despizet evel "kerrin diorreadur klok ar rad" e kreizon ar c'hristen. Bez' emañ ar gouzoumenn enta o reiñ d'ar feizad e oad-gour, e par ar vuhez dreistnaturel. Kreskiñ kedoù ar Spered-Santel bet roet seulabred gant ar vadeziant, eo kefridi ar c'herrin-mañ ha kefleuniañ an ene gant briwerc'hioù ha frouezhioù speredel arbennik, rak diouto e tibenn bleuniekadur buhez ar rad.

Dre ar vadeziant e vez gougevanet mab-den ouzh ar C'hrist hag eñ diwar-henn ezel d'an iliz. Hogen, dre ar gouzoumenn eo e teu dezhañ ur rad arbennik da c'hellout he

gwazañ, war-bouez diogelaat ervat ur gefridi bennak enni, dezhañ da seveniñ ster e vadeziant ha, dreist pep tra, da zont da vezañ milour ar C'hrist en e vuhez kevredik. Setu pal ar c'herrin-mañ.

Graet eo ar gouzoumenn, evit a sell ouzh an danvez anezhi, gant an arloañ-daouarn hag elierezh an olev santel war dal an darbenner. Furm ar c'herrin a vez neuze amparet gant ar c'homzoù da heul : *"Me az merk gant arouez ar groaz hag ez kouzoumennan gant olev ar silvidigezh, en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel"*.

Degas a ra ar gouzoumenn enta d'ar badezed gras ar gadarnned. Kresket e vez en e greiz an nerzh a zo unan eus kedoù ar Spered-Santel, anezho spletoù dreistnaturel a vez nevezet an holl anezho gant rad ar c'herrin-mañ. Diwar-se ne vez mui ar c'hristen magadell ar vadeziant a oa betek neuze, hogen un den deuet e par ar vuhez kristen.

Dleet eo e vefe gouñivet ar gouzoumenn gant an eskob e-unan, rak gantañ eo e vez leviet an Iliz, - nemet ha dileuriañ a rafe ur beleg en e c'hourc'hemenn, - pa weler a-walc'h ez eo gant an Ebestel, adal an derou, e veze roet ar c'herrin-mañ. Setu perak e tleer goulenn ar gouzoumenn, dre un emelladenn hiniennel, pezh a vez graet aes a-walc'h bremañ gant krennarded goubet da vuhezañ o feiz, paz int boas da skrivañ d'an eskob evit displegañ dezhañ o lusked ha goulenn ar c'herrin digantañ. Pa vadezer un oadour avat, e vez roet ar gouzoumenn raktal da heul ar vadeziant hag a-raok ar gevradiezh.

Padal an doare da vezañ ar c'hewirañ gwellañ ez eo, eveltañ, reiñ e vuhez, pa lavare, da skouer, ouzh kroaz : *"Consummatum est !"*, *"peurc'hraet eo ! Ar Gouzoumenn eo !"* Ha dres ar gouzoumenn eo kerrin ar peuremgediñ. Setu perak ez eo hemañ an hini a zo liammet ar strishañ ouzh ar gevradiezh, ma vez ganti dazreet emged Jezuz ouzh e groaz, da geñver aberzh an oferenn, dre ma vez neuze

Hon Salver oc'h erouesaat e varv evit hon silvidigezh, warbouez disrann ar bara, evel e gorf, diouzh ar gwin, evel e wad. En abeg da seurt liamm eo e c'hall ar c'houzoumened degemer raktal goude lid ar c'herrin, korf ha gwad an Arloz, dre ar gedunadenn gevradiel. Ha setu perak e vez graet eus ar vadeziant, ar gouzoumened hag ar gevradiezh tri gerrin an treouestl kristen.

Atodomp e roer ur paeron hag ur vaeronez d'an dud evit ar vadeziant hag ar gouzoumened hag i sellet evel o zad hag o mamm speredel da geñver enkreridigezh o ganedigezh hag o buhez nevez.



An Askeviunadur & Eliadenn ar Glañvourion

Kerrin an Askeviunadur oa anvet gwechall kerrin ar binijenn. Istor ar c'herrin-mañ zo kammigellek a-walc'h, o vezañ ma ne oa ket bet reizhet pep tra gant Hon Salver, er penn kentañ, evit a sell outañ na kennebeut war e lerc'h gant an Ebestel.

E gwirionez e-pad ur pennad amzer ez eo chomet stag istor an askeviunadur ouzh hini ar vadeziant, rak ne veze dilamet ar pec'hedoù, - ar pec'hed-hil, anat eo, hogen ar pec'hedoù hiniennel ivez emichañs, - nemet gant ar vadeziant. Azaviñ a rae ar c'hristen, da geñver e vadeziant, pe, gant gerioù all, goude "gwiskañ ar C'hrist", hervez dezgeriad Sant Paol, chom hep pec'hiñ en dazoned.

Siwazh, o vezañ ma teue an "askoempou" da greskiñ, ned eo nemet en 2^{vet} ha dreist-holl en 3^{de} kantved hepken ma krogas an Iliz da soñjal evit mat en aotre he devoa da ziskareziñ ar pec'hedoù, hervez ar galloud sklaer a oa bet roet dezhi gant an Arloz.

E-pad pell enta e voe pleustret ur binijenn, ac'hano an anv "pinijenn" bet roet er goudevezh d'ar c'herrin ma c'helle an "askoemped" ober ganti da gaout an diskarez evit kement pec'hed marvel a sevene war-lerc'h e vadeziant.

Keit ha ma pade amzer e binijenn, e veze ezkaelet ar pec'her diouzh kedunelezh ar gristenion, eleze diouzh an Iliz. Ha padout a rae pell seurt ezkaeladur : bloavezhioù a-wechoù. Kefleuniet gantañ e binijenn, e veze adkevanet an den, da geñver ul lid bras ma veze arveret an arloañ-daouarn, deved a zo bet miret en ur stumm betek hiziv, gant

meid ar beleg o sevel e zorn pa vez o tistagañ komzou an dizereadenn.

Disheñvel-bras avat eo an doare ma vez gouniñvet bremañ an askeviunadur, ar pouez o vezañ lakaet war anzav rinek ar pec'hedoù anvet "kofez" ha war an dizereadenn anezho an div elfenn oc'h amparañ arbenn-bezañ ar c'herrin evel maz eo bet savelet gant Hon Salver pa lavare : *"Darbennit ar Spered-Santel : da biv bennak e vo diskarezet e bec'hedoù dezhañ ganeoc'h, e vint diskarezet ha da biv bennak e vint dalc'het ganeoc'h, e vint dalc'het"* (Yann 20. 22).

Padal ne c'hoarvez ket seurt galloud eus un disklêriadenn hepken, evel gwechall da geñver an adkevanadur e kerc'henn an Iliz, pa gemenne an eskob e oa dasprenet ar pec'hed diwar ur binijenn gewir ha bastus. Hervez mennad Hon Salver, ur galloud gwirion kedet d'an Iliz eo ez eus amañ, evit digehuzañ diwar-bouez an dizereadenn a vez dezgeriet evel-henn gant ar beleg :

Doze hon Tad da ziskouezo deoc'h e drugarez ; dre berzh marv ha dasorc'h e Vab, en deus askeviunet ar bed gantañ ha degaset en deus ar Spered-Santel. Dre c'houniñverezh an Iliz, da roio deoc'h diskarez ha hez. Ha me, en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel, a zilam deoc'h ho holl bec'hedoù. Amen."

Gant seurt komzou eo graet emichañs furm ar c'herrin, an danvez ameeun anezhañ o vezañ ar pec'hedoù hag an danvez eeun ar varnadenn war gofez ar penedour oc'h ezgeriañ azrek. Elfennoù all avat a vez oc'h amparañ an askeviunadur. Neuze, da heul ar c'hofez, kedrann gentañ ar c'herrin-mañ, e vo kont ganimp eus an kez elfennoù : an dizereadenn, an azrek pe geuz, ar voztaladenn, hag ar

gourambred, an teir elfenn ziwezhañ-mañ o vezañ liammet emichañs ouzh ar c'hofez.

Ar C'hofez

N'eus nemet ar pec'hedoù grevus, anvet marvel, a gement a vez ret kofesaat. Ar pec'hedoù bihan, anvet hewalc'h, sev aes da walc'hiñ, a c'hell bezañ dilamet zoken gant ar gevradiezh pa geduner. Gwelloc'h eo avat o c'hofesaat ivez. Ar pec'hedoù grevus a c'hellfe bezañ disoñjet gant ar penedour a vez diskarezet war-ameeun dre an dizereadenn, e ser ar pec'hedoù all bet dilamet war-eeun, nemet e tleont bezañ disklêriet evelkent da geñver ar gofezadenn gentañ da zont. Pa ne vez nemet pec'hedoù hewalc'h war an askre, e vez gwelloc'h anzav adarre dre vras pec'hedoù marvel bet anzavet ha diskarezet endeo.

Kofesaat zo un dra ragorel, peogwir e talv d'ar pec'her evit askeviunañ, neket gant Doue hepken, hogen gant ar Gevredigezh ivez, rak pec'hiñ zo evit mab-den, neket hepken lakaat e vuhez dreistnaturel en argoll, hogen terriñ pe baourekaat e liammoù c'hoazh gant an nesañ, en ur ger, krouiñ dizurzh er Gevredigezh hag er Grouadelezh.

An Dizereadenn

Ouzh ar C'hrist eo e kofesaer e gwirionez, dre maz eo en e dudenn, evel derc'houezour dezhañ, eo e vez ar beleg o tizeren. Roet e vez an dizereadenn en un doare barnerezhel, rak barner eo amañ ar beleg, unan avat na vez morse o vestonkañ, hogen o chom, e vuhez-pad, e dalc'h an anzav rinek bet klevet gantañ, rak morse ne c'hell rin ar c'hofez bezañ gwallet.

Dre berzh an dizereadenn e vez, ouzhpenn dilamet ar pec'hed, atoret gant ar penedour ar rad-yonaat en doa kollet hag ivez azbevaet an dellidoù dreistnaturel chomet morzet ennañ. Evel ouzh pep kerrin, e vez stag c'hoazh ouzh an askeviunadur ur rad piaouel a ro haol d'ar penedour da voenat grasoù arbennik evit peurarstaliñ gant ar vuhezegezh vat ha tañva hez an ene.

An Azrek

Evit kofesaat ervat, e ranker kaout keuz d'e bec'hedoù, pezh a vez anvet "azrek". Ret eo d'ar penedour kaout un azrek a ve ar rikañ gwellañ evit ar pec'hedoù marvel, eleze kaout keuz diabarzhel o tarzhañ diwar e feiz hag e youl start, neket diwar e deod hepken. Rak setu penaos e veze kont moarvat e-pad ar Grennamzer, pa veze ar bec'herion o sammañ pinijennoù kevredik kalet ha hir, gouzañvet gant startijenn ha peurarstal, evel merk eus o c'harantez nevez evit ar C'hrist Mab Doue bet marvet e-kreiz poanioù kriz ar c'hroaztacherezh evit o silvidigezh.

Ar Voztaladenn.

Bremañ zoken, e tleer c'hoazh seveniñ un doare pinijenn a vez anvet boztaladenn, daoust ma vez pinijennus endeo d'an unan bezañ uvel a-walc'h evit mont da zisklêriañ e bec'hed d'un den all. Goulennet e vez diganeoc'h enta, goude degemer ar c'herrin, ober ur binijenn kalz disteroc'h, forzh penaos, eget reoù poanius an Iliz Veure, dre ma vez graet hiziv e stumm ur bedenn peurliesañ. Bezet a vezo, talvoud a ra seurt pinijenn da skarzhañ, da heul dilamidigezh koul ar pec'hed marvel, ar boan amzerel stag bepred outañ hag a ranker dasprenañ lomañ war an douar pe neuze dre ar

purdan. Ar binijennig a vez roet d'ober n'he deus neuze nemet un dalvoudegezh arouezel ha mat eo dimp soñjal e dasprenadennoù gwirvozek, durc'haet ouzh emzioueroù bihan da wellaat hon buhez dreistnaturel ha da dostaat ouzh Doue mui-ouzh-mui pe c'hoazh da greñvaat hon c'harantez e-keñver hon nesañ, rak arabat ankouaat ez eo pal ar c'herrin-mañ askeviunañ gant Doue hag an nesañ war un dro. Ar voztaladenn wellañ zo moarvat ren ur vuhez emziouerek-ouzh-emziouerekañ ha dre se tomm-ouzh-tommañ ouzh ar C'hrist, war-wel krignat mui-ouzh-mui war ar purdan.

Ar Gourambred

Ar gourambred zo an ambred, sev ar mennad start da chom hep adkouezhañ. rak, argarziñ ar pec'hed evit an amzer dremenet ha chom hep henn ober evit an amzer da zont ne vefe tamm ebet kaout kas outañ, evel maz eo diarc'het gant azrek an anzav hag evit bezañ dizereet e devoud. Au doare gwellañ neuze da ziogelaat ar gourambred eo tec'hel diouzh pep plegenn gentizhek da bec'hiñ.

Kerse eo gwelout e chom bremañ klouar hag amjestr ar gristenion ouzh an askeviunadur, gant an anzav e skouarn ar beleg. Ha padal, evit un den rik e galon ha gourambredet a fell dezhañ diskouez gwir garantez da Zoue, petra kaeroc'h eget ar c'herrin-mañ, ken tost ha m'emañ ouzh ar gevradiezh, paz eo evelti, dre ar gedunadenn, ur vriatadenn da Zoue n'eus anezhañ nemet karantez, karantez etre daouarn ar beleg o tegas dimp levenez an diskarez evit ar vuhez peurbadel.

An Dizereadennoù-Stroll

Splet an dizereadennoù-stroll, evel gwezhiadenn gevredik, zo lakaat war-wel pezh a vez anvet ampar ilizel an askeviunadur. Rak ar pec'hed n'eus ket anezhañ hepken ur gwezhiad hiniennel, un delanvad zo dezhañ ivez war ar gedunelezh en he fezh, en hevelep doare ha ma vez gant un ezel klañv war ar c'horf, pa ra dezhañ gouzañv en e bezh. Ha setu perak e rank an diskarez bezañ desellet e par an Iliz kevan ha kedunan ganti. Hennen eo frouezh devez ar feizoniezh er mare-mañ diwar-benn an askeviunadur. Darbennet eo bet gant Devedeg Lidadurezh Nevez ar Binijenn bet embannet e 1974 gant Roma.

Talvout a ra lidoù nevez ar c'herrin da brientiñ ar feizad d'ar c'hofez, neket evel hinienn hepken enta, hogen evel un ezel atebek eus Korf ar C'hrist, anezhañ hollad ar feizidi maz eo kedgredek ganto. Ha setu perak e vez aozet an dizereadennoù-stroll e stern un dazhladenn binijennel o tiazerc'hel un emvodad kristenion, dres evit reiñ e ster kevredik d'an askeviunadur ha lakaat war-rel, evel ma lavaren uheloc'h, ampar ilizel ar c'herrin.

Diouzh doare pep kofez hiniennel, e vez an dizereadenn-stroll o tilemel ivez kement pec'hed grevus a zo, nemet pa vez pec'hed marvel, e tiarc'h an Iliz maz afed da gaout ar beleg evit un anzav hiniennel. Pezh na dalv ket da lavarout ne vez dilamet ar pec'hed nemet da neuze. Tamm ebet ! Pal seurt emelladenn zo sachañ evezh ar penedour war an atebegzhioù a zo e re ha war ar ret maz eo dezhañ kanttreiñ e gwrionez. Forzh e peseurt stumm e vefe, e tle an askeviunadur bezañ buhezset da zougen frouezh.

Eliadenn Ar Glañvourion

Eliadenn ar Glañvourion oa anvet gwechall "Nouenn". Hemañ oa kerrin ar feizidi e par ar marv. Meneget eo gant testenn an Abostol Sant Jakez pa lavar : *"Ha klañv e vefe unan bennak en ho touez, ra c'halvo beleion an Iliz ha ra bedo ar re-mañ warnañ, goude reiñ dezhañ un eliadenn, en anv an Arloz. Seurt pedenn diwar feiz a salvo ar c'hlañvour. An Arloz en adsavo ha, mar en deus graet pec'hedoù, e vint dezhañ diskarezet."* (5. 13-16).

Ar c'herrin-mañ a sav ivez d'ar C'hrist e kement ha maz eo liammet realezh Sant Jakez ouzh hini Jezuz e Vestr e-keñver ar glañvourion bet pareet gantañ en o c'horf hag en o spered.

Evit ar c'herrin-mañ ez eo an olev benniget an danvez ameeun hag an danvez eeun an eliadenn graet war darn eus lodennoù ar c'horf pe war unan hepken pa vez bras an arvar da vervel. Ar furm zo ar bedenn-mañ graet gant ar beleg, tra ma vez o c'h arloañ an eliadenn :

"(anv), gant an eliadenn santel-mañ, ra vo an Arloz, en e vadelezh vras, ouzh da gennerzhañ dre rad ar Spered-antel. Endhu, ha te, bennozh dezhañ, dieub diouzh pep pec'hed, ra vi gantañ salvet hag adsavet.

(anv), hiviziken emañ nerzh Doue o werediñ e-kreiz da sempladurezh."

Perzh ar c'herrin-mañ zo alies hevoudañ, dihuzañ ar c'hlañvour ha gwechavez e bareañ. Dalc'hmat avat e vez o tegas ar rad ha, ganti, pep skor enep diaesteriou an ene,

dezhañ da chom hep digalonekaat ha distreiñ diouzh karantez Doue.

Pa vez tebek ar marv, e tle ar c'hlañvour kofesaat ha keduniñ. Bremañ, gant stuzegezh pagan hon oadvezh, e vez distroet ar speredoù diouzh keal ar marv. Hogen ret eo d'ar c'hristen chom difrom ouzh denesâd an ankoù ha prientiñ eur e dremenvar, pa vez klañv-bras ha diarvar e varv, war-bouez dezhañ degemer ar c'herrinnoù evel loazioù speredel hep o far, profet gant Hon Salver da vab-den, dre an Iliz, evit ar vuhez peurbadel.

E-keñver lid ez eo hemañ kemmet bremañ abaoe Goursened Vatikan 2, rak en tu-hont d'an doc'horian, e vez gouniñvet ar c'herrin ivez da gristenion tizhet gant an oad hir pe glañvidik a vez gwelet o kemer perzh mui-ouzh-mui en un dazhladenn-stroll ma vez arloet dezho an eliadenn santel. Pezh na viro ket outo da zegemer ar c'herrin adarre, lakaet e vefent en ur stuz gwashoc'h pe war o zremenvar, anat eo.



An Urzh

Studiet e vo amañ Kerrin an Urzh e kement ha ma sell en un douez, ouzh an eskibion, ar veleion hag an diagoned.

Emañ pep urzhidigezh o tiazerc'hel pobl ar gristenion. En he diaouez enta eo e vez galvet hag urzhet an ezholed. An eskob nemetañ, "gantañ kefleunded an Urzh" eo a vez oc'h urzhiñ an eskibion all, ar veleion hag an diagoned. Bez' e c'haller bezañ gouvennet evit un urzh bennak, hag evel dres, nakaat an ezholadenn. Pobl Doue a vez bodet avat war lec'h al lid, dezhi da desteniañ e vez dellezek an ezholed.

Danvez ha furm ar c'herrin a gemm hervez pep urzhidigezh, hogen pep derez-urzh e kaver evitañ, digemm atav, an treuzkas-galloud hag an arloañ-daouarn gant ar bedenn-urzhiñ.

Gant an eskibion a vez erouez evit al lid eo e vez graet an arloañ-daouarn war urzhadoù an eskobiezh, dre ma kemero hemañ e lec'h en o renk ur wech urzhet.

Gant an eskob, ha d'e heul ar veleion a vez erouez evit al lid, eo e vo graet an arloañ-daouarn war urzhadevion ar velegiezh, endra ne vez graet nemet gant an eskob hepken war urzhadevion an diagoniezh, dre maz int galvet gantañ e-unan evit e skoazellañ, hep dezho koulskoude kemer perzh en e guzul evel paskourion, pezh a zo kefridi ar veleion. Setu perak e kemer perzh ar veleion e lid an arloañ-daouarn evit o c'henvreudeur. Da heul an kez lid, renet sioul, hep komz na kan, e teu ar bedenn-urzhiñ. Houmañ eo lodenn goshañ an urzhidigezh. Degas a ra da goun e teu pep tra digant Doue hag ez eo bet prientet pep tra gantañ-Eñ

evit silvidigezh an denion ha mad e bobl. Un aspedenn eo da c'houlenn ma vo skuilhet ar Spered-Santel war an hini emeur oc'h urzhiñ, evel ma reas Doue an Tad war e Vab.

Doare pennañ an Urzh eo an nevediadezh lodet gant an eskob hag ar veleion. Padal n'eus nevediadezh ebet a ve dreist, nag evit ar Pab nag evit nep eskob bennak, dre ma vez kevatal badeziant pep hini ha, dre se, kevatal dere kristen pep unan ivez.

Evel gant ar vadeziant hag ar gouzoumenn, ez eo stag ouzh kerrin an Urzh ul louc'hanvegad andiverkus o virout na vefe roet div wech ; Angorzhet eo gantan dereziou uhelañ an Urzh : eskobiezh, belegiezh, diagoniezh.

Diwar-henn e chom beleg, da skouer, e vuhez-pad, an den urzhet betek evel, na pa zilezfe zoken e garg pe c'hoazh o lakaat e vefe tennet digantañ. Nemet ne c'hallfe ken, adalek neuze, anez pec'hed grevus, gouniñv kerrin ebet, daoust ma vefe erremmek pezh a rafe, dre ma chom beleg atav. N'eus nemet un degont ma c'hallfe gwezhiañ ent kantwir ha dibec'hed : emgavout e-unan, digenvez, e-kichen ur c'hristen e par ar marv hep beleg all evit plediñ gant an toc'hor. Rak ur meid karitezal o souriñ war stuz digevaotre ha pec'hidik ar beleg e vez neuze reiñ an dizereadenn ziwezhañ d'an den o vervel.

Arc'hwel pennañ an Urzh, evit an nevediadezh, zo seveniñ ar gevradiezh, dre maz eo warni ez eo diazezet an Urzh evel kerrin boutin d'an eskob ha d'ar beleg. Rak da geñver savelidigezh ar gevradiezh eo e voe savelet ivez an Urzh. N'eo ket da ne vern piv avat e voe kedet ar c'herrin-mañ gant an Arloz, pa soñjer n' eo ket bet roet zoken d'e vamm santel gant Jezuz, daoust d'hec'h arwarzh dirak Doue an Tad hag ar Spered-Santel "benniget maz eo-hi e-touez an holl wragez". Arabat neuze bezañ souezhet mar n'eus

gwir ebet da velegiñ na nebeutoc'h c'hoazh d'eskobiñ maouezed, pegen kevrinus bennak e hañval seurt saviad bezañ.

Hogen distroomp un tamm war al liamm a gaver etre Urzh ha Kevradiezh. E-doug e Goan Ziwezhañ gant an Ebestel, goude bezañ disklêriet war ar bara "hennen eo va c'horf" ha war ar c'hopad-gwin "hennen eo va gwad", e lavaras Jezuz d'an daouzek : "Grit hennen gant ar c'houn ac'hanon". Setu neuze ma oa beleget an Ebestel diwar an kez komzou, hogen, dre m'emañ ar c'herrinou all o teverañ diouzh ar gevradiezh evel aderouesâdur aberzh ar silvidigezh war ar groaz, e teu an eskob hag e veleion da vezañ ar c'houniñvourion anezho : an eskob evit hollad ar c'herrinou hag ar veleion evit ar re nad int ket amberzet evit an eskob, sev Urzh ha Kouzoumenn, panevet e vefe gantañ dileuriet ur beleg, hogen evit ar c'herrin diwezhañ-mañ hepken.

Sellomp bremañ pishoc'h ouzh an darempredoù a c'heller kavout etre pep derez eus an Urzhaz.

Evel hon eus gwelet uheloc'h, ken beleg eo person ur barrezig bennak hag an eskob en e benniliz pa vezont o seveniñ ar gevradiezh, sev oc'h oferennañ. Dre gefridi e vez eskibion ha beleion kedunyoul o tiwall ma vo santel ar feizidi diwar-bouez an testeni a vo roet ganto e gounid an Aviel hag evit ma vevo ha ma kresko an Iliz dre ar c'henober a reno etre an holl wazadurioù hag obererezhioù dindan vroud ar Spered-Santel, paz eo-Eñ kenilour meur buhez an Iliz. Dlead an eskibion hag ar veleion zo neuze annouez ar feizidi d'embreger an atebeglezhioù liesseurt o tennañ d'o buhez kristen.

Abaoe ar bloaz 150 pe war-dro ez eus diforc'h etre gouniñverezh an eskob ha hini ar beleg, daoust ma weler an digemm etrezo seulabred, adalek derou an Iliz, evit a sell kediñ an Urzh hag ar Gouzoumenn. Rak an eskob ez eus gantañ kefleunder an Urzh. En ur ger, eñ eo lerc'hiadour kentizhel an Ebestel. Ar Pab e-unan n'eo ket muioc'h eskob eget ar re all. E kement hag eskob, da gentañ-holl, eo emañ e penn an Iliz hollvedel evel m'emañ an eskibion all e penn o ilizoù lec'hel dre ar bed. Hogen neket hepken renerezh au Iliz a vez angorzhet gant kefleunder an Urzh, evel perzh bonel d'an eskobiezh, hogen, diouzh m'hon eus gwelet uheloc'h, gouniñverezh ar c'herrinoù ivez, koulz hag an argrafoù all c'hoazh, pa ne dennont ket moarvat da gembeli ar Pab e-keñver Gwir Destlek, eleze Gwir an Iliz.

Evel kevelerion an eskob ne c'hall ar veleion embreger o gouniñverezh nemet unanet-strizh gantañ, hep ma vefe tu koulskoude d'ober eskibion vihan anezho. Rak liesdoare eo labour ar beleg, adalek hini ur manac'h en arempred e vanati, betek hini an aluzenerion amañ hag ahont war-dro feizidi a bep seurt.

Gant pep urzhidigezh e vez ur ster donoc'h eget hini un treuzkas-galloud. Rak en tu-hont d'ar galloud, e tleer gwelout eno ur c'hed o tont digant ar Spered Santel hag ur garg uvel evit adeiladiñ an Iliz, kentoc'h eget nep mestronierezh bennak.

Diwar-henn e c'hallomp bremañ teurel ur sell ivez war an diagoniezh evel gouniñverezh trebadek, dre lakaat ar pouez dreist-holl war he galvedigezh evit ar gwazerezh. Rak diounit ouzh taol e voe al labour bras bet kaset da benn en Iliz Veure gant an diagoned. Oc'h adsevel an urzh e kont, e tostaed ouzh Iliz ar Reter bet meret ganti seurt gouniñverezh en e liesseurtiezh, endra ne selle ken Iliz ar

C'hornog ouzh an diagoniezh nemet evel ouzh ur stad etreat a-raok ar velegiezh. Evit Tadoù ar Goursened e oa neuze azginivelezh an diagoniezh un dro vat, un devredad retvezek kemeret gant Iliz Roma, dezhi da vont gant startoc'h ratozhiegezh en arempred an denion hiziv an deiz.

Perak avat diagoned ha ket liked a vefe dileuriet gant an eskob ? Dre ma vez pep urzhidigezh ur c'hed o tont digant ar Spered Santel evit adeiladiñ an Iliz, rak kefridi an diagon zo skoulmañ kenetrezo ar gomz, ar garitez hag al lodennerezh, diouzh kemez ha war sol ar gwazerezh bet buhez gant ar C'hrist e-unan, deuet ma oa, emezañ, evit "gwazañ, naren bezañ gwazet".

Evel ma n'eo ket ar beleg un eskob bihan, an diagon n'eus ket anezhañ kennebeut ur beleg bihan : liammet eo e c'hell ensammañ kargou trevourel, embreger ur vicher, ober politikerezh hag all.

Mard eo dimezet, e c'hell emichañs bezañ frouezhus darempredoù an diagon gant an dud a vev war e dro, dre berzh e diegezh, e vicher pe obererezhioù liesseurt ereet ouzh e c'halvedigezh e stern kerrin an Urzh.

Dre se war-bouez dezhañ ren gwazadurioù niverus e gounid ne vern piv, e tiskouez gwezhierzh an diagon ne vez morse digevredet ar giminiadezh, eleze degemenn ar silvidigezh kinniget gant Doue, diouzh gwazañ an nesañ e kement stumm a zo. Diskouez a ra c'hoazh e chom kevredet, en hevelep doare, gwazañ, ar vreudeur ouzh gwazañ an Aoter, dre ma kemer perzh an diagon e labour an Iliz war-bouez dezhañ prezeg ar C'helou Mat ha dre al lidoù a vez goulennet outañ dazhliñ.

Pouezus eo kefridi an diagon, rak warnañ eo e konto mui-ouzh-mui an eskibion evit buhezekaat galvedigezh an

holl gristenion da wazañ o breudeur ha zoken da drevnañ pep gwazerezh.

Evit pengenniñ, lavaromp e vez urzhet eskibion, beleion ha diagoned, naren da vezañ disrannet diouzh ar bobl evit embreger arc'hweliou ha kefridiou en he lec'h, nemet e chom liammet-strizh outi evit hec'h adeiladiñ evel pobl Doue. Setu perak e vez galvet an dud da vezañ erouez war al lec'h da geñver pep urzhidigezh, evel meneget e derou ar studienn-mañ.



Ar Briedelezh

Diskleriañ a reas Jezuz ar briedelezh evel Kerrin da geñver an tabut restet dimp gant Aviel Sant Mark (10.2-10) ma weler ar Farizianed oc'h ober goulennoù outañ diwar benn ar benargas. Evel boaz, e klaskent e luziañ ha setu penaos, gant e respont, e vo gwelet Jezuz o tiazezañ, en un doare fraezh, ar c'herrin e kont.

"Petra, emezañ, en deus Moizez gourc'hemennet deoc'h ? - Moizez, eme ar Farizianed, en deus aotreet sevel ul lizher-dizeurediñ ha benargas." Ma respontas Jezuz dezho : *"En askont da c'harventez ho kalon eo e savas-eñ seurt reolemm evidoc'h. Adal an derou avat e voent krouet paotr ha plac'h gant Doue ; setu perak e tilezo ar gwaz e dad hag e vamm hag ez emstago ouzh e wreg, ma vint o daou ur c'horf hepken. En doare-se ned int mui daou, hogen ur c'horf hepken. Neuze pezh a zo bet unanet gant Doue, arabat d'an den henn freuzañ."*

Pezh a vez o tiforc'hañ an dimeziñ kristen diouzh pep eured all eo ez eus anezhañ, ouzhpenn ur gevrat trevourel, un unaniezh a vez didorr. Rak hennezh eo gwered ar c'herrin end-eeun. Hag evel ma oa difreuz ar C'hefle, sev an unaniezh bet sevenet gant Doue etrezañ hag e bobl, e fellas, heñveldra, da Jezuz, en ergeñver d'an unaniezh ken difreuz-all bet sevenet gantañ etrezañ hag an Iliz, ma vefe didorr ivez hiviziken an unaniezh etre ar priedoù. Droukvarnet eo enta an dizeured gant Hon Salver pa lavar : *"Pezh a zo bet unanet gant Doue, arabat d'an den henn freuzañ."*

Dalc'hmat he deus graet an Iliz diouzh hevelep kelenn ha gourc'hemenn, hep droukvarn evelkent an disrann pa vez graet hep freuz trevourel hag adeured. Rak tu zo d'ur gwaz ha d'ur gwreg da vont pep hini diouzh e du, evit abegoù grevus, gant chom neoazh hep godinebiñ. Forzh penaos e c'hall a-wechoù an kez disrann paouez war-bouez un askeviunadenn.

An addimeziñ goude un dizeured ne vez morse aotreet hep ma ve desellet evel godineb hervez kelennadur Jezuz e-unan, pa lavar c'hoazh pelloc'h dre Aviel Mark (10,11-12) : *"Neb a vez oc'h argas e wreg hag o timeziñ gant un all a ra godineb en he c'heñver ha, mar bez ur wreg o tilezel he fried hag o timeziñ gant un all, e vez o c'hodinebiñ."*

Diwar se ne c'haller addimeziñ, anez da unan eus ar priedoù dont da vervel, rak torret e vez neuze al liamm kerrinel.

A-wechoù avat e weler an Iliz, gant ar Pab avat hepken, neket o terriñ, - pezh na c'hell ket ober, - hogen o tiskleriañ evel nepek un eured n'eus bet biskoazh anezhañ, dre ma oa dierremmek, evel, da skouer, pa vez anat ha dienaet n'eus bet gant an eil pe gant egile pe gant an eil hag egile na rat na youl da zimeziñ, rak neuze ne vez kevrat ebet, pe c'hoazh pa vez bet rediet an eil pe egile da briediñ hag, evel reizh, pa ne c'hall an eil pe egile seveniñ dleadou ar briedelezh pe, gwashañ pezh a zo, pa zinac'h o c'hefleuniañ. Nepek e vez neuze an dimeziñ.

Teir finvez a gaver d'ar briedelezh :

1 - Kaout bugale ; bevañ kevret ha kenlabourat gant moended, peurgetket war-bouez degas karantez kristen an eil d'egile ; gwalc'hañ an ezhommoù revel.

Ken pouezus eo avat kaout bugale, ma ne vez ket aotreet un eured etre unan badezet hag unan divadez, anez

d'ar c'hempried-mañ azaviñ e vo desavet e vugale evel kristenion hag e klasko ivez ar pried badezet, diouzh e du, degas e gempried d'ar feiz kristen. Reiñ desavadurezh kristen d'ar vugale eo, na petra, da gentañ penn, o badeziñ, deskiñ dezho pediñ hag o c'hatekizañ.

Skeudenn ar C'hrist hag an Iliz eo ar briedelezh dre m'he deus da finvez genel ha desevel bugale hag o vezañ maz eo genel ha araogiñ e par buhez ar C'hrist, Mestr ar vuhez dreistnaturel, genel hag araogiñ ivez e par ar vuhez naturel. Graet eo emichañs rad kerrinel ar briedelezh evit adeiladiñ korf ar C'hrist, dre ma ranker, anat eo, kaout tiegezhioù kristen evit genel ha santelaat kristenion all e sell d'ar Rouantelezh.

2 - Bevañ kevret ha kenlabourat gant moended zo en diwezh klask seveniñ an unded-skouer a gaver etre ar C'hrist hag e Bried an Iliz. Karitez avat, eleze karantez kristen eo anv seurt unded hag unaniezh. Amañ c'hoazh e roio rad ar c'herrin nerzh d'ar priedoù da wellaat atav o darempredoù hag ar c'hefle siellet gant ar gwalennou eskemmet etrezo, war an diviz ma soñjo an eil hag egile e gwerc'h seurt rad, liammet maz eo ouzh gwerc'h aberzh ar groaz, dreist-holl pa c'hoarvez diaesterioù war dachenn ar feleunded. Rak neuze e tle kentel ar groaz, arouez an unaniezh hag ar feleunded etre ar C'hrist hag e Vreudeur bet salvet gantañ, etre ar C'hrist enta hag e Bried an Iliz, nevesaat o deltu evit ren o stourm ha trec'hiñ.

3 - Gwalc'hañ an ezhommoù revel eo teirvet finvez ar briedelezh. Setu maz eo neuze treuzneuziet, gant ar c'herrin-mañ, ar garantez revel etre ar priedoù ha derc'havet war live ar briwerc'h douedaveel anvet karitez. Ken ma vez kantouestlet ha santelaet pep kediadenn gorfel ha tregemmet en unaniezh a ren etre ar C'hrist hag an Iliz. Ret eo neuze d'ar priedoù meveriañ war ur c'hevrin ken don. Ya, evel ma lavar dimp Sant Paol : *"Bras eo seurt kevrin !"*

(Ef 5-32). Ra veizo enta ar priedoù ster uhel an dleadoù a gevaraez rad ar c'herrin dezho kefleuniañ.

Da vezañ erremmek, e tle ar briedelezh bezañ graet dirak testoù ha dirak derc'houezour an Iliz, hemañ beleg ar barrez peurliesañ. Gouniñvour ar c'herrin n'eo ket ar beleg koulskoude, hogen ar gevraterion o-unan dre ma c'hoarvez, kehuz-gwerediñ ar c'herrin eus ar c'heviunad keveskenm pe "gengeviunad" eztaolet gant "ya" ar gevraterion. Ha peogwir ez eo gant ar gevraterion e vez stignet ar c'hehuz-gwerediñ int eo a zo neuze gouniñvourion ar briedelezh.

Hogen an azav eztaolet gant an eil hag egile eo a vez oc'h ober danvez ha furm ar c'herrin ; an danvez e kement ha ma vez, e youl ar gevraterion, oc'h erzerc'hañ dizalc'hidigezh ar gwirioù keveskenm emañ an eil oc'h ober d'egile ; ar furm e kement ha ma vez, e youl an eil hag egile, oc'h erzerc'hañ darbennidigezh keveskenm an kez gwirioù.

Aes eo meizañ perak ez eo ar briedelezh ur c'herrin. E-touez an holl gevredadoù naturel n'eus nemet an tiegezh a gement a vefe diazezet war ur c'herrin. Nag ar riez na nep stern-beli halek all ne vezont ket. An tiegezh avat zo dezhañ ouzhpenn ur gefridi halek ha naturel, ur gefridi dreistnaturel o sellout ouzh desavadurezh kristen ar vugale, rak graet eo an tiegezh diouzh enebañs Doue ha diwar skouer Treinded Santel an Nouezioù douevel. Pal ar revelezh, e devez Doue, zo neuze krouiñ un tiegezh dreistnaturel divent, gant dehêred diniver d'an Tad Trafadel ha graet evit bevañ en e ser buhez peurbadel ar Rouantelezh neñvel.



Ar Gevradiezh ha Gouezvoud Ar C'hrist Damkanadoù Liesseurt

Kent kregiñ gant ar pennad da heul e tlean reiñ da c'houzout d'al lenner ez eo feizoniezh uhel a-walc'h danvez an div studienn da zont a vo meret amañ.

Ar ger "*transsubstantiatio*", bet diazezet da vat er grennamzer diwar bennaennoù an aristotelouriezh eo ar ger a zo bet miret hag a vez arveret bepred gant an holl feizoniourion gatolik evit deskrivañ doare gouezvoud ar C'hrist e Kerrin an Aoter. Hogen, o vezañ m'o deus kollet kealioù aristotelat ar solwez hag an darvoudenn o zalvoudegezh abaoe an eil brezel-bed, e klasker bremañ deveizañ ar vongoal gevradiel, bet devedet gant Goursened Trenta, diwar-bouez dezgeriadoù feizoniel nevez, graet evit klokaat ster ar ger kozh "*transsubstantiatio*". Ma tlean raktal resisaat e vo ret diwall da freuzañ bongoal dTrenta, soliet war brederouriezh an natur, keit ha na vo ket bet bodet gant ar Pab ur Goursened kelennadurel evit divizout diwar-benn krefen evel hennezh.

Setu perak, mar em eus graet, adal va studienn gentañ, gant ar ger fraezh "*solwezkemmadur*" e oa evit gwareziñ gwerc'helezh ar Gouezvoud kevradial ha diwall da gouezhañ e traped an disivouderion na fell dezho gwelout e Gouezvoud ar C'hrist dindan spesoù ar bara hag ar gwin nemet un argel hep mui na maes. Ne felle ket din, forzh

penaos, sevel ur ger e brezhoneg gant an trobenn "treuz" a gavan direizh amañ e pep keñver. Ha war-bouez prederiañ ez on deuet da welout e vefe c'hoazh an termen "tresolwezadur" an hini a vefe ar gouestañ d'ober al liamm etre preder Tadoù Goursened Trenta ha preder ar remziad feizoniourion nevez.

Dezgeriadoù Nevez :

Trefouezhiantelaat
Trezavedelaat
Trearouesaat

Ret e vefe sevel studiennoù hiroc'h ha, moarvat, "solwezeloc'h" eget houmañ, evit plaenaat kement a gaver dindan seurt gerioù. Ne glaskin amañ nemet reiñ un alberz eus an deveizadurioù a vezont o livañ ha degas kinnigadoù liammet ouzh hon lavaradurezh vrezhonek.

An dra gentañ da lakaat war wel eo e vez techet lod bremañ da zilezel an deveizadur soliet war ar brederouriezh naturel e gounid un deveizadur denoniel. Ha dre greiz an darventezioù e verzher un distro da vezad un aristotelour brudet koulskoude **Tomaz Akwino**, an "Aeldoazhour" (1) - o lavarout ez eo stag e penn kont talvoudegezh silvidik Kerrin an Aoter ouzh Gouezvoud Gwerc'hel ar C'Hrist e diabarzh ar Geduniezh feizadel hec'h-unan (2).

Diwar hevelep arselledoù e krogas ar studierion war ar feizoniezh da dabutal, kerkent ha diwezh an eil brezel-bed, evit klask donaat keal an tresolwezadur, enderc'hel ma rae seurt hanc'her emezo, meizadoù all en tu-hont d'an hini am eus deveizet ar fraeshañ war-bouez kinnig "solwezkemmadur". Kel oa ganto eus "trefouezhiantelaat", "trearouesaat", ha "trezavedelaat", pezh a c'haller displegañ

evel-henn : n'eo ket beziadelezh danvezel ar bara kevradial, da skouer, hogen ar fouezhiant hag ar ster anezhañ eo a zo bet tresolwezet. Aes eo meizañ diwar-henn edod endeo war an hent etrezek deveizadurioù estren-glez d'an aristotelouriezh.

War-lerc'h ar gelc'heleenn "*Humani Generis*", bet embannet e 1950, e tistroas ar feizoniour brudet de Lubac war vezad Tomaz Akwino rakvenet, evit diskouez ar pouez bet lakaet e derou ar Skolbrederouriezh, neket war gudenn ar Gouezvoud Gwerc'hel (*res et sacramentum*) e pennkont, hogen war hini ar C'Horf Kevrinel, eleze war unvaniezh an holl feizidi kenetrezo (*res sakramanti*), diwar-bouez, evel reizh, kedunadur kevradial gant ar C'Hrist dindan ar Spesoù Kerrinel.

Ne savo rendael feizoniel ebet etre ar Gatoliked da heul hevelep diskleriadur nemet e vo gwelet **Vanneste** e Belgia o klask e 1956 deveizañ an tresolwezadur hep ober dave da bep nep prederouriezh. O kemer sol war ar Grouidigezh evel bongoal e lavaro hemañ e vez roet e ster diwezhañ da bep tra gant Doue ha neket gant an den. Ne fell ket dezhañ diforc'hañ etre solwez ha darvoudennoù na, kennebeut, etre kraidedenn hag anadenn, - elfennoù ar brederouriezh anvet anadennoniezh, bras he levezon ganti war ar speredoù. Ne laka digemm nemet etre - diouzh un tu - pezh a vez an traoù evit Doue (kevret emichañs gant ar feizad), ha - diouzh un tu all - pezh a vezont evit an den diwar e gantouezadur halek. Mar bez Doue neuze o kemmañ arouesaat ha davedelaat ar bara kevradial e teu hemañ, dre areg trabedoniel, da vezañ un dra disheñvel. Ha diwar-henn, dre areg prederouriel, ne vez mui bara anezhañ.

O prederiañ neuze war ar gudenn ez eo deuet din war va spered e oa ret sevel ur ger nevez evel, da skouer, "tresolwezadur", eleze un termen o klotañ war un dro gant

devezadur diles Goursened Trenta ha hini ar feizoniourion liesseurt hiziv an deiz.

Gant Welte, en Alamagn, e loc'her diwar ur meizad all. Hervezañ o devez an daveadurioù speredel ha nouezdenel brasoc'h gwerc'helezh eget an daveadurioù alvez-danvezel o-unan. Gwelet e vo hennezh neuze o studiañ ar bara hag ar gwinn kevradial e par o daveadurioù. Pezh a c'haller displegañ evel-henn : bezañ, bezañ gwir, bezañ mat (bezañ oc'h euladiñ "kaout ster evit") zo meizadoù bet sellet evel kevamsavadus ab ur viskoazh gant an Domazourion. Ha pep tra, emezañ, zo dezhañ "ur ster evit" diazezet en e graided, rak mar n'o dije ket an traoù "o ster evit", ne c'halljent ket bezañ ar pezh ez int.

Bez' e c'hall "ar ster evit" avat bezañ savelet gant an den koulz ha gant Doue. Da skouer, pa vez livet ur pezh-mezher gant ne vern peseurt den, ne vez ken dezhañ talvoudegezh nemet evel kinkladur. Hogen pa vez degemeret gant ur Penn-Riez, petra bennak ma vir bepred ar mezher e hevelepted, e rez travoud, e kemm koulskoude raktal en un doare gwerc'hel hag ergorel, e rez hennvoud. Diouzh un tu all, pa lavar Jezuz, Mab Doue ha Doue evel E Dad, e teu ar bara da vezañ E Gorf, n'eo ket evel pa lavar ar Penn-Riez ober ur banniel gant ar mezher livet. Rak, tra ma teu kerkent ar bara, war lavar Jezuz, da vezañ E Gorf hag e Voud Kraidedel, ne c'hoarvez netra heñvel gant ar mezher livet, peogwir e chom dierouez ennañ boud kraidedel ar vroad maz eo an arouez anezhi, eleze boud-kraidedel-hollvroidi-ar-riez.

Diazezet e vez neuze tresolwezadur ar bara kevradial war ur saveladur-ster a zo ivez moarvat trearouesaat, trefouezhiantelaat pe drezavedelaat. Hogen, evit da hennad an danvez livet bezañ kemmet ivez, adal ma tro da vanniel e tleer anzav e chom mil bell kraided tresolwezelaat,

trefouezhiantelaat pe drezavedelaat ar bara kevradial diouzh reoù an danvez aet d'ober ar banniel.

E Breizh-Veur eo e kemero an devezadur denoniell e nij da vat gant **Davis**. Gwelet e vo hemañ o tiazezañ e bredererezh war gealioù denoniell ha, peurgetket, nouezdenelour. Danvez denel eo ar bara. Hemañ ne vez gantañ na gwerc'helezh na ster ebet, nemet ha da zaved, eleze da finvez en dije ken an den. Hag anvezadus e vije boudelezh ar bara mar chomfe troc'hed diouzh he daveadur d'an den. Ne vije anezhi nemet un dedolzad elfennoù liesseurt. Hevelep dedolzad e teu dezhañ, dres dre berzh an tresolwezadur, boudelezh denel nevez ha daveadur nevez. Setu ma kemm detri enta ster gwerc'hel ha kraidedel ar bara. Ne vez mui durc'haet ouzh an den evel bara - na pa chomfe evel m'emañ e rez travoud - gant an elfennoù a dalv dezhañ zoken da vegañ korf an den.

E ser hevelep trezavedelaat, trefouezhiantelaat pe drearouesaat, petra bennak ma ne ra ket Davis gant seurt gerioù, e c'hoarvez an tresolwezadur o reiñ buhez d'ar c'herrin gant kraided ar C'hrist, Korf ha Gwad. Hogen digefleun e chomo Gouezvoud Gwerc'hel ar C'hrist e par ar Gevradiezh keit ha na vo ket kejezh nesaoniek ha c'hwek etrezañ hag ar feizad. Trezavedelaat, trefouezhiantelaat ha trearouesaat boudoniell eo a zo kelennet amañ dimp c'hoazh, hep m'en dije koulskoude bongoal an tresolwezadur da c'houzañv, evit ur gwel da vihanañ.

Hevelep dezgeriad a roy tro neuze d'an Izelvroad **Schoonenberg** da vont un tamm pelloc'h, nemet e ray-eñ gant ar gerioù trearouesaat hag all, a zo kevatal gant tresolwezaat. Diouzh e glevout ez eus hevelepted etre gouezvoud nouezdenel ha kehenterezh nouezdenel. Ha diwar seurt kehenterezh keveskemmet etre ar C'hrist hag ar feizad eo e vez ar Gouezvoud nouezdenel oc'h anadiñ. Ac'hano e c'haller dezren ez eus div furm d'ar gouezvoud

nouezdenel : ar gouezvoud kinniget nemetken hag ar gouezvoud darbennet evel ked. Padal, n'eo ket ret e vefe sevenet ar gouezvoud dre hantererezh kentizhel korf an den. A-walc'h e vez, da skouer, ul lizher, ur prof, un eñvorenn bennak, traoù danvezel enta o kemer neuze, e seurt kemperzh, talvoudegezh arouezioù gwirion. Ha sed a zo ivez fouezhiant ar Spesoù Kerrinel. Donoc'h e vez ar "boud-arouez" evel henezh, dedaolet ma vez gantañ ar gouezvoud nouezdenel. Ha tu zo da sellout outañ evel pa vefe tresolwezet e gwirionez.

Pell e vaner amañ emichañs diouzh an aristotelouriezh, hogen tost-kenañ ouzh ar preder hanvoudelour kempredel.

Penaos e vez neuze **Schoonenberg** o tezrannañ Gouezvoud Kerrin an Aoter ?

Un Emged kristek eo ar Spesoù kantouestlet hag en o ser ar Gouezvoud Gwerc'hel, hemañ o vezañ Gouezvoud an Emgedour e par an emged. Doare ar gouezvoud-emginnig d'ar geduniezh ilizel zo gant gwered an Arloz dre hantererezh ar Spesoù kantouestlet. Un doare etrenouezdenel zo gant seurt Gouezvoud ivez, peogwir ez eo ar bara kevradiel an hanterer etre Jezuz hag ar feizad e par an hevelep Iliz nemeti. Graet eo an emged amañ gant boued ha died, anezho gwir arouezioù evel rakveneget. E ser un trearouesaat enta e c'hoarvez c'hoazh en degont-mañ an tresolwezadur ma vez sevenet gantañ emged donañ ar C'Hrist d'ar geduniezh ilizel. Dindan ar Spesoù Kerrinel e teu neuze Gouezvoud Gwerc'hel an Arloz da vezañ Gouezvoud ivez e diabarzh ar geduniezh. Arabat e vefe krediñ avat e vefe rannet ar Gouezvoud Gwerc'hel, rak n'eus nemet ur Gouezvoud Gwerc'hel hepken, petra bennak ma vez kefleuniet e doareoù disheñvel ha ma chom kreizet gouloc'h ar Gouezvoud Gwerc'hel e diabarzh ar geduniezh dindan ar Spesoù Kerrinel. Gouez da **Schillebeeckx**, ur feizoniour izelvroat all c'hoazh, pa vez o reiñ dimp al dezger

da heul : *"Korf an Aelez en e ster kristoniel eo andon Korf an Arloz en e ster ilizoniel"*. Pezh a glot ervat gant lavar Sant Paol : *"Peogwir n'eus nemet ur bara hepken, ned omp-ni holl nemet ur c'horf hepken, rak holl e perzhiomp e seurt bara nemetañ"*. (I Kor 10,17). Ne vo kefleun avat ar gouezvoud, diouzh tu an Iliz, nemet pa vo kefleun emged ar feizidi o respont da hini ar C'Hrist. Rak ne vez kefleun ar gouezvoud nouezdenel, eme **Schoonenberg**, nemet pa vez kinniget ha darbennet war un dro.

Gwelet eo bet uheloc'h e hañvale kealioù an tresolwezadur bale kembezus gant an trearouesaat, an trezavedelaat hag an trefouezhiantelaat. Va c'hredenn zo avat e tleer diwall da hevelebekaat an hini kentañ gant an tri all o vezañ ma n'eo ken liammet gant ar re all, hep dezhañ kaout an un hevelepted hag int.

Ar pezh a c'haller dezren diwar ur studienn evel houmañ eo e vez diskouezet mat dimp bremañ ster ar Gevradiezh evel emged Korf ar C'Hrist o talvout da vagadurezh da bep feizad evit adeiladiñ ur C'Horf all, bepred kristek, hag eñ anvet Korf an Iliz e par ar geduniezh dasstrollet dre liamm ar Garantez.

Kement ha diskouez ivez dereadelezh hag azasted ar ger "tresolwezadur" ouzh dezgeriadoù all o tennañ da Gerrin an Aoter, e fell din bremañ komz diwar-benn lod feizoniourion chomet dizalc'h, evit ur gwel, diouzh redenn an denoniezh, hep distreiñ evelkent d'an aristotelouriezh, nemet o reiñ brasoc'h pouez en un doare deurus hag ampart a-wechoù d'un drabedoniezh poellek. **Martelet** zo unan anezho.

Eus Gouezvoud Trewerc'hel ha neket Gwerc'hel e ra meneg hemañ. Gant an adanv gallek "sur-réelle" eo e ra

Martelet, ha pa weler pegeit e chom "sur" e galleg war-lerc'h hon "tre" brezhonek e par ar meizaderezh resis e c'haller diouzhtu spurmantañ poellekted al liamm a garfen savelañ etre solwezadur ha trewerc'hel. Deomp spisoc'h avat gant hon imbroud.

Hervez ar feizoniour-mañ ez eo deuet ar ger "gwerc'hel" da vezañ re deuc'h, hag evit pellaat diouzh skeudennoù liammet ouzh gerioù re anavezet e vefe mat, emezañ, komz diwar-benn ar Gevradiezh neket hepken diwar-bouez termenou evel "Gouezvoud Gwerc'hel", hogen diwar-bouez reoù evel "Gouezvoud Trewerc'hel". Rak, Gouezvoud ar C'hrist, ha ni o krediñ ennañ, n'eus tu ebet evitañ da vezañ leuneztaolet o vont diouzh ar werc'helezh nemeti anavezet ganimp betek-henn. Ar C'hrist dasorc'het ma tenn dezhañ hon feiz, - hag ar Gevradiezh o vastañ dimp en un doare ken dispar ar Gouezvoud anezhañ, - zo ur C'hrist araokaet warnomp war-bouez lankad an Dasorc'h. Setu perak n'omp ket evit kaout krog war ar Gouezvoud anezhañ gant ar gevelioù a vez en hon c'herz peurliesañ. Hon daoulagad, dreist-holl, a vez beuzet en deñvalijenn, ken ne chom ganimp nemet gerioù toc'hor evit menegiñ seurt Gouezvoud, hag eñ koulskoude gwerc'heloc'h eget ar werc'helezh a gantouezomp peurvuiñ.

War sol keal an Dasorc'h eo e vez neuze **Martelet** o kinnig ur respont d'ar "penaoz", eleze d'an "argerzh" ma teu gantañ ar C'hrist da vezañ erouez e Kerrin an Aoter. Ha kement ha spisaat an traoù, war geal dasorc'h divarvel ar C'hrist hervez kelennadur Sant Paol, pa lavar : "Ar C'hrist dasorc'het ne varv ken," eo emañ diazezet preder **Martelet**, neket, anat eo, war geal un azbevidigezh evel hini Lazar, bet marvet abaoe, pa ne c'halle ket seurt adsav pe, mar karer, seurt dihun nemetañ dieubiñ Lazar diouzh kor an natur, evel ma reas an Dasorc'h evit Jezuz. Amañ siwazh ne

ra ar galleg nemet gant ar ger "résurrection" evit gwiskañ an hevelep keal, pezh a zo droukveskus-daonet.

Kendalc'homp avat gant deveizadur **Martelet**. "Penaos", emezañ, "kantouezañ seurt Gouezvoud hag eñ gwerc'heloc'h eget pep gwerc'helezh ?" Evitañ ne c'hall ket hon c'hantouezadur dimp bremañ bezañ disheñvel diouzh hini an Diskibled war-lerc'h an Dasorc'h. Da geñver an Emziskouezioù e welont Jezuz : Mari-Madalen dindan stumm ul liorzher, paotred Emmaus dindan hini ur beajour, hag an Ebestel dindan hini ur pesketaer war c'hlann al lenn. Ha diwar-bouez arouezioù, gerioù hag all, eo e tizoloont hevelepted ar C'hrist. Degont Diskibled Emmaus, peurgent, zo kentelius e seurt keñver, rak amañ e kaver arvanoù hag arouezioù bern war vern : arvan ar beajour, hini an den dianav o komz dezho diwar-bouez termenou biblek ken fromus d'o c'halon, peurgent goude reuz ar Golgota ; hag evit dibikouzañ dezho en diwezh daoulagad o spered, anad hag arouez **ar bara torr**... an diskoulm d'an dihestell.

War-bouez erouesaat e seurt giz d'e dud dindan arvanoù n'o doa, d'ar c'hentañ selled, netra da welout gant e stumm boas dezhañ, emañ hiziv c'hoazh an dasorc'had o tiskouez dimp an doare ma tleomp dont d'an anaoudegezh anezhañ dre hantererezh tud pe zoken traoù, evel ar bara hag ar gwin, n'o deus evit doare, netra da welout gantañ d'ar c'hentañ selled. Ya, diwar-bouez gerioù pe meidoù zoken eo e teu gouezvoud Jezuz da vezañ fraezh. Erouesaat a ra d'ar Vadalen, da skouer, diwar-bouez ur ger hepken : "Miriam!" ; ha da baotred Emmaus diwar-bouez ur meid pa dorr ar bara dirazo, dezho da welout emañ aze korf hag ene, Eñ an Arloz !

Heñvel e vez neuze an traoù gant ar Gevradiezh. N'eus tu ebet evidomp da c'houzout petra eo bara ha gwin Kerrin an Aoter, nemet krediñ a rajemp e c'hall ar C'hrist kemmañ an hevelepted don anezho en ur lavarout : "Va C'Horf an

hini eo, va Gwad an hini eo !" ha ni diazezet start hon c'hredenn ganimp war feiz divrall an Iliz e Dasorc'h an Arloz. Rak ar pezh a weler zo bara ha gwin hepmuiken. Kaerañ pezh a zo, kent evel goude ar Gorreou, ne chom war an aoter nemet bara ha gwin, evel a weler mat paz eer dezho dre hent an argerzhadoù kimiel. Ha padal, dre nerzh ur galloud n'eus dezhañ seurt ebet o tennañ d'an argerzhadoù kimiel, e vez ar C'hrist, dre berzh an Emgreudadur, oc'h ober gant ar bara hag ar gwin un dra bennak estr ha dreisteloc'h egeto en o c'hrai, un dra bennak trehontel dezho, sev E Gorf hag E Wad klodus.

Penaos avat e c'hoarvez seurt kemmadur : sed a chom anvezadus dimp e pep keñver, dres evel ma vez ivez dreistdiraez d'hon spered doare an Dasorc'h hag ar penaoz anezhañ. Seurt nouspetra trehontel d'an den ha d'an alvez, setu dres petra 'vije tu d'ober anezhañ "trewerchelezh" : domani an Dasorc'h Kristek an hini eo.

Diskouezet em eus dre vras pehini oa devezadur **Martelet** hag ar pezh a c'hallomp dezren anezhañ eo al liamm diazez a zo etre an Dasorc'h ha Gouezvoud ar C'hrist e Kerrin an Aoter. Rak, evel ma c'hoarvezas gwechall an Dasorc'h dre nerzh ar Spered Glan, e c'hoarvez bremañ an tresolwezadur e ser gouniñverezh ar beleg pa vez hemañ o teveziañ Emvod ar Feizidi hag oc'h adkefleuniañ moliaç'h ar Goan Ziwezhañ. Ha sed an abeg perak e ra Sant Paol gant an termen "*Korf Speredel*" (I Kor 15,45-49) evit deskrivañ doare korf ar C'hrist abaoe an Dasorc'h.

Seurt korf, treantet maz eo gant ar Spered, zo diazez ar c'henlec'h eulavouriel ma kejo Doue hag an Denion evit mat en ur vriatadenn beurbadel. Setu perak e tleer lakaat ul liamm diazez etre ar Gouezvoud Kevradiel hag ar Bed Nevez o tont, - evel m'o deus graet aozerion an diell brientiñ savet da geñver Kendalc'h Etrevroadel ar

Gevradiezh bet dalc'het e Lourda : "Jezuz-Krist, Bara Torr evit ar Bed Nevez".

O lenn seurt embannadur, e weler ez eo Gouezvoud Korf Dasorc'het ar C'hrist e Kerrin an Aoter evel un diouzerc'h eus kemmadur an hollved da geñver Distro Jezuz en e glod. Rak Korf an Dasorc'had zo kentañ kellig ar Bed Nevez ma vezomp bremañ o tertiñ ar bara evitañ, dezhañ da c'heneh deiz goude deiz en hon touez. Gant ur C'horf evel hennezh eo en deus kemeret krog ar Spered endeo war an danvez hag an alvez evit o ferc'hennañ, evel ma kemero krog ivez war Grouadelezh en he fezh, pa vo gwelet ar C'hrist o tistreiñ evit krennzastum ennañ pep tra ha deren dezhañ pep tra.

Hennezh eo neuze ar C'hrist emañ dimp gounit anaoudegezh anezhañ dre Gerrin an Aoter. "*Rak Hennezh eo an Arloz nemetañ m'emañ an holl draoù o vezañ drezañ ha ni drezañ ivez.*" (I Kor, 16-17) hag Eñ "*o tougen an hollved dre nerzh e gomz.*" (Hebr 1,3)

Dre ma fell neuze d'an Tad e vefe dasstrollet an hollved dindan renerezh ar C'hrist evel dindan "Ar Penn Nemetañ" (Ef 1,10 ; Kol 1, 20) emañ skeud an Dasorc'had gant E Groaz oc'h eskoriñ endeo war skramm "An Neñv Nevez" hag "An Douar Nevez" bet gwelet gant Sant Yann (Diskul 21,1). Evit poblañ seurt Bro Wenn, emañ ivez o sevel, adal bremañ, "An Den Nevez", tonket dezhañ kreskiñ betek tizhout "ment ar C'hrist en e gefleunded" (Ef 4,13), nemet war-bouez dezhañ reuziñ ouzh poanioù un diorren kalet. Rak emañ "ar grouadelezh kevan", dalc'het maz eo dindan galloud mac'hom an den "o keinal gant ar gwentloù", kent klod bugale Doue". (Rom 8, 21-22)

N'eus nemet un doare dimp avat, er pleustr, da brientiñ donedigezh hevelep Bed Nevez : debriñ Korf an Dasorc'had. Rak, ouzh henn ober, - evel m'henn goulenn-Eñ

groñs diganimp, forzh penaos, - e tarbaromp da stummañ ivez E Gorf Kevrinel e stern ur Geduniezh mennet dre nerzh ha liamm ar garantez da herouezañ ar vreuregezh hollvezel. Seurt keduniezh amparet evel dres gant kedunadoù lec'hel ha nouezdenion galvet da vezañ kemmet e Jezuz-Krist - eleze, galvet da "zougen en o c'horf diwaskoù marv Jezuz evit ma vo diskouezet ivez en o c'horf buhez Jezuz." (II Kor 4,10)

Ha setu diwar eno dizoloet ganimp dre vras endeo an elfennoù a vez o vont d'ober an Aberzh anvet oferenn, ma vez gantañ strollet ar C'hrist hag e dud. War-bouez dezhañ bezañ arreet bemdez, emañ lid an oferenn o reiñ he gwir dalvoudegezh d'hon buhez amañ war an douar, o reiñ e wir ster da Bask an holl vreudeur trema Ti an Tad, gant Jezuz-Krist, ar Breur henañ, trema Rouantelezh an Drewerc'helezh.

(1) *Doctor Angelicus, lesanv bet roet da Sant Tomaz Akvino.* (2) 3 aq 73 ; a1, a3. (3) *N'eo ket ar penaoz eus an tresolwezadur e vez hiziv ar feizoniour arnevez o klask displegañ hogen ar ster hag ar finvez anezhañ, eleze ar perag (an "evit petra" hag an "evit piv", peurgent, eus ar Gouezvoud).*



Ster Hengounel an Tresolwezadur

Re bouezus eo kudenn gouezvoud gwerc'hel an Tiern Jezuz dindan spesoù ar bara hag ar gwin, evit ma tremenjemp hep klask endonañ seurt kelennadurezh hervez ar ster hengounel emañ Roma bepred o reiñ d'an tresolwezadur.

Setu perak, kent mont larkoc'h da brederiañ war arveziou all da Gerrin an Aoter, e kav din e tlean c'hoazh klokaat va fennad agentel "*Ar Gevradiezh ha Gouezvoud ar C'hrist*" gant ur plaenadur arbennik o tennañ da frammadur ur gelennadurezh diwanet diouzh labourioù Goursened Trenta, anezhañ ar vodadeg-Iliz kevangorel nemeti bet, abaoe ar Grennamzer, o tevedañ war gement kraf diwar-benn ar Gevradiezh.

Gwelout a raimp e skeud hevelep studienn penaos he deus emdroet kudenn ar Gouezvoud Gwerc'hel war hed ar c'hantvedoù. Daoust ha dalc'het e vo kont avat eus preder lod feizoniourion hiziv an deiz evit kantgadiñ lunanvadurioù nevez ? N'ouzer ket. Forzh penaos, evel ma lavaren e korf va skrid diwezhañ, ret e vije d'ar Pab bodañ da gentañ ur Goursened kelennadurel evit kemer, diouzh ezhomm, divizoù nevez. Va c'hredenn startañ din avat eo ne c'hallo biken ar feiz wirion e seurt keñver mont war laoskaat.

Plaenadur damkanel

Stank eo, war dachenn ar poell-den, ar c'hudennoù a weler o sevel da heul hini ar Gouezvoud Gwerc'hel dindan spesoù ar bara hag ar gwin kevradiel. Seurt bongoal a vez

oc'h enderc'hel lod emplegadurioù kelennadurel bet diferet war o divoud gant an Iliz, evel da skouer an tresolwezadur ha trebad ar spesoù kantouestlet war-lerc'h an oferenn. Hevelep krefen e vez kalz Kristenion Adaozat, o tabutal c'hoazh hiziv an deiz diwar o fenn. Rak, evel dres, ne c'haller ket chom hep ober ar goulenn : penaos e tremen an traoù ? Pe c'hoazh : petra fell d'an Iliz lavarout ent resis gant hevelep kelennadurezh ? Pezh a ro tu d'ar feizoniour da studiañ donoc'h ar c'hudennoù da heul emañ o vont da blaenaat :

1) war-lerc'h ar Gorreoù, e kaver sevenet war an aoter, gouezvoud gwirion gwerc'hel ha solwezel korf ha gwad ar C'hrist, dindan spesoù ar bara hag ar gwin, ene ha douevelezh an Arloz o vezañ erouez dre gevambroug ;

2) solwezoù ar bara hag ar gwin a vez kemmet en holl d'an holl e solwezoù korf ha gwad ar C'hrist diwar-bouez tresolwezadur.

3) gant an tresolwezadur ne vez degaset kemm ebet e spesoù ar bara hag ar gwin, dre ma chomont ar pezh ez int, kollet ganto razh o solwez ;

4) erouez e vez ar C'hrist dindan ar spesoù, e reizh ur solwez, hag Eñ o venel eno, kevan en diabezh hag e pep lodenn, keit ha ma vez ar spesoù int o-unan o trebadout.

I

War-lerc'h ar gorreoù e kaver sevenet war an aoter Gouezvoud Gwirion, Gwerc'hel ha Solwezel Korf ha Gwad ar C'hrist dindan spesoù ar bara hag ar gwin, ene ha douevelezh an Arloz o vezañ erouez dre gevambroug.

A feiz eo seurt lunanvadur en e bezh, soliet maz eo war gelennadurezh Goursened Trenta bepred e talvoud.

a) Gouezvoud ar C'hrist n'eus ket anezhañ unan leterc'hadek, hogen unan gwirion, gwerc'hel ha solwezel.

Sterioù disheñvel a vez gant an droienn "bezañ erouez", rak bez' e c'hall un den bennak, da skouer, bezañ erouez da'm spered, hep ma vefe gwerc'hel, na diwar-henn, gwirion, hevelep gouezvoud. An ergorenn werc'hel a vez tizhet neuze gant va spered, ne vez anezhi nemet un eñvoradenn, ur faltaziadenn, na mui na maes. N'eo seurt gouezvoud nemet an hini a vez enstag, lakaomp, ouzh ur skeudenn bennak pe, c'hoazh, ouzh un degounadenn da geñver un diviz etre keneiled. N'eus aze nemet erouezded diwar-bouez arouez ("in signo"), dres evel ma kred da lod Calvinourion, pa lavaront e vez lid ar Goan Ziwezhañ hag ar C'hedunadur o vroudañ o feiz gant kement a nerzh ma vezont oc'h erouesaat an Arloz dirak selloù o spered. Ha koulskoude ne vez ket Jezuz eno e gwirionez, eme Galvin, dre ma n'eus ken dezhañ nemet an neñv da chomadur.

Hogen bez' ez eus traoù a vez broudosoc'h c'hoazh da spered an den : da skouer, ur prof kaset dimp a vez o tougen betek ennomp karadegezh an hini a fell dezhañ bezañ mat en hon c'heñver hag oc'h atizañ en hon c'hreiz karadegezh kevateb. Karantez ar profour, testeniet gant ar prof, a vez o werediñ diwar-bouez hemañ. Ha heñvel a-walc'h e vez ar gont, eme Galvin adarre - gant gouezvoud e galloud ("in virtute") an Arloz e par ar Gevradiezh.

b) Gwirion ha gwerc'hel eo gouezvoud kevradieel ar C'hrist.

Diforc'h eo ster ar gouezvoud gwirion diouzh hini ar gouezvoud letarc'hadek, o vezañ maz eo kreñvoc'h ha ma vez o verkañ tostidigezh, eleze nester etre boudou gwerc'hel e par an amzer hag an egor. Hogen ret eo diwall ivez da sellout ar gouezvoud evel un dra danvezel da gentañ paz eo speredel a-raok pep tra. Da skouer, n'eus ket tu da lavarout e vefe kederouez mein ar mogerioù na, zoken, tud an engroezioù pa ne gaver nester ebet etrezo e par ar spered. N'eus ket tu da gaout gouezvoud hep emell ar spered hag an emskiant. Hogen ret eo anzav ivez ne vo ket gwirion hemañ kennebeut, zoken etre hinidenion, keit ha ma ray diouer dezhañ un izegad nester e par an amzer hag an egor.

Ken risklus e vefe enta lemel he danvezelded digant erouezded ar C'Hrist e Kerrin an Aoter ha ma vefe lemel diganti he speredelded, rak ken bras ha ken pouezus eo an nester a vez merket dimp, e par an amzer hag an egor, gant korf ha gwad ar Gevradiezh, ma fell d'an Arloz e vefent euvret ganimp evel boued ha died dindan spesoù ar bara hag ar gwin.

c'h) *Gouezvoud kevradial ar C'hrist n'eo ket unan gweredidik hepken an hini eo, hogen unan solwezel.*

Gant ar gouezvoud gweredidik nemetañ n'eo ket ret d'an hini a wered bezañ erouez nag ent korfel nag ent solwezel : da skouer, Jezuz o parañ mevel ar c'hantener. N'emañ ket an Arloz e-kichen ar c'hlañvour ha koulskoude dre wered e c'halloud, setu ma weler ar mevel o sevel yac'h ha dibistig. Gouezvoud gweredidik Hon Salver zo bet a-walc'h enta evit seveniñ ar burzhud. Heñvelgont evit ar c'herrinoù all. Mar kemeromp da skouer ar Vadeziant e welomp ne vez ket erouez an Arloz aze nag ent korfel nag

ent solwezel evit hadañ ennomp egin ar yonidigezh hag ar silvidigezh dre werc'h an dour hag ar Spered Glan. N'eus amañ adarre gant Jezuz nemet gouezvoud gweredidik. E par ar Gevradiezh avat ez eo disheñvel an traoù. Solwezel eo eno gouezvoud ar C'Hrist. An dended bet sammel gantañ, hag ensezet d'an ampoent e klod an neñv, a vez o tistreiñ betek ennomp e par an amzer hag an egor, naren en he stumm diles, hogen e stumm ur boued hag un died graet da vout euvret ganimp. Solwezel eo neuze seurt gouezvoud ha n'eo ket, gweredidik hepken. N'eo ket dre berzh e c'halloud-santelaat nemetañ e vez erouez an Tiern amañ. E vout kevan, denel ha douevel, eo a gaver dindan ar spesoù kerrinel e stumm boued ha died : solwez ar bara hag ar gwin kemmet e solwez e gorf hag e wad.

d) *En e bezh e vez erouez ar C'hrist dindan an daou spes kevradial hag e pep lodenn eus an eil spes hag egile.*

Petra bennak ma vez rannet ar gwad diouzh ar c'horf war an aoter, pezh a dalv da verkañ **MARV** hag aberzh an Tiern bremañ bev da viken c'honvat evel Dasorc'had, *n'eo ket gwad marv*, anat an dra da bep feizad a holl viskoazh ! - n'eo ket gwad a vefe goullonderet eus pep denelezh vev ha pep douevelezh an hini eo a vez neuze dirazomp. E-lec'h ma vez e wad e vez ivez war un dro, na petra, buhez ha boud kevan an Den-Doue. Hag o c'havout a reer betek e pep lodenn eus an eil spes hag egile. Rak, pa vezer oc'h euvriñ ar C'Hrist diwar-bouez kedunadur kevradial, - pe dindan an eil spes e ve pe dindan egile, ne vern enta, - n'eo ket un tamm hepken eus denelezh ha douevelezh an Arloz e vezer neuze o tegemer, hogen e vout adarre en e bezh. Amoet e vefe poellata en un doare diac'hinel, rak, o vezañ ma vez erouez Krist ar Gevradiezh *en e bezh* e par an holl

gedunerion hag e par pep unan anezho, o vezañ ma tiskenn *en e bezh enta e kreiz ar c'heduner* pa vez hemañ oc'h euvriñ ar spes-mañ-spes, e tleer dezren *en e gaver en e bezh ivez e par kement darnig eus ar spes-mañ-spes*. Atodomp 'c'hoazh e vez al lodennoù, pe vras pe vihan e vefent, oc'h enderc'hel an hevelep burzhud ha, diwar-henn, an hevelep galloudegezh. N'eo ket ar c'hementad enta, hogen ar c'halloudegezh an hini eo a vez o reiñ o gwerc'h d'ar spesoù arouestlet. Ha peogwir ne vez liammet kevanded voud an Arloz nag ouzh hennad ar c'horf nag ouzh hennad ar gwad, na kennebeut ouzh ar c'hementad anezho, e vez trawalc'h an disterañ bruzunenn vara pe an disterañ takenn win kantouestlet evit reiñ dimp ar C'Hrist en e gevanroez hag ar c'herrin en e wirionez.

e) *Dre gevambroug e vez erouez ene ha douevelezh an Arloz.*

Da geñver kantouestlidigezh ar spesoù dre hini ne vez ket erouez holl barzhioù boud ar C'Hrist en hevelep doare. Lod parzhioù a vez "*vi verborum*" (dre nerzh ar c'homzoù) ha lod all "*per concomitantiam*" (dre gevambroug). Pa lavar Jezuz "*hemañ eo va c'horf*", e teu ar bara da vezañ e gorf "*vi verborum*". Hogen "*per concomitantiam*" eo e teu seurt korf da vezañ annezet ivez war an taol gant gwad, ene ha douevelezh an hevelep Jezuz. Evit meizañ gwelloc'h an dra, n'eus nemet kemer ar skouer da heul : pa lavaran d'ur bugel azezet e penn pellañ ar sal-skol, ha me er penn all, reiñ din e zorn, e vo ret dezhañ, evit sentiñ ouzhin, dont betek ennon gant e hinidended en he fezh, sev ent korfel hag ent speredel war un dro. Tu zo neuze da lavarout e vez ar bugel o reiñ din e zorn "*vi verborum*", an nemorant o vont da heul "*per concomitantiam*", dre gevambroug. Hag

evit a sell ouzh kantouestlidigezh ar gwin e c'haller poellata en un doare heñvel.

II

Sofwezoù ar bara hag ar gwin a vez kemmet en holl d'an holl e sofwezoù korf ha gwad ar C'hrist diwar-bouez tresofwezadur

Kudenn ar solwez ha, da heul, hini an tresolwezadur zo penngelioù bet darbennet gant an Iliz war-lerc'h imbrouderezh hir gwechall war dachenn ar brederouriezh. Gwelet hon eus gant ar studienn agentel penaos e klask bremañ lod feizoniourion deveizañ kudenn an tresolwezadur e doareoù disheñvel, pa sellont evel dispredet ha koshaet ar pennvoniou aristotelat o deus talvezet da soliañ divizoù an Iliz e par ar solwez hag an darvoudennoù. Ret eo bremañ, emezo, kinnig displegadurioù all.

Diaester ar gudenn

An diaester a zo gant seurt kudenn zo moarvat da lakaat e devoud an doare maz omp-ni, tud ar bed arnevez, deuet da faltaziañ keal prederouriel ar solwez dindan levezon ar skiantoù resis. Rak anat eo e vezomp techet da gantvout seurt keal gant lagad ar gouezoniour na wel an traoù nemet e stern e dachenn a zo hini ar skiantoù kantouezel. Ganto ne wel ar gouezoniour nemet tolzoù, gremmoù hag, evitañ, ne dalv ket ar boan turiañ donoc'h keal ar solwez evit klask traoù all. Diwar-henn ne vez morse preder ar gouezoniour o trevonnañ tachenn ar pezh a zo bet anvet "*darvoudenn*" gant ar Skolasteged. Dont a ra neuze keal ar solwez da vezañ heñvelster da hini

darvoudenn. Ha sed aze un droukvesk spontus a ranker lakaat war wel kent mont larkoc'h gant studi an tresolwezadur, rak aze emañ diaester ar gudenn e gwirionez ha n'eo ket e lec'h all.

*Ur c'hemm o tennañ da hennad an traoù
hag o lezel digemm an arvanoù.*

Displeget em eus e korf ar pennad agentel perak e raen gant ar ger diwar "solwez", "*substantia*", anezhañ ur ger a gemero kalz pouezegezh adalek an henamzer. Talvout a ra da verkañ strad ar boud a vez o kemmañ e par ar Gevradiezh, an trobenn "*tre*" o livañ ivez ar c'hemmadur evel "*meta*" e gresianeg. Hemañ avat n'eo ket ur c'hemmadur diwar c'horre an hini eo, hogen unan o tizhout ar boud hag o c'horren zoken an dra gemmet war ul live trehontel : Korf ha Gwad uhelbriz an Dasorc'had ! Gant an "*tre*" brezhonek, resisoc'h moarvat eget an "*trans*" latinek e veneger ar burzhud maz eo kemmadur ar spesoù o tremen diwar o live bedel war o live *trabedel*, eleze *trehontel*. Matkenañ eo neuze un termen evel "tresolwezadur".

Gwelomp bremañ petra fell d'an Iliz lavarout ent pleustrel gant seurt anvad.

Kent ar Gantouestlidigezh, da geñver ar Gorreoù, ne vez war an aoter netra nemet bara ha gwin boutin. Da c'houde, bennozh da c'halloud gweredidik ar c'homzoù kantouestlus o seveniñ pezh a vez aroueziet ganto, danvezioù o tremen bepred evidon da vara ha da win, pa sellan outo gant va foell-den, ne vez ken anezho e gwirionez na bara na gwin, hogen korf ha gwad ar C'hrist, eleze an denezh santel savet bremañ gant an Arloz e klod an neñvoù goude bezañ talvezet dezhañ da gas da benn silvidigezh ar bed.

Ur c'hemmadur boniek, hogen kevrinus, diazezet hepken war ar feiz a vagan e komzoù Mab Doue, zo c'hoarvezet war an aoter : kemmadur solwez ar bara hag ar gwin e solwez korf ha gwad ar C'Hrist.

Daoust hag-eñ n'eus ket tu koulskoude da vezañ e c'hallfe korf ha gwad ar C'Hrist kenvezout gant ar spesoù ? Henezh eo mennoz Luther bet nac'het gant an Iliz, o vezañ ma kollje ar c'homzoù kantouestlus o ster gwirion, lakaet e vije gwir hevelep dodenn. Rak, pa lavar ar beleg : "*Hemañ eo va c'horf*", ne c'hall ket ar ger "*hemañ*" menegiñ solwez ar bara ha solwez korf ar C'Hrist war un dro nemet e ve diwar-bouez leterc'had hag arouez, dodenn dizarbennet ivez gant an Iliz. Neuze, mar n'eus dindan ar solwez nep seulad all, e tleer sellout outañ evel an danseulad diwezhañ nemetañ, pezh a dalv da lavarout ne c'haller ket kaout daou danseulad diwezhañ d'ur boud bennak. Diwar-henn e tleer devezañ komzoù ar C'Hrist evel-henn : "*Hemañ*" emaoch bremañ o welout hag a c'hallfe bezañ bara ivez n'eus mui bara anezhañ e devoud, "*hemañ*" eo va c'horf, e pep gwirionez.

III

Gant an tresolwezadur ne vez degaset kemm ebet e spesoù ar bara hag ar gwin, dre ma chomont ar pezh a vezont, kollet ganto koulskoude razh o solwez.

N'eo ket ret kaout ar feiz, ha n'eus nemet darnodiñ d'ober evit gwelout e trebad arvanoù ar bara hag ar gwin war-lerc'h ar Gorreoù. Holl ar pezh a c'haller darnodiñ dre hentennoù boutin pe skiantel e par ar bara hag ar gwin, a van digemm, evel ar c'hementad, gant an tolz, an egorelezh, ar stumm, ar c'haleter, al liv, ar blaz h.a. Evit lagad ar

gouezoniour enta ne c'hoarvez kemm ebet e frammadur diabarzh ar solwezoù bet aet d'ober ar bara hag ar gwin. N'eus bet elfenn ebet o fiñval. E pep mare e c'hallfe moarvat ar gremmoù enkelat bet aet d'ober danvez ar bara hag ar gwin kregiñ da werediñ adarre. Ha sed a reont, evit ac'hano, kerkent ha ma vez bodet an ampegadoù ret e seurt keñver. Rak, ur wech euvret, e rank ivez ar bara kevradiel tremen dre gelc'hstro ar c'hemmadennoù a zo lod kement boued a zo.

Kaer e vez ober, netra na seurt ebet ne vez diguzhet o vont gant hent an imbours'h darnodel. Ha padal e vez ar feiz o tiskuliañ din ez eus c'hoarvezet un nevezinti varzhus : ar bara, sev ar werc'henn emañ an holl amparadoù merzhidik usveneget anezhi o terc'hel da bouezañ war va sennoeroù ha, dre o hantererezh, war va meiz-den, seurt bara zo bremañ steuziet, ha ne chom war e lerc'h nemet ar pezh a vez ar brederourion oc'h ober "darvoudennoù" anezhañ. Setu m'emaomp neuze adarre dirak kevrin ar feiz : darvoudennoù ar bara o trebadout hep sintr ar bara, hep gouateg ar solwez anezhañ. Hag arabat krediñ e vefe deuet seurt darvoudennoù da vezañ reoù korf ar C'hrist dre werc'h an tresolwezadur. Nann, derc'hel a reont da rediañ an den a vez ouzh o darnodiñ da haeriñ : "bara eo", petra bennak m'en rediont ivez da youc'hal, p'en deus ar feiz. "Korf ar C'hrist an hini eo" !

Penaos e c'hall darvoudennoù ar bara menel e seurt giz hep sintr, hep gouateg, hep dangorenn ebet, ha goude maz eo dres a-walc'h hennad an darvoudenn, dre dermenadur, gougevaniñ ouzh he dangorenn ?

Diwar-bouez an dezrann drabedoniell a reont eus ar veziadelezh eo e vez ar feizoniourion o respont da seurt kudenn. Ne vez ket enstag, emezo, kement darvoudenn a zo, dre heñvel benn, ouzh o solwez. Hag e par ar solwezoù danvezel e kaver unan diazezekoc'h eget ar re all : ar

c'hementad an hini eo. Dalc'hmat e vez ar c'hementad o pegañ ouzh an danvez evel ouzh e c'hlad. N'o devez an darvoudennoù all liamm ebet gant nep solwez fetis nemet ha dre hantererezh ar c'hementad e ve, hemañ o talvoud evel kentañ gouateg dezho. Ha sed amañ penaos e c'hoarvez d'ar c'hementad dont, dre vurzjud, da c'hoari roll ar solwez, da geñver an tresolwezadur : pa vez kemmet solwezoù ar spesoù kevradiel en o fezh e solwezoù korf ha gwad ar C'hrist, e vez Doue o vastañ war an hevelep tro da gementadoù ar bara hag ar gwin *ar bezoud o devoa dre benn o solwezoù kent*. Ha gant ar bezoud e vez ardaolet ivez war ar c'hementadoù holl berzhioù ha kennezvoù ar bara hag ar gwin.

En ur ger, ken bras e teu neuze talvoudekadur ar c'hementad da vezañ, ma vez en holl d'an holl o c'hoari roll ar solwez.

Pep displegadenn avat a vez o tegas ganti ur gudenn nevez. Penaos, da skouer, e c'hall ar C'hrist, evel solwez ur c'horf speredel, dont da chom dindan darvoudennoù danvezel ?

IV

Erouez e vez ar C'hrist dindan ar spesoù, e reizh ur solwez, hag Eñ o venel eno kevan en diabezh hag e pep lodenn, keit ha ma vez ar spesoù int o unan o trebadout.

Ne vez ket lec'hel amañ gouezvoud ar C'hrist. Gant gerioù all, ne vez erouez an Arloz dindan ar spesoù nemet e reizh ur solwez. Gwerc'hel ha solwezel e vez gouezvoud ar C'hrist, seurt gouezvoud o vont gant hini ar spesoù, petra bennak ma ne vez ket lec'hel. Penaos e tleer deveizañ un

dodenn evel hounnezh, pa hañval bezañ dislavarek evit ur gwel ? Lerc'h ur werc'henn gorfel bennak eo gorreenn ziabarzh ar c'horf amezat sko outi. Da skouer, tu diabarzh ar werenn eo lec'h an dour endalc'het ganti. Delec'hiet e vez ur c'horf bennak neuze diwar-bouez e gementad mentel. Delec'hiet e vez, dre ma vez o kargañ ul lec'h gant e ledad. Setu perak ne c'haller ket delec'hiañ boudoù digorf evel an aelez, lakaomp, rak, dre ma n'o deus korf ebet, n'o deus lec'h ebet kennebeut.

Moarvat o vezañ maz eus anezhañ ur c'horf gant e ventadurioù, e tlefe korf ar C'Hrist bezañ delec'hiet ivez tu bennak. Hogen "tu bennak" amañ zo un droienn n'he deus netra da welout gant ar bed ma vevomp ennañ. Hemañ n'emañ an Arloz na tost na pell dioutañ. N'en deus darempred ebet gantañ. Da geñver ar Gorreoù hag ar Gantouestlidigezh, e teu ar C'Hrist da vezañ erouez "tu bennak", hep bezañ erouez hervez ur gouezvoud lec'hel, eleze hervez an doare bet displeget uheloc'h. Gant gerioù all, ret e vefe dezhañ kargañ gant e ventadurioù al lec'h m'emañ ennañ. Rankout a rafe tennañ e ventadurioù diouzh al lec'h m'emañ evit derc'hel ul lec'h all ha reoù all niverus eveltañ. Mar bije da vezañ delec'hiet, e rankfe koazhañ e ventadurioù da reoù an averlad, da skouer, ha mont betek kemer ar stumm anezhi, pezh a zo faltazi diskiant.

N'eo ket e seurt giz avat emañ seurt traoù da vezañ deveizet. Gouezvoud ar C'Hrist amañ n'eo ket unan lec'hel an hini eo, sev unan e reizh ar c'hementad ("*per modum quantitatis*"), unan e reizh ur solwez ("*per modum substantiae*"), ne lavaran ket.

A-raok ar Gouestlidigezh, e oa erouez solwez ar bara e stern al lec'h ma kaver an averlad, diwar-bouez mentadurioù houmañ. Ha mentadurioù an averlad oa ivez reoù solwez ar bara. Ur wech troet e solwez korf ar C'Hrist, e teu hemañ

ivez da vezañ erouez e stern an hevelep lec'h, ket koulskoude diwar-bouez mentadurioù a vije diles dezhañ, hogen diwar-bouez reoù ar bara ha i chomet divoulc'h. An trevell-delec'hiañ bet kefleuniet gant mentadurioù ar bara, e gounid hemañ, zo c'hoazh kefleuniet gant an hevelep mentadurioù, hogen e gounid korf ar C'Hrist ar wech-mañ. Emañ korf ar C'Hrist neuze e stern an un lec'h ha hini spes ar bara, hogen diwar-bouez mentadurioù a zo hag a van estren dezhañ. Morse ne vezont koazhet da ventadurioù un averlad ganti ment ur pezh-moneiz.

Taolomp evezh c'hoazh ouzh un arvez all d'ar gudeñn : lavarout e vez ur c'horf bennak en ul lec'h merket, zo lavarout e vez o kargañ lod pe lod eus al lec'h gant lod pe lod anezhañ evel korf. An tu-mañ gant an darn-mañ, un tu all gant un darn all. En ebeb, solwez kevan ur c'horf bennak zo dezhañ da lec'h, neket hepken ar c'horf en e bezh, hogen pep darn anezhañ ivez. Hag e seurt giz emañ kont gant korf kevradiel ar C'Hrist. Ken, pa vruzuner un averlad bennak, e lieskementer gouezvoud korf an Arloz diouzh niver ar bruzunennoù a reer.

Arabat krediñ evelkent e vefe anaezet korf ar C'Hrist gant seurt lieskementadur. Rak c'hoarvezout a ra gantañ evel gant an heol : n'eo ket peogwir e vez paket e sklerijenn gant bordilh hon melezoù dimp, amañ war an douar, m'en dije hennezh da c'houzañv diwar se.

Gwazh ne vez ket korf ar C'Hrist kennebeut eus an droug a c'hoarvez gwech an amzer gant un averlad bennak. Arabat lezel hon faltazi da gantren betek re. Ar pezh a c'hoarvez, e mad pe fall, gant un averlad, ne ra netra da gorf an Tiern. Ha seveniñ un disnevetad ouzh an averlad pe ar gwin kantouestlet ne dizh tamm ebet nag ar c'horf nag ar gwad santel, petra bennak ma vez dismegañset evelkent nouez dendouevel Jezuz-Krist, peogwir e klask neuze an

disnevetaer diskouez e gasoni en e geñver. Heñvel e vez an traoù ivez e degont ar pec'her a vez o vont da geduniñ e stad a bec'hed marvel.

*Erouez e vez ar C'hrist
e par ar Gevradiezh
keit ha ma vez ar spesoù
int o-unan o trebadout.*

Bez' e vez ar spesoù o trebadout keit ha ma chomont hep displeberañ, da lavarout eo, hep lizañ gant an amzer, pe c'hoazh hep teuziñ diwar euvridigezh pa geduner. E-giz-all e steuz kerkent pep gouezvoud santel, peogwir ne c'hall emro an Arloz mont nemet gant arvanoù ar bara hag ar gwin, danvezioù bet dibabet gantañ da sevel ar C'herrin. Keit ha ma ne c'hoarvez dazgwered kimiell ebet enta e chom bara ar bara ha gwin ar gwin. Hemañ eo ivez savlec'h Tomaz Akwino. Ha seurt dazgwered n'eus ket anezhañ evel dres e degont un averlad pe ur c'hopad gwin kantouestlet a vije bet saotret, lakaomp, ha deuet diwar se da vezañ amzere ouzh pep euvridigezh, rak e-keñver darnoderezh e chom an averlad bara ha gwin endalc'had ar c'hopad.

Pengennad

Lavaromp evit pengenniñ ne vo biken dirouestlet ganimp amañ war an douar kudenn ar Gouezvoud Kevradiel, petra bennak ma tleomp koulskoude lakaat hon reiz da labourat ma fell dimp hepkoriñ pep faltaziach o klask dizoleiñ pezh n'eus ket anezhañ. Rak ret eo soñjal ervat atav n'eo ket an tresolwezadur un tremen eus stad ur boud korfel da hini ur boud korfel all. Korf ar C'Hrist n'emañ ken bremañ e dalc'h ar bed ma vevomp ennañ. Eñ eo

kentañ maen **Ar Bed Nevez** a c'hortozomp. Seurt korf n'en deus mui netra da welout gant ar greudelezh evel ma vez Sant Paol o kelenn pa vez oc'h ober "**ur c'horf speredel**" anezhañ. Hag an drewerc'helezh am eus graet meneg anezhi e'm skrid diwezhañ eo domani ar seurt korf speredel. Setu neuze peadra da reiñ da gudenn an tresolwezadur ur ster hep e bar. Bennozh dezhañ e weler boudelezh krouet, boudelezh vresk ha blin ar bed kozh o tont da berzhiañ e gwerc'helezh ar bed nevez, sev en drewerc'helezh. Gant an tresolwezadur kevradiel eo Rouantelezh Doue en he beziadelezh fetis a vez o tedarzhañ war hon douar, eo an dazoned a vez o ragampoentañ an erouezvezh.



Kevradiezh ha Pec'hed

Ne vez dibenn ebet d'an dizoloadennoù pa vez kel eus devoudadoù ar c'hedunadur kevradiel. E korf ar pennadoù bet embannet endeo dindan an talbennoù "*Gant petra eo graet frouezh ar Gevradiezh*" hag "*An terkoniadoù ret evit keduniñ*" o deus gwelet al lennerion peseurt live a c'hall tizhout e par keduner pe geduner, hervez an terkoniadoù a vez degaset gant hemañ hag ar strivoù speredel a vez o kefleuniañ evit respont da wered ar c'herrin.

Marzhoù all avat a vez kinniget dimp d'estlammiñ outo, seul wech ma tostaomp hep pec'hed marvel emouez ouzh Taol an Tiern Jezuz.

Distruj ar pec'hed hewalc'h

Ur pec'hed skañv, barrek da vezañ gwalc'hed hep ma ve ranket mont dezhañ dre ret gant dizalc'hadenn an Azkeviunadur, setu petra eo ar pec'hed hewalc'h. Diwar vont e tlean resisaat ez eo "*hewalc'h*" ar ger dik, ha n'eo ket "*gwalc'hus*", rak diwar savboent Doue ez eo gwalc'hus pep pec'hed, zoken marvel. Ster "*hewalc'h*" zo "*aes da walc'hiñ*" ha hennezh eo ivez ster "*venialis*" e latin.

Dre ar pec'hed hewalc'h ne vez ket lazhet en hon askre buhez ar c'hras-yonaat a zo evidomp diazez hon emglev hag hon unvaniezh gant Doue. Tu zo da walc'hiñ seurt pec'hed e lies doare ar c'hedunadur zo unan anezho.

"*An dibistri ma vezomp gantañ dieubet diouzh hon gwalloù pemdeziek*," setu petra lavar Goursened Trenta diwar-benn devoudad ar c'hedunadur (Dalc'h 13). "*N'eus mar ebet*," eme, diouzh e du, **Katekiz** an hevelep

Goursened, "e vez ar c'hedunadur o tisteurel hag o tilemel en holl d'an holl ar pec'hedoù hewalc'h, pa ne vager nep gwrac'herezh gweredel ganto."

Distrujet e vez hon pec'hedoù hewalc'h enta gant ar c'hedunadur, seul wech ma vagomp, da vihanañ, damazrek empleg en o c'heñver. Rak fraezh e vez neuze n'emaomp ken bremañ o wrac'hañ ganto e gwered, pegement bennak, na petra ma chomomp troet atav d'henn ober e galloud, peogwir e vezont o tistreiñ warnomp da noazout ouzhimp ken alies ha bemdez, ha ni barrek adal antronoz veure da wrac'hañ ganto e gwered adarre... E seurt giz emañ hon sempladurezh amañ war an douar.

Hervez Sant Tomaz Akwino, emañ an hevelep distruj da vezañ lakaet war gont gouezvoud gwerc'hel Hon Salver diskennet ennomp dindan ar Spesoù Kantouestlet. Rak da betra e talve seurt gouezvoud e reiz? magadur, mar ne vije ket evit hon magañ ? Hervez ar pennvon feizoniel e vez ar c'herrin o tevoudañ pezh a vez oc'h aroueziañ. Dre m'emañ neuze oc'h aroueziañ ar magadur, e tle Kerrin an Aoter degas dimp nerzh nevez da stourm ouzh kement koll speredel a vez atav ken risklus-all evit hon silvidigezh. Hag ar pec'hedoù hewalc'h, bemdez arreet, zo evidomp kolloù speredel ha gloazioù na reont nemet noazout ouzh buhez ar rad en hon c'hreiz. Rak, petra bennak ma n'int ket evit he lazhañ, e tegasont war he hent ur bern skoilhoù a vez o herzel outi da greskiñ evel ma karje.

Da droc'hañ berr, dre maz eo Kerrin an Aoter ar magadur bet ensavet evit azverat, trezerc'hel, kenneziñ ha peurwellaat buhez ar c'hras diskennet ennomp evel ur c'hreunenn, deiz hon Badeziant, e klask, dezhañ da dizhout e bal, ober diouzh hon digoll eus an digresk deoliezh ha karitez emamp bemdez o reuziñ outañ. Ratreañ hevelep drouksaviad n'emañ ket evit ober, anez dezhañ skarzhañ an arbenn anezhañ, sev ar pec'hed hewalc'h arreet bemdez.

Pebezh gremm speredel a zle neuze un den evel Lech Walesa dispakañ, hag eñ o vont bemdez da geduniñ, dezhañ da virout en e greiz, bep beure, ul live-rad bepred hañval !

Un devoud *ex opere operato* (dre wered ar c'herrin) eo distruj ar pec'hed hewalc'h e-keñver trosez, dre ma vez ar C'hrist, dres a-walc'h, o tiskenn en hon c'hreiz. Evel ur c'heneil eo e fell da Jezuz bezañ neuze ganimp, arabat henn disoñjal, ha setu perak ez eo aes meizañ perak e vez o tiskareziñ dimp hon disfeleunderioù bihan, dres e-giz ma ra ur c'heneil d'e geneil.

Mar respontomp avat evel maz eo dleet da gouvranteriezh hon c'heneil, e tiskouezomp neuze, d'an nebeutañ, un tamm azrek, un damazrek empleg, amplegad bastus evit ma ve distrujet pep tommerezh gweredel ouzh hon gwalloù hewalc'h pe emouez pe ziemouez e vent dimp, evit ma vemp ivez diwalletoc'h outo ha gwarezet ouzh pep klouarded, frouezh hon gwrac'herezh ganto... Hag an doare gwellañ da ziskouez hevelep kouvranteriezh eo bezañ emdreantek, rak neuze e vez anat warnomp e klaskomp bezañ disammet diouzh pep disfeleunder bihan ha pep pec'hed hewalc'h, ouzhpenn ma tarbar pep kedunadenn graet hep pec'hed marvel da ziorren ennomp ar c'hras-yonaat hag ar garitez, evel ma oar pep hini. Padal ne vez c'hoazh ar garitez o kreskiñ neuze en hon c'hreiz nemet evel un derkoniad piaouedel e galloud, pa ne c'hall ket bezañ kenilet na lakaet da dalvezout e gwered, dre ma chom hon c'halon ganimp bepred re domm ouzh hevelep dispresourderioù.

Distruj kement pec'hed marvel diemouez dimp

Devoudad kantreol ar c'hedunadur n'eo ket evel ma oar pep hini, distrujañ ar pec'hed marvel, peogwir e tleer bezañ

e stad a c'hras evit tostaat ouzh an Daol Santel. Ha didalvoud e vefe, gouez da Sant Tomaz Akwino (1), kinnig d'ur c'helan boued ha died na vije ket evit ober e vad anezho. Evel ma lavar dimp Sant Paol e tle an den neuze emarsellout kent mont da geduniñ, dezhañ da vezañ da vihanañ kendrec'honiet n'eus gantañ pec'hed marvel ebet war e gaoued.

Nemet e c'hall c'hoarvezout e kredje d'unan bennak bezañ bepred e stad a c'hras ; goude dezhañ emarsellout ervat, hag eñ dalc'het koulskoude gant ur pec'hed marvel chomet kuzhet e strad e greizon, dre maz eo tremenet hep gouzout dezhañ gant keuzidigezh divastus en e geñver da vare an dizalc'hadenn ziwezhañ. Diemouez dezhañ seurt gwall enta, hag eñ rikdezevet evelato, setu ma tosta ouzh an Daol Santel, gantañ keuzidigezh dre vras d'e holl bec'hedoù. Petra a c'hoarvez neuze ? Ac'hanta, distrujet e vez raktal dre berzh ar gedunadenn hec'h-unan ar pec'hed marvel manet e seurt giz diemouez dezhañ. Difennet eo seurt kelennadur gant Sant Tomaz Akwino pa lavar : *"Mar degouezh d'unan bennak mont da geduniñ, hag eñ saotret hep gouzout dezhañ gant ur pec'hed marvel, e vo dikarezet dezhañ. Pa vo chomet hep kaout keuzidigezh vastus da vare an dizalc'hadenn, e teuy dezhañ, dre ar Gevradiezh, en ur dostaat ouzh an Daol Santel, gras ar garitez ma vo ganti kefleuniet e geuzidigezh ha dilamet dezhañ e bec'hed."*

Ar pare da c'hloazioù ar pec'hed hag un nerzh nevez da stourm ouzh pep angerzh

Uheloc'h em eus meneget ar c'holloù speredel hag ar gloazioù a rankomp reuziñ outo dre berzh pep pec'hed, pegen dister bennak e ve hemañ. Hag aes eo meizañ e vez kalz brasoc'h ar reuz war-lerc'h ur vuhezad pec'hedoù

marvel, da skouer. Hervez kelennadurezh an Iliz enta, emañ e galloud ar c'hedunadur menec'h pareañ kement gloaz graet ouzh hon ene gant ar pec'hed grevus hag e wareziñ ouzh argad an droukhoaladurioù hag an angerzhioù a vez o kas d'ar pec'hed marvel.

Netra, hervez ar feizoniour **Suarez**, ne vir ouzhimp da grediñ ez eus gant Kerrin an Aoter ur gwerc'h kentizhel o tennañ da c'hlanan hon sennoeroù hag hon c'hoantegezhioù. **Mard** eo bet staget gant Doue ouzh Kerrin an Aoter gwerc'h ar pare korfel, diouzh ma kav dezhañ e vefe mat evit hon silvidigezh, ez eus da grediñ ivez e vez gant Kerrin an Aoter gwerc'h ar pare speredel, diouzh ma plij da Zoue.

"Adal ma vez ar C'hrist enomp," eme Sant Kuril Aleksandria, Tad an Iliz, *"e vez o tistanañ da savelemm ar c'hreud en hon izili, o reizhañ hon c'hoantegezhioù diroll, o vividikaat hon c'harantez evit Doue, hag o pareañ kement droug a zo enomp."*

Hag adarre Katekiz Goursened Trenta : *"Emañ ar Gevradiezh,"* emezañ, *"o reizhañ hag o tistanañ fo an angerzhioù. Dre ma vez o leskiñ ar galon gant tan ar garitez, e vez dav dezhi lazhañ war un dro tan an drouk'hoantegezhioù."*

Kedunadur ha Purdan

Kaer e vez d'an unan bezañ bet diskarezet e bec'hedoù dezhañ, e-keñver trosez, e van koulskoude war-lerc'h pep gwall ar boan amzeriat a rankomp dougen evit bezañ peure'hlan dirak Doue ha dont da vezañ, diwar se, peurunanet gantañ. Mar ne vez ket distrujet seurt poan war-bouez gouzañv diwarni adalek hon hoali war an douar, e ranko bezañ gant ar purdan war-lerc'h hon marv. N'eo ket

an araeziou a ra diouer d'ar C'hristen avat evit distrujañ hevelep poan hep kaout da c'houzañv diwarni adalek ar vuhez-mañ ; hag unan eus ar re werc'hekañ eo, hep mar, ar c'hedunadur kevradiel.

Pal hennadel ar c'hedunadur, evel ma vez ar ger o verkañ, zo unaniñ an donañ gwellañ an den gant Doue. Petra dezren neuze diwar se mar n'eo ket e tle ar c'hedunadur, dre gefridi, kaout pep galloud da bellaat diouzh an ene kristen kement skoilh a vez gouest da herzel ouzh e beurunvaniezh gant Doue ? Moarvat e vezomp unanet gantañ adalek ma vez diskarezet dimp, e stumm pe stumm, kement pec'hed grevus hon disranne dioutañ. Ne vo tizhet nep unanadur peurvut gantañ koulskoude anez pellaat ar skoilh enstag ouzh dle ar boan amzeriat a chom ganimp c'hoazh da zougen, petra bennak ma n'eus ken trosez ebet. Moliac'h ar c'hedunadur eo dres tennañ hevelep skoilh, naren dre wered ar c'herrin, hogen dre wered ar gwereder.

Hag e gwir, hervez Sant Tomaz Akwino, e vez ar c'hedunadur o tistrujañ evit lod pe bezh ar boan stag ouzh ar pec'hed, peogwir e ra dimp karout hon diwaskoù e dave da reoù ar C'hrist, ha peogwir e laka ivez da darzhañ ennomp luskadoù karitez ha kefleunazrek.

**An araeziou diouzh an diboaniadur purdanel :
Karantez an diwaskoù e dave da reoù ar C'hrist,
kefleunazrek**

N'eo ket an diwaskoù kreudel na dezevel a ve gouest en o c'hrai d'ober dimp bezañ peurunvanet gant Doue : bez' e vez an daonidi ouzh o gouzañv ivez ha padal n'int ket evit boztalañ un disterañ tamm da varnerezh Doue. An diwask n'eus gantañ en e grai tamm rinwerc'h dasprenus ebet. Kaer

en devo neuze un den gouzañv diwask, mar n' emañ ket e stad a c'hras pe mard emañ, hag eñ neoazh dispac'het ouzh an diwask, ne vo ket evit digoll e bec' hed. Pezh a ro d'an diwask e nerzh-boztalañ eo war un dro ar stad a c'hras, an emblegoni d'uvelaat dirazañ ha peurgetket ar garantez a lakaomp da badout gantañ, goubet ma vezomp neuze d'unaniñ hon emaberzh gant emaberzh ar C'hrist.

Ha penaos e kavomp dres an nerzh leun hag ar goubadur d'emaberzhiñ gant ar Salver Jezuz, mar n'eo ket bennozhañ d'ar c'hedunadur kevradiel an hini eo ? Eno e kejomp e gwirionez gant Emaberzhad ar Gevradiezh en e grai. Rak, gant e gorf, diouzh un tu, dindan spes ar bara, ha gant E wad, diouzh an tu all, dindan spes ar gwin, e vez an Arloz o tegemenn dimp ez eo bet marvet evidomp war ar groaz (I Kor, 2, 26), ez eo bet emaberzhet. Seul vroudetoc'h e vezomp enta da gemer skouer diwar Hon Salver ha d'unaniñ hon diwaskoù gant e re, ma vez kement kedunadenn a reomp o tegounañ dimp e C'houzañv, e C'hloaziou hag e varv. Rak dre ret e vez pep kedunadenn o kevren ouzh an oferenn evel aberzh disgwadek Jezuz bemdez en hon touez.

An diwask hag ar marv, sed enta an hent en deus dibabet hevelep Salver da dizhout an unvaniezh ganimp. Ha ni, daoust ha divorc'hed a-walc'h e vefemp da gemer un hent disheñvel ? Daoust hag-eñ n'eo ket klask bezañ heñvel an eil ouzh egile a reer pa striver da vezañ unanet kenetrezor ? Dav dimp enta gouzañv evit Hon Salver evel m'en deus-Eñ gouzañvet evidomp, pa n'emañ ket *an diskibl dreist d'ar Mestr* gouez da Jezuz e-unan. Ha n'eus mar ebet, goude pep kedunadenn virvidik e vezer terkoniet ha douget da vat da c'houzañv pep diwask gant gwir garantez evit Hon Salver. Seul vrasoc'h avat e vez seurt karantez, ha seul vrasoc'h e vez ivez nerzh dasprenus hon diwaskoù, dimp da voztalañ, adalek bremañ, hon poanioù purdanel.

E vefe ar garantez virvidik hag ar c'hefleunazrek kouvran un araez galloudus evit un diboaniadur purdanel pouezus ha gouest da vezañ kefleun ivez zo ur c'helennadur bet difennet gant Sant Tomaz Akwino (3). Hogen aes eo meizañ ez eo liammet seurt mennozh ouzh an hini kent, rak karout hon diwaskoù e dave da reoù ar C'hrist, zo klask karout Doue e gwirionez evel m'omp bet karet gantañ e par Jezuz ar Mab Dendouevel, bet o c'houzañv hag o vervel evit hon Silvidigezh. Ha pa vez un ene bennak o vagañ hevelep karantez e vez gantañ ivez, dre ret, kefleunazrek. Ober diouzh kenilañ seurt azrek kouvran peurglok en hon c'halon da genver pep kedunadenn, zo neuze an doare gwellañ evidomp da voenat *Hez Peurglok Hon Salver*; da lavarout eo, da dizhout un diskarez barrek da vont betek an diboaniadur purdanel kefleun.

Un devoudad diwar wered ar gwereder, evel rakveneget, eo seurt diboaniadur purdanel. Hogen anat eo e vez skoazellet marzhus pep keduner en e strivoù speredel gant an erouezded a vez en e greiz, gouezvoud solwezel ar C'hrist, ar Salver ar Garantez Didermen.

Na pa ve neuze devoudadoù ar c'hedunadur kevradiel koulz diwar wered ar C'herrin (*ex opere operato*) evel gant distruj lod pec'hedoù, koulz diwar wered ar gwereder (*ex opere operantis*) evel gant an diboaniadur purdanel, - pe lodel e ve hemañ pe gevan, - e weler pebezh moliac'hoù zo stag outo ha pebezh madelezhioù a vez an Arloz o profañ dimp war un dro gant e vrasañ kerrin.

Notennoù

"Katekiz" : dastumad kelennadurezh ar Goursened.

"Purdan" oa moarvat ar ger a veze arveret gant hon c'hendadoù evit lavarout "Purgator". Perak tremen hep ober gant un anvad ken brav ?

(1) & (2). - 3a pars q ; 79, a, s. (3) 3a pars q 66, a ad I.

Kevradiezh ha Dasorc'h

Kent disoc'hañ gant studi ar Gevradiezh evel kerrin, e fell din prederiañ war al liamm a gaver, o lenn an Aviel, etre euvidigezh korf hegaristiel ar C'hrist hag an dasorc'h kreudel-speredel a c'hoarvezo gant hon boud kevan da geñver ar Gouezwel. Rak sed a zo degemennet dimp dre Yann (6,54), pa lavar : "*Neb a vez o tebriñ Kreud Mab an Den.. me hen dasorc'ho d'an deiz diwezhañ.*"

Ret eo dimp avat arsellout seurt komzoù e stern o c'henarroud klok evit gwelout hag-eñ ez eus ul liamm hennadel etre keduniñ ha dasorc'hiñ d'an deiz diwezhañ.

"*Anez deoc'h debriñ kreud Mab an Den hag evañ e wad, n'ho pezo ket ar vuhez ennoc'h,*" eme Jezuz. "*Neb a vez o tebriñ va c'hreud hag oc'h evañ va gwad en devez buhez peurbadel, ha me hen dasorc'ho d'an deiz diwezhañ...*" (Yann, 6,53-54)

Daoust hag andiouerus e ve neuze keduniñ evit bezañ salvet ? Rak, dasorc'hañ d'ar vuhez peurbadelel zo, na petra, bezañ salvet.

Moarvat ned eo ket andiouerus, dre retvez-araez degemer an hegaristiezh evit bezañ salvet. A feiz eo seurt honnadenn dre ma lavar Goursened Trenta, n'eo ket ret, da skouer, reiñ da geduniñ d'ar vugale dindan o oad-skiant. Hogen bez' e kaver ivez kalz arroudoù nevezkevamoudel o tiogelaat n'eo ket andiouerus Kerrin an Aoter dre retvez-araez evit ar yonidigezh. Sed amañ da heul un alberz anezho :

Tit. 3,5 "*Salvet omp bet dre walc'hadem an adc'hanedigezh.*" (eleze ar Vadeziant) ;

Rom. 8,1 "*N'eus droukvarnedigezh ebet evit ar re a zo er C'hrist.*"

I Per. 3,21 "An dour-se - dour al Liñvadeg - zo skeudenn ar vadeziant maz oc'h salvet ganti."

Gant se, mar bije ret ar Gevradiezh d'ar gristenion, en tu-hont d'o badeziant, evit bezañ salvet, e vije diwir lavarout e teu dezho yonidiezh dre walc'hadenn an adc'hanedigezh.

Atodomp c'hoazh gant Yann (20,23) : "Piv bennak e vo distaolet dezhañ e bec'hedoù ganeoc'h - Ebestel ha beleion - e vint distaolet dezhañ, ha piv bennak e vint dalc'het dezhañ ganeoc'h, e vint dalc'het dezhañ."

A-walc'h eo neuze distaol ar pec'hedoù dre c'houniñverezh ar beleg evit bezañ salvet, hep ma ve dav degemer ar Gevradiezh.

Diwar boell feizoniel e c'heller ivez diogelaat n'eo ket ret ar Gevradiezh evit ar yonidigezh, dre retvez-araez ac'hoel, ha sed amañ perak :

Kaout ar c'hras reizhidigezhuz zo trawalc'h, hogen andiouerus dalc'hmat evit bezañ salvet, ha bez' e ranker bezañ e stad a c'hras evit tostaat ouzh an Daol Santel. N'eo ket gant Kerrin an Aoter neuze an hini eo e vez roet ar yonidigezh.

Ouzhpenn ma ne vez ket andiouerus ar c'hedunadur kennebeut evit mirout ar stad a c'hras, peogwir e vez barrek an oadourion d'he gwareziñ dre araeziou all war-bouez, lakaomp, embreger feiz, goanag ha karitez, pegen diaes bennak e ve, gwir eo.

Mar n'eo ket andiouerus enta, dre retvez-araez, degemer Kerrin an Aoter evit bezañ salvet, ez eo un dlead koulskoude henn ober dre retvez-arc'heb. Hag a feiz eo e vez endalc'het pep katolig da gantvout lavar Hon Salver evel un arc'heb pa vez o resisaat. "Anez deoc'h debriñ kreud Mab an Den hag evañ e wad, n'ho pezo ket ar vuhez ennoc'h. Neb a vez o tebriñ va c'hreud hag oc'h evañ va gwad en devez buhez peurbadel ha m'en dasorc'ho d'an

deiz diwezhañ..." Ac'hano e teu ivez gourc'hemenn an Iliz da geduniñ ur wech ar bloaz d'an nebeutañ, dindan boan a bec'hed marvel. Rak ur marv eo, e diarsell Jezuz, chom hep morse degemer e Gorf Kerrinel.

Diwar boell feizoniel koulz ha diwar hennad ar Gevradiezh hec'h-unan, e tinod ken fraezh all d'hon spered retvez-arc'heb, sev dlead ar c'hedunadur kerrinel evit pep katolig. Rak, mar bez un dlead evitañ, war an dachenn zanvezel, - ouzhpenn ma vez ur retvez-araez amañ ivez, - magañ e gorf gant boued ha died danvezel, ez eo un dlead evitañ kenkoulz all kemer ar magadur speredel e vez Doue o kinnig dezhañ gant Kerrin an Aoter. Panevese ne vije tu ebet dezhañ da virout na buhez korfel na buhez eginbeurbadel. Hag evel ma n'eus gant an den amañ war an douar gwir ebet da lezel buhez e gorf da steuziañ, n'eus gant ar Gatoliked gwir ebet kennebeut da lakaat o buhez eginbeurbadel en argoll, war-bouez tremen hep keduniñ.

Adal ma vez ganimp gouestoni enta da geduniñ, pezh nad eo ket dres degont ar vugaligoù, an diskianted pe glañvourion liesdoare, koulz hag adal ma vezomp, evel katoliked, e stad da veizañ petra eo degemer korf Jezuz en e graided naren evel un argel hepken, pezh nad eo ket c'hoazh, siwazh, degont kalz Kristenion Adaozat, e teu emichañs ar c'hedunadur kevradial da vezañ un ober penndalc'hel hag andiouerus en hon buhez. Ha diwar-henn e vezomp gwelloc'h ivez gourc'hemenn groñs Hon Salver pa lavar : "Anez deoc'h debriñ kreud Mab an Den... n'ho pezo ket ar vuhez ennoc'h... ar vuhez peurbadel..." eleze buhez an **drewerc'helezh** bet meneget dre va skridoù kent, diazezet war dasorc'h ar C'hrist evel patrom hon dasorc'h-ni "d'an deiz diwezhañ".

Gwelomp neuze penaos eo bet deveizet hevelep lavar gant kristenion an Iliz Kentidik.

Gant e Lizher da Filipiz 3,20-21, emañ Sant Paol o skrivañ : "Ni avat emañ hon c'heoded dimp barzh an neñvoù, hag ac'hano e c'hortozomp evel Salver an Tiern Jezuz-Krist, eñ hag a dregemmo dimp hon c'horf reuzendik evit e stummañ diouzh e gorf kiodus-eñ."

Kendalc'homp bremañ gant Tadoù ar remziadoù war-lerc'h : "War-bouez degemer ar Gevradiezh," eme dimp Sant Irenaios Lugdunon, "e paouez hon c'horfoù da vezañ lizadur da viken, ganto goanag an dasorc'h evit ar beurbadelezh." (2).

Ha gant an daou Sant Kuril, hini Aleksandria hag hini Jeruzalem, e klevomp heñvel son :

"Dre m'emañ ar C'hrist ennomp gant e greud, e tasorc'himp," a lavar dimp Sant Kuril Aleksandria. "Ne c'hall ket ar vuhez," emezañ, "tremen hep bividikaat ar re maz eo bet o tegas had an divarvusted en o c'hreiz". Ha hervez Sant Kuril all, hini Jeruzalem, e vez korf kevradiel Jezuz-Krist o tougen gantañ evit hon c'horf egin an dasorc'h. Setu perak e ran-me ivez gant "eginbeurbadel" e brezhoneg.

Diwar boell feizoniel e c'hallomp c'hoazh dont d'an hevelep dezreadurioù o tiazezañ hon preder war hennad ar c'herrin, finvez ar Gevradiezh ha dereadelezh an dasorc'h dedalvezet da gorfoù bet santelaet gant ar c'herrin.

Hennad ar C'herrin

Da heul Tadoù an iliz e kaver lies feizoniour o tifenn e vez Kerrin an Aoter o kaout gwerc'h kentizhel war gorf ar c'heduner. Ha sed amañ perak:

Gant ar c'hedunadur e teu Jezuz-Krist betek ennomp en e graided. Ma teheul ac'hano un unvaniezh kevrinel strizh hag un asez nesaelezh etre hon c'horf ha korf dasorc'h het an

Arloz, evel pa ne rafent nemet ur c'horf hepken. Hemañ eo an abeg perak e vez Hon Salver o kantvout hon c'horf evel e gorf dezhañ. E gemer a ra dindan e warez hag akediñ outañ en un doare dibar evit, adal e dreuz war an douar-mañ, e hevelebekaet bep un nebeud ouzh e gorf klodus-eñ diwar-bouez brasoc'h santelezh atav, da c'hortoz disoc'hañ da vat gant ar c'hlodekadur anezhañ "d'an deiz diwezhañ" war dreuzoù ar bed "trewerc'hel" da zont.

Ya, war-bouez dezhañ bezañ glanaet hag kantouestlet, e vo bividikaet hon c'horf gant an Arloz er beurbadelezh. Rak fellout a ra dezhañ bezañ egin an divarvusted a vez o hadañ ennomp da geñver hon c'hedunadennoù, dimp, dre berzh hevelep pennvon buhezel, da c'hallout "dasorc'hiñ d'an deiz diwezhañ" ha dont da gaout ivez, par d'e hini, hon c'horf speredel-ni.

Finvez ar Gevradiezh

N'eo ket evit silvidigezh hon ene nemetken ez eo bet sevenet hon daspren gant Jezuz war e groaz, hogen evit hini hon c'horf ivez, da lavarout eo, evit gwenvedikadur hon boud en e bezh. Ha peogwir ez eo finvez Kerrin an Aoter dedalvezout dimp dellidoù an Daspren, ez eo reizh moarvat en dije hon c'horf e lod anezho ivez. E giz all e chomfe troc'het hon boud, evit un hanter, diouzh dianlenadoù un daspren bet kefleuniet gant Doue, kaerañ pezh a zo, dre hantererezh korf **Un Den Gwirion**, hini Jezuz an Nazaredad.

Dereadelezh an Dasorc'h dedalvezet
da gorfoù bet santelaet
gant ar c'hedunadur kerrinel

Evel maz eo chomet korf ar Werc'hez Vari hep lizañ goude he marv, dre m'he doa douget Mab Doue, en hevelep giz, ha pep kenfeur en he reizh, ne c'hall ket korf ar C'hristen keduner menel da viken etre skilfoù an ankoù. Hervez pep dereadelezh e tle neuze dasorc'hiñ. Rak, evel ma voe gwechall euvridigezh ar frouezh berzet arbenn hon marv douarel, e tle hiziv euvridigezh frouezh ar vuhez eleze korf hag ene Jezuz-Krist bezañ arbenn hon buhez neñvel. Ya, ret eo. Ha pa vezan o keduniñ, e c'hallan neuze soñjal start ha gant ar brasañ goanag e komzoù Job : "*Me oar ez eo bev va Dasprener*". Ya, bev Hennezh, ar Salver nemetañ, diskennet bremañ e'm c'hreiz dindan ar Spesoù Kerrinel, bev **An Arloz** a c'hallin gwelout en diwezh gant va daoulagad, evit bevañ en e ser, dasorc'het gantañ da viken, e dibenn an amzer.



Aberzh an Oferenn

Klask a rin amañ teurel un tamm sklerijenn war an arvez diwezhañ o tennañ da Gerrin an Aoter chomet betek-henn hep bezañ gwelet ganimp : an Oferenn.

Mervel gantañ Aberzh ar C'hrist hag Aberzh ar Gristenion

Mervel evel ma weler eo ar ger a zo tarzhet raktal e'm spered pa 'm eus kroget gant ar skrid-mañ. Ha sed a ro tu dimp raktal ivez da brederiañ war ster gwirion an oferenn ha da welout war betra e tleomp lakaat ar pouez paz eomp da lidañ Kerrin an Aoter : marv Jezuz hag hon marv dimp en e ser evit bevañ ha bezañ klodekaet gantañ e diwezh an amzerioù, evel ma lavar Sant Paol en e *Lizher d'ar Romaned* (VI,8 ; VII,17).

A-raok diskouez avat penaos ez eo an oferenn un aberzh, diwar-bouez marv Jezuz hag hon marv dimp, e tleomp krediñ emichañs ez eus bet un abeg evit Hon Salver da gefleuniañ seurt aberzh hag ez eus c'hoazh unan evidomp d'ober eveltañ. Abeg ebet koulskoude ne gaver anez krediñ en deus talvezet marv Jezuz d'adskoulmañ an emglev etre Doue hag an den, war-bouez distrujañ pec'hed **Ar Bed Kozh** ha dasprenañ an denelezh, dezhi da vezañ salvet ha da gaout perzh e buhez peurbadel **Ar Bed Nevez**.

Hep ober hanez ar geennadurezh o tennañ d'an oferenn, desellet dindan arvez ar marv hag an daspren, e tleer neoazh klask gouzout ha meizet eo bet seurt lid atav evel un aberzh. Betek an trizekvet kantved, ret henn anzav,

ne vo ket strivet nemeur d'endonañ ar gudenn. Ha setu ma teu Sant Tomaz Akwino war wel evit diskouez ez eo an oferenn un aberzh gwirion dre ma vez, dre hec'h arlidoù, oc'h aderouesaat ar Gouzañv hag o kevastenn ouzh mibion an dud frouezh ar poanioù bet diwasket gant Hon Salver war e groaz. Hemañ eo ar c'helennadur a vo darbennet ha plaenaet da c'houde gant Goursened Trenta enep d'an Disivouderion. Hogen an hevelep kentel eo a gaver ivez gant Sant Paol, bet ar skrivagner kristen o reiñ dimp an destenn gentañ diwar-benn ar c'hraf, pezh na veze ket gwelet gwell splann betek-henn, dre ma veze troet fall ar gresianeg.

"Seul wech," eme an Abostol, "*ma tebrit ar bara-mañ ha maz evit ar c'haliriad, e vez aderouesaat ganeoc'h marv an Arloz betek ma tevio...*" (I KOR 23-26). Gant ar ger "aderouesaat" eo e ranker treiñ '*kataggélete*' ha n'eo ket gant 'degemenn' hepken '*kata-*' o talvoud dres a-walc'h da verkañ emeur o seveniñ, o tevoudelaat hag oc'h erouesaat evit ar wech kentañ, - pe, evel amañ, evit an nouspetvet gwech, - pezh emeur o tegemenn.

Fraezh an traoù neuze : gant Gouzañv, gloazioù ha marv Jezuz eo bet kaset da benn aberzh kefleun hon Daspren hag hon Silvidigezh peurbadel. Hogen, pa vez hiziv ar beleg o lidañ an oferenn gant ar bara ha kaliriad ar gwin, e vez oc'h aderouesaat **Marv**, da lavarout eo, **Aberzh** ar C'hrist.

Ur gwir aberzh eo enta Kerrin an Aoter, dre ma vez, neket oc'h adskeudenniñ hepken, hogen oc'h aderouesaat en devoud dindan arouezioù merzhidik, evito da vezañ disgwadek, an aberzh bet kefleuniet gant an Arloz war e groaz. Rak, zoken pa ra Jezuz gant ar ger '*eñvor*', e talv da livañ an aderouesadur.

Gant petra avat eo graet an aberzh ?

Aberzh-anrezhadur

Tro a gavan gant ar studienn-mañ da resisaat un nebeut gerioù brezhonek, reoù gozh evel reoù nevez, hag int hollandiouerus dimp da blaenaat ervat ar gelennadurezh. Taolomp evezh da gentañ ouzh an diforc'h a zo d'ober etre aberzhañ hag anrezhañ.

Ar ger '*anrezh*' (kv. kbg '*anrhaith*' ; '*victima*' e latineg) a verko hiviziken ganin pezh a vez distrujet da geñver lid an aberzh. Endhu e vo lakaet anat an diforc'h etre, diouzh an tu, '*abertzhañ*', sev : seveniñ arlid arbennik an aberzh anvet profadur pe, zoken, seveniñ holl arlidoù an aberzh ha, diouzh an tu all, anrezhañ, sev : seveniñ an arlid a vez o tegas marv pe, neuze, distruj ar profad aberzhel. E seurt giz e chomo ledanoc'h e brezhoneg arnevez, evel e pep yezh diorreet, ster ar ger '*abertzhañ*' ; ouzhpenn ma vo tu da grouiñ deveradoù evel '*anrezhadur*' pe c'hoazh, '*emanrezhañ*', h.a.

Arverañ gerioù ken disheñvel hag '*abertz*', '*anrezhadur*' pe reoù all n'eo ket reñverek pa vo ranket komz diwar-benn elfennoù hennadel an aberzh, graet maz eo hemañ, n'eo ket gant ur profadur hepken, hogen gant an anrezhadur ivez.

Evit lod koulskoude ned eo an oferenn nemet un aberzh-anrezhadur o c'hoarvezout koulz eus distruj ar bara hag ar gwin (**Suarez**), koulz eus distruj ar C'hrist en e voud kerrinel dre berzh esteuzidigezh ar spesoù santel da geñver ar c'hedunadur (**Bellarmin**), koulz c'hoazh eus stuz- emesteuziñ ha neuzelezh varvel ar C'hrist dindan ar spesoù kerrinel (**De Lugo**).

An tamall d'ober da seurt mennozioù eo e vefe an oferenn da vezañ sellet evel un aberzh nevez, diforc'h en e von diouzh hini ar Groaz, pezh a vefe direizh.

Evit hepkoriñ seurt diaester o deus klasket lod all diskouez n'eo ket dav mont, pa vez kel eus an oferenn, da gerc'hat anrezhadur dirvoudel, eleze gwerc'hel e par an ergorelezh hag an ober glennel, petra bennak ma chom seurt anrezhadur unan gwirvoudel bepred ; eleze, unan gwerc'hel e par trehontelezh ha 'trewerc'helezh'. Rak, zoken "azezet en tu dehoù d'E Dad" e vir bepred ar Mab Dasorc'het e stad anrezhel. Gant gerioù all, seurt aberzh n'eus anezhañ, hervezo, nemet profadur korf ar C'hrist en e stad anrezhel e par E drehontelezh rakveneget. Ouzhpenn maz eo bastus, war o meno ivez, rannañ evel ma reer, kantouestladenn ar bara diouzh hini ar gwin, evit ma vefe krieriet arvez an oferenn evel anrezhadur, rak gant seurt rannadur eo e vez merket ervat marv Jezuz.

Gwelloc'h eo moarvat seurt damkanad peogwir e klask ober diouzh ma ne vefe ket disheñvel an oferenn en he fezh diouzh aberzh ar C'halvar, nemet e tenn evelkent da freuzañ keal an anrezhadur oberiat evit mirout hepken hini ar profadur.

Gant un trede damkanad e klasker displegañ e vez komzoù ar gantouestlidigezh, war-bouez erouesaat korf ar C'hrist dindan spesoù ar bara, hag e wad dindan spesoù ar gwin, o tegas an disrann marvel en ur c'heñver bennak, hep ma vefe aze neoazh nep anrezhadur gwerc'hel.

Mar bije gouest avat komzoù ar gantouestlidigezh da rannañ endhu korf ar C'hrist diouzh e wad en dije ranket neuze Jezuz mervel, n'eo ket war ar groaz, hogen en neizheur endeo, da geñver ar C'hoanlid, peogwir ne oa ket c'hoazh divarvel d'ar mare-se ! N' o deus enta komzoù ar gantouestlidigezh gwerc'h ebet war voud naturel ar C'hrist. Ne weredont nemet war ar bara hag ar gwin, rak int, hag hepken, eo a vez kemmet. E doare ma tarz, koulz lavaret, gouezvoud an Arloz da heul nann-boud ar spesoù degaset gant komzoù pep kantouestlidenn lerc'hiadek. Hogen ur

gouezvoud solwezel, eleze kerrinel, ha dre se disheñvel e saviad diouzh an hini neñvel, eo gouezvoud ar C'hrist dindan ar spesoù kantouestlet. Diwar-henn e rankomp anzav e vez korf ar C'hrist, da geñver an oferenn, o tougen gwir disrann kerrinel diouzh e wad, pezh a vez oc'h aroueziañ e varv evel aberzh war venez Kalvar, lec'h ma voe neuze dirvoudel an disrann marvel.

Ur gwir aberzh oc'h aderouesaat bemdez hini ar groaz eo c'hoazh an oferenn evit un abeg all : war venez Kalvar e oa gant ar C'hrist kedyoul fraezh da c'houzañv, da skuilh e wad ha da vervel. Seurt kedyoul eo e tleomp ober dave dezhi, mar fell dimp kavout he c'hevatal kerrinel e par an oferenn. Rak da geñver ar Goan Santel, da skouer, e weler Jezuz ivez o tiskouez anat ha splann an hevelep kedyoul war-bouez kantouestlañ ar bara en e gorf 'a zo', gouez dezhañ, 'roet evidoc'h' (Luk 26,28), hag ar gwin en e wad 'a vo,' gouez dezhañ, 'skuilhet evit engroez an dud, e daspren d'o fec'hedou' (Mazh 26, 28). Sed a oa endeo seveniñ, - dres evel da geñver an oferennou hiziv an deiz pe, mar karer, en un doare kerrinel hepken, - pezh a oa da vezañ kefleuniet antronoz, en un doare dirvoudel, war venez Kalvar. Hag Eñ barrek, mar en dije karet, da dec'hel diouzh an ankoù, setu ma weler Jezuz ouzh taol gant e geneiled, o rannañ e gorf ent kerrinel diouzh e wad war-bouez div gantouestladenn diforc'h, hini ar bara da gentañ, hini ar gwin da c'houde, evit lakaat war wel ervat e gedyoul da vervel war ar groaz.

Diouzh un tu all, e ser lavarout d'e geneiled ha war o lerc'h, d'ar veleion : 'Grit se en eñvor ac'hanon', e roe galloud dezho da venegiñ en E anv hag en E dudenn an hevelep kedyoul atav da skuilh e wad evit silvidigezh an denion, da geñver pep oferenn, eleze da geñver pep aberzh kerrinel oc'h aderouesaat hini ar Goanveur koulz ha hini ar Golgota.

An oferenn n'eus ket anezhi enta ur profadur hep muiken. Un anrezhadur eo ivez, aderouesadur aberzh kefleun ar C'halvar, sevenet gant Jezuz dre hanterezh ar beleg pa vez hemañ eveltañ gwechall er **Sal-Uhel** o kemmañ ar bara e korf e Vestr hag ar gwin en e wad.

Hogen perak seurt heñvelidigezh ha darempred etre aberzh ar groaz hag an oferenn ? Evit m'he dije an denezeh perzh leun e seurt aberzh, dezhi da gutuilh diwarnañ kement frouezh a fell d'an Arloz delodañ da bep dasprenad. Un diskenn madoù speredel puilh war ar bed eo neuze pep oferenn. Hevelep diskenn douevel avat e tle ar Glenn dasprenet respont dezhañ gant un askenn profoù denel dre hanterezh ar gristenion vadezet : beleion ha feizidi. Hag arabat krediñ e c'hallfe hon askenn dimp, amañ war an douar, kaout un diazez disheñvel diouzh hini an diskenn douevel. Ne vez ket an diskibl dreist e vestr. Evel aberzh ar groaz evit ar Penn maz eo ar C'hrist, e tle an oferenn hiziv an deiz intrañ buhez pemdeziek an Izili all, sev ar feizidi vadezet maz omp. Rak, dres a-walc'h, dre berzh louc'hanvegad o badeziant ha hini klokoc'h o c'houzoumen o deus ar gwir hag an dlead da berzhiañ e lid ar profadur hag an anrezhadur, hep ma c'hallfed dezren diwar-henn e vefe disheñvel aberzh ar gristenion diouzh hini o Mestr. Nann, rak n'eus nemet un aberzh hepken, hini Jezuz-Krist bet 'kefleuniet ur wech evit mat', eme dimp Sant Paol (HEB, 10,14). Hogen dre berzh e garantez evidomp e vezomp, pep hini ac'hanomp, evel 'un anrezh vev, santel, hetus da Zoue...' (Rom, 12,1).

Pa vez ur C'hristen enta o vuhezañ an oferenn, war-bouez darbenn ha profañ kement loes pe ziwask en devez da c'houzañv, - en ur ger, war-bouez emaberzhañ evel e Yor ha Salver, e vez moarvat o seveniñ al lavar deuet dimp digant Sant Paol ha bet arnodet gantañ. *'Pezh emañ kroaz*

ar C'hrist o tioueriñ a gefleunian gant poanioù va c'hreud.' (Kol 1, 24).

Mervel gant ar C'hrist a reomp enta, bep un tamm, dre stagañ war hon c'hroaz, evel ma reas gwechall Hon Salver, holl drac'hoantoù hon c'horf hag hon spered : danvezelouriezh, emgerc'hegezh, lorc'hentez, garventez, kasoni, krizder, ha kement gwid a zo.

Evit Bevañ Gantañ

Talvoudegezh, frouezh lerc'hiadoù an oferenn

Mat e vefe adlenn lodenn ziwazhañ ar studienn gent bet embannet ganin war an dastumadenn-mañ dindan an talbenn "*Kevradiezh ha Pec'hed*" (1). Anat eo e varvomp evel ar C'hrist adalek ma kemeromp warnomp darbenn pep diwask ha poan dre garantez evitañ, splujet maz omp bet en E varv gant hon badeziant, merket maz omp bet ivez diwar neuze gant al louc'hanvegadoù rakveneget oc'h ober dimp perzhiañ en E stad evel Beleg hag Anrezh. Hogen e skeud mervel e vevomp en un doare dilesoc'h c'hoazh, dre ma kredomp e komzoù an Abostol Paol pa lavar : "*Dasorc'het maz eo, ar C'hrist ne varvo ken...*" (Rom, 6, 8) Rak peogwir ez eo dasorc'het '*Penn ar C'horf maz eo ar C'hrist*' (Ef 4, 15-16), e tascorc'ho ivez d'E heul an holl izili all o vont d'ober ar C'horf, eleze kement badezad a vo bet marvet e karantez Doue hag an nesañ. Setu perak, war-bouez tañva levezet kuzh ar vuhez douevel krog ennomp adal bremañ dre ar c'hras-yonaat, e c'hallomp endeo, ni ar feizidi gristen, ren buhezadoù leunoc'h hag evurusoc'h, evel eginzasorc'hidi, zoken dre greiz anken ha glac'har, o c'hedal sevenidigezh an Azav ha tarzh an Deiz Peurbadel.

Hogen n'eo ket evidomp hon-unan e vevomp Bevañ a reomp keit ha ma chomomp izili d'ar C'horf rakveneget, maz eo ar C'hrist ar Penn anezhañ. Bev e vezomp dre ma kedunomp ouzh an hevelep Arloz, ha ni neuze evel 'mein bev' (I Per E, 5) o vont d'amparañ korf kevan ar C'hrist bepred war sevel.

Ne vo buhez ebet evidomp enta nemet ha glenañ a rafemp ouzh ar C'horf Kristel Kevan. Ha dre Gerrin an Aoter, desellet evel aberzh, eo e c'hlenomp ouzh hevelep korf, evel ma oar pep kristen desket. Dre ar c'hedunadur, ober disoc'hel an aberzh, eo, dres a-walc'h, e kavomp buhez e diabarzh korf ar C'hrist, war-bouez dont da vevañ Gantañ e gwirionez ha gant izili all e gorf, hon breudeur dre ar bed.

Arabat e vefe neuze desellout ar c'hedunadur kevradiel evel pa ve netra muioc'h eget ar predig-amzer karantezus a vez div galon o tremen an eil gant eben, hep sellout ouzh den all ebet war o zro. Nann, rak, war-bouez magañ hon ene gant kreud ha gwad E aberzh, e vez an Arloz o silañ en hon c'hreiz buhez an Iliz Kevan. **Bevañ gantañ**, bevañ gant ar C'hrist, ar Penn, zo enta **bevañ ivez gant hag evit hon breudeur, izili all ar C'horf**. Setu penaos e teuomp en diwezh da stigmañ ul liamm etre buhez hon breudeur hag eztaol hon gouloc'h hiniadel.

Seurt liamm gwirion etre kudennoù-buhez an denelezh ha dazhlad an oferenn o tizhout e varr gant ar c'hedunadur zo bet merket ervat gant al lizher da heul diwar zorn ar Pab Yann-Baol ha bet kaset d'ar C'hardinal **Knox** a-raok ar C'hendalc'h kevradiel bet dalc'het e Lourda e 1982 :

"An dud a vez o tont da geduniñ ouzh korf ar C'hrist," eme ar Pab, "zo galvet da vevañ kenetrezo evel izili an hevelep korf ha da reiñ o buhez evit kement breur o deus e par an deniezh, dreist pep tra evit ar re baourañ, war-bouez o gwazañ, war-bouez kenlodañ ganto bara an douar

ha bara ar garantez, war-bouez mont ganto da sevel ur bed yonoc'h, dellezek eus bugale da Zoue."

Kefridi veur an Tiern Jezuz ha hini an Iliz bremañ war e lerc'h zo degas kefleunded ar vuhez dindan kement stumm a zo. Moarvat hiziv an deiz e veizer kalz gwelloc'h eget gwechall e tle kudennoù an denelezh bezañ parzh kevanek e pleustrerezh ar feizoniezh o tennañ da Gerrin an Aoter. Hogen tan ar garantez kenilet ha kresket e kalon ar C'hristen gant ar garantez kenilet ha kresket e kalon ar keduniñ ha gant an emaberzh desket e skol an oferenn a rank bezañ dameuc'het bremañ kalz muioc'h eget gwechall war dachenn an ober, evit ma teuy buhez pep feizad da vezañ unan gouestlet da garantez e nesañ war sol e garantez e-keñver Doue.

Kinnig e vuhez e stern an oferenn evel profadur evit e nesañ ha kinnig e vuhez, e stern an oferenn bepred, evit e nesañ evel emanrezhadur, setu kefridi pep kristen emskiantek e kendave gant Aberzh ar C'hrist aderouesaet war an douar. Pa lavarer *"nesañ"* avat e veneger an holl vreudeur. Arabat neuze disoñjal emañ e kerz an Iliz ivez plediñ gant ar vuhez peurbadel a vez eneoù hon breudeur all, marvet diganimp, o c'hedal hag o hiraezhiñ dezhi.

Spisaet eo bet seurt kelennadur gant Goursened Treanta pa lavar : *"Hervez dazroadur an Ebestel, e vez kinniget an oferenn gant gwir abeg, neket hepken evit pec'hedoù, poanioù, boztalerezh hag ezhommoù all ar feizidi vev, hogen evit ar re a zo marvet ivez e kerc'henn ar C'hrist, hep dezho bezañ bet peurc'hlnaet evit c'hoazh..."* (Deved 940).

Amañ e kejer emichañs gant arvez hengounel ar feizoniezh diwar-benn talvoudegezh ha frouezh an oferenn

evel aberzh kinniget evit an dud vev koulz hag evit ar re varv.

Hervez ar c'helennadur o sevel da veurevezh an Iliz, e vez gwerc'hegezh ar profadur sevenet e stern an oferenn diouzh terkoni ar berzhidi, beleg ha feizidi, eleze diouzh douested ha nerzh ar garantez a vezont o tegas en o gouloc'h. Amañ e weler c'hoazh e tle ar C'hristen bevañ e gwirionez gant e Grist evel beleg hag anrezh en un douez, ha neuze e teu aberzh kevelus an eil hag egile da vezañ gwerc'hek e par ar boztalerezh evel e par an dehuzianterezh hag ar yolwalc'herezh.

Un aberzh boztalus pe, mar karer, poandalus eo an oferenn, o vezañ ma vez o tistrujañ - moarvat hervez deoliezh ar brofourion, hogen dre berzh he gwerc'hegezh da gentañ, - ar poanioù amzeriat stag ouzh ar pec'hed. Hag aes eo an dra da vezañ rak, mar gall ar pened, ar yun hag an oberoù mat pellaat ar skoilh enlen ouzh ar poanioù amzeriat e kont, kentoc'h meiz an oferenn, paz eus anezhi gwerc'hekañ pedenn ar gouloc'h kristen hag ivez, peogwir e ra dimp perzhiañ e boztalerezh kefleun ha didermen Hon Salver.

E seurt keñver eo e vez an oferenn o spletiñ d'an anaon dalc'het c'hoazh en amprou ar Purdan, pa dalvez da freuzañ evit pezh pe lod ar poanioù amzeriat a chom ganto da c'houzañv kent dezho gallout treantiñ perzhier ar Geoded Wennvedik.

Kement ha komz diwar-benn marvidi, e kemeran tro neuze diwar ar skrid-mañ da venegiñ ar pouez a c'hallfe an oferennou-douaradur kaout war feiz ar berzhidi, bremañ ma vez graet pep lid gant komzoù meizadus evit an holl. Me gav din e vez brasoc'h eget gwechall, abaoe an adreizh lidadurel, niver ar feizidi a vez gwelet o tremen treuzoù an ilizoù evit an douaradurioù. Forzh penaos n'o gweler ken, evel bagadoù mouilc'hi, o chom dirak an nor da vouzhañ an

oferenn-obidoù, evel ma raent gwechall, kent d'ar c'hemmoù bezañ bet degaset e par ar gouloc'h. O sellout neuze gwech pe wech ouzh an eil pe egile, anavezet mat ganin, e soñjan peseurt mennozh a c'hall a-walc'h treiñ e penn hemañ, aze e'm c'hichen, peseurt trivliad a c'hall a-walc'h birviñ e kalon hennezh, aze un tamm pelloc'h, tud difeiz anezho, keit ha ma c'houfen, pa glevont ar bozenn-mañ-pozenn o tennañ d'an dasorc'h pe d'an divarvelezh ? ... N'on ket evit krediñ e c'hallfe seurt tud chom dibrederekrenn dirak ar pezh a glevont. Grasoù fonnus a vez neuze o fonnañ war an difeizidi da geñver seurt liderezh. Ha piv oar hag-eñ ne vez ket tizhet tamm pe damm dre seurt hent, - trawalc'h da vezañ salvet en diwezh, - muioc'h a dud eget na soñjer ?

Forzh penaos, ret eo ober diouzh ma vo deol, tonius hag aozet-mat bepred e-keñver testennoù ha kan kement oferenn-anaon a zo, dreist-holl ar re a vez lidet en ilizoù ar c'hêrioù, rak anat ha diarvar eo e c'hall toniusted al lid, ar from ha zoken ar glac'har, kensteuet gant berzhusted an aberzh kerrinel, kenober da gantreiñ lod kalonoù tamm pe damm ouzh Doue. Perak se ? Peogwir e vez neuze gouezvoud ar C'hrist, e skogusted **Komz Doue** dre destennoù al lid hag ar c'han, ken gwerc'hel d'ar speredoù ha ma vez war an aoter war-lerc'h ar Gorreoù ; ken gwerc'hel-all ivez e-metoù ar grederion bodet eno neuze en anv an Arloz, hep ma vefe aze, navit-se, gouezvoudoù disheñvel na distag. Me gred enta e ra an Iliz bremañ pezh a zo dleet pa glask ober diouzh ma vefe tizhet an niver brasañ gant flemmoù salvus ar C'hrist, dezho da c'hallout un deiz marteze dont da **Vevañ Gantañ**.

Hag e gwir, n'eo ket, e-giz ma oar pep kreder desket, dre ma vez kinniget un oferenn bennak evit unan marv ma ne c'hall ket spletiñ d'unan bev.

Evel aberzh war un dro boztalus, dehuziantus ha yolwalc'hus ne goll kammed an oferenn he, ferzhiou. Ouzhpenn ma vez he berzhusted, c'hoazh ur wech, hervez birvidigezh an deoliezh e par ar beleg hag ar berzhidi. Skuilh grasoù puilh yolwalc'hus a ra Doue neuze war neb a vez pedet evitañ da geñver an aberzh. Ha gouest e vez ar grasoù bastet e seurt giz, dre berzh an Anrezh Douevel, koulz da vroudañ un difeizad pe ur pec'her bras bennak da ganttreñ ouzh e Salver, koulz c'hoazh da dreñ en ur skoazell bennak war dachenn ar vuhez danvezel, diouzh ma kavo da Zoue e vo spletus hevelep madelezh da vuhez speredel ar buziad, dezhañ d'ober e ganttro.

Ha Bezañ Klodekaet Gantañ

Hogen, petra eo bezañ klodekaet ? *'Klod'* e yezh ar gristeniezh koshañ zo dezhañ ur ster bet laaset dimp gant an hebreeg hag eñ kevatal da hini hon termen boutin *'pouez'*. Dont a ra seurt *'pouez'*, evel dres, d'ar feizidi e ser douegedneuziekaat, pezh a dalv evidomp, tud ar Glenn, kement ha dont da vezañ heñveloc'h-heñvel ouzh ar C'hrist, hon Uhelskouer Dendouevel. Rak arabat ankouaat, Doue diskennet betek ennomp e neuz un den, setu piv eo evidomp Jezuz-Krist, evit ma c'hallfemp, ni an denion, askenn betek ennañ e neuz doueed. Dimp da gaout seurt pouez avat, e tleomp klask trevekaat ar muiañ ma c'hallomp ar c'hras-yonaat maz eo dres a-walc'h an oferenn, - evel aderouesâdur Aberzh ar Groaz, - ar stivell anezhi a vez atav dindan hon tizh, o vezañ maz eo war ar groaz eo bet tarzhet seurt andon evit kenderc'hel da c'houde da strinkañ e gounid an denion war hed ar c'hantvedoù.

Ne dalv ket ar boan restañ amañ adarre pezh am eus skrivet endeo e korf ur pennad agentel bet embannet dindan

an talbenn *"Kevradiezh ha Dasorc'h"* (1) rak tu zo, diwar adlenn seurt studienn, da welout e fellas d'an Tiern Jezuz ober gant Kerrin an Aoter gouestl hon c'hlodekâdur peurbadel en E Rouantelezh.

Merkomp ur wech c'hoazh avat ez eo dre ar c'hedunadur kerrinel e teuomp da seveniñ hon douegedneuziekâdur, peogwir *"neb a vez o tebriñ va c'hreud en deus buhez peurbadel ha m'en dasorc'ho d'an deiz diwezhañ..."* (Yann, 6,4).

Evel ma weler, un eginglodekâdur eo neuze ar vuhez a vez o virviñ en hon c'hreiz, bennozh da santelezh ar c'hreud hag ar gwad a vez delodet dimp kement ha ma karomp, e-giz magadur neñvel, da geñver aberzh an oferenn. Hevelep eginglodekâdur tonket dezhañ, emichañs, disoc'hañ war an dasorc'h bet azavet gant Jezuz, eleze war wennvedigezh ar vuhez peurbadel hag ar c'hlodekâdur Gantañ.

Pal pep oferenn zo neuze digeriñ brasoc'h-bras bepred perzhier ar Rouantelezh d'ar bed erouez, ha perzhier ar bed ivez d'ar Rouantelezh, d'an eginglodekâdur da c'hallout treiñ primoc'h da glodekadur. Moarvat, dre berzh e werc'h divevenn e vije gouest an aberzh kerrinel da dizhout e bal en un taol. Bevennet eo avat an denion war o glenn, ha setu perak ne reont nemet lugudiñ ha teukañ war hent o c'hlodekâdur. Padal e chom araez an Aoter an araez gwellañ evit difraeañ donedigezh ar Rouantelezh ha dre se ne vo biken re stank niver an oferennoù. Rak, da geñver pep unan anezho, zoken hep tamm bezanterezh ebet war dro, eo bepred an Iliz en he fezh a vez engouestlet, o vezañ ma vez hollveziadel tizhgwerc'h ha dazlammodoù kement oferenn a vez lidet.



Keit ha ma chomo bed ar bed, e chomo Aberzh an Aoter eñvoradur ar Garantez bet eztaolet betek he barr gant ar Mab Dendouevel evit E Dad hag E vreudeur, an denion. Hogen, digeriñ hon c'halon d'an hentez, sed ar burzhud a c'hallomp gortoz digant an oferenn, mar fell dimp da vihanañ kanttreiñ evit gwir ouzh an Doue bev. Rak, gant Kerrin an Aoter dreist-holl eo e vez roet dimp an nerzh ret evit genel e gwirionez d'an oberoù karantezel. Emañ ar bed o reuziañ d'ar mare-mañ diwar olkarantez. Deskomp neuze gant Aberzh an Emro didermen, kinnig bemdez, ni ivez, hon begad karantez da sevel ar Rouantelezh. Kalz traoù bras a vez tu da seveniñ gant traoù dister, pa vez kouvran ar galon. Ar Rouantelezh en hon c'hreiz adalek bremañ eo, en ur stumm, ar c'hoant bras a vez ganimp da vevañ e karantez Doue hag an nesañ. Seurt karantez eo neuze maen-diazez ar Jeruzalem Nevez ma vo trec'h ar vuhez evit mat war ar marv, rak, gouez da Sant Paol adarre : "*Ar Garantez ne dremeno biken...*" (I Kor, 13,8).

(1) "*Kevradiezh ha pec'hed*". **Imbourc'h**, Nnn 155-156, 31 Kerzu 1982. "*Kevradiezh ha dasorc'h*". **Imbourc'h**, Nnn 161, 31 Mae 1983.



Debriñ Kreud ar C'hrist Hag Epañ E Wad

Hiziv c'hoazh e talc'her d'ober an hevelep goulenn ha ma reas ar Yuzevion goude klevout komz vrudet ar C'hrist : penaos e c'hall hennezh reiñ dimp e greud da zebriñ ha diwar se, lodennañ ganimp e vuhez ?

Hag evit gwir, penaos e c'hallfe boudoù distag ha disheñvel kaout an hevelep buhez ? Rak n'eus mann a vefe ankeveladusoc'h eget ar vuhez a zo oc'h ober ur nouez diforc' h hag unseurt gant pep unan ac'hanomp ?

Tu zo moarvat evit keneiled da lodennañ an hevelep lazoù, an hevelep prederi, an hevelep kounnar, evel pa lodenner an hevelep boued ouzh an hevelep taol, pe c'hoazh evel pa vez ar vamm vrazez o vegañ gant he gwad ar bugel a vez o tougen. Diaes e vefe moarvat empentiñ klokoc'h ha bevoc'h unvaniezh eget houmañ ziwezhañ.

Debriñ kreud ar C'hrist Arloz... evañ e wad... hogen hag-eñ, gouez d'ar Yuzevion, n'eo ket a-walc'h debriñ ar bara boutin o deus debret hon tadoù ? Da lavarout eo bevañ hervez pep furnez ha poellegezh ?

Mar n'ez a ganeoc'h, eme Jezuz, nemet ar seurt bara boutin, mervel, na mui na maes, a vo ho lod dres evel maz eo marvet ho tadoù. (1)

Ne dalv mann ar gevradiezh koulskoude mar ne vez anezhi evidomp, nemet ur gread sevenet e-kerz ur goulenn, na pa ve ur gread breurek awenet gant eñvor ar C'hrist e-unan. Kel zo amañ gant ar gevradiezh, eus ensiladur buhez dreistnaturel e gwirionez, diwar-bouez enteuzadur, evel da geñver un treuzskuilhad gwad a vez graet e stern ar

vezekniezh : gant hemañ e weler gwad an deroer och enteuziñ e korf an darbenner, tra ma vezomp-ni enteuzet hon-unan e buhez ar C'hrist Arloz gant ensiladur ar Gevradiezh, anezhañ ur gwir vagadur dreistnaturel. Ouzhpenn maz eo seurt buhez, buhez divarvel ha peurbadel, peogwir e tarbennomp ganti daou dra :

- 1) buhez Doue evel Doue ha Den war un dro diwar-bouez an enteuzadur rakveneget ;
- 2) frouezh hevelep enteuzadur, eleze kreskidigezh ar rad-santelaat evel ma welimp pelloc'h.

Dre maz eo Jezuz ar c'heneil kewirañ ha presourañ a c'hallfemp da gaout eo ez eo bet fellet gantañ ober dre seurt hent en hon c'heñver, evit reiñ dimp e vuhez "dendouevel" ha bevañ en hon touez amañ war an douar, dres e dere an "dendouevelezh" dindan spesoù ar Bara hag ar Gwin Kantouestlet.

Gant seurt presourded hag arbennegezh e vez o parañ warnomp neuze ar brasañ burzhud a zo da lakaat war gont karantez Doue evidomp. Graet eo seurt burzhud gant div elfenn :

- Tresolwezadur ar bara hag ar gwin ;
- Gouezvoud gwerc'hel ar C'hrist.

An tresolwezadur zo kemmadur solwez ar bara hag ar gwin e solwez kreud ha gwad ar C'hrist. Petra eo solwez ur boud bennak ? Ar pezh a drebard ent krai ha dizalc'h diouzh darvoudennoù ar boud evel an egorelezh, an tevder, ar blaz h.a. Pa vez kemmet ar bara e solwez kreud ar C'hrist ez eo aes meizañ perak e van darvoudennoù ar bara war an aoter. Heñvelgont evit ar gwin.

Ar Gouezvoud Gwerc'hel n'eo ket, evel ma oar an holl gristenion, ur gouezvoud o tegas gantañ darvoudennoù kreud ha gwad korf Jezuz. N'eo nemet ur gouezvoud solwezel, evel merket uheloc'hik. Hogen n'eo ket dre ma n'eo nemet solwezel ma n'eus gantañ gwerc'helezh ebet.

Solwez korf ha gwad ar C'hrist eo a vez erouez enta war-lerc'h ar Gorreoù da geñver an Oferenn. Da heul hevelep solwez e kaver Dended ar C'hrist dre ret, hag o vezañ ma ne c'hall ket an Dended ennañ bezañ disrannet diouzh an Doueded e kaver ivez da vont gant an Doueded, gouezvoud an Dreinded hec'h-unan.

Gant solwez korf ha gwad Hon Salver, e ro dimp enta Kerrin an Aoter dended hag ene Jezuz. Ha setu dizoloet ganimp war an hevelep tro andon ar gouloc'h evit ar Galon Santel. Arabat e vefe neuze sellout hevelep gouloc'h evel un dra pell diouzh hon c'hudenn pe evel un dra dispredet paz eo ken stag ouzh gouloc'h ar gevradiezh. Ha pebezh gounid hep e bar evidomp evel denion gallout pediñ hon Doue gwirion da geñver pep kedunadenn evel ma peder ivez an Den gwirion maz eo, unaniñ hon c'halon den gant e galon den, dimp da gadarnaat hon fiziegezh ennañ, neket hepken evel an Arloz na zoken evel an Tad maz eo, hogen evel ar Breur ivez, hag evel Hon Breur hemañ, dezhañ ur galon par da hini kement breur ha keneil a c'hallfemp da gaout war an douar.

Adalek ma vez displeget mat neuze petra eo burzhud kerrin an Aoter ha peseurt buhez a vezomp o tegemer eno dre berzh ar c'hedunadur kevradiel, e veizer gwelloc'h e c'halle sant Paol youc'hal : "N'eo ket me a vev, ar C'hrist eo a vev ennon..."

Pegeit avat e van hevelep gouezvoud ? Hervez Goursened Trenta, bepred e talvoud emichañs e seurt keñver, e chom Doue erouez keit ha ma pad spesou ar bara hag ar gwin hep teuziñ na lizañ. Pa gedunomp ouzh korf ha gwad Hon Salver, e van ar Spesou Kantouestlet enta keit ha na vezont ket bevezet na teuzet goude bezañ bet euvret.

Ar pezh a gont emichañs, war-lerc'h keduniñ, ez eo ar frouezh a denner eus hevelep gread. Ha disheñvel e vez frouezh ar gevradietz diouzh hini ar Vadeziant pe hini ar Binijenn, da skouer. Gant ar re-mañ e tarbenn an den ur c'hed, anvet Rad-Santelaat hag a zo ouzhpenn ur skoazell dremeriat evel ur rad erouez, lakaomp, paz eus anezhi ur piaoued amparet gant ar vuhez douevel e galloud o tont ennomp. Moarvat n'eo ket seurt rad-santelaat gouezvoud gwerc'hel an dendoueded ennomp evel dindan ar Spesou Kantouestlet. Ar rad-santelaat zo d'ar vuhez douevel gwerc'hel en he c'hrai ar pezh ez eo da skouer, ar mez d'an dervenn. Pa vez ganimp bepred enta, da geñver nep kedunadenn a reomp ouzh korf an Arloz, eleze pa vez hevelep rad ennomp, ha ni chomet war-lerc'h ar Vadeziant pe ar Binijenn hep terriñ hon unvaniezh gant Doue dre ar pec'hed grevus, ne c'hall ar gevradietz, evel magadur, nemet kreskiñ seurt piaoued en hor c'hreiz. Graet eo neuze ar gevradietz evit mirout, diorren ha kreñvaat ennomp bemdez, mar karomp, ar vuhez douevel e galloud ar rad-santelaat, buhez hag a voenimp e gwered e bed all ar c'hlod.

Ar pezh a gont neuze goude pep kedunadenn gevradiel n'eo ket padelezh gouezvoud gwerc'hel an dendoueded ganimp, hogen padelezh ar frouezh degaset dimp dre berzh hevelep gouezvoud, eleze padelezh devoudad ar C'herrin, da lavarout eo kendalc'h ha dreist-holl kresk ar rad-santelaat, a-geñver gant niver hon c'hedunadennou

pedennus, deol, birvidik, dibec'hed, na petra, eleze a-geñver gant greadou kevradiel sevenet gant ar garantez ar c'hlanañ gwellañ evit Doue hag evit an denion.

(1) *Kement-mañ da lavarout ne gas ket boued ar c'horf maz eo ar bara boutin pelloc'h eget marv ar c'horf, tra ma kas ar boued dreistnaturel maz eo an gevradietz betek ar vuhez divarvel, buhez an Dreinded hec'h-unan.*



Ober ur Pred Gwirion Eo Keduniñ

Ouzh Kreud Ha Gwad Ar C'hrist

Gant ar ger brezhonek nevez "keduniñ" e tlefed, adalek ma vez displeget mat ar ster anezhañ, dont da vezañ gwelloc'h a se petra eo debriñ kreud ar C'hrist hag evañ e wad. Sant Kuril Aleksandria, Doazhour an Iliz, a zo o reiñ dimp ur skouer ma tarzh diwarni raktal e brezhoneg keal an unaniezh klok a gaver dindan an trobenn - **ked** - o vont d'ober "keduniñ".

"Kemerit", emezañ, *"daou damm koar ha lakait-i kevret en ul lestr war an tan. Ken start e vezont prestik unanet, ma ne reont mui nemet un tamm koar hepken... Setu perak,"* eme dimp c'hoazh hon sant, *"e teu neb a vez o kemer kreud Mab an Den hag oc'h evañ e wad d'ober nemet unan gantañ."* Hag adarre : *"Bennozh d'ar c'hedunadur e teuomp da vezañ nemet ur c'horf hepken gant Jezuz-Krist, e vezomp an hevelep kreud gantañ, an hevelep gwad gantañ, e vezomp izili amparet gant e greud hag e eskern."*

Ken pervezh enta ha ken peurglok e vez an unaniezh etre Jezuz ha pep keduner, maz eo dic'hallus bezañ strishoc'h unanet gantañ amañ war an douar.

Gwelet hon eus penaos e c'hoarvez seurt kedunadur kevradiel gant Jezuz (1), hon buhez an hini eo a vez neuze dedeuzet e buhez ar C'hrist, ha neket ar gin, frouezh

hevelep dedeuzadur o vezañ kresk ar rad-santelaat, lakaet emichañs e vefe houmañ ganimp bepred pa dostaomp ouzh an daol santel.

Seurt unaniezh diwar-bouez tregemmadur hon buhez e hini an Tiern zo kadarnaet kaer gant an arroudoù da heul a dennan diouzh oberoù Sant Eosten : *"Perzh ar magadur kevradial 'zo degas an unded, hon lakaat da vezañ ken strizh unanet ouzh korf Jezuz-Krist ma teuomp, diwar dezhañ ober ganimp izili anezhañ, da vezañ hon-unan ar pezh a vezomp o tegemer"*. (2) Hag adarre ar c'homzoù-mañ bet - emezañ - *"klevet gantañ a-ziwar-laez"* : *"Me 'zo boued ar greñvion ; kresk hag e tebri. Va c'hemmañ ennout avat e-giz boued evit da gorf ne ri ket ; te an hini eo a vo kemmet ennon"*. (3)

An Unaniezh Kerrinel

Gant an unaniezh kerrinel ez adkavomp emichañs kudenn ar Gouezvoud Gwerc'hel, eleze burzhud an Dreinded o tiskenn ennomp en un doare gwerc'hel e-pad un nebeut amzer, dre berzh an tresolwezadur. Seurt unaniezh verrbad ned eo avat, - bennozh d'ar c'hengej tregemmus etre kreud an den ha kreud ar C'hrist, nemet prientidigezh un unaniezh kalz padusoc'h anvet unaniezh speredel.

An Unaniezh Speredel

Pal an unaniezh kerrinel 'zo peurwellaat ha seveniñ unaniezh speredel an den gant Jezuz. Ha setu perak e teu houmañ da vezañ seul glococ'h ma vez seul stankoc'h ha seul virvidikoc'h hon c'hedunadennoù kerrinel. Ken gwerc'hel ha ken don e vez an unaniezh evel hounnezh ma

c'hall Hon Salver mont betek embann : *"E-giz ma vevan dre an Tad, en hevelep giz, an neb am debro a vevo-eñ ivez drezon-me."* (4)

Setu penaos enta e teu unaniezh tremeniat korf ar C'hrist gant hon c'horf da gaout he feurvarradur eleze, da vezañ peursevenet e par unaniezh padus ar spered. An unaniezh kerrinel ned eo neuze nemet arouez hag arbenn hon unaniezh speredel gant Jezuz. Evit reiñ e spered eo e vez an Arloz o reiñ dimp e gorf dasorc'het. Ret eo gant se magañ seurt unaniezh speredel diwar-bouez ur c'hedunadur all o respont d'an hini kerrinel hag evel ouzh e beurastenn : ar c'hedunadur speredel. Ha moarvat goude ar pezh a vez anvet ar Bedenn-Drugaregezh graet ganimp war-lerc'h pep kedunadenn, gwellañ doare kedunadur speredel a c'hallfed kas da benn, - dalc'hmat, evel dres e darempred gant ar c'hedunadur kerrinel - zo ar pezh a vez graet anezhañ *"gweladenn d'ar c'herrin santel"* (5) emañ ar veleion o virout e nevedlog hon ilizoù.

Seul retoc'h eo hiziv hevelep kedunadur ma vez berroc'h betek re gant hon lidadurezh kornogel roman ar Bedenn-Drugaregezh a reer da heul ar c'hedunadur e diwezh an oferenn. Menegomp e vez kalz gwelloc'h ar gont e seurt keñver gant lidadurezh ar Reter a ro an tu d'ar feizidi, bet o keduniñ, d'ober ur Bedenn-Drugaregezh vastus, strollennel ha kefridiel.

Ken talvoudus eo ar c'hedunadur speredel enta, dreist-holl, c'hoazh ur wech, pa vez graet dirak ar c'herrin Santel, ma c'hall, hervez lod feizoniourion, devoudan grasoù par da re ar c'hedunadur kerrinel, dre hennad, paz eus anezhañ ur c'herrin o werediñ dre e nerzh piaouel ; padal, diwar ar c'hedunadur speredel graet gant un ene birvidik ar garantez

en e greiz, start e c'hoant d'emizelaat ha d'emsantelaat, e c'hallfe tarzhañ grasoù puilhoc'h eget diwar ur c'hedunadur kerrinel klouaroc'h graet gantañ hep ma vije bet koulz aozet.

Paz eo ken burzhudus all avat euvridigezh ar gevradiezh drezi hec'h-unan, perak ne spirje ket ur gedunadenn gerrinel nemeti, ya, unan hepken, da beursantelaat en un taol hag evit mat neb a raje neuze diouzh e wellañ evit kinnig ur galon reizh ha deol d'an Arloz ouzh an daol santel ? Ar respont da hevelep goulenn eo n'emañ tamm ebet e soñj Hon Salver kas da benn en doare-santelidigezh ar gristenion. Nann, n'eo ket gwir e spirje ur gedunadenn hepken d'ober ur sant bras eus nep keduner, pegen reizh bennak e vije hemañ neuze dirak Doue. Hag aes eo meizañ perak : mennad Jezuz 'oa reiñ doare ur pred speredel gwirion da bep kedunadenn p'en deus, da geñver e Goan Ziwezhañ, ensavet Kerrin ar Gevradiezh. Ha dimp da vezañ diarvar e seurt keñver, n'eo ket chomet mut war e vennad. Pell zoken a-raok ober e Goan Ziwezhañ ha kemer ar bara hag ar gwin, en doa lavaret d'e ziskibled : "*Neb a vez o tebriñ va c'horf hag oc' h evañ va gwad 'zo dezhañ buhez peurbadel... Rak va c'horf 'zo magadur gwirion ha va gwad 'zo died gwirion...*" (6)

Boued eo neuze ar c'hedunadur evidomp a raok pep tra. Ur pred speredel gwirion eo ar gevradiezh ha ret eo e vefe kont gantañ evel ma vez kont gant ar pred danvezel. Penaos avat e vez kont ? Daoust hag e vefe trawalc'h kemer ur pred danvezel hepken evit ober un den ? Ne ve ket, moarvat, rak ouzhpenn unan a ranker kemer evit se. En hevelep giz, evit ober nep sant bennak, ez eus ezhomm kedunadennoù stank, eleze, eus predoù speredel niverus. Ha sed evit gwir mennad Doue warnomp, pa ne fell ket

dezhañ e vefe disheñvel doare hon c'hreskidigezh speredel diouzh hini hon c'hreskidigezh korfel.

Neuze pa lavaromp e vez tregemmet hon buhez e buhez ar C'hrist Arloz e weler ne c'hoarvez seurt tregemmadur e gwirionez nemet en un doare argreskus ha distroñs - da lavarout eo, o vont dres diouzh ar c'hementad kennerzh degaset dimp, kedunadenn goude kedunadenn, evit kresk derezek ar rad-santelaat en hon c'hreiz.

Magadur eo ar gevradiezh hag evel pep magadur e rank bezañ kemeret alies. E berr gomzoù, ar gevradiezh 'zo e devoud "**ar bara pemdeziek**" meneget gant Pedenn an Arloz. Hag evel ma rank ar boued boutin bezañ pemdeziek e rank boued an neñv bezañ ivez. Da geñver pep kedunadenn enta e tenn ar gevradiezh da dreñ an den e Krist, bep un nebeud, dres evel ma c'hoarvez dezhi - hogen dre un anadenn naturel ar wech-mañ - treiñ ar bara kan kantouestlet e korf an den seul wech ma keduner, peogwir e talv ivez an averlad evel ar bara boutin da vegañ an den, bep an nebeud ha pred goude pred.

Notennoù

- (1) gwelout **Imbourc'h**, Nnn 124, p.9.
- (2) **Sermones** ("Divizoù"), 57, 8-7.
- (3) **Confessiones** ("Gourbannoù"), levrenn 7, pennad 10.
- (4) Yann, VI, 57.
- (5) Siwazh, mui-ouzh-mui e chom serret an ilizoù war an deiz, en abeg -hervez kont - d'al laerofisioù.
- (6) Yann, VI, 54-55.



Emmanouel pe *Annezerezh ar Rad ennomp*

"Emmaouel" zo ul lavarenn hebreek o talvout kement ha "Doue ganimp". Setu perak e ran ganti bremañ evit talbennañ ar studienn-mañ a vo gouestlet da gudenn annezerezh Doue e dirgel hon boud evel ma c'hall bezañ meizet gant poell an den dindan un arvez lavaret, ha gant lagad ar feiz kristen dindan arvezioù all.



Adalek ma kred unan bennak e Doue evel krouer ar bed, ne vez ket diaes dezhañ dont da vezañ gant e boell emañ Henezh erouez ennañ dindan un arvez lavaret, sev evel en e grouedenn. En ur stumm e vez annezet e voud gant ar Peurvoud : netra boellekoc'h.

Ar boud bet roet avat e seurt giz d' an den zo ur prof. Ken ma c'haller lavarout e teu ar profer da vezañ prof ivez, dre m'emañ oc'h annezhañ e boud an den. An anv a roer da Zoue evel profer ha prof war un dro 'zo "rad ankrouet". Emañ neuze ar Rad oc'h annezhañ e dirgel hon boud evel Doue krouer, sev evel pennarbenn kement den o hanvout war an douar. Setu perak ez omp gouest bremañ da dermenañ ar moz-annezhañ douevel a vez tizhet ennomp gant ar poell evel **moz-annezhañ pennarbennat ar Rad ankrouet**.

Amañ e weler e teu Doue adarre da vezañ war un dro profer ha prof, peogwir ez eo ar Rad ar Vuhez oc'h emgediñ.

Gouezvoud Doue ennomp hervez ar moz-anezañ dasprenat, diskuliadenn o vont d'ober danvez hon feiz kristen, zo testeniekaet gant ar Skriturioù Santel, dreist-holl gant Lizheroù Sant Paol hag ivez gant Aviel Sant Yann.

I - Lizheroù Sant Paol

"Karantez Doue zo bet skuilhet en hon c'halonoù gant **Spered Santel a zo bet roet dimp.**" (Rom. 5-5, 6)

"C'hwi avat n'eo ket hervez ar c'hreud, hogen hervez ar **Spered Santel eo emac'h o vevañ, peogwir e vez Spered Doue o chom ennoc'h.**" (Rom 8-9)

"Mar bez o **chom ennoc'h Spered an hini en deus** dihunet Jezuz a douez ar varvidi, neuze an hevelep hini, bet o tihuniñ Jezuz-Krist a douez ar varvidi a lakay ivez ho korfoù marvel deoc'h d'advevañ diwar-bouez e **Spered a zo o chom ennoc'h.**" (Rom 8-11).

"Nann, n'eo ket spered ar sklaverezh a zo bet darbennet ganeoc'h, evit ma vefec'h adarre dindan hoc'h aon, hogen spered an dehêridigezh eo hoc'h eus darbennet, ma vezomp drezañ o youc'hal : Abba! Tad! Seurt spered a vez o testeniekaet dirak hon spered dimp ez omp bugale da Zoue... En hevelep doare e vez c'hoazh ar Spered o reiñ harp d'hon sempladurezh, rak n'ouzomp ket petra goulem evit pediñ evel maz eo dleet, nemet e vez ar Spered e-unan o pediñ evidomp gant hirvoudoù dic'heriadus." (Rom. 8-15, 26).

Kendalc'homp gant lizher I Sant-Paol da Gorintiz p'emañ an Abostol oc'h annouezh e feizidi d'ar Santelezh.

"Ha n'ouzoc'h ket ez oc'h nevedenn Zoue hag emañ **Spered Doue o chom ennoc'h ? Mar bez unan bennak o tistrujañ nevedenn Zoue, Doue en distrujo. Rak santel eo nevedenn Zoue ha setu dres petra ez oc'h.**" (1 Kor 3-16, 17)

"Neb a ra hudurnezh avat, hennezh a vez o pec'hiñ enep d'e gorf e-unan. Daoust hag-eñ n'ouzoc'h ket ez eo ho korf nevedenn **ar Spered Santel a zo ennoc'h, e teu deoc'h digant Doue ha ned oc'h mui perc'henn warnoc'h hoc'h-unan ?**" (1 Kor. 6-19)

II Aviel Sant Yann

"Me bedo an Tad hag e roy deoc'h ur frealzer all a **chomo ganeoc'h da viken...** Spered ar Wirionez... C'hwi (an Ebestel) en anavez, rak ganeoc'h emañ, hag ennoc'h e vo." (14-16, h.a.)

Kefridi ar Spered ennomp zo neuze, hervez ar moz-anezañ dasprenat, pe reiñ buhez douevel dimp dindan arvez ar rad krouet o tont da begañ ouzh hon ene dre araez dour ar Vadeziant pe neuze daskor seurt buhez dimp, en hevelep doare, dre araez dizalc'hadenn an Askeviunadur. Merzhomp, diwar vont, e teu dimp ivez da heul ar rad krouet, da geñver ar Vadeziant, ar pezh a vez anvet ar Briwerc'hioù (A) Dreistnaturel ha Kedoù (B) ar Spered Glan (B). Anaout a reomp ivez kefridi ar Spered e par ar Gouzoumenn. ober ac'hanomp kristenion glok, reiñ dimp an oad gour kristen, war-bouez kreñvaat ennomp ar rad krouet ha ganti ar Briwerc'hioù hag ar C'hedoù rakveneged, dimp da vezañ, ouzhpenn izili d'an Iliz, Korf kevrinel ar C'hrist, stourmerion dispont, barrek da haeriñ hon feiz ent kehoazus e pep degouezh ha, diouzh ret, da skuilh hon gwad eviti.

O vezañ avat ma ne c'hall an teir Nouez Douevel oberiañ nemet en ur gevret, kedunvenn ha kedunlusk, e weler mat ez eo an Dreinded Santel en he fezh a vez oc'h annezañ ennomp. Rak, pegen kevrinus bennak ma c'hall an dra bezañ evidomp, kevatallodek eo an douevelezh etre an Tad, ar Mab hag ar Spered. Gant se, lec'h ma vez unan eus

Nouezioù an Dreinded, eno e vez ivez an Div all. Sed an abeg perak emañ Sant Yann o pouezañ da vat war an devoud e vez estreget Nouez ar Spered oc'h annezñ e dirgel hon ene, hervez ar pennstur rakveneget. Hag emañ o kadarnaat seurt mennoz pa gendalc'h evel-henn gant lavar Jezuz. "*Mar bez unan bennak ouzh va c'harout, hennezh a viro va c'homzoù ha va zad en karo hag e teuimp davetañ hag e vimp o chom gantañ...*" (14-33).

Fraezh neuze pep tra : an Dreinded Kevan eo a vez oc'h annezñ e dirgel an ene kristen.

Penaos intent neuze labour diseurt ar Spered Glan, da skouer, dre ar Gouzoumenn ? Perak lavarout e **tiskenn** ar Spered ennomp diwar-bouez ur C'herrin goubarzhel, peogwir e vez en hon c'hreiz endeo dre ar Vadeziant pe an Askeviunadur ?

Ur gudenn lavaradurezh eo a zo amañ e gwirionez, gant ar Gouzoumenn, **ha peogwir e vez o chom endeo e kalon ar c'houzoumenned** (hervez ar moz-anezñ dasprenat) ne ra **Spered an Dreinded** nemet kreskiñ en hon c'hreiz - hogen en un doare dreist-fonnus - nerzh ar rad-yonaat degaset dimp gant ar Vadeziant.

Moarvat, deiz ar Pentekost, pa voe karget ene an Ebestel gant gwerc'h leun ar Spered Santel, e voe un diavaeziadenn d'an darvoud gant trouz ar barr-avel hag arvest an teodoù-tan o reiñ da grediñ e oa evel un "**diskenn eus an neñv**" war diazezerion an Iliz. Ret eo meizañ o doa ezhomm bras an Ebestel gaezh eus hevelep diavaeziadennoù, ken abaf, ken spontik ha ma oant betek neuze. Ya, ret oa d'an Iliz o c'henel dastum startijenn diwar-bouez un toullad moliac'hoù par d'ar re a zo danevellet e deroù **Oberoù an Ebestel**. Ac'hano marteze al lavaradurezh bet miret gant an Iliz.

Heñvel eo hiziv neuze ar vuhez douevel, - a vez endeo o treantiñ an ene badezet, - ouzh dour tomm a vefe o c'hortoz birviñ. Dre wered ar Spered da geñver ar Gouzoumenn, e teu barregezh d'an dour da virviñ ha, diwar se, d'ober d'an ene tarzhañ gant un nerzh difaezhus evit stourm ha trec'hiñ war dachennoù an emgann speredel a rank gouzañv e sell eus silvidigezh an den. Dour tomm ar vuhez douevel a vez roet dimp gant ar Vadeziant. Diwar-bouez an Dizalc'hadenn e kerrin an Askeviunadur e vez astommet an dour bet skornet gant ar pec'hed grevus. Spered "berver" ha tarzher ar Gouzoumenn eo a vez enta o labourat e pep degouezh hag e pep kerrin diwar neuze, peogwir emañ en e gefridi keniliñ ha tanflammañ ar garantez en hon c'halonou, zoken paz eo Nouez ar C'hrist, evel da geñver ar c'hedunadur kevradiel, a vez o verkañ hon ene en un doare diseurt gant annezerezh an Dreinded. Rak, amañ c'hoazh ez eo liammet kefridi ar Spered ouzh gwerc'h diseurt Korf ha Gwad ar C'hrist, o vezañ maz eo dre nerzh ar Spered e teu ar bara hag ar gwin da gemmañ e Korf hag e Gwad Hon Salver ha da dalvout da vagadur dreistnaturel d'hon c'horf evit ober anezhañ, e dibenn an amzerioù, ur c'horf speredel, gantañ perzhioù par da re Korf Dasorc'het an Tiern Jezuz, hon Uhelskouer.

Gant an annezerezh kevradiel avat e sav ur gudenn all dirazomp : penaos e c'hall nep kedunadenn ouzh Korf ha Gwad Jezuz degas dimp gouezvoud an Dreinded pa vez houmañ endeo o chom ennomp diwar-bouez ar c'herrinoù all ?

Seurt gouezvoud gwerc'hel o verrbadout ennomp, eleze keit ha na vez ket bet teuzet en hon diabarzh ar Spesou kantouestlet, zo evit ar Rad Ankrouet un annezerezh disheñvel-krenn, evel dres, diouzh an hini rakveneget o tont dimp diwar-bouez ar c'herrinoù all (Badeziant, Askeviunadur). Hogen, zoken diwar-bouez ar Gevradiezh

en e gaver ivez, adalek ma steuz ennomp ar Spesou Kantouestlet. E devoud, gant ar c'hedunadur kevradiel a vez moz-annezañ dasprenat boutin ar Rad Ankrouet, hag eñ ur gouezvoud gwerc'hel anezhañ endeo (evitañ da vezañ kevrinel ha, zoken, kevrinus), o treiñ da furn ur gouezvoud solwezel, eleze gouezvoud gwerc'hel dendouevelezh ar C'Hrist, ar Mab, dindan ar Spesou Kantouestlet. Seurt dendouevelezh o kas ganti avat an Dreinded en he fezh rak, hervez ar pennstur usveneget : e-lec'h ma vez unan eus Nouezioù an Dreinded, - no gevrinel no solwezel e vez ar gouezvoud anezhi, - eno e vez ivez an Div All. Pebezh meurded zo bet bastet dimp enta gant hon Doue, mammenn pep karantez !

Emaomp o paouez studiañ annezerezh ar Rad Ankrouet e dirgel an ene kristen diantek, Petra eo neuze annezerezh ar Rad Krouet, bet meneget e derou ar pennad-mañ, sev eil arvez moz-annezañ dasprenat an Arloz Doue en hon c'hreiz?

Uheloc'hik e lavaren e ro dimp an Dreinded o tiskenn ennomp dre ar Vadeziant pe an Askeviunadur ur vuhez douevel am eus keñveriet ouzh dour tomm. Rad krouet eo seurt buhez douevel dedailet ennomp gant ar Rad Ankrouet. Ha n'eus diforc'h ebet etrezi hag ar pezh a vez anvet c'hoazh rad-santelaat. Emañ d' ar vuhez douevel klodus ha d'ar Gwel gwennvedikaus, sev ar Vuhez e kerc'henn Doue er bed all, ar pezh ez eo ar mez d'an dervenn. Anvet e vez c'hoazh gant Sant Yann "**had Doue**" (I, Lizher, 3-9). Hag e gwir, had ar vuhez klodus, egin ar Gwel Gwennvedikaus eo ar Rad-santelaat evit ar c'hristen. Biken ne zeuimp ganti da vezañ par da Zoue, hogen perzhiatoc'h-perzhiatañ nemetken en e vuhez, mar karomp, diwar-bouez hon dehêridigezh gantañ (2, Per, 1-4, ha Rom. 5-15).

Seurt egin zo profet dimp e stumm ur piaoued, sev ur perzh o treantiñ hon ene evel an tan an houarn ruz. Ac'hano c'hoazh an anv all "rad piaouedel" a roer d'ar rad-santelaat, hemañ disheñvel ar ster anezhañ avat diouzh hini ar rad erouezel nad eo nemet ur skoazell speredel tremeniat.

Evel displeget uheloc'h, kefridi ar Spered, e stern an Dreinded, zo santelaat ar c'hristen, eleze kreñvaat ar rad-santelaat en e greiz war-bouez trevekaat barregezhioù o vont bepred d'he heul evel ar briwerc'hioù hag ar c'hedoù rakveneget. Eus radoù erouezel, dres, e c'hoarvez hevelep trevekaerezh. Gwelet eo bet ganimp, da skouer, penaos e vez ar Spered o werediñ e par ar Gouzoumenn, pa ro d'an "**dour tomm**" (am eus kemeret da skeudenn ar vuhez douevel ennomp) an holl varregezh ret evit birviñ, d'an ene kristen ivez da virviñ diwarnañ ha da seveniñ gwezhadoù anvet "**douegedneuzius**" - eleze graet d'e heñvelaat ouzh Doue. Kenkoulz-all, e par ar Gevradiezh, ouzhpenn ma vez ar Spered o tevoudañ an tresolwezadur, e tro E gefridi da vagañ an "dour tomm" dre hantererezh Korf ha Gwad an Arloz deuet da vezañ evidomp gwir vagadur dreistnaturel, war-bouez avat ober un dra na ra ket an hini naturel : hon dedeuziñ e Jezuz muioc'h-mui, mar karomp, hag Eñ hon uhelskouer dendouevel, deuet da vezañ Breur Henañ dimp dre berzh hon dehêridigezh gant E Dad, deiz hon Badeziant. Setu perak e ra dave an holl Gerrinoù all da hini ar Gevradiezh dre ma c'hallomp tizhout gantañ, mar karomp, kefleunded ar Garantez.



Emmanuel ! Ya, emañ Doue ganimp e dirgel hon boud pa renomp ur vuhez kristen unanet gantañ hep pec'hed grevus. Hogen n'eo ket annezañ ennomp an hini a ra. Diwar

lusk ar Spered e vez ivez o vastañ dimp dreistfonn E Vuhez hag ouzh hon broudañ da respont da seurt prof gant oberoù karantezel o respont d'e garantez evidomp.

NOTENNOÙ

(1) Perzhiad kantreol :

A.- Dre ar Vadeziant. Un doare all, digantreol hemañ, da berzhiañ e buhez Doue, zo Badeziant dre Wad (merzherinti) hag ivez ar Vadeziant dre C'hoant, gant Azrek Peurglok, sev Keuz Peurglok d'ar pec'hedoù hiniennel grevus.

B.- Dre an Askeviunadur. Un doare all, digantreol ivez, da berzhiañ adarre war-lerc'h ur pec'hed hiniennel grevus e buhez Doue zo an **damazrek** (attritio), anvet ivez Keuz Diglok (anezhañ keuz d'ar pec'hed gant an aon rak ar boan beurbad stag outañ) o vezañ trawalc'h evit ma weredfe (evit ma rafe berzh) Kerrin an Askeviunadur dre zizalc'hadenn ar beleg.

A. - **Briwerc'hioù**. Un diforc'h zo etre "briwerc'h" (vertu morale) ha "rinwerc'h" (vertu physique).

Ar briwerc'hioù zo naturel pe dreistnaturel. Ar reoù dreistnaturel e tiverzer en o mesk : 1. ar "briwerc'hioù Douedaveel" (vertus théologiques) : Feiz, Goanag, Karitez. 2. Ar "briwerc'hioù Diazézel (vertus cardinales) : arboellegezh (prudence), Reizhded, Nerzh, Goñvoregezh (tempérance).

B. - **Kedoù ar Spered Glan** : an Doujañs, an Nerzh, an Deoliezh, an Emgeleñn (Conseil), ar Skiant, ar Veizegezh, ar Furnez.



Gant Petra eo Graet Frouezh ar C'hedunadur

Kroget em boa va rummad skridoù war ar gevradiezh gant displegañ, e korf ur pennad kentañ talbennet "*Debrñ kreud ar C'hrist hag evañ E wad*" petra oa "ar brasañ burzhud a zo da lakaat war gont karantez Doue evidomp, an dud". Gant un eil studienn, dindan an talbenn "*Ober ur pred gwirion eo kedumiñ ouzh Kreud ha Gwad ar C'hrist*", e tisplegen e peseurt stumm e ro dimp Hon Salver, buhez dendouevel e greud hag e wad, eleze diwar-bouez tregemmadur argreskus ha distroñs hon buhez en e hini, dre gedunadennoù lerc'hadek, evel da geñver ar predoù a renevezomp ouzh taol. O vezañ ma ne fell ket d'Hon Salver e vefe disheñvel doare hon c'hreskidigezh speredel diouzh hini hon c'hreskidigezh korfel, o vezañ ma fell dezhañ, e penn kont, kas da benn bep un nebeud santelidigezh ar gristenion, e venegen evit ar wech kentañ an droienn "*rad-santelaat*", oc'h ober dave ivez d'hon santelidigezh argreskus dre ar gevradiezh. Lavarout "tregemmadur argreskus hon buhez e buhez an Arloz", kedunadenn goude kedunadenn, a dalve neuze kement ha lavarout adeiladerezh argreskusar rad-santelaat en hon c'hreiz, paz eo bepred an hevelep beziadelezh, eleze hon douveladur, - hogen diwar-bouez div droienn disheñvel eo a gavomp o vont d'ober devoudad ar c'hedunadur kevradiel. Ne oa ket sklaer betek-henn avat keal seurt rad, anvet c'hoazh "*rad-yonaat*" pe neuze "*rad piaouedel*". Ha setu perak em eus kinniget etretalud ur pennad all d'al lennerion dindan talbenn "*Emmanouel*", evit plaenaat hennad ha gwikefre ar rad-

yonaat en Urzhiadurezh hon Silvidigezh, rak e stern ar rad-yonaat eo e vez tregemmet hon buhez e buhez ar C'Hrist.

Ha bremañ e rankan pouezañ adarre war graf ar rad-yonaat, o vezañ maz eo ar greskidigezh anezhi, evel hini ar briwerc'hioù dreistnaturel ha hini kedou ar Spered Glan frouezh pennañ nep kedunadenn graet gant pep terkoniad vastus. Hogen frouezh all c'hoazh, evel ma welimp pelloc'h, e vez Kerrin an Aoter o tegas ivez d' ar gristenion da geñver pep kedunadenn graet e karantez Doue hag an dud.

Kreskidigezh ar rad-yonnaat

Gant va fennadoù diagent em eus displeget e petra oa ar rad-yonaat. Mard eo "*had Doue*" evel ma lavar dimp Sant Yann (1añ Lizher, 3/9), emañ en he c'herz, anat eo, ober dimp perzhiañ e hennad hag e buhez Doue : ya, dont da vezañ ganti, neket Doue, evel dres, hogen advibion dezhañ ha, diwar eno, perzhidi en e hêrezh, en e glod hag e wennvedigezh peurbadel da zont. Desellomp ivez, diwar vont, ar pouez a ro ar gevradiezh d'an advaberezh douevel dre Jezuz, ar **Mab trafadel nemetañ** o vezañ maz eo, dres a-walc'h, e buhez ar **Mab trafadel nemetañ** eo e vez tregemmet bep an nebeud hon buhez dimp evel m'hon eus gwelet a-raok, rak evit ma vefemp santel, diwar skouer ar **Mab trafadel nemetañ** eo ez eo bet roet dimp ar rad-santelaat.

Mard eomp bemdez enta da geduniñ, ha bastus pep terkoniad ganimp, ne c'hall seurt perzhiadur nemet mont war vrasaat. Dre benn hon advaberezh d'un Doue, addeuet da vezañ dimp un Tad Gwirion dre berzh daspren Jezuz war e Groaz, ne c'hall ar gevradiezh, degemeret ganimp evel ur magadur, pred goude pred, nemet kreskiñ en hon c'hreiz ar

meni "*Had Doue*" maz eo ar rad-yonaat, houmañ, giz ur piaoued, oc'h intrañ elfenn speredel hon nouezelezh, evel ma treant an tan an houarn ruz. Dre hennad emañ trec'h Kerrin an Aoter d'ar re all rak tennañ a ra, deiz goude deiz, d'adeiladiñ ha da greskiñ klod hon buhez peurbadel e kerc'henn an Dreinded. Gwelet hon eus penaos e vez ar vadeziant o tevoudañ ar rad-yonaat hag an Azkeviunadur ouzh hec'h azdevoudañ. Gwelet ivez moarvat penaos e vez ar Gouzoumenn o tegas dezhi kreskadur, rak ne c'hall kefleuniadur ebet c'hoarvezout e par kedou ar Spered Glan, pal ar c'herrin-mañ, nemet ha diwar-bouez kresk ar rad-yonaat e ve. Ur bennaenn sonn eo houmañ war dachenn ar feizoniezh kristen. Hogen trelusker gwirion ar rad-yonaat eo Kerrin an Aoter nemetañ, dres dre berzh an doare unvaniezh hep he far bet meneget endeo hag a c'hoarvez kellies gwech ha ma keduner hep pec'hed grevus.

O vezañ maz eus anezhañ ivez muiget forzh pe gerrin-all derc'hennadur bev Aberzh ar Groaz ma tever dioutañ kement rad a zo, emañ Kerrin an Aoter o tevoudañ en hon c'hreiz, gouez da Sant Tomaz Akwino frouezhennoù pouezusoc'h eget reoù an holl gerrinoù all. Gantañ emañ dreistfonn ar radoù hep o far, dre m'emañ en e geffridi peurseveniñ devoudad ar c'herrinoù all, war-bouez degas d'e gefleunded al labour bet boulc'het gant pep hini anezho diouzh e du, sev unvaniñ ar strishañ ar gwellañ pep kristen gant Jezuz Krist e Salver.

Kresk ar briwerc'hioù douedaveel

War un dro gant kresk ar rad-yonaat e tegas ivez ar c'hedunadur en hon c'hreiz, hag e kenfeur gantañ, kresk ar briwerc'hioù douedaveel : Feiz, Goanag ha Karitez.

Hogen ar Garitez, dreist pep tra, a vez levezonet gant ar c'hedunadur rak evel ma lavar Sant Tomaz Akwino : "Ar gevradiezh eo Kerrin ar Garitez, ar c'herrin a vez ouzh he derc'hennañ hag he diorren..." (3a Pars, 18 a3 ad 6). Ac'hano e teu ma kresk hon c'harantez evit Doue hag an dud hervez ma kresk ivez ar rad-yonaat en hon askre, hag evel ma n'eus araez all ebet a ve gwerc'hoc' h eget Kerrin an Aoter evit ober d'ar c'hras-yonaat kreskiñ ennomp, n'eus araez all ebet gwelloc'h kennebeut evit diorren ennomp seurt karantez douevel hag he gorren betek en he barr.

Kresk ar briwerc'hoù diazezel

Niverus eo ar briwerc'hoù dreistnaturel, nemet e c'hallont holl bezañ direet d'ar pevar briwerc'h diazezel : Ersellegezh, Reizhded, Nerzh ha Goñvoregezh, evel ma 'm eus graet meneg anezho e'm pennadoù diaraok. Diazezel e vezont anvet, peogwir e talvont da ziazez d'ar re all. Enskuilhet e vezont gant Doue e pep den gant ar yonidigezh da geñver ar Vadeziant.

Evel m'emañ ar ger o verkañ, e vez ar briwerc'hoù douedaveel oc'h ober dave kentizhel da Zoue, pezh na ra ket ar briwerc'hoù diazezel koulskoude, hervez ar feizoniourion, e vezont o perzhiañ e buhez Doue war-bouez danzen hon spered d'ar Gwel Gwennvedik. Ouzhpenn ma teuont en diwezh da vezañ ken hañval ouzh ar briwerc'hoù douedaveel, ma vezont evel intret ganto evit bezañ direet e penn kont d'ar Garitez nemeti. Ha diouzh ma kresk ar rad-yonaat e vezont ivez o kreskiñ.

Kresk kedoù ar Spered Glan

Ne spir ket ar briwerc'hoù koulskoude da ren oberoù silvidik, hag alies e rankont bezañ skoazellet gant ar Spered Glan. Anez dezho avat kaout ivez en o c'hreiz gouestedoù da sentiñ ouzh lusk ar Spered-Santel ne c'halljent ket akuitañ ganti nemeur. Setu perak e vez bastet seurt gouestedoù da bep ene kristen gant ar Vadeziant. Anvet e vezont : Doujañs, Nerzh, Deoliezh, Emgelenn, Skiant, Meizegezh ha Furnez. Seul vui e kreskont ha seul vrasoc'h emichañs e vez o berzhusted. Hogen, peogwir e kreskont evel ar briwerc'hoù war un dro gant ar rad-yonaat, seul gresketoc'h e teu houmañ da vezañ, diwar-bouez ar c'hedunadur arreet ha menec'h, seul vrasoc'h e teu ivez o nerzh da vezañ. Ma c'haller lavarout e tennont, diouzh ma kreskont, da varrekaat ar c'hristen war ar yolerezh - eleze war ar bedenn gantaezouezel ha da vale fonnus war hent ar santelezh. Hevelep gouestedoù roet gant Spered Doue, dimp da vont dalc'hmat diouzh e vroud silvidik, e vez graet anezho Kedoù ar Spered-Glan.

Frouezh all a bep seurt

Gant Kerrin an Aoter e teu dimp frouezh all a bep seurt. Soñjomp ervat da gentañ e vezomp dre ar c'hedunadur o kejañ gant kreud, kalon, spered, ha dreist-holl doueded an Hini a vez anvet ganimp Hon Salver Jezuz-Krist. Hevelep madoù avat e vez stag ouzh pep unan anezho ur rad diseurt.

Korf dinamm Jezuz emañ stag outañ ur rad graet evit santelaat hon c'horf, dezhañ da sentiñ seul aesoc'h a se ouzh darvennadoù hon spered.

E wad uhelbriz emañ stag outañ ur rad-digoll ha - daspreañ graet evit kadarnaat ennomp goanag hon

silvidigezh ha magañ en hon c'hreiz pep deltu ha pep peurboellad war dachenn hon emgann speredel.

E galon santel emañ stag outi rad an deneridigezh hag ar gouvrantiezh, da bep keduner deol da gantaezañ ha d'arnodiñ pegen c'hwek e vez yev un Tiern evel hennezh !

E spered emañ stag outañ ur rad-sklerijenniñ - dimp da veizañ gwelloc'h ar gwirioneziou bezhel ha da ren hon c'hammedoù e pep diogelded war hentoù teñval ar Feiz.

Doueded nevet an Arloz en diwezh, emañ stag outi ar Gantaezouezelezh hag ar Goursav, unan graet moarvat evit sebeziñ speredoù evurusañ luoz an Aeelz.

Gouez da Sant Gregor, karantez Doue ne chom ket aroarek ha pa grog en ur galon bennak e vez broudet houmañ ganti d'ober moliaç'hou.

Setu perak e vo tu dimp adarre da welout, gant studiennoù all a fell din sevel diwezhatoc'h, perak e vefe arabat dimp digalonekaat pa vanomp evel estren ha yen ouzh ar c'herrin. Rak gant ar c'hedunadur, e vez ennomp ar Spered Glan, eleze Spered Treindedel ar C'hrist, neket hepken o pediñ en hon lec'h, hogen o karout en hon lec'h ivez. Kement ha ken bihan ma ne c'hall mui neuze nag ar pec'hed nag an dianlenadoù anezhañ, zoken marvel, chom da genvevañ gantañ, adal m'En degemeromp diwar-bouez ar c'hedunadur. Nann, karantez Doue n'eo ket unan aroarek an hini eo !



An Terkoniadoù Ret evit Keduniñ

Evel maz eo bet displeget e korf ar studien am eus talbennet "*Gant petra eo graet frouezh ar c'hedunadur*" e c'hall Kerrin an Aoter degas dimp madoù hep o far, pa dostaomp outañ e stad a rad. Hogen kevreizh e vez devoudadoù pep kedunadenn da derkoniadoù an hini a vez o keduniñ. Seul welloc'h an terkoniadoù, seul fonnusoc'h an devoudadoù.

Un derkoniad ret ha bastus : bezañ e stad a rad

Ar stad a rad zo stad an den o virout ar rad-yonaat en e greiz, eleze stad ur galon ezdalç'h eus pep pec'hed marvel.

Un derkoniad ret, hogen bastus, eo neuze ar stad a rad, dimp da c'hallout dastum frouezh madoberus ar c'hedunadur. Rak, bez' e vez ar gevradiezh o teurel he frouezh ent digeñver gant kenober an den, mann nemet dre berzh he rinwerc'h dezhi, adalek ma ne vez ket hennezh o herzel dre ur skoilh bennak ouzh gwered ar c'herrin. Hag ar skoilh nemetañ a c'hallfe an den degas enep dezhañ eo ar pec'hed marvel.

Neuze pa gedunomp kuit a seurt pec'hed, e tarbaromp, da vihanañ e kenfeur keñveriek, da genneziñ rad-yonaat en hon c'hreiz. Ha petra bennak ma ne vez seurt kennez ken bras ha ma c'hallfe bezañ, peogwir ne c'hoarvez neuze nemet diwar-bouez izegad an terkoniadoù darvennet, e vez anezhi kouslkoude kreskadur gwerc'hel ha devoudel.

Sed a zo da lavarout da lod kedunerion hag int ken morc'hedet ma vezont techet da grediñ ne dennont gounid ebet eus o c'hedunadennoù, dre ma vanont yen ouzh ar c'herrin, evito neoazh da dostaat outañ hep pec'hed grevus ebet. Dremmou doaniet a vez outo war-lerc'h o c'hedunadenn, dre ma kredont ne dalv da netra pezh o deus graet. Padal n'eus amañ etreenn ebet : bez' e vez hon holl gedunadennoù pe disnevet pe frouezhus. Pa vezont graet e stad a bec'hed marvel, gant gouzout d'an unan, e vezont disnevet. Hogen pa vezont graet e stad a rad e vezont frouezhus evit pep den, ha setu perak ez eo spletusoc'h mont da geduniñ eget chom hep mont "*pegen dister bennak ar ragemaozerezh*", evel lavar dimp St Tomaz Akwino (1).

Un dra bouezus evit ar c'heduner : gwellaat e derkoniadoù.

Bez' e vezomp, emezon-me uheloc'hik, o tarbar, da vihanañ e kenfeur keñveriek, da lakaat hon c'hedunadennoù da deurel frouezh, adalek ma tostaomp ouzh ar c'herrin e stad a rad. Anat eo avat e vez seul vrasoc'h hevelep frouezh, seul welloc'h e vez an terkoniadoù ganimp. Ha mennad Hon Salver eo e c'hallfe pep kristen unaniñ e strivoù gant gwered ar c'herrin, da hemañ da vezañ strujusoc'h ar frouezh anezhañ.

Setu perak e lavarer e vez ar c'hedunadur o tevoudañ un dreistad rad-yonaat e daou stumm : "*opere operato*" hag "*ex opere operantis*" pe, gant gerioù brezhonek, dre wered ar c'herrin ha dre wered ar gwreder, hemañ o vezañ darbenner ar c'herrin. Dre wered ar gwreder, da lavarout eo, o terc'hel kont eus heberzh e derkoniadoù hag e ragemaozerezh. Bennozh d'ar c'heduner enta ha d'e strivoù

speredel eo e vo ar c'herrin o tevoudañ ar wech-mañ un dreistad rad-yonaat.

Gant se, neb a chomfe war ar mennad nemetañ, na sparlañ gwered ar c'herrin dre skoilh ar pec'hed marvel, e talvezfe moarvat e gedunadenn da vastañ dezhañ an dreistad-rad e vez boas ar gevrardiezh da deurel mann nemet dre berzh he rinwerc'h dezhi. Ar gounid avat a dennfe hennezh neuze ac'hano a vefe kentoc'h da dostaat ouzh an hini a denne gwechall ar vugale vihan pa veze roet dezho da geduniñ a-raok ma vezent c'hoazh deuet en o oad-skiant.

En amgin, pa vez ragemaozet ha terkoniet mat nep keduner bennak, e weler Kerrin an Aoter o tevoudañ en e c'hounid daou zrestad rad-yonaat : un dreistad kentañ dre wered ar c'herrin ("*ex opere operato*") ha dre wered ar gwreder ("*ex opere operantis*"), un dreistad all kevreizh, hemañ, da derkoniadoù an den. Dre wered ar gwreder enta pe, gant gerioù all, pa vez ragemaozet an den e vez neuze ken digor e askre da wered ar c'herrin ma c'hall e gedunadenn lieskementiñ niver ar grasoù goubarzhel stag dres a-walc'h ouzh e labour speredel rakwezat : nerzh da drekiñ e dechoù fall, startijenn evit kanttreiñ da vat ouzh Doue ha ren diwar-henn ur vuhez kristen kefleunoc'h.

Kement ha degas ur skouer, e c'haller lavarout n'eo ket digoradur ar prenestr a vez an arbenn e vez glanaeret ur pezh bennak en un ti : an aer c'hlan nemeti an hini eo.

Koulskoude ne vije ket glanaeret an ti mar ne vije ket digoret ar prenestr. Ha seul vrasoc'h e vo hemañ digor, seul welloc'h e vo glanaeret an ti.

N'eo ket hon terkoniadoù enta a vez an arbenn perak e vez enskuilhet un dreistad rad en hon askre, petra bennak ma ranker sellout outo evel ragamlegadoù da seurt kreskadur.

Evit troc'hañ berr, lavaromp e vez ar c'herrin seul verzhusoc'h o werediñ, seul vrokusoc'h e vez hon strivoù da

genwerediñ gantañ. Diouzh e derkoni, e vez neuze gouestoni hon ene.

Ar pennderkoniadoù ret evit keduniñ gant frouezh

Evit keduniñ gant frouezh e tleer degas ar pennderkoniadoù da heul : feiz, glanded ar galon, emdreantegezh, uvelezh ha karantez.

Feiz

Anvet eo ar gevradietz "Kerrin ar Feiz", ha n'eo ket hep abeg. Aes a-walc'h e vez moarvat kaout ar feiz pa c'haller gwiriañ darvoudoù buhez Hon Salver adalek burzhud eured Kana, gant an dour troet e gwin, betek emziskouez an Dasorc'had da Domaz an Diskredig hep ankouaat azbevidigezh Lazar. Rak amañ e vez kendrec'het pep reiz gant anadurezh doueded an Tiern Jezuz. E par ar gevradietz avat, n'eus anadurezh ebet hag, evit ur gwel, e chom ar bara bara, ha gwin ar gwin. Hep feiz enta, n'eur ket evit dizoleiñ nep gouezvoud douevel dindan ar Spesoù Kantouestlet. Ya, petra bennak maz eo pep kerrin ur c'hevren, - e gwir, tost eo an eil ger ouzh egile dre o ster, - emañ moarvat Kerrin an Aoter da vezañ sellet evel an hini souezhusañ ha marzhusañ holl, e pep keñver.

Peseurt feiz eo neuze an hini a zo goulennet diganimp evit tostaat ouzh Banvez ar C'hrist ? Hama, dres an hevelep hini a weler o parañ war skramm darvoudoù an Aviel gant skouerioù niverus evel hemañ da heul :

Ur paour-kaezh tad glac'haret-holl o welout e pe stuzioù emañ e vab, hemañ reuziet gant ur c'hleñved diaoulek hañval ouzh an drouksant : "*Mar gallez ober un*

dra bennak," emezañ d'Hon Salver, "*ro skoazell dimp dre druez!*" - "*Mar gallez?*" eme Jezuz. "*Pep tra zo gallus evit neb a gred.*" Hag an tad raktal neuze da youc'hal . "*Me 'gred! Ro skoazell d'am diskredoni!*" (Mark, 9,22)

Mard eo ar feiz avat a zo goulennet diganimp evel pennderkoniad evit tostaat ouzh Kerrin an Aoter, arabat dimp ankouaat ez eus anezhi ivez, dre hennad, ur Briwerch'h Douedaveel o kreskiñ e kenfeur gant kennez ar rad-yonaat, evel maz eo displeget e korf ar studienn diaraok "**Gant petra eo graet frouezh ar c'hedunadur ?**" Pezh a c'haller dezren ac'hano neuze eo ne vez ket gwall risklet da goll ar feiz neb piv bennak a vez o keduniñ alies, rak aes eo meizañ ne ra fonn ar magadur kevradiel degemeret gant feiz nemet diorren hevelep feiz, da vihanañ lakaet e ve bodet an holl ampegadoù hag an holl derkoniadoù bastus evit ma weredfe ar c'herrin. Atizañ feiz ar yaouankizoù krog da geduniñ eo neuze ar pep retañ hag ar pep mallusañ d'ober. Ha diwar ar feiz wirion a vint bet o tegas da geñver o c'hedunadennoù kentañ e strinko ur feiz seul greñvoc'h ha birvidikoc'h ma vo seul welloc'h o zerkoniadoù.

Glanded Ar Galon

An derkoniad-mañ n'eo ket hepken bezañ distrob diouzh an hudurnezh an hini eo, hogen an disamm diouzh kement mibiliach a c'hallfemp bezañ stag outañ. Ha peseurt karantez pe berc'hentiez n'eo ket mibiliach amañ war an douar ? Gouez da skridaozour **An Emskoueriañ diwar Jezuz-Krist**, pa vez o c'harmiñ :

"Overez an overezioù, overez pep tra" (Kohelez I, 2)
"nemet karout Doue hag aremprediñ nemetañ." (De Imitatione, I,2) (2)

Glanded ar galon zo ivez treuzdougen war hon breudeur ar garantez a vagomp evit Doue ha, diwar se, tremen hep ren droug ebet outo na dre gomz na dre wered, hogen diskareziñ dezho e pep degouezh, rak, emañ Kerrin an Aoter o terc'hennañ marv Jezuz, emaberzhet war e groaz evit silvidigezh an holl. Nac'hañ neuze ober ur striv bennak d'atizañ hon c'harantez e-keñver Doue hag hon hentez pa dostaomp ouzh Taol an Aberzh Kevradiel a vefe koll frouezh ar grasoù goubarzhel hollbouezek bet meneget uheloc'h.

Emdreantegezh

Pa vezer en un degouezh pouezek bennak e tleer dastum kement evezh a vez gourampliget gant an darventezioù. Ha kejañ gant an Tiern Jezuz Hon Salver dindan ar Spesoù Kantouestlet zo moarvat an degouezh pouezekañ evidomp war an douar. Ret e vez dimp neuze emzastum hag emdreantiñ, eleze treantiñ hon ti diabarzhel lec'h ma fell d'an Dreinded diskenn ur pennadig amzer. Bezañ emdreantek enta zo an derkoniad ret-holl evit gallout embreger ar Yolerezh, tachenn hon gwir emgav gant Doue.

Ha bezañ emdreantek zo, na petra, an doare nemetañ da c'hlanerañ hon ti diabarzhel, eleze da bleustriñ war an emnac'h evit dont da gejañ ha da vezañ unanet e gwirionez gant Ostiz Meur hon askre.

Uvelezh

Seurt emnac'h zo ivez merk an uvelezh wirion a vezomp o tiskleriañ pa lavaromp a-raok pep kedunadenn : "Va Doue, n'on ket dellezek e teufec'h betek ennon..." C'hoant am eus lavarout e tlefe hon uvelezh mont betek

anzav ned omp ket zoken evit magañ an disterañ mennoz na trivliad nag evit distagañ an disterañ ger, anez dimp bezañ skoazellet gant E Spered.

Karantez

Koulskoude, mar n'omp ket gouest da vegañ nep mennoz pe from na, diwar se, nep karantez evit Doue drezomp hon-unan, e tleomp **klask henn ober** en ur lavarout gant Isaia :

*"Diouzh an noz e vez va ene ouzh ho c'hoantaat"
"Ha va spered ouzh ho klask e'm diabarzh." (26,9)*

Ha mar gouezomp trevekaat ervat kement doan pe boan emamp o reuziñ outo evit ober ganto danvez un aberzh da vezañ kinniget gant hini an Arloz ma teu ar frouezh anezhañ dimp dre ar c'hedunadur, ez eo diaes krediñ ne zeufe erziwezh levez leun karantez Doue da dreuzañ evel ur barr-heol ar c'houmoul du berniet war hon spered.

Padal n'eo ket hervez kementelezh ar from emañ dimp prizout hon c'harantez e-keñver Doue. Ne gav hon trivliadoù o gwir ster nag o zalvoudegezh nemet hervez ar **pez a reomp** evit nep piv bennak a vez danvez hewel d'hon c'harantez. **Petra ober** avat evit Doue hag **Eñ dalc'hmat** disgwel d'hon selloù denel ?

Setu perak, "*Mar lavar unan bennak "Me gar Doue !", evitañ da gasaat e vreur, n'eo nemet ur gaouiad. Rak an hini na gar ket e vreur a vez o welout, penaos e c'hallfe karout Doue na vez ket o welout?" (I, Yann 4, 20)*

Fraezh a-walc'h eo, a gav din, ar c'homzoù rakveneget, deuet dimp digant Sant Yann, evit ma veizfemp ha ma tivizfemp e pep amzer penaos e tleomp karout Doue. Seurt karantez n'eus ket anezhi teneridigezh na trivliadegezh hep

ken all, hogen goubadur start peurgent da gevazasiñ hon buhez ouzh ar pezh emañ Diskuliadurezh an Aviel o c'houlenn diganimp.

Padal, ar pezh am eus displeget uheloc'h evit kel ar feiz evel Briwerc'h Douedaveel a dalv kenkoulz-all evit ar garantez, anvet c'hoazh karitez, anezhi ur Briwerc'h Douedaveel ivez. Ha pa seller peseurt durc'hadur a zo da reiñ da garitez yaouankizoù troet da gomuniañ alies, e vez anat d'an holl n'eo ket karantez kevrinel a zo d'erbediñ dezho evel an amkan kentizhel da vezañ tizhet ganto, petra bennak ma c'hall zoken ur c'hrennard bezañ santeloc'h, na petra, ha diwar se, kevrineloc'h eget un den aet war an oad, c'hwezhañ ma ra ar Spered e-lec'h ma kar. O vezañ maz eus anezho tud yaouank barrek evit gwir d'ober kalz e gounid o breudeur, eo karantez fetis a zo da lavarout dezho degas, dreist-holl da geñver pep kedunadenn, dezho da vezañ diarvar **e vezint o karout Doue e gwirionez dre vont gant hent an arempred hag an engouestl e gounid o nesañ**. Setu penaos e kresko ivez en o c'hreiz evel Briwerc'h Douedaveel e kenfeur gant kennez ar rad-yonaat, ar garantez kevrinel na c'hallo nemet livañ war o dremmoù levezon drant ha yac'hus an eneoù frontal.

Sed aze an terkoniadoù emañ dimp ober diouto mar mennomp tostaat ouzh Kerrin an Aoter da vediñ trevadoù fonnus diwarnañ ha neuze da vezañ e tro da zastum nerzh speredel a-walc'h, dimp da c'hallout kinnig hon buhez evit an holl dud, hon breudeur, evel m'en deus Hon Salver kinniget e vuhez evito. Ha pegen klouar bennak e c'hallfemp bezañ paz eomp da geduniñ, n'ankouaomp morse n'eo ket ni hon eus dibabet debriñ kreud ar C'Hrist. Ur retvez speredel eo, bet diskuliet dimp gant an Aviel, ha ni barrek drezi da brizout seul welloc'h c'hoazh diventelezh karantez Doue en

hon c'heñver. Arabat dimp enta bezañ chalet pa chomomp klouar da geñver ur gedunadenn bennak. Rak, evel ma lavaren ar wech diwezhañ, karantez ar Spered Glan, Spered Treindedel Hon Salver Jezuz-Krist, - Hemañ dalc'hmat forzh penaos o pediñ en hon lec'h, pa n'ouzomp-ni ket petra da lavarout, - zo a-walc'h evit amsaviñ seul welloc'h a se c'hoazh hon c'harantez diouerek dimp, adal ma vez o tiskenn enomp war-wel hon magañ, ha bastus ganimp kement terkoniad bet studiet amañ.

Skrid latin an arroudennoù meneget

- (1) "Quantulacumque sit praeparatio..."
- (2) "Vanitas vanitatum et omnia vanitas, praeter amer Deum et illi soli servire..."



Ar Chem hag an Doare

Dlead pep kristen engouestlet zo klask enraokaat evit dont d'anaout Jezuz ha digeriñ e spered d'e sklerijenn, war-bouez ren ur vuhez kewir ouzh kewirañ. *Ya, moarvat, hogen pe dre hent ?* Amañ eo, hep mar ebet, e tarzh, skedus dirazomp, skouer santez Tereza a Lesawez, dimp d'emvataat anezhi. Hag evit kompren ervat ar patrom speredel a vez-hi o kinnig dimp, e ranker sevel d'ar prantad diwezhañ a dremenas er gêr kent dezhi mont d'ar C'harmez, eleze pa zivizas emouestlañ muiget biskoazh d'ar vuhez devriek hag emziouerek. Klevomp kentoc'h an testeni a ro dimp : *"Pa lavaran emziouerek,"* emezi, *"n'eo ket evit reiñ da grediñ e raen pinijenn ; siwazh, biskoazh n'em eus graet ; emzioueriñ a oa evidon kabestrañ va youl, darev ma veze-hi dallbezh d'ober he renkoù, diwall va zeod diouzh pep rebekadenn ha ren arempredouigoù ouzh va hentez,, hep reiñ da c'houzout..."*

Diwar an nebeut linennoù-mañ e weler pegen spiswel, hogen hep damant eviti hec'h-unan e oa spered Tereza da ziskuliañ he natur hag he neuzid. Seurt doare, unan tre d'hon santez da gelenn ent louereel ha gougel doazhadur Jezuz, setu ma vo anvet ganti *embreg an netraouigoù !* Seurt hentenn, avat, aes d'ar c'hentañ sell, zo, koulskoude, *kalz diaesoc'h da bleustriñ* eget ma kreder : a-walc'h eo hec'h arnodin evit gwelout ha bezañ darboellet en he sigur.

Bloaz a-raok he marv e spisaio c'hoazh Tereza he chem hag he doare. O treiñ davet Jezuz e skrivo, da skouer : *"N'eus tu ebet evidon da ziskouez dit va c'harantez, nemet o vannañ bleuniemoù davedout, eleze, o virout na*

dremenfen hep an disterañ aberzhig, an disterañ sell, an disterañ komz, din da denañ goumid eus an traoù bihanañ evit o seveniñ gant karantez."

Sed a c'houlaka neuze, hep mar ebet, ur garantez troet hep ehan ouzh tudenn Jezuz, hag ur c'hoant da vevañ da bep mare dindan e sell, o klask lakaat *embreg an netraouigoù* da dalvezout evit ober plijadur dezhañ. Ur gwir chem evit karout eo neuze an hini ma weler Tereza oc'h eswelaat warnañ, ken war-bouez debarañ dezhi anvegad *an doazhouriezh* he deus an Iliz kedanavet e oa-hi deuet da biaouañ gant uhelvriegerzh ar chem e kont, anezhañ ur gwir gouzoud. Ur wech m'edo he c'hoar Oanez o c'houlenn diganti ditouroù diwar-benn an hentenn a venne-hi kelenn d'an eneoù war-lerc'h he marv, e respontas : "*Fellout a ra din kelenn an araezioù bihan o deus graet ken bras berzh ganin ha lavarout dezho n'eus nemet un dra d'ober amañ war an douar : teurel da Jezuz bleuniennoù an aberzhoù dister, mont dezhañ dre allazigoù. Setu penaos ez on aet dezhañ ha setu perak e vo graet ken kaer degemer din."*

Seurt lavarou n'int bugelek nemet evit ur gwel paz eus anezho komzoù diles ha kalonek digant bugale *n'o devez seurt ebet nemet netraigoù* da ginnig evit ober plijadur ; netraigoù avat a vez c'hwek, hep ket a var, da galon o c'herent ; netraigoù hag i c'hwek ivez, hervez Tereza, *da galon Doue*.

Gant ar bloavezh-mañ gouestlet d'al Lonlid, selaouomp Tereza o kelenn dimp he chem hag he doare, ma vo, diwarno, azveret hon buhez kristen en he donañ.

Stummidigezh an Avieloù ha Ginivelezh ar Feiz Diles

An Avieloù n'eus bet anezho da gentañ nemet levrigoù-deskiñ graet evit ar prezegerezh, ar c'hatekizerezh ha moarvat evit al liderezh. Bez' e oant da lakaat war gont Gwazourion ar Gomz ha war gont an Testoù Gwelat, en un douez, diouzh m'henn lavar dimp a-hend-all en un doare fraezh Sant Lukaz pa skriv evel-henn : "*Dre m'o deus kroget lies a hini da zanevelliñ an darvoudoù bet c'hoarvezet en hon touez, hervez ar pezh a zo bet degaset dimp gant ar re a zo bet adalek an derou testoù gwelat ha deuet da vezañ gwazourion ar gomz (I, I-2)."*

Petra oa neuze kefridi gwazourion ar gomz ? Daoust hag e oant testoù gwelat a-raok pep tra ?

Arabat ankouaat emaoomp er prantad abostolek, sev e prantad an Iliz o c'henel evel ur gellig strujet gant Spered Doue. Diaes eo avat gwelout sklaer e grez ur vuhez o tiglorañ. Heñvel eo ar gudenn un tamm ouzh hini ar vi denel. Rak, piv, lakaomp, diwar sellout hepken ouzh ar vi e kont, a c'hellfe lavarout pe liv a vo diwezhatoc'h gant daoulagad ar bugel ?

Kemeromp ivez, da skouer, kudenn ar velegiezh. E gwirionez n'eo nemet en eilvet kantved hepken ma weler oc'h anadiñ fraezh ha diarvar ar framm urzhazel anezhi. Heñvelseurt evit ar gristoniezh : ret e vo d'an Iliz, gant he doazhourion lakaat kalz amzer evit displegañ en un doare spis kevrin ar C'hrist, hag Eñ Gwerv Doue emzenet, dreist-

holl e-kreiz an trubuilhoù renet gant an ariouriezh, an neuzelouriezh hag an nevegezh.

Adlennomp avat arroud Aviel Sant Lukaz pa gomz diwar-benn an "Testoù Gwelat" deuet da vezañ "Gwazourion ar Gomz". Daoust ha kewir eo bet bepred Gwazour ar Gomz hep dilezel mui pe vui diskuliadur an Test Gwelat ha, diwar-henn, gwerc'helezh ha gwirigezh Krist an Istor, evit lakaat ar pouez dreist-holl war Grist ar Feiz, unan mui pe vui gwengelek ? Dimp da welout sklaer, e rankomp gouzout peur ez eo bet skrivet an tri aviel kentañ. Mard int nevesoc'h eget na soñjer, e c'hallfe moarvat lavar an testoù gwelat bezañ bet mui pe vui distreset pe, da vihanañ, deveizet en un doare o pellaat atav tamm pe damm diouzh Krist an Istor. Setu pezh o deus kredet lod evel Bultmann ha Loisy. Hogen o vezañ ma sav an testennoù d'ar remziad kristen kentañ, e welomp n'eo ket didalvez haeradennoù an testoù gwelat hag e krog adarre Jezuz an Istor da vevañ en e leunder dirazomp, peogwir emaint o treuzkas dimp ar pezh "**o deus klevet**", "**gwelet gant o daoulagad**", "**arvestet outañ**" ha "**stoket outañ gant o daouarn**".

Kompren a reer neuze o deus gallet an testoù gwelat dont da vezañ Gwazourion ar Gomz, eleze Gwazourion ar C'hrist, Gwerv ar Vuhez, ha gouzañv evitañ betek mervel. Ken e teu pep tra diwar se da vezañ fraezh ha kempoell.

N'emañ ket ar feiz kristen emichañs o tibennañ diouzh bloaziadadur an avieloù, re anat eo, hogen, diouzh bloaziadadur an avieloù eo e tibenn razas deveizadur an testennoù hag an doare da studiañ difazi beziad an eztaol-feiz.

Arabat ivez ankouaat o deus an Ebestel buhezet o feiz e-keñver ar c'hredennoù diazez, a-raok ma voe skrivet an avieloù kentañ ha zoken skridoù Sant Paol, anezho an testennoù kristen kentañ. Ouzhpenn maz eo diwezhatoc'h c'hoazh he deus an Iliz savet roll ar skridoù destlek.

Gant an Iliz enta, o vuhezañ ar beziadoù, hag int sol ar feiz nevez, eo e vo treuzkaset ar gwirionezioù aet d'ober an Dazroadur endalc'het er Skritur. Nemet ez eo fazi embann, evel ma ra, siwazh, ar Blendestourion, emañ ar feiz o loc'hañ diwar ar Skritur nemeti, rak n'eo ket er Skritur eo e kreder da gentañ, hogen e Doue, na petra : "*Me gred e Doue !*" Pezh na lavar ket e tleer dilezel ar Skritur, hogen, e gin, he studiañ hag hec'h atersañ dalc'hmat, paz eo-hi Komz Doue, ur gomz, houmañ avat, deveizet hag ezpleget-aketus gant Doazhourion an Iliz koulz ha gant Tadoù ar Goursenedoù war-hed ar c'hanvedoù.

Arrabat e ve ivez kammgemer komz an den evit komz Doue. Da ziluziañ seurt kudenn e ranker, da gentañ, studiañ hini ar rizennoù lennegezhel, rak ne vez ket desteriet ur skrid reizhoniell, da skouer, evel ma testerier un danevell istorel. Bezet a vezo, ret eo da gentañ enta gouzout ar pezh he deus mennet ar Skritur degemenn dimp ha peseurt ster a zo gant hevelep degemenn e-keñver ar feiz.

Ar pep pouezusañ neuze da gounaat eo ar bomm "**Evit Hon Silvidigezh**" a gaver atav dre ar vongeal gristen hag e skridoù ar Goursenedoù. Seurt bomm eo a ro neuze doare ar rizhenn lennegezhel o tennañ d'ar Skritur evel testenn bet skrivet gant un den, unan avat awenet gant Doue, rak arbenn pennañ ar skrid eo gwered Doue hag an arbenn benvegel gwered an den-skrivagner. Rizhenn lennegezhel ar Skritur zo kreizet war ar feiz er silvidigezh degaset gant Doue.

Heverk e gwirionez eo stadañ ne vez morse diskuliet dimp gant an Avieloù beziadoù krai, danvezel nemetken, hogen beziadoù o tegounañ bep taol Istor ar silvidigezh, ur silvidigezh speredel enta, pezh a zo gwir ster ar ger e korf ar bomm "**Evit Hon Silvidigezh**", petra bennak maz eo diazezet war darvoudoù danvezel gwirion. Rak Krist klodus ar feiz eo Krist ar Groaz, Krist an Istor bet marvet dindan bPons-Pilat ha dasorc'het e gwirionez evit bezañ emziskouezet ouzhpenn ur wech d'e dud. Arnevezour, gant ar ster disivoudat, e vez hep ket a var, neb na gouna nemet an desteriadur "speredelour", o nac'h ar beziad krai, evel ma weler darn oc'h ober, da skouer, e sigur darvoud Klodouezadur Jezuz war an Tabor.

Hogen buhezañ en he leunded ar feiz kristen wirion eo a ra neb a wel pouezegezh kentañ ar beziad krai : Jezuz an Istor bet klodouezet dirak Pêr, Jakez ha Yann, hep diwelout evit kelo ster don seurt beziad, graet ha maz eo evit aozañ speredoù an Ebestel da zegemer marv Jezuz a vo trec'h neoazh hepdale war an ankoù evit hon silvidigezh, trec'h ha klodus enta, dres evel war an Tabor !

Amoet eo neuze studiañ stummidigezh an avieloù war-bouez enebñ Krist an Istor ouzh Krist ar Feiz. Hag oc'h adlenn adarre, ur wech ouzhpenn, arroud Sant Lukaz rakveneget, e welomp, e pep diarvarded, ez eus anv, gant "Testoù Gwelat" eus Krist an Istor "hon eus stoket outañ gant hon daouarn" ha, gant "Gwazourion ar Gomz" eus Krist ar Feiz speredel diles, eus Gwerv ar Vuhez, ar Mab Trafadel o ren en tu dehou d'E Dad, kevret gant ar Spered Glan, e klod an Dreinded Santel.



Kudenn ar Ster

Levenezñ a c'heller o welout e vezer krog bremañ da veizout ned eo ket ar beved nemetañ an hini a gont evit mab-den, hogen ster ar vuhez, rak al loened ez eus beved ganto ivez. Droug bras he deus graet neuze ar frammadelouriezh d'ar speredoù, diouzh ma klaske bezañ ur brederouriezh ha neket un hentenn skiantel hep ken all. Hogen prederouriezh en he skritell, na petra, ne oa ken anezhi.

Evit kel Skiantoù an Den enta, hag i bet meulet ha gourlaeziet er c'hantved diwezhañ - pegen pouezus bennak e c'halfte bezañ a-hend-all an enklaskoù a vez renet ganto, - e tleer sellout evel un dra vat e vefe deuet ar speredoù da veizout ez eus bevennoù dezho koulz ha da gement diskiblezh all a zo. Rak, ken uhel eo savet hiziv barr-lizadurezh hon c'hevredigezhioù, ken bras ennañ begozh an dispenn hag an argoll o plavañ warno, e par an talvoudoù hag ar reoladoù, ma tleer distreiñ hiviziken hep termal d'ar c'hudennoù penndalc'hel, evit o stignañ dre "ya" ha "nann" hepmuiken. Rak, en tu-hont d'ar pezh a zo diazezel hag eulañ, n'eus nemet amvoud evit mab-den.

Liesteriek eo a-hend-all ar ger "ster" (durc'hadur, eulad, meizadusted trabedoniel). Seurt liesteriegezh e vez ganti brellet pep merk war an hent. Ken ma vez pep spered war nes koll penn e neudenn. Ha setu penaos e vez troet krampouez diwar yod.

Ret enta distreiñ d'ar penndalc'h, eleze da gudenn drabedoniel ar ster, war-bouez diverzhout an daou rumm

anezhañ : ar ster kentañ, nesañ, anadennel, hag ar ster eulañ, diazezel, tralen. Daoust ha tu zo ivez da grouiñ ster? Enep da **Sartre**, ar prederour gall, e c'hallomp lavarout ez eus tu en un doare ha diouzh pe c'hoñvor, pa severer da skouer ur gwezhiad gant pennegezh hag e pep rezid. Kenkoulz-all pa c'hoarier da dennañ gounid eus an darventezioù, e c'haller ivez dont emichañs da reiñ ster d'e vuhez, war-bouez dibab dezhi ur pal resis. Rak na pet gwech n'eus ket bet klevet tud o lavarout "roet em eus ur ster da'm buhez".

Setu penaos e teu neuze mab-den da c'hounit, e par e hanvoud, ar gempoellded hag an unded a vez o pinvidikaat e vuhez hag o tegas dezhi dudi ha plijadur, da skouer, pa vez o ouestlañ e amzer d'ar skiant, d'an arz pe d'ar politikerezh pe c'hoazh d'ul lazenn hael bennak. Brav, dispar hennen holl, emezon-me. Nemet e chomer bepred gant seurt traoù war live ar ster kentañ rakveneged, sev e rez an enmanusted pemdeziek. Un deiz avat e c'hoarvezo ganimp merzhout ez eo anster e-unan hevelep ster bet oc'h unelaat hag o vleinekaat hon buhez. Gant gerioù all : dont a raimp da welout emañ pell seurt traoù holl, skiant, arz, politikerezh diouzh ar ster eulañ, an hini gwirion, dre ma vezont o steuziañ gant ar marv. Dispoell hag anster eo neuze pep buhez, disoc'hañ ma ra war un toull, gant ur balad douar war-lein ha pare ! Moarvat e vefe dispoell hag anster, mar ne vefe netra war-lerc'h seurt peñse. Nag hon bugale, emezoc'h, daoust ha n'eo ket int-i a ro ster dres a-walc'h d'hon buhez-ni ? Eo, moarvat, hag ar ster a gaver aze zo unan kaer zoken ha brokus, nemet e vez hon bugale, siwazh, o vont ivez gant an hevelep hent ha ni e korf un nebeut bloavezhioù diwezhatoc'h, diskaret ma vezont d'o zro gant an hevelep anster... N' eus enta nemet ar pezh a c'hell nagenniñ ha dizarbenn anster ar marv a gement a c'hell

reiñ ster d'ar vuhez en tu-hont da doull ar bez, eleze Doue hag an dreistvuhez peurbadel, hemañ ar ster eulañ anezhañ, an hini nemetañ gouest d'hon dieubiñ diouzh pep dic'hoanag dirak an amvoud.

Tu a vefe da gadarnaat seurt haeradenn gant degont tud vrudet deuet da gemmañ o mennoziou diwar benn ster ar vuhez, a-raok ober o zalaroù. Kemeromp da skouer unan bet gouestlet e vuhez gantañ d'ar politikerezh, lakaomp. E ser ur politikerezh lavaret, bet o vleinekaat en holl d'an holl buhez henezh, diaes moarvat kavout gwelloc'h skouer ! Ur wech merzhet avat gant hon haroz flemmadoù kentañ an ankoù en e gorf, setu ma krog da soñjal o lavarout : n'eus ster ebet gant an holl draoù-se ! Petra chomo war va lerc'h en diwezh ? Un nebeut linennoù e gounid an Istor, hag int buan ankouaet. Rac'h an engouestl bet va hini, rac'h an emgannoù am eus renet diwar-bouez forzh difreterezh ha difrinkerezh droch, dibennach hennen holl : derez-mann ar ster a-geñver gant ar beurbadelezh ! Ha setu penaos e tremeno neuze hon haroz diwar live ar ster kentañ, - amañ live ar politikerezh, - da hini ar ster tralen hag eulañ, an hini gwirion, an hini a c'hallfed ober "ster ar ster" anezhañ.

Mar gall moarvat ar ster kentañ unelaat ur vuhez bennak ha reiñ dezhi durc'hadur ha kempoellded, - pezh a zo pouezus endeo, - e ranker gwelout evelkent e van diazezet seurt pouezusted war an amvoud, pa ne vez ket soliet war dralended Doue, evel war ar wirionez nemeti.

Penaos e vez meizet neuze kudenn ar ster gant hon c'hempredidi ? Mar ne sellont enni, diouzh skouer ar frammadelourion, nemet kempoellded diabarzh an anadennoù diwar c'horre pe kempoellded an emframmoù danvezel pe neuze, mar fell dezho, diouzh ma kinnig **Sartre**, gourwaskañ ha divizout a-zivout ar ster diwar-

bouez un droc'hvarn didek digant ar rezid, e vo tonket dezho chom da dreñ ar ster war gement tu a zo, betek ma teuint da goll o fenn gant an anster. En enep, mar klaskont stigmañ kudenn "ster ar ster", eleze kudenn ar ster eulañ ha tralen, e kavint ar sklerijenn hag ar wirionez. Rak amañ e vez an drabedoniezh hag ar feiz kravezel o komz kedunvouezh : Doue, an Tralen, eno eo e kaver ar ster nemetañ, an hini ma tenn anezhañ pep ster all, darnel pe didralen, e dalvoudegezh.



Tonkad Marzhus *Ur Plac'h Anvet Mari*

Perak e plij kemend-all ar Werc'hez Vari d'an dud, zoken d'ar re nad int ket mouget gant ar feiz kristen ? Perak e plij-hi muioc'h eget n'eus forzh peseurt santez all ? Moarvat dre maz eo ur plac'h disheñvel diouzh ar re all. Zoken an dud na gredont ket kalz e kelennadurezh an lliz diwar he fenn, a vez skoet, - hag ar Vuslimiz da gentañ, - gant tonkad ar plac'h yaouank Mari, bet mamm ha chomet gwerc'hez daoust da se.

Ne gaver ket e gwirionez bernioù tud ken oc'h ober goap pe o risignal pa gomzer diwar-benn Mari, mamm ha Gwerc'hez. Doujañs a virer, daoust da bep tra, d'ar Werc'hez a vez oc'h emziskouez muioc'h-mui dre ar bed, abaoe tremen kant vloaz a zo. Goap ne reer ket kennebeut ouzh an dud a bep seurt a weler o vont da Lourda, Fatima pe c'hoazh lec'hioù all. Moarvat e tleer gwelout aze frouezh he c'harantez evit an holl dud war an douar. Tost e chom evel ur vamm ouzh spered kement den a zo, dre maz eo mamm da Jezuz, ha dre maz eo graet an holl evit mont d'ober ur c'horf hepken gant Jezuz he Mab. Ya, pep den war an douar eo lakaet dezhañ dont da vezañ breur da Jezuz dre ar vadeziant a vez o skuilh en e greiz buhez Doue e-unan. Bezañ breur da Jezuz a c'houlenn enta, evit an holl, kaout an hevelep mamm, ha Mari eo dres ar vamm-se.

Ur stumm all avat zo c'hoazh da welout penaos eo Mari ur vamm evidomp, rak, adalek an deiz ma lavaras "ya" d'an ael deuet da c'houlenn diganti hec'h asant, e c'haller sellout

outi evel benveg hon silvidigezh ivez. Lod bras he deus kemeret e poanioù Jezuz ouzh troad ar groaz, evit hon diframmañ diouzh krabanou ar marv, ha setu perak e voe diskleriet evel mamm dimp, dre benn Sant Yann, gant Jezuz a-raok mervel. Hogen, war-bouez ober ganti ur vamm evit Yann, ha dre Yann evidomp, e rae Jezuz ganti an hini ma tremenje drezi buhez Doue, dre ar c'hras, en hon c'hreiz. Mamm hon silvidigezh, en ur stumm, eo deuet-hi da vezañ dre berzh he stad. Kendasprenez, da lavarout eo dasprenez gant ar C'hrist, hep emichañs kemer e lec'h, setu moarvat pezh a c'hellomp soñjal ez eo Mari en hon c'heñver, ken unanet ha maz eo ganti he Mab, Hon Salver. N'eo ket hep abeg enta e reer anezhi "Repu ar Bec'herion" ha "Dor ar Baradoz". Hag evel kendasprenez ez eo c'hoazh brasoc'h mamm evidomp, rak, mard eo chomet hep gouzañv poanioù ar vamm, pa zeuas Jezuz war an douar, reoù gwall galet a c'houzañvas, pa rankas reiñ dimp ar vuhez evel mamm dre ar Spered, unanet betek mel hec'h eskern ganti he Mab tachet ouzh ar groaz. Ha sed endeeun pezh a felle da Simeon gozh gwechall lavarout pa zisklerias dezhi : *"Te vo treuzet da ene dit ganti ur c'hleze"*.

N'eo ket ni hepken avat oa salvet war groaz Jezuz. Hi oa salvet ivez, rak dre boanioù da zont he Mab e oa endeo diwallet diouzh pep pec'hed e-pad he buhez.

Ya, diwar ma teuas war an douar, e voe leun a c'hras, pezh a droer ganti gerioù all pa lavarer krouet hep pec'hed pe ganti gerioù diaesoc'h hag uheloc'h pa reer kont eus "Dibec'hkrouet" pe "Dibec'hkrouedenn".

Mari zo bet krouet enta e stad a c'hras hep namm ar pec'hed a vez o tont dimp digant Adam. Evel maz on o paouez lavarout, salvet eo bet Mari ivez ganti kroaz he Mab. Salvet eo bet avat en a-raok dre zellidoù da zont ar C'hrist

pa varvje evit pep den. Ha salvet eo bet hep ma c'hellfe na droug na gwall ebet, koulz diwar he natur, koulz diwar itrik an diaoul dont da vastarañ dezhi hec'h ene peurc'hlan. Santel eo bet enta adalek maz eo bet ganet, hep m'he dije bet ezhomm eus badeziant ebet.

Bezañ mamm d'an holl dud, dre berzh ar C'hrist, a ra dezhi, - ouzhpenn bezañ mamm ganti he c'horf da Jezuz, - bezañ mamm da Zoue war un dro. Rak, war-bouez lavarout "ya" d'an ael, he deus graet Mari diouzh ma teuje Doue ivez war an douar e korf un den. Anez dezhi, anat eo, ne vije biskoazh bet Enkorfadur ebet ganti eil Nouez an Dreinded Santel. Anez dezhi n'en dije ket bet ar C'hrist kemeret hon natur evel den ha ne vije ket bet unanet kennebeut natur Doue ganti natur an den da vont d'ober pezh ez eo deuet Jezuz da vezañ : Doue ha Den war un dro. Ya, Mamm da Zoue eo-hi diwar se, peogwir Jezuz he Mab zo Doue ivez.

Pezh a c'hellomp dezastum ac'hano eo e voe lakaet da Vari, a-holl-viskoazh, bezañ Mamm da Jezuz, Mamm da Zoue ha d'an holl dud war un dro. Kalz santeloc'h eo-hi enta eget kement sant hag ael a gaver er baradoz.

N'eo ket diaes diwar se kompren perak e tlee ar Werc'hez Vari sevel da vev ha dasorc'hiñ, dres evel he Mab. Rak, goude d'Hon Salver bezañ pignet d'an neñv en ur c'horf bet krouet end-eeun ganti Mari, penaos krediñ e vije bet lezet e Vamm garet gantañ da vreinañ e teñvalijenn ar bez evel holl vugale Adam ?

Mari zo ar c'hrouadur kentañ bet ijinet ganti Doue. A-holl-viskoazh, hag a-raok kement ael bennak a zo, e oa dibabet Mari da vezañ Mamm d'ar C'hrist, Doue ha Den. Ha tra ma oa lakaet **Luzouger**, - pe mar kerit "Lucifer" e latin,

- da ren war an urzh naturel, Hi oa dezhi bezañ mestrez war an urzh dreistnaturel, evel Mamm da Zoue a rankje bezañ, dre c'hanedigezh Jezuz he Mab.

Gant se, n'eo ket hep gwir abeg e lidomp bep bloaz gant levenez vras, Gouel Dougedigezh Maria Hanter-Eost, rak ken meurdeus ha ken uhel eo Mamm Doue, ma ne c'hell krouadur all ebet sevel dreist dezhi. Ya, Mari douget d'an neñv zo hep mar ebet skedusoc'h eget an holl aelez war un dro. Hi eo Rouanez an Neñvou e gwirionez, ha dibabet eo bet seulabred gant ur bern kristenion evel Rouanez o Bro evit aozañ eil c'hanedigezh He Mab, da geñver e zistro, e dibenn an amzerioù.



Speredelezh ar Vuhez Kristen :

Azasaerezh Div Nouez

Gant ar Voudaiezh evel furnez, e tesker dimp an emgenreizh hag ar bresourded. Kreñv-meurbet e vez, moarvat, seurt galvadenn speredel war dachenn an divez, nemet e chom bepred mab-den en un digenvez marvus, daoust d'e strivoù hiniennel, renet hep an disterañ liamm gant gouezvoud *Unan all*, c'hoant dezhañ kedvevañ gantañ en e greiz.

N'he deus ar gristeniezh enta netra da welout gant furnez Vouda, war an dachenn voudoniel pe drabedoniel, ha setu perak n'emañ ket o c'houlenn digant an den tizhout ur santelezh klok dre nerzh e strivoù hiniennel *nemeto*, evel ma ra Boudaiz, daoust ma tle pep kristen, dre seveniñ strivoù hiniennel ivez, hag evel arouez e genober gant gras Doue, ober diouzh erbed an Aviel pa vez hemañ o kemenn : "*Bezit enta peurvat evel maz eo peurvat ho Tad Neñvel...*" (Mazh 5-48).

Tizhet e vo neuze ar beurvadelezh e kont, - o tennañ da hini Doue hep morse, na petra, bezañ par dezhi, - warbouez ober ar pezh emañ ar gristeniezh o c'houlenn da gentañ, - sev, an erdroerezh ouzh *un egile* diabarzhel, evit ma teuy ho puhez da vezañ un oberenn a vo kefleuniet gant div nouez oc'h azasaat an eil ouzh eben, hag o kenlabourat kedunvan etrezo. An Egile rakveneget, eleze, an nouez all, estren deoc'h enta, eo a vo neuze oc'h unelaat ho puhez. Rak petra, pe gentoc'h, piv emañ an Aviel o tiskuliañ dimp,

da heul, ivez, hen destennoù ar Bibl, nemet un Doue karker, ezhommek, o kinnig da bep den unaniñ e c'hoant gant e hini, ha diskouez dezhañ fiziegezh, war-bouez kaniadiñ da sioulder *ar bedenn-veveriañ*, anvet *yolenn*. Dre *yoliñ*, evit gwir, pezh a zo mont e darempred gant Doue, eo e tizher kraonell ar gristeniezh, peogwir e kroger neuze da bleustriñ pezh a zo bet anvet *Hent ar Beurvadelezh* gant Tereza Veur Avila.

Diraez a rit neuze ur stad speredel hevelep ma ne c'hallit ken bevañ hep gouezvoud un nouez lavaret oc'h anezhañ ennoc'h hag o kinnig deoc'h, ouzhpenn-se, keveleriñ ganti war dachenn al liderezh neñvel krog endeo lomañ, dre hantererezh an Iliz, dibunet ma vez he liderezh glannel ganti bep bloaz en e bezh, etre Nedeleg hag ar Sulgwenn. Gant hevelep liderezh eo e vez neuze ar c'hristen o tispenn roudoù ar patrom maz eo Jezuz, Mab Den, an Hini nemetañ, e klod an Tad barrek d'unelaat kement buhez-den a zo, - hep derc'hel kont, dre ret, eus nep furnez bennak estren d'ar ar gristeniezh.

Evel ma weler, dre ar bedenn eo e tizher azasaat, bep un tamm, youl an den ouzh mennantez Doue. Pe da goulz, avat, e vezit o pediñ ervat ? Hervez Tereza Veur, bepred, ez eo pa verzhit e sav ennoc'h, da c'houde, ar c'hoant d'ober muioc'h c'hoazh mennantez *egile*, ha setu.

Dirak ken plaen kelennadurezh, e welomp ervat ned eo ar gristeniezh, da gentañ, nag un divez nag ur raklun, na, zoken, un *destenn*, na pa ve biblek, na, kennebeut, ul Lezenn diouzh skouer kraveziou all, na, tamm ebet, ur gealiadurezh. Ned eo, e gwir, e par buhez pleustrek an den, nemet azasaerezh ur youl denel ouzh mennantez douevel ar C'hrist, azasaerezh div nouez o kejañ an eil ouzh eben.

Levenez an den o peurgrediñ hag o peurgledouriñ ouzh *unan all* diabarzhel dezhañ e-unan, evit ober gant e vuhez ur genoberenn etre daou : setu petra eo ar gristeniezh.

Dezastum a c'heller diwar-henn ez eo ar C'hrist, war un dro, ar C'hannad hag an Negesaer ; hag ar c'hannadur, an neges. Ouzhpenn bezañ arbenn pe douger ar c'hannadur, ez eo ivez *an danvez* anezhañ. Pebezh kemm neuze gant ar Pennoù Kravezel all, evel Bouda, Zoroastr, pe c'hoazh, Moc'hamed ! Rak hini ebet anezho ned eo aet betek emginnig evel danvez o feiz d'o diskibled, evel m'en deus graet Jezuz, Hon Salver. Holl o deus prezeget ur gelemnaduezh diavaezel d'o nouez. Pal kevrin ar C'hrist zo, neuze, perzhiañ e buhez diabarzhel Doue e-unan, hag Eñ trafadel ; eleze, en tu-hont d'an amzer. - 'hontistorel' enta, ha disheñvel-krenn, dre se, diouzh ar Pennoù Kravezel rakveneget, stag maz int-i ouzh an Istor. Setu perak e c'hall Doue seveniñ unded an amzer, hag hon dieubiñ diouzh an digenvez a zo marvus evit Furnezioù evel hini Vouda. Hogen ankenius-meurbet ivez evit - zoken, - kredourion ar c'hraveziou doueat nann-kristen, gant an diaes ma vez evito tizhout ar beurvadelezh hep skor dendouevel ar C'hrist en o c'hreiz. Hag evit gwir, pezh en deus lavaret Sant Paol diwar e benn e-unan ha diwar-benn ar C'hrist : "*N'eo ket me an hini a vev : ar C'hrist eo e vev ennon,*" diskibl ebet da Vouda na da Voc'hamed n'eo bet biskoazh o tiskleriañ kement-all diwar e benn, na diwar-benn e Vestr.

Ur wech ouzhpenn enta e c'haller sabatoù dirak ar prof kaer he deus graet ar gristeniezh d'an denelezh o tegas dezhi hentenoù-silvidigezh ken aes hag an hini bet studiet amañ ganimp. Rak oc'h ober diouzh azasaat ho puhez ouzh hini ar C'hrist, gwir Vab da Zoue, penaos ne c'hallfec'h-c'hwi ket tizhout ar beurvadelezh kalz gwelloc'h eget e nep doare all

bennak, hag, e skeud se, seveniñ gwelloc'h ivez ar c'hemenn
rakveneget : "Bezit enta peurvat evel maz eo peurvat ho
Tad Neñvel..."



Ur C'hraf O Sellout Ouzh Emskiant Jezuz

Hag-eñ e ouie e oa Doue

1. Titourennoù an Avieloù diwar-benn ar gudenn.

Emgreudadur pe emzenadur Hon Salver n'eo ket bet ha
n'emañ ket c'hoazh hep degas kudennoù a vez diskoulmet
bep ma teuont . Hag an hini gentañ bet stignet endhu a voe
hini hennad Jezuz. Dirouestlet e voe er bloaz 454 gant
Goursened Kalkêdon o tiskleriañ e oa gant Hon Salver div
natur : an natur-Doue hag an natur-den, dezho da sol an
hevelep nouez, hini ar Mab, Gwerv Doue. Evel ma oar pep
kristen desket, teir nouez a gaver e seurt giz e stern an
Dreinded Santel : Nouez an Tad, Nouez ar Mab, ha Nouez
ar Spered Glan.

Ar c'hraf a fell din studiañ bremañ n'en doa graet
kudenn biskoazh betek un ugent vloaz bennak a zo. Rak,
gouzout hag-eñ e ouie Jezuz e oa Doue, zo un dra ha ne oa
ket bet chalet gantañ ar gristenion betek-henn, na
nebeutoc'h c'hoazh an nann-kristenion, aes henn meizañ.
Perak avat ne oa ket bet sachet muioc'h evezh ar gristenion
gant seurt kraf ? Moarvat, dre ma oa chomet kreizet ar
preder kristen e-pad pell war natur-Doue Hon Salver,
kentoc'h eget war e natur-den. Hogen, Jezuz, emit-hu, petra
soñje E-unan ? Biskoazh n'en deus-Eñ skrivet studienn ebet.
N'en deus skrivet nemet war an traezh da geñver gobidell an
avoultrez. Komzet en deus avat, hag e korf peder diell
anvet "Avieloù" e kaver skrivet an traoù bet graet pe lavaret
gantañ. Hogen amañ e kejer ouzh un diaester, rak

disheñvelderioù a verzher e seurt keñver etre doare an tri gentañ : Avieloù Mazhev, Mark ha Lukaz, diouzh un tu, ha doare ar pevare : Aviel Yann, diouzh an tu all. Da skouer, gant an tri gentañ anvet "Avieloù kendremmegoù", pe "Kendremmavieloù", pe verroc'h, "kendremmek" pe aozet etre ar bloaz 33 hag ar bloaz 65, ne gaver ger ebet gant Jezuz da spisaat e oa Doue, tra ma ne ra Aviel Yann nemet komz diwar e benn evel Mab Doue. Daoust ha diwir pe anistorel e vefe diwar se Aviel Yann ? Nann, ha sed amañ perak.

2. An displegadurioù da reiñ diwar-benn an disheñvelderioù a gaver etre an dielloù

Ret eo gwelout e c'hall ar wirionez kemer daou stumm : ar stumm empleg pe anezpleg hag ar stumm ezpleg. Ar stumm ezpleg pe anezpleg eo ar c'hreunenn ezpleg a vez hadet, hag ar stumm ezpleg an danvouezenn, eleze, an diwan deuet da ziorren ha da vezan gwinizh. Kement ha kemer ur skouer all, lavaromp c'hoazh ez eus un den empleg eus ar groueell stummet e krozh he mamm, pe eus ar bugelig bet ganet, hag un den ezpleg eus ar c'hrennard, an oadour pe ar c'hozhiad. Ent-ezpleg ez eo an oadour neuze pezh a oa ent-empleg e krozh e vamm, ha setu perak ez eo grevus meurbet kudenn ar sioc'hanerezh, rak neb na ra diforc h ebet etre keal an ezpleg ha keal an anezpleg, hennezh ne wel, emichañs muntr ebet o lazhañ ur bugel e krozh e vamm.

Evit krennañ war an displegadenn-mañ, e c'haller haerñ an gaver enta, e korf Aviel Yann, netra muioc'h eget ar pezh a gaver e korf ar C'hendremmegoù, enderc'hel ma reont pep Gwirionez en he stumm ezpleg, kefleun ha

diorreet, hep da hemañ degas netra nevez diwar-benn ar C'hrist.

Bez' ez eus c'hoazh un amselled all barrek da zisplegañ an diforc'h a hañval bezañ etre ar c'hendremmegoù hag Aviel Yann : kudenn ar speredegzh an hini eo. Ar poell-den a zo dezhañ div neuz : ar speredegzh pe boell-stuzegzhel, hag ar "spered" pe boell-diazez. Da skouer, speredegzh ar broadelour brezhon a zo disheñvel diouzh hini e genvroiz c'hallekaet ha speredegzh ploueziz diouzh hini kêriz. Nemet e kaver koulskoude an hevelep spered, eleze an hevelep poell-diazez gant an eil re hag ar re all war dachenoù all. Dre se, pa vezer o studiañ un diell pe ur skrid. bennak, e tleer bepred klask ar pezh a denn d'ar speredegzh hag ar pezh a chom e dalc'h ar "spered" evel poell-diazez.

N'eus tu ebet neuze da gompren ar c'hudenoù o tennañ da Jezuz, anez anavezout speredegzh ar Yuzevion ma veze Hon Salver o komz outo. Ha gant petra e oa graet seurt speredegzh, dres a-walc'h, mar n'eo ket, evel bremañ c'hoazh, gant an undoueadegezh en he ster strishañ ? War a grede dezho, e oa Doue dieil, unseurt ha digenvez, hep na vije troet da gaout nep darempred kenevin na kouvant gant an dud, diwar dezhañ dont, da skouer, da wiskañ an natur-den. Hag Eñ o c'houzout fraezh ar wirionez war e gont, e par an natur-Doue, penaos en dije gallet evelato diskleriañ an traoù en o rez dirak ur bobl evel hounnezh, anez tremen evit ur barrletaer; eleze, an euzhusañ pec'her a oa.

3. Hentenoù disheñvel Jezuz

Setu m'en em gave Hon Salver, neuze, gant ar Yuzevion, dirak ur gudenn spontus da zirouestlañ. Hogen, dre sellout ervat penaos en deus graet evit akuitañ ganti, e

vo meizet gwelloc'h un tamm perak emañ an tri aviel kentañ, evel m'emaint, eleze, tavedek a-walc'h war hennvoud an Aotrou. Rak evel ar filmoù kentañ-holl o tennañ da vuhez ha da lavarou Mab an Den, setu penaos e tleer desellout an avieloù kendremmek, tra maz eo, diwezhatoc'h, skrid Sant Yann, aozet ma voe war-dro dibenn ar c'hantved kentañ, en un amdroadurezh ken disheñvel endeo ma c'halle an Abostol kozh arvestiñ ouzh ar "filmoù kendremmek" gant ur preder dieupoc'h, donoc'h ha ledanoc'h, war-bouez, marteze, gouestlañ muioc'h amzer ivez eget an tri gentañ da sevel e labour.

Hogen, distreiñ d'ar filmoù kentañ, dres a-walc'h, eo a zo d'ober.

Anat e oa d'Hon Salver en doa dirazañ tri rumm-tud da genteliañ :

- da gentañ, ar bobl na c'halle-eñ kelenn, emichañs, nemet dre vras, hep endonañ kraf ebet ganti ;
- da eil, an diskibled, anezho daouzek a dud pe seikont, hervez an devezhioù ;
- ha da drede, ar genevined, eleze, an diskibled tostañ d'e galon, Pêr ha Yann peurgetket.

Dirak an engroez, ne c'halle ket Mab an Den, anat eo, diskleriañ fraezh e oa Doue, evit an abegoù bet plaenaet uheloc'hik, nemet e rae diouzh lavarout, ha dreist-holl, diouzh ober traoù ha na oa ket an dud evit kompren, anez dezho anzav e oa-Eñ Doue pe, da vihanañ, tremen un den...

Disheñvel ar gont avat pa ne veze nemet e ziskibled war e dro. En o ser e c'halle neuze mont pelloc'h ganto war dachenn an Diskuliadurezh, o tiskouez dezho doare e Dad en e geñver. Ha donoc'h e veze c'hoazh e gelennadurazh gant Pêr, Jakez ha Yann. Da Yann, peurgent, eo e veze profet ar c'hevriñoù c'hwekañ. Souezh ebet neuze da gaout

o welout pegen estlammus eo Aviel an Abostol muiañ-karet ha, dre vras, e skridou all.

4. Doare-anaout ha doare-ersevel ar Gwerv Emzennet o tegas skoazell da zirouestlañ ar gudenn

Ouzh sklerijenn an elfennoù bet studiet betek-henn ez eo poent dimp bremañ klask gwelout, gant elfennoù all, hag-eñ en deus e gwirionez gouezet ar C'hrist, e par e natur-den, e oa Doue.

An div natur bet meneget e deroù ar skrid-mañ n'o deus da sol nemet un hinienn hepken. Ha seurt hinienn nemeti anvet "nouez" e brezhoneg ned eo ket douevel evit darn ha denel evit un darn all. Douevel eo, ha netra ken, hervez kelennadurezh an Iliz. O vezañ ma veze neuze ar C'hrist oc'h emouezañ, oc'h anaout hag o prederiañ evel den gant un nouez douevel, ne weler ket ervat, d'ar c'hentañ sell, petra a c'hallfe a-walc'h ober kudenn e par e varregezh da c'houzout pep tra. Ha koulskoude ez eus ur gudenn, pa lavar, da skouer, dre Vazhev (24-36) ne oar ket pegoulz e vo diwezh ar bed. Setu neuze na ouie ket Jezuz pep tra diwar-benn pep tra, pezh a hañval bezañ iskis evit ur meiz-den amzalc'h ouzh un nouez douevel.

Gant Karl Rahner (1) ez eo bet diskouezet en un doare dreist e c'halle un dianaoud, e par natur-den Jezuz, evel e par natur-den pep hini ac'hanomp, mont gant emskiant "andezgeriet", hogen don ha padus, eus an darempred hep e bar a gaver war dachenn an anadennoniezh etre emouezerezh dodel hag emouezerezh andodel.

Hogen, kentoc'h eget ur skoilh, ez eus tu, kaerañ pezh a zo, da gantverzhout (Mazhev, 24-36), evel ur skor d'an displegatur a zo da vastañ amañ, o vezañ ma vez seurt arroud o reiñ un testeni bev hag emdarzhek o tennañ da

ziskouez e oa gwirion dended Jezuz. Rak aes eo gwelout ne c'hallfe nep douevoniour deveizañ dere an Den-Doue mar ne welje netra denel, eleze, diouerek ha bevennek oc'h anadiñ warnañ. Anez da seurt dioueregezh ha bevennegezh, lakaomp, penaos kompren en dije Jezuz gouzañvet hag e vije marvet war e groaz **evit gwir**, ha neket evit ober van ? Penaos, anez da se ivez kompren en dije diwasket skuizhder, naon, sec'hed, ha laosket, a-raok mervel, ur garm o tennañ d'an dic'hoanag ? Mont a ra zoken an douevoniour bras, H. Urs von Balthasar (2) betek haeriñ en doa Jezuz ar feiz evelomp.

Gwir anaoudegezh hag emouezerezh denel eo a gaver enta, e par "**Me**" Hon Salver. Gwelomp neuze, dimp da vont un tamm pelloc'h c'hoazh ha da resisaat hon displegerezh, penaos intent e oa gant Jezuz, evel ma lavar K. Rahner "emskiant andezgeriet... eus an darempred en doa gant Doue".

Hañvalout a rafe a-walc'h, diwar ar pezh a zo plaenaet uheloc'h, e oa sebeliet, enklozet "**Me**" douevel Jezuz en e natur-den, tonket ma oa dezhañ gouzañv hag emesteuziñ evit silvidigezh ar bed. Klevomp, kentoc'h, gant peseurt entan ha tridegezh emañ Sant Paol, war-dro ar bloaz 63, o teskrivañ en e lizher da Filipiz (II, 6-8), betek pelec'h e fellas d'an Arloz-Doue diskenn, mennet ma oa da vriata stad izelañ hon deneliezh :

6. Eñ, kendere gant Doue
ne sellas ket evel skraporient
emgevataliñ gant Doue ;
7. nemet ez emesteuzias
dre gemer dere ar sklav
hag emheñvelaat ouzh an duñ.
Goude tremen evit un den

8. ez eo c'hoazh emeskarzhet
dre sentiñ betek ar maro
hag ar maro war ar groaz.

En un doare kevrinus e ouie Jezuz enta e oa Doue, nemet e rankas, evel Gwerv, evit gallout dont da vezañ un den evel pep hini ac'hanomp stegnañ ul lenn fetis, par d'ur goumoulenn deñval, dirak e vez. Ha setu perak e chome "andezgeriet", liz da Rahner, an emouezerezh douevel, buhezet "don ha padus" gantañ koulskoude. Diwar-henn e veizer gwelloc'h perak e oa ken bevennek-all gantañ ivez lod gouiziadurioù evel an hini bet anaduret uheloc'h gant Mazhev (24-36). Anez dezhañ degas hevelep bevennegezh ha dioueregezh e par e natur-den, sklaer eo n'en dije gallet ar C'hrist biskoazh gouzañv ha mervel, eleze, kas da benn e Gefridi Silvidigezhus.

5. Arbenn seurt anaout hag ersevel : "Me" Jezuz hag hon "me" dimp

Un diforc'h penndalc'hel a verzher evelkent etrezomp ha Jezuz. Diwar hon emrended hennadel eo e vezomp-ni o sentiñ, da vihanañ, pa vezomp rez e pep keñver. Moarvat e chom rez ar C'hrist ivez dalc'hmat, kevatal maz eo gant e Dad. Hogen, endra maz eo hon nouez a vez evidomp diazez hon emrended, e par Jezuz, e van amzalc'h e nouez dre maz eo **an darempred-karantez** emañ o vogañ evel Mab gant e Dad eo a zo oc'h amparañ boud ar C'hrist evel Nouez Douevel, eleze, Nouez ar Gwerv.

Heñvel a c'hoarvez ivez, evit ac'hano, gant Nouez ar Spered Glan, hag Eñ ar Garantez etre an Tad hag ar Mab. Kement ha ken bihan ma n'eus bezoud d'an Teir Nouez nemet en abeg d'an Darempredoù a zo kenetrezo pe, gant gerioù all, en abeg d'ar **saviad amzalc'hel** m'emaint splujet

ennañ. Ha gwelout a reomp betek pelec'h e c'hall seurt darempred-karantez mont, neket hepken etre an Tad hag ar Mab Treindedel, hogen : 1) etre an Tad Neñvel ha mibion c'hlennel dezhañ ; 2) etre ar vreudeur c'hlennel kenetrezo e par ar Spered Glan ; ha kaeran pezh a zo, betek : 4) etre an Doue Triat hag an alvez kevan.

6. Dastumenn

Ouzh sklerijenn an arguzennoù bet kinniget amañ, e veizer mat bremañ perak ne ra Jezuz nemet gant gerioù diresis pa vez o komz diwar e benn E-unan, dre hantererezh ar c'hendremmegoù. Nag alies, da skouer, e vez arveret eno gantañ an droienn "Mab an Den" ! Biskoazh n'en deus haeret en un doare fraezh, dre hantererezh Yann, e oa-Eñ Doue, kaer en doa hennezh bezañ ken nes-all d'e galon koulskoude. Rak heverk a-walc'h eo ne gaver dindan bluenn ar Pevare Aviel er nemet an eztaolad "Mab Doue" pezh a dalv, gwir eo, kement ha komzoù ar Gredo "*Doue diwar Doue, Luc'h diwar Luc'h, Doue gwirion diwar an Doue gwirion*", e-lec'h ma tinod fraezh ar gevatalded etrenouezel.

En despezh da seurt kevatalded avat, - ur wirionez houmañ bet haeret start, evit ac'hano, gant pep aviel, e chom bepred keal ar Mab ar pezh ez eo ivez, o sachañ gantañ dalc'hmat war e lerc'h keal ha youl ar sentidigezh kouvran, evel ma voe kont gant Jezuz o vont betek an dioueregezh wirvozek hag emaberzhek vrasañ. Eno, moarvat, - hag eno hepken, emañ dimp mont da glask an displegadur-diazez d'ar c'hraf aet d'ober danvez ar studienn-mañ.

Notennoù :

- (1) Karl Rahner. - "*Erwagen : über das Wissen in Selbstbewusstsein Christi*"
- (2) Urs Von Balthasar. - "*Feiz ar C'hrist*".

Kevredigezh Kristen

Moarvat ne c'heller ket nac'h ez eus bet gwechall hag e kaver bremañ c'hoazh kevredigezhioù kristen graet gant tudadoù o vevañ dre vras hervez spered an Aviel, zoken gwechavez daoust d'ar skouer fall a veze - pe a vez bepred - diskouezet dezho gant o levierion.

Ar gudenn zo gouzout ha mat eo ar gevredigezh m'emaomp-ni ivez, Brezhoned, o vevañ enni d'an ampoent. Ha, kenali war an divoud gant rener ar gelc'hgelaouenn-mañ e lavaran ken uhel hag eñ : **Nann, pell ac'hano** ! Ouzhpenn ma c'hallan ivez atodiñ ne glever kristen ebet, pegen araogelour bennak e ve zoken, o tifenn an dodenn enep.

Evit va c'heloù din, biskoazh n'em eus disklêriet e c'halled diazezañ nep spered kristen war hini hon c'hevredigezh kempredel. Ha mar em eus kinniget gant va levr "**En Donvor Da Vreizh**", ur patrom kevredigezh nevez, diazezet war ar gevangevreadelouriezh, n'eo ket moarvat evit toniañ gant an hini, - pe reterat pe gornogat e ve, - m'emañ ar gristeniezh o c'houzañv kement-all diwarnañ.

Sklaer eo emañ an droukreizhiad kornogat maz omp-ni, Brezhoned, enket enni o lazhañ an nemorant eus ar spered kristen kevredigezhel a gaver c'hoazh dre amañ hag o tagañ da vat zoken ar broioù startañ en o feiz evel Iwerzhon, lakaomp. Penaos avat, he deus gallet seurt gwalenn kouezhañ war Europa ? Karout a rafen gwelout Imbourc'hiz all o turiellat un tammig mel o fenn evit degas arbennoù sonn da hevelep diskar speredel, hag o kinnig neuze mezegadur azas evit klask distrujañ ar pore. Hep ma c'hallfe den koulskoude, evit kelo, haerñ e vo saveteet ar c'horf klañv war an taol na marteze dindan ur c'hantved ac'han.

Ouzh emdro broioù bras Europa ez eo stag displeberidigezh ar vuhez kristen dre amañ, dreist-holl ouzh ar c'hemmoù bet degaset e buhez Kornogiz gant euzhvil ar brezelioù-bed riezvroadelour hag an enkadennoù marvus diwanet war o lerc'h. Kinnig a rejod adalek ar bloaz 1948 louzoù amerikañ da barraat ouzh an diaesterioù armerzhel, nemet e teujont da vezañ war an dachenn speredel ha kravezel, ken marvus ha ma oa marvus an enkadenn hec'h-unan war an dachenn danvezel. Hag e gwirionez deuet oa Kornogeuropa da vezañ ken dinerzh da heul brezel 1940 ma teredas ar Stadoù-Unanet gant ar **Steuñv Marshall** war skoazell hon broioù. Hogen, war donnoù lanvezh an arc'hant bras hag ar madoù amerikan o tiruilhal war c'hlannoù Europa gaezh, e spurmantet endeo erevent ar mennozioù hag ar boazioù digristenhaus oc'h ober orbidoù spontus. Buan, e korf un nebeut bloavezhioù nemetken, e weljomp trac'hoant an arc'hant; an hely, kevret gant an emgerc'hegezh hag an dizurzhioù stag outo oc'h aloubiñ kalonoù hon tud, dres evel diagent reoù an Amerikaned. Ha setu, diwar se, lakaet da dalvezout, en un doare strollennel, war hon bed kozh, ar c'hrennlavar brudet, anavezet dre holl ar brezhonegva :

**Ar paour, pa binvidika,
Gant an Diaoul ez a...**

Diwar drouklevezon kevredigezh danvezelour ar bevezñ o tiglorañ e Kornogeuropa, edod enta o vont da gas da benn an digristenidigezh bet boulc'het, evit ac'hano, abaoe pell dre rannbarzhioù greantel ar c'hevandir.

Neuze avat, evel ma c'hoarvez bep un amzer, sed ar Spered Santel, o tont d'awenañ ur wech ouzhpenn e Iliz en un doare diseurt. Aloubet eo kreizon ar Pab nevez, Yann XXIII, gant ur c'hoant bras da vodañ ur Goursened. Ya, youl ar Pab an hini a vez dalc'hmat domani brientek ar

Spered Santel, pa vez hemañ o hadañ enni greun an trevadoù nevez. Hag evel ma oar ervat pep kristen desket, ur wech galvet hag aozet ar Goursened evit arc'hwelañ ne baouez ket luc'h ha skoazell ar Spered Glan da fonnañ warnañ, da vihanañ keit ha ma chom unanet an izili anezhañ kenetrezo ha gant ar Pab. Dre se, pa weler penaos ez eo bet tremenet an traoù evit Vatikan II, n'eus arvar ebet da gaout war emell dien ar Spered Glan e kement diferadenn bet kemeret e Roma dindan ren ur Pab a zo bet ken santel ha ne vern peseurt pab santel-all en e raog. Daoust hag-eñ, kaerañ pezh a zo, n'eus ket bet graet anezhañ, **ar Pab mat** ? Poent oa evelkent d'ur C'hristen bennak eus strollad **Imbourc'h** henn disklêriañ uhel. Ha setu ar pezh a ran bremañ.

Tagañ neuze ar Goursened, evel ma ra lod, zo terrañ gant an Iliz, dismegañsiñ ar Spered Glan, da vihanañ keit ha ma ne vo ket bet galvet ur vodadeg all heñvel war c'houlenn ar Pab. Ne lavarant ket avat n'eus ket peadra da damall lod kristenion a vez dalc'hmat o klask deveizañ diferadennoù ar Goursened hervez o faltazi dezho, pezh a zo ur gudenn all, forzh penaos. Ha bremañ maz eo aet ar Goursened en e hent, daoust hag e ranker lavarout e tleje bezañ bet adkristenet ar bed endeo gantañ ? Diskouez emeur gwall zizesk war istor an Iliz e vefe magañ hevelep mennoz, pa soñjer e rankjod gortoz n'ouzon pet vloaz a-raok dastum frouezh kentañ Goursened Trenta e lec'hioù zo ! Ur vro gristen oa deuet Breizh da vezañ a-raok ar brezel pevarzek. Troet on da grediñ avat ne fonnas madelezhioù Goursened Trenta war ar bobl vrezhon nemet pell-bras diwezhatoc'h. Ha n'eo ket dre ma chome troc'het hon bro diouzh pep darempred gant ar bed an hini oa, - dodenn bet arveret atav enep dezhi, - hogen dre ma vez kont e seurt giz gant ar pobloù darn o vezañ primoc'h eget ar re all da wellaat, evel, siwazh, da gleñvel ivez. Setu perak e kav din ez eo fall

bezañ **mac'hvredet** evel ma vez lod gant kudenn ar **gevredigezh kristen**.

Hogen, petra ober dirak ar vosenn, ha ni bepred o reuziñ outi ? Mar bije ar C'hrist hiziv o vevañ en hon touez, evel gwechall e Palestina, petra raje ? Emdren war veneziou bloavezhioù-pad ? Pe neuze chom eno dres an amzer ret evit pediñ, yunañ ha raktal goude distreiñ war dachenn an emgann pemdeziek gant e dud evel m'emaint ? Pezh a raje Hon Salver zo, moarvat, pezh a zo diskuliet dimp gant an Aviel. Hama ! Setu pezh hon eus d'ober, ni ivez, ha neket debriñ hon spered gant saviad ar gevredigezh kristen. Rak, mar gwelomp houmañ o kouezhañ ne he foull war hon c'hevandir, emañ endeo oc'h adsevel war gevandirioù all. E diarsell ar C'hrist, n'eo ket ar c'hevredigezhioù a ra kudenn. Gouzout a ra evit ac'hano peseurt talvoudegezh a zo da reiñ dezho, peogwir e vez ar re wellañ anezho zoken oc'h amparañ pezh a vez anvet gantañ a-hend-all "**ar bed**", eleze, ren ur galloud pell diouzh E hini, forzh penaos. Un dra gwall skort e vez bepred enta azon kristen pep kevredigezh ; e-giz-all n'en dije ket lavaret Hon Salver dre Lukaz, 18, 8 :

"Pa zeuy Mab Den, daoust hag e kavo feiz war an douar ?"

Evit Jezuz e c'hellfe a-walc'h neuze ar gevredigezh kristen steuziñ diwar an douar. Hogen, n'eus netra diogel hag arabat kennebeut reizhiadekaad nep mennoz e seurt keñver. Da'm soñj, emañ dreist-holl hevelep komz, deuet gant ar C'hrist, o skarzhañ keal pep kevredigezh kristen diouzh ar ster a fell da lod reiñ dezhañ : strollelezh diflach, broadel peurliesañ, bet santelaet ur wech evit mat, hep dezhi riskl ebet na da bec'hiñ na da lizañ betek ar Varn Ziwezhañ... Padal, pa studiomp ervat ar gudenn, n'eo ket eus kevredigezh kristen - pe broadel e ve, pe hollvedel - e

vez kont gant an Aviel, - eus Rouantelezh an Neñvou, ne lavaran ket, pezh a zo disheñvel. Nann, arabat bezañ mac'hvredet gant kraf ar gevredigezh kristen, pa n'eus bet biskoazh kel gant ar C'hrist eus kevredigezh na broadel, nag hollvedel na, zoken, rannvedel o terc'hel diflach d'he feiz, ken e reizh al levierion, ken e reizh al levidi, nemet e resisa, dre jubennerezh Mark, XIII, 10, e vo ret : "**ma vo, da gentañ, embannet an Aviel d'an holl vroadoù...**"

An droienn "**da gentañ**" o reiñ da intent "**kent ma tistroy Hon Salver...**" e talv neuze komz ar C'hrist da lavarout ne steuzio ar bed-mañ nemet pa vo bet strivet d' e gristenañ en e bezh, hep ma vefe nep kristenelezh bennak o treistbevañ c'hoazh dre ret war an douar, pa c'hoarvezo diwezh an Istor. Rak embann an Aviel e pep lec'h hag he gwelout oc'h ober berzh tu bennak zo daou dra disheñvel.

Chom a ray ar C'hrist gant e dud betek diwezh ar bed. Ha pa lavarer "**e dud**" e vez tu da veizañ gwech broadoù evel Breizh moarvat, gwech ranndirioù brasoc'h ha gwech c'hoazh un tamm tolead nemetken marteze. N'eo bet ar gristenelezh ur gevredigezh kristen kevandirel nemet e grez Europa Grennamzerel. War ar c'hevandiroù all d'an hevelep mare ne gaved kristenion nemet dre vroadoù, rannvroioù, tudadoù hag, evel dres, kedunadoù strewet amañ hag a-hont. Mar n'eus ken ac'hanomp, Brezhoned, siwazh a se, nemet ur gevredigezh kristen toc'hor, deskomp neuze dougen hon c'hroaz evel ma kendalc'h Jezuz d'ober war hentoù Palestina, e korf e feizidi du-hont, pa wel e pe stuzioù emañ ar gristenelezh he dije gallet moarvat bleuniañ eno da gentañ, sev war dir Israel, e vroad, ha dont da vezañ mamm d'an holl ilizoù dre ar bed. Ur rangalon evit ar C'hrist evel den, hep ket a var !

Arabat dimp avat distummañ kelennadurezh hon Mestr, nag ar spered bet ouzh hec'h awenañ. Darn, a vez o teveizañ ar Gevredigezh Kristen evel pa vije unan vuzulmat. Doueaded int enta, diouzh skouer Islamiz ha da ziwall e vez bepred da chom douead hepken hep bezañ kristen. Gwelloc'h eo neuze deveizañ ar Gevredigezh Kristen o vont diouzh komz Hon Salver dre Lukaz adarre, XVII, 20 :

"Rouantelezh Doue ne vez ket o tont en ur sachañ an evezh ; ne vezo ket lavaret : aman emañ pe aze emañ ! rak... emañ en ho touez."

Ya, kreizomp hon preder war Rouantelezh Doue gant ar ster a zo da reiñ da seurt lavarenn : Mab Doue ganimp ouzh hon skoazellañ da stourm hep trouz na storlok evit emled an Aviel en hon bro, e pep bro ha peurgent war bep tachenn bepred, war-bouez dimp degas ar vrasañ karantez d'an holl, hep morse fallgaloniñ, forzh pehini e ve stad hon c'hevredigezhioù en o fetiz. Rak dodenn silvidigezh peurbadel ar c'hevredigezhioù evel unvezioù ha boudelezhioù barrek da zellidañ evit ar baradoz, diouzh skouer an dud dre hini, n'eus diazez ebet dezhi nag e par an Aviel nag e par an Dazroadur. Nann, broad ebet evel korf ne c'hall bezañ salvet. Ha difenn an dodenn enep a vefe, na mui na maes, distrujañ rezid an hiniden n'eus enta nemet hiniennoù denel en o frankiz, eleze hinidenion rez a ve barrek da zellidañ evit klod an neñvoù. Hogen ur wech salvet, em eus spi, evel m' henn disklerian dre va levr "**En Donvor Da Vreizh**", e vo dastrollet evit ar beurbadelezh, en ur c'horn eus kerc'henn an Dreinded, an holl izili wennvedik aet gwechall d'ober kenel ar Vrezhoned, rak eoboell (*) eo, diouzh un tu, ha, diouzh un tu all, kevazas ouzh komz Hon Salver, pa lavar "*ez eus kalz amezioù e ti e Dad*".

Petra bennak ma ne c'hall ket ar broadoù betek evel dellidañ evit ar baradoz, e c'hallont neoazh evel kevredigezhioù bloc'hel degas skoazell vras d'an dud dre hini da ren o buhez kristen war an douar. Bez' e vez pep broad, da skouer, o tiorren ur yezh a vez ganti bepred gouestedoù geriadurel pe lavaradurel barrek da sklerijennañ feiz an arvererion anezhi war lod krefen. Ha bras eo bet e seurt keñver ijin lod yezhoù dre ar bed. Emichañs n'eus ket nemet ar yezh, pa ne ra ket houmañ ar gont bep tro. Ha ret e vefe studiañ ar gudenn dindan kement arvez kevredadouriel a zo dezhi evit lakaat war wel gant petra, e gwirionez, ez eo graet gwerch ha dialusk santelaus ar vuhez vroadel kristen, pezh nad omp ket evit gwelout amañ evit ar mare.

Setu perak ez eo un dlead kravezel klask, diwar-bouez ur gelennadurezh riezal nevez hollvedel, empentiñ ar stern gwellañ da bep broad da vevañ e pep frankiz, ha kinnig war un dro frammadurezh kristen d'ur stern evel hennezh evit ma vo, e pep degouezh, gwarezet briegezh an hiniden. Arabat souezhiñ ma vin neuze degaset adarre pelloc'hik da gomz un tammig c'hoazh diwar-benn va levr "**En Donvor Da Vreizh**". Karout a rafen henn ober hep brabañsal, sev an uvelañ gwellañ, hogen ar resisañ gwellañ ivez koulskoude.

Hadañ seurt mennozioù zo strivañ ivez, en ur stumm, da ganttreiñ ar Gevredigezh dre ar bed, war-bouez d'ar skrivagner kevangevreadelour kristen displegañ da bep den youlet-mat mennozioù-diazez evel ar re da heul :

Tudoù ! Kealioù doujet gant ho sevenadurioù kornok evel gwirioù an den, rezid, kevatalded h.a. arabat deoc'h krediñ e c'hallfec'h o lakaat da dalvezout hep ober dave d'an Aviel. Rak, n'eus anezho nemet deveradurioù diouzh gwirionezennoù bet prezeget gant Jezuz-Krist, Mab Doue ha Den gwirion war un dro. Anez d'an endoniad kristen aet da stummañ speredoù ho mistri weringarañ, alies hep

gouzout dezho dre ma oant digristen, hogos bep tro avat, bennozh da levezon ur vamm pe ur vamm-gozh kristen bennak, - mamm J. Jaures, da skouer, a oa ur gredourez start, - biken ne vije bet klevet, lakaomp, kel eus difenn gwirioù mab-den hiziv an deiz. Ya, ouzh gwriennienn seurt mennozioù hael e kaver bepred aspad spered hag hol prezegenn an Evurustedoù bet distaget gant ar C'hrist dirak e dud ha bet intret ganti kalonoù hon c'hendadoù kristen war hed ar c'hantvedoù.

Mar komzan enta dre va levr diwar-benn kevangevreadelouriezh, henn gran eno alies ivez diwar-benn ar gristeniezh evel sol da vleuniekadur ar seurt patrom kevredigezhel arbennik.

Klask a rin bremañ neuze diskouez an darempredoù a zo etre an eil kelennadurezh hag eben. Hag o vezañ maz eo strizh-meurbet seurt darempredoù, e vo diaes bep tro dizoleiñ an diforc'h etre pezh a vez graet kristeniezh engouestlet anezhañ, hiziv dre ar bed, hag ar pezh am eus-me anvet kevangevreadelouriezh, evel enebourez ar gevalaouriezh hag ar varksouriezh en un douez, dres enta evel m'emañ ivez ar gristeniezh dilesañ o stourm war un dro ouzh an div reizhiad rakveneg.

Un arvez dibarek a welan koulskoude, daoust da se, d'ar gevangevreadelouriezh : he fal zo tizhout war un dro tachenn, an dinazelerezh, an amaezhiezh, ar vuhez kevredel, ar sevenadur, ar gravez, ar stuzegezh ha doare ar vuhez pemdeziek.

N'eus diforc'h ebet, a lavaro darn. Eo, a respontan, ha gant ar gristeniezh enkorfet en hec'h ilizoù e hañval bezañ brazik an diforc'h.

Da gentañ, mard eo gwir he deus klasket hag e klask bepred ar gristeniezh intrañ holl dachenoù ar vuhez, ne grou ken netra e par ar c'hevredigezhioù riezal ; ne dizh

houmañ ar bed nemet diwar al lañs bet miret betek bremañ gant he levezon avielek. Rak ober labour bonreizhel, da skouer, ned eo tamm ebet mui kefridi an ilizoù, evito da vezañ bet gwechall empenn ha youl ar gristeniezh. Pa glasko ar gevangevreadelouriezh enta tizhout holl dachenoù ar vuhez, e vo evit degas d'ar Gevredigezh ensavadurioù ha frammoù nevez ned eo ket roll ar gristeniezh o degas, dres evel ma ned eo ket he roll kennebeut emellout, da skouer, e labour-stummañ ur micherour betek evel. Degas d'ar bed ur framm hag ur vonreizh nevez a vo kefridi arbennigourion war gudennoù ar gevredigezh, kefridi prederourion enta hag a vo war un dro ivez oberiadourion (nidiaded, gouez da dud **Preder**), eleze kevangevreadelourion. Tud e vint neuze hag a vo ivez, diouzh an tu all, kenkoulz prederourion hag oberiadourion war gudennoù speredel ar bed ; en ur ger, kristenion diles stag ouzh ne vern peseurt iliz, gant ma vint testoù Jezuz-Krist, bev en o buhez.

D'an eil, evel ma lavaran uheloc'h, pal ar gevangevreadelouriezh zo tizhout ivez tachenn ar gravez, eleze an ilizoù kristen hag an holl strolladurioù kredennel a gaver war an douar. En ur stumm emañ ar gristenelezh, evel devoud bedel, e dalc'h ar gevangevreadelouriezh hec'h-unan, petra bennak ma ne c'hall houmañ ober netra vat anez degemer ivez un nerzh speredel nevez digant ar gristeniezh. Al lañs a vefe gouest ar gevangevreadelouriezh da gaout war ar gristeniezh, n'eus anezhañ nemet war dachenn ar pleustr, evit a sell ouzh aozidigezh hag eroundigezh ar vonreizh, krouidigezh framm nevez ar bed. Finvez ar gevangevreadelouriezh o vezañ an unvaniezh war an douar etre an holl, e ranko an ilizoù hag ar strolladurioù kravezel asantiñ da reolenn ar gevredeliezh etrezo - dres evel ma ranko ober diouzh o zu ar riezioù hag ar stadoù pe c'hoazh ne vern peseurt kevredad a zo. Hervez spered gwirion ar

gristeniezh eo e klasko neuze ar gevangevreadelouriezh mirout he frankiz hag he buhez da bep kravez, o herzel, diouzh ret, ouzh pep kristenelezh krennamzerheñvel da vac'homañ kravezioù all, dres enep da spered Jezuz-Krist e-unan.

Mard afed bremañ raktal war dachenn ar pennaennoù hag ar pennvennozioù a vez o ren war ar gristeniezh ha war ar gevangevreadelouriezh, e vefe tu da welout sklaeroc'h marteze peseurt darempredoù zo etre an eil kelennadurezh hag eben. Tu a vefe e gwir da welout natur an darempredoù diabarzh a zo kenetrezo. Gant ar pennaennoù, hag int liesseurt diouzh an eil tu hag egile, e teuio, forzh penaos, danvez ur studiaden evel houmañ da vezañ fetisoc'h eget o chom war dermenadurioù hep ken all. Hogen anat eo e ranker, amañ c'hoazh, ober un dibab etre ar pennaennoù en ur virout nemetken pezh a zo boutin d'an eil kelennadurezh ha d'eben.

Setu perak em eus soñjet e tleñ mont da sellout un tamm spisoc'h diouzh tu an Aviel hervez Mazhev (V, 1-13) lec'h ma kaver arroud brudet an "*Evurustedoù*". Hounnezh eo an destenn avielek a vez, a gav din, o reiñ deomp ar gwellañ termenadur eus ar gristeniezh a c'hallfed da gaout, evit a sell ouzh ar vuhezegezh hag an Divez.

Hogen n'emañ ket kennebeut an holl Evurustedoù bet ezrevellet en Aviel Mazhev da vezañ keñveriet gant ur bennaenn gevelep e par ar gevangevreadelouriezh. Rak lod anezho ned int nemet alioù d'ar C'hristen da gejañ war-eeun gant Rouantelezh an Neñvoù dre hent ar gevrinelezh hiniennel. Mat int moarvat evit skoazellañ pep den ivez da gas war-raok e zispac'h diabarzh hiniennel ha levezon a c'hallont kaout ivez, - aes henn meizañ, - war e labour strollennel. Hogen, war dachenn an Dispac'h strollennel ha

kevredigezhel, ne c'hallont ket tizhout war-eeun ar pal a zo merket d'ar gevangevreadelouriezh, ha dezhi hep ken all.

Ar seurt Evurustedoù, mat evit sevenidigezh dispac'h speredel **an dud dre hini**, zo, da skouer :

*"Evurus ar re a gar ar baourentez,
rak dezho eo Rouantelezh an Neñvoù..."*

Pe c'hoazh :

*"Evurus ar re a zo trugarezus
rak int ivez a vo graet trugarez outo..."*

Pe adarre :

*"Evurus ar re a ouel
rak int a vo frealzet..."*

Pe dreist pep tra :

*"Evurus ar re a zo glan a galon
rak int a welo Doue..."*

Pennaennoù eo enta an Evurustedoù rakveneget, graet evit degas unded e spered an den, graet evit prientiñ unded etre an den betek evel hag an den evel mab da Zoue ; etre an den kevrinel hag an den dinazel, en ur ger : etre ar C'hristen youlet-mat hag ar c'hevangevreadelour. Daoust ma ned int ket pennaennoù graet evit adeiladiñ ar gevangevreadelezh war-eeun, e weler ez int graet evit stummañ ar stourmerion wellañ emañ ar Gevredigezh Nevez o c'hortoz, peogwir e vefe anezho skouerioù dereat eus Hon Salver Jezuz-Krist.

Hogen degouezhet amañ, e fell din adarre degas da soñj e vefe fazi krediñ e vo Rouantelezh an Neñvoù dianlenad, -

eleze heuliad arbennet un argerzh istorek. Evel displeget uheloc'h, arabat sellout ouzh nep kevredigezh evel pa c'hallfe piaouañ dellidoù dreistnaturel. "Gant donedigezh trumm Rouantelezh an Neñvoù," evel ma lavaran dre va oberenn, "e vo lakaet un termen d'an Istor. An tudadoù hag ar broadoù manet war o diorren douarel a dremeno neuze en un taol diwar saviad an Istor da hini dreistnaturel ar C'hlod ; nemet e viro pep unan anezho he ferzhioù denel klok dezhi, dres evel ma viro pep den perzhioù e gorf hag e ene, da lavarout eo e hiniennelezh, daoust d'ar gwennvedikadur."

Hevelep tremenerezh trumm avat diwar saviad an Istor da hini dreistnaturel ar C'hlod ne c'hoarvezo nemet e par an hinidenion salvet. Nann, arabat krediñ e tegasfe ar gevangevreadelezh war an douar an **Oadvezh Aour** e vez darn o hevelebiñ ouzh Rouantelezh an Neñvoù. Arabat, a lavaran adarre, droukveskañ kevangevreadelouriezh gant ar gredenn gravezel disol a vez o tisoc'hañ war ar pezh a vez anvet "**milvedouriezh**" n'eus hiziv nemet **Testoù Jehovah**'h ouzh he difenn.

E'm levr e resisan ez eo kentoc'h ar gevangevreadelouriezh "*ur chemedenn*," d'an denelezh, kellies gwech ha ma vo o paouez aberzhañ d'an droug, da vezañ e tro d'adkavout hep diaester ar c'hempouez hag an nerzh ret evit distreiñ raktal d'an hevelep hentennoù hollel bet kinniget dezhi a-ziagent.

Hogen mard eo ar gevangevreadelouriezh ur chemedenn, ez eo, hep mar ebet bennozh d'an Aviel an hini eo, ha peurgetket bennozh d'an nemorant, d'ar peurrest eus an **Evurustedoù** a dalv da sol d'he c'helennadurezh, **en abeg d'o ster strollennel**.

Kuñvded

Pennaenn ar guñvded kristen zo tremen hep mont dre an nerzh d'an dud, war-bouez doujañ d'o gwirioù gant karantez. Ha sed aze ivez pennaenn veur ar gevangevreadelouriezh. Graet e vez anezhi "**Pennaenn Dreistelezh ar Gwir**" gant an arbennigourion. N'eo ket enta dre ar brezel hag ar muntradegoù diouzh doare ar re a zo bet arveret betek-henn gant ar riezoù hag ar reizhiadoù mac'hom, na dre orbidoù Aozadurioù Etrevroadel evel U.N.O. e New-York, e vo gwellaet yec'hed ar bed. Pezh na dalvez ket ne vo ket savet un deiz un U.N.O. dereatoc'h eget an hini a zo bremañ.

Ober diouzh Evurusted ar Guñvded e vo neuze klask tizhout gwerinveliezh, er pleustr war-bouez kemplegañ, neket d'an nerzh ha d'ar feulster, hogen da skaradennoù ar Barnerezh, dres hervez ar geennadurezh kristen hec'h-unan. Soñjomp ervat, a lavaran c'hoazh e'm oberenn, ned eo na d'al levierion na d'ar werin na da nep leviadezh digevredik bennak diskleriañ peur e vez levezon pe oberoù un hiniad lavaret o noazout ouzh rezid ha briegezh ar re all, hogen d'ar Barnour nemetañ ensavet evit se dre gefridi naturel ha kantwir, gant ma vo, moarvat, emren, neptuek ha direbech hevelep kefridi. Koll enta o gwir da vezañ betek evel a rafe nep levieriezh pe strollelezh, gronn pe strolladur, unad, c'hwelunad, luskad pe strollad politikel bennak a glaskfe kemer lec'h ar Barnour dre un hent eeun pe ameeun. N'eus netra brasoc'h war an douar eget kefridi ar Barnour pa vez e kenhoal gant ar Veli Gantwir, sev gant ar Riez hag ar Stad, diouzh un tu, ha, diouzh un tu all, gant ar werin, engwiriet maz eo houmañ ivez, e diarsell ar gevangevreadelouriezh, da gemer perzh e dilennidigezh seurt Arc'hwiraour.

Ha hervez an eil kelennadurezh hag eben, e teuy "ar re guñv" da gaout an douar da lod, eleze da vezañ mistri war ar bed. Rak, e-lec'h koll amzer brizius o c'hoveliañ armoù da zistrujañ an den, e poagno bepred ar gevangevreadelourion arnevez da studiañ pishoc'h-pizh, pegen diaes bennak e vo seurt trevell, an doare da vestroniañ planedenn ar bed hervez hentennoù habask ar Vonreizh, ar Gwir hag ar Rezid, o tilezel pep diskoulm dre ar gwad hag ar feulster.

Diwar levezon an Avel, na petra, - **hogen hep gouzout dezho peurliesañ** - eo o deus ar gevreadelourion, evel ar gevarzhelourion a bep troc'h dre ar bed, labouret da sevel kement kevredigezh vloc'hel, warni azon ar werinveliezh wirion. Awenet e vezont gant karantez Hon Salver Jezuz-Krist bet o kelenn d'ar bed talvoudegezh ken bras-all kement hinienn a zo : den pe dudad, naturgenel pe genelvroadenn, iliz pe gevredad, ha gant plijadur e welan hiziv Hon Pab, Yann-Baol, o herouezañ seurt kelennadur.

Evel ma lavaran dre va levr, diazezet eo ar gevangevreadelouriezh war an hinidenelouriezh, kelennadurezh o vont enep krenn d'ar riezalouriezh ha d'hec'h ameilerezed : ar gevalouriezh hag ar varksouriezh. An talvoudoù a ra van seurt droukreizhiadoù da wareziñ zo, e gwirionez, talvoudoù troc'het diouzh an hiniden, eleze diouzh Evurusted ar guñved kristen. Ned int nemet amvoud ivez evel dres evit pep kevreadelour kristen, pa vez atav war spered hemañ burzhud Urzhiadurezh ar Silvidigezh : Doue o kevrediñ E hinienn diles e par E Vab gant hinienn diles an den dre berzh natur Jezuz-Krist, Hon Salver.

E-giz ma weler, n'eus tu ebet evit ur gweringarour diles da zisrannañ an dalvoudegezh a roer d'an hiniden kristen diouzh an hini a fellas da Jezuz reiñ d'e gomz pa c'hourbannas war ar Menez "**Evurusted ar Guñved**" evel sol d'ar werinveliegezh arnevez, degemeret ha kevazaset bremañ gant ar gevangevreadelouriezh diwar-bouez "**Pennaenn Dreistelezh ar Gwir**".

Peoc'h

D'an eil e verkomp e-touez an Evurustedoù ar Senadurezh pe Habaskted a vez anvet, siwazh, gant ar ger "peoc'h", e-lec'h ober gant an termen ken kaer "**hez**" pe c'hoazh, "**tangnevez**" arveret e Kembre, pe ivez "**kres**" e kernoweg. Dre maz eo bet miret ar ger "**peoc'h**" avat en holl droidigezhioù eus ar Bibl en hon yezh, e rankomp ober arver anezhañ ivez.

"Evurus ar re a vez o lakaat ar peoc'h da ren, rak int a vo anvet bugale Doue", eme dimp adarre Avel Mazhev.

Evel displeget uheloc'h e kavomp amañ un Evurusted strollennel, daoust maz eo ken bras-all warni ivez moarvat an arvez hinidenel.

Evit lakaat he c'hevriñelezh, eleze he C'hristeniezh dilesañ da glotañ ouzh he gwerc'helezh he deus ar gevreadelouriezh hiziv ur saezheneg, ur mirva pennaennoù am eus plaenaet e'm levr gant ur pennad talbennet **Ar pevar feulvan**. Diwar ar pevar avat an hini talvoudusañ a zo hep mar ebet "**Dreistelezh ar Gwir**", "**Pennpouez ar Gwir**", evel ma lavaran. Gant hemañ diwezhañ e c'haller, bravik awalc'h, da'm soñj, mirout liammoù didorr etre aotrouniezhoù a bep seurt hag ar gristeniezh.

E gwirionez, an tri feulvan all ned int nemet deveradoù eus **Pennpouez ar Gwir**.

Seurt pennaennoù, hag int ivez reoù ar gristeniezh engouestlet, zo binvioù-stourm ar re guñv, anezho karourion ar peoc'h, doare-ober habask ar weringarourion maz eo ar gevreadelourion. Dougen a reont anvioù gwech anavezet mat, gwechall diaesoc'h evel :

- emrended ;
- perzhiezh, kenwered, kengentoderezh ;
- amsavelezh.

Gant seurt pennaennoù e tenner da wriziennañ ar peoc'h war an douar kevan, peogwir e vezer e tro, bennozh dezho, da lemel kuit pep riskl brezel kenurzhiat hag ensavet etre ar pobloù, pep riskl, dizemglev ha trubuilh etre an hiniadoù ivez.

Gwellaet hag evel peurlipet gant ar gelennadurezh kristen, e kenlabour ar gevangevreadelouriezh erbedet e'm levr da sevel ur Gevredigezh a c'hallfe evit gwir bezañ evel rakkambr Rouantelezh an Neñvoù. Rak alies em eus diskouezet ez eo graet ar gevreadelouriezh wellañ evit disoc'hañ war ar pezh am eus anvet keduniezh ha kedunad enep d'ar pezh a ran anezhañ kevrediniezh ha kevredinad. Ur c'hedunad zo ur gedhinienn oc'h ober dave da dalvoudoù ar vuhez speredel, boutin d'an denelezh, tra ma chom keal ar gevrediniezh war dachenn an danvez hep ken all. Strivañ d'ober kedunadoù pe gedhiniennoù avat gant pep kevredad adalek an tiegezh betek ar riez-ved pe ar pezh am eus anvet ar geduniezh-ved, ned eo tamm ebet sorc'hennek nag amoet, peogwir ez eo kinniget se gant ar gevangevreadelourion evel frouezh an dispac'h reizhwirel eleze an dispac'h o loc'hañ diwar an traoù hag ar saviadoù evel m'emaint. Gant ar renad enstag ouzh hevelep pennaenn, ne vo ket ken, da skouer, lazhet un den evit netra gant ur riez bennak, na, dreist-holl, dre ma vefe nagenour evel maz eo c'hoarvezet ha ma c'hoarvez c'hoazh bepred hiziv an deiz. Ne vo distaolet unan bennak nemet pa vo

andenek hervez pennaennoù "**gwirioù hinidenel an hinidenegezh**" evel ma ne veze distaolet ha kendaonet gant ar C'hrist, Barnour-Meur an Denelezh, nemet al lorc'heion divezh o pec'hiñ enep d'ar Spered Glan. Bezañ andenek avat zo, en ur stumm, argas diwar e dro spered an Evurustedoù rak ar pec'hed enep d'an den zo ivez ar pec'hed enep d'an Doue deuet da vezañ den hag a fellas dezhañ gwelout e dud o vevañ hervez hevelep spered.

Mard eus gant ar gevangevreadelouriezh pennaennoù diazezet war re ar gristeniezh, ez eus ivez hentennoù ha, moarvat, ur yezh, ul lavaradurezh nevez am eus klasket herouezañ e brezhoneg pa ran gant "**keduniezh**" h.a. evel uheloc'hik ha dreist-holl pa vezan oc'h arver gerioù evel "**dinazelerezh**" enebet ouzh "**politikerezh**".

O keñveriañ seurt lavaradurezh gant an hini gristen, e weler penaos e c'haller en ur vro evel Breizh, da skouer, tostaat kalz muioc'h eget dindan hinadoù all ouzh kevrinegezh ha, war un dro, gwerc'hegezh an Evurustedoù, bennozh da furnez hon tadoù p'o deus ijinet evidomp ar yezh a reomp-ni ganti bepred. Anat eo se diwar ar pezh a skrivan e'm levr. Ha peogwir ez eo ar yezh pennañ diazez ar vroadelezh evel meneget uheloc'h, sed aze un abeg ouzhpenn da stourm evit ur gevredigezh vroadel hollvrezhonek war al ledenez-mañ. Rak e giz all e chomfe anezpleget hag evel anlavaret lod krefen o taveiñ d'ar gelennadurezh kristen. Diorren ha desevel zo neuze kefridi lod yezhoù trevekaet mat evel ma c'haller dezren diouzh an arroud-mañ tennet eus **EN DONVOR DA VREIZH**, ur pennadig hemañ e karfen gwelout ur bern tud ouzh e lemm hag o prederiañ warnañ :

"Krouiñ evit un den zo dres ober diwar an nebeutañ gwellañ, koulz lavarout. Mousfentek e vez a-wechoù hon troiennoù brezhonek, ken intret ha maz int gant furnez hon c'henel. Daoust hag e vefe neuze bezout bevañ ivez diwar an nebeutañ gwellañ ? Moarvat, gant ma ne vo ket emichañs "an nebeutañ" heñvelster da "verrentez" rak, e seurt degont, ne vefe ken "ar gwellañ". Amañ ne glot ken "ar gallus" (possible) a dalv da sevel an droienn c'hallek kevatal. Paouroc'h eo kalz, pa ne gred ket ar spered galleger, e pep degouezh, evel ma ra an hini brezhoneger, stagañ dichipot-kaer keal "ar gwellañ" ouzh hini ar goñvor hag ar c'herreizh. Doue zo krouer dre maz eo bezout nemetken, eleze bezoud nemetañ e dibenn dezramm. N'eus kaoud ebet e Doue - bezoud hepken. N'eo ket enta diwar gaout, zoken an nebeutañ emañ Doue o krouiñ, hogen diwar vezout. Ha padal Eñ eo ar beviad kefleun, o vevañ diwar binvidigezh didermen e vezoud.

"Hogen an den n'eus ket anezhañ un Doue war an douar. Ha ret-mat eo dezhañ emichañs, evel den, ober ha kaout diwar an nebeutañ ar peb gwellañ da vevañ, hep klask kaout ur peb muiañ a drofe evitañ d'ar peb gwashañ. Ar seurt "pep gwellañ" zo dres war an dachenn armerzhel-kevredel pezh am eus anvet an "Izegad Bonvevel Gwarantet" a vije tu da vastañ da bep hiniden war an douar dindan nebeut amzer, mar karjed. Neuze, ma ne ziskouezer d'an den nemet hent ar c'haoud diharz, en distroer diouzh an hent hag ar finvez a zo evitañ bezout, eleze bezañ bev e gwirionez, diouzh patrom bev Doue."

Degouezhet amañ e komprenner gwelloc'h pezh a lavaren uheloc'h. Strizh-meurbet eo an darempredoù etre an div gelennadurezh ha diaes-kenañ ober an diforc'h etre kristeniezh engouestlet hag ar gevangevreadelouriezh a

gelennan-me. Ober gant an Den Brezhon, bennozh d'ar benveg prizius maz eo ar yezh hag al lavaradurezh vrezhonek, den ar peoc'h hag ar c'hempouez armerzhel-kevredel, - zoken enep da lod c'hwelunadoù pa ziskouezont a-wechoù bezañ ken diboell hag andenek, - zo ivez klask ober gantañ ur C'hristen gwirion, peogwir ez eo degas dezhañ dere ha stad ar Boud Bev, evel ma lavaran, pe c'hoazh ur Bugel da Zoue, gouez d'an Evurusted hervez an Aviel. Ya, "evurus ar re a vez o lakaat ar peoc'h da ren, rak int a vo anvet bugale Doue."

Aes eo neuze kompren gant pebezh gweladurezh ez eo treantet va spered p'edon o skrivañ va levr, ha spi am eus ne chomo ket va lennerion hep teurel pled ez eo trede rann va oberenn ur ganmeuladenn d'an Dreinded Santel, Tad, Mab ha Spered. Da skouer pa glozan gant ar gerioù da heul ar rannbennad talbennet. "Empentiñ Hentenoù Nevez".

"Darn moarvat, - kalz marteze, - a ray un taol-hej d'o skoaz o soñjal ez eo aner klask meskañ kelennadurezh denel ar gevangevreadelouriezh, gant kealiadoù kravezel ar gristeniezh. Int avat eo a zo e gaou. Rak, bennozh d'he donderioù, emañ diouzh hennad ar gelennadurezh dinazel ha denel am eus plaenaet dre an oberenn-mañ sammañ warni kelennadurezh ar C'hrist, an Hini Nemetañ a zo bet gouest da zisplegañ d'an denelezh al liamm kevrinus a vez oc'h eren Reizh ha Gwir, Dirvoud ha Gwirvoud. Ouzhpenn ma ne gollfe dalc'hidi ur gelennadurezh evel houmañ mann ebet eus o beziadegezh war dachenn an niderzh warbouez ensammañ pennaennoù ar gristenion, peogwir, evit ar wech kentañ marteze, o dije kavet diskibled ar C'hrist ar skourr mat d'imboudañ warnañ, d'ar wezenn denel da vleuniañ en he gwirionded, o vezañ m'o dije dizoloet

erziwezh ar stern dinazel na c'hallent ket oberiañ hepzañ betek neuze, anez kouezhañ dalc'hmat e skoasell an hunvre.

"Hogen, ret eo bezañ kristen, evel reizh, evit darbenn seurt lavaredoù, ha kompren mat a ran e c'hall ar feiz kristen, evel talvoud, strebotiñ pe zoken steuziañ e kalz broioù hiziv an deiz, o vezañ maz eo bet kantvedoù-pad hualet dre wall an ilizoù liesseurt gant talvoudoù diwir ha noazus evel hini ar riezvroadelouriezh. Houmañ, anat eo, ne gemmo tamm keit ha ma vo anezhi, na pa ve kevalaour pe varksour en he skritell. Ken anat-all eo ivez ne vo tu ebet na d'ar gleizelourion na d'an anveliourion, na d'ar vrizharaogelourion a bep gobari da zisoc'hañ war o faradoz peurvat keit ha ma talc'hint da boellata kement ha poellata, o klask dantañ o lost evel chas klañv. Ne c'hallint akuitañ ganti nemet ha dont a rafent, dre hantererezh ar gevangevreadelouriezh, d'emskiantiñ ouzh talvoudoù diles awenet e gwirionez gant Spered ar C'hrist adarre, hag eñ bividikaer pep keal ha pep ober. Salv e teufe an engroezioù da verzhout bremañ pegen sklerijennus eo spered Salver ar bed. Neuze, daoust d'an tennderioù diavaezel a gavint war an hent a gas hepred eus ar Rezid d'ar Veli hag eus ar Veli d'ar Rezid, e vezint ervat n'emaint tamm ebet kraouiet dre o diabarzh en un daelerezh a garfe ar poell glan diskouez dezho evel argel o daonidigezh war an douar dindan stumm an dazeilad milliget. Beli PE Rezid. Kompren a raint ervat emañ ar Veli hag ar Rezid o kludañ war ur speurenn na vez mui ur speurenn adal ma vez houmañ treuzfurmet en un talvoud diles bennak. Rak pep talvoud evodet eus kalon reizh an den hag erounezet hervez pennaenn **Gwirioù Hinidenel an Hinidenegezh** zo e gwirionez frouezh ar Garantez diskennet eus an Neñv : karantez an Doue Bev a zo en tu-hont da gement meizadur a vez maget hiziv gant spered ar yaouankizoù diwar-benn

tadelezh denel, petra bennak c'hoazh ma n'eus ket tu evidomp amañ d'arverañ ur ger disheñvel diouzh hini "TAD", da reiñ dezhañ un anv a ve an azasañ gwellañ ouzh e hennad hag ouzh e deneridigezh evit e vugale. Pobl an Douar n'emañ ket hep Tad : klod dezhañ !"

Goude klodekadur an Tad, hini ar Mab e dibenn ar rannbennad diwar-benn dasorc'h an Den ha Dasorc'h ar Genel :

"O vezañ maz eo enlenet ken strizh-all dasorc'h an den ouzh hini ar C'hrist, n'o deus mui ar pobloù suj ar Gwir da lezel o c'henelezh da steuziañ pe da wariañ evel ma raent gwechall. Hag adal ar bed-mañ eo e krog an dasorc'h kristen evel ma oar ervat pep feizad arroutet. Kregiñ a ra pep den gant an dasorc'h gwerc'hel... pa loc'h gant e ganttro da vat ouzh Doue, da lavarout eo, adalek ma striv e gwirionez, hag an holl grouadelezh en e ser, evit ur silvidigezh hollel. Seurt silvidigezh n'eo ket hini an ene hepken... hogen silvidigezh an den gant e gorf, e herezh, e hiniennelezh, e gedhiniennelezh, e genelezh, e genelvroadenn : en ur ger, silvidigezh den klok Paradoz an Dreinded evel maz eo mennet gant Jezuz, Salver ar bed Dasorc'h et eo e gwirionez Krist an Tudadoù : klod dezhañ !

Ha bremañ, d'an trede, klodekadur ar Spered Glan, gant ar rannbennad talbennet "**Trec'h ur Speredelezh Wirion**".

"Darn a rebecho moarvat ouzh ar renad nevez empentet amañ sankañ an denelezh en anistoregezh, da lavarout eo, en un doare louaderezh ha magadellegezh dizintrudu pell diouzh "levez" kriz ar stourm "prometeat"... Neb a vag hevelep dezevioù zo moarvat neb a lavar ivez : tonkad an den war an douar zo gouzañv saotradur, pistriadur, muntr, brezel ha lazhadeg... Betek ma tarzho koc'henn an douar, a vije tu, neketa, da resisaat ? Hag e respontan : tonkad an den ned eo ket PE bezañ

aelig roz PE bezañ diaoul du dichadenmet, hogen bezañ den ha den kristen peurgent, hervez Urzhiadurezh ar Silvidigezh ensavet gant Doue ha bet sevenet gant E Vab en E Greud, en ur c'horf heñvel ouzh hon hini, evit ma c'hallfemp-ni hiziv klask ober eveltañ gant lealded, diwar ar skouer veur emañ bepred o reiñ dimp. Hevelep skouer avat ne vez ket arveret hepken diwar-bouez un istoregezh denel bennak, hogen diwar-bouez awen ar Spered-Glan a vez o werediñ en tu-hont da bep istoregezh. Daoust hag anistorek e ve neuze ar bed faltaziet emañ ? Ya, moarvat, mar kendalc'her da grediñ - evel ma reer - e penngealioù ar frankkevalaouriezh hag ar varksouriezh pa vezont o tezranmañ an anistoregezh ouzh skleurig an andoueadegezh o deus darbennet abaoe ar Reverzhi C'hreantel. Hogen gant ar gevangevreadelezh e tremeno an istoregezh war ul live all... Renket e vo bet a-benn neuze kudenm an istoregezh e-keñver broadelezh hag ivez e-keñver proleteriezh (gwell ganin lavarout "**paourentez danvezel**"), kaset ma vo bet da get arbenn-bezañ pep kevalaouriezh kevredik ha digevredik. Evit ur bobl, ober hec'h istor e vefe muioc'h-mui diwar neuze ober ivez Istor un Denelezh a vefe amparet en he fezh gant pep tudad, e par an Dirvoud hag ar Gwirvoud, ha neket gant ur meni pobl planedenneel ha mogedek a vez speredoù rousseauat o faltaziañ bepred. Emañ warnomp mare ar Spered Glan : klod dezhañ ! "

Hag evit kurunenniñ hevelep klodekadur :

"Ensevel un Europa nevez, dre berzh hentennoù nevez ha war-bouez ensoc'hañ dasorc'hidigezh gwir genelvroadennoù hon C'Hevandir e dasorc'hidigezh ar C'hrist a vefe enta an doare gwellañ da soliañ pep dinazelerezh europat war ar pezh n'en dije morse c'hwitet bezañ, panevet an Azgininelezh farloterez, eleze, war

obererezh an Doue Hiniennel ha Trehontel e par an Tad, ar Mab hag ar Spered Glan..."

Moarvat e chomo c'hoazh en deñvalijenn kalz a draoù na c'haller ket studiañ e korf ur skrid ken berr hag hemañ. Forzh penaos n'em boa da bal nemet lakaat emañ war wel linennoù bras an heñvelidigezh a zo etre kristeniezh ha kevangevreadelouriezh. Karout a rafen o dije darbaret ar c'heñveradennoù am eus graet, da skouer, gant "**Evurustedoù an Aviel**" da sklerijennañ muioc'h spered pep hini, neket hepken war al liammoù start pe war an darempredoù-diabarzh strizh-meurbet a zo etre an div gelennadurezh, hogen war ar pezh a zo talvoudus eno ivez e-keñver hon C'hristeniezh hiniennel koulz hag an ases kristeniezh kevredigezhel maz eo ar gevangevreadelouriezh evel m'he meizan.

Spi am eus ouzhpenn e welo bremañ pep Imbourc'had n'emaon tamm ebet o toniañ gant lod eus kristenion ar Goude-goursenedvezh aet d'araogelourion hep diabellweled na kelennadurezh diogel ebet, pe neuze da varksourion na mui na maes. Pezh na lavar ket ez asantan kennebeut da gealiadurezh darn nad int nemet doueaded re hañval e seurt keñver ouzh Muzulmiz, pa vezont o tiskleriañ e tleer terriñ pep kenober gant an difeizidi. Rak hervez erbedadenn Hon Salver adarre, n'eo ket dimp Kristenion, da zispartiañ an dreog diouzh ar gwinizh, betegout na zeufe ar gwinizh ganimp da heul an dreog. Setu penaos e welan al labour speredel ha dinazel a zo da seveniñ e tachenn ar Gevredigezh Vrezhon ma tleomp hiziv dougen hon c'hroaz war an hentoù anezhi.

(*) **eoboell** : conforme à la raison.

Hag Anataet e vo Bezoud Doue

Hepdale Gant Ar Skiant ?

Chomet eo Europa war-lerc'h USA evit a sell studi ar gudenn a zo stignet gant talbenn ar skrid-mañ. Evelkent setu FAYARD e Paris o paouez embann dindan an anv "**La Gnose de Princeton**" ("**Nevegezh Princeton**") al levr kentañ skrivet e galleg diwar-benn kudenn an danvezelouriezh m'emañ arbennigourion Amerika o prederiañ war an diazez a roer dezhi d'an ampoent e par kement gouezoniezh a zo. Aozet eo bet an oberenn gant an Ao. Ruyer, prederour dre vicher ha kelenner e Skolbenn Nancy. Koulz lavarout n'eus nemetañ hiziv an deiz e Frañs a vefe gwelet o prederiañ war solioù ar skiant.

Hep mar, levr **Ruyer** e vo gantañ gwered ur vombezenn pa vo bet anavezet hag imbroudet warnañ gant un niver stank a-walc'h a skiantourion dre Frañs hag Europa. An devoudoù a gaver deskrivet e korf an oberenn zo ganto doare ur maen-bonn war hent istorel ar preder pe, da lavarout ar wirionez, war hent an istor hep ken all.

Gwelomp kentoc'h.

Evel ma ouzer, danvezelour eo ar ouezoniezh, pezh a dalv da lavarout ne c'haller kaout krog war domani ar spered anez degemer an hentennoù arveret ganti. Zoken ar vredoniezh n'eus anezhi ur skiant nemet betek ma vez o ventiñ, o rummañ, o ren diawelerezh diwar-bouez jedadurioù, eleze, o tegas dimp stlennadoù danvezet forzh

pegement e dave gant obererezh ar spered, titouroù didalvez anezho avat pa glasker ganto diazezoù hennad ar spered.

Boas eur bet betek henn da glevout digant an holl skiantourion pe dost : "Biskoazh n'em eus kavet spered ebet ouzh beg va flañchell..." Ha ne welemp ket - pe gentoc'h ne gredemp ket klask gwelout - n'eus gant seurt bomm nemet azenerezh ha traken rak un tamm eo evel pa lavarfed : "Biskoazh n'em eus kavet ar ger "eost" war roll "deizioù ar sizhun !"

Abaoe an 18vet kantved, da nebeutañ, ez eo manet ar skiant e dalc'h an danvezelouriezh. Savelet eo bet adal neuze an arguzenn da heul : dre maz eo danvezelour pep gouezoniezh ha peogwir ez eo pal pep gouezoniezh diazezañ ar wirionez, n'eus netra gwirion na gwerc'hel en diavaez d'an danvez. Kammed goude kammed ez eo deuet kalz gouziaded e seurt giz da vezañ danvezelourion. Ha n'eo ket skiantourion hepken a zo tizhet gant ar vosenn, hogen prederourion ivez.

Diouzh klevout an holl anezho, an danvez nemetañ eo an danvez-sol, an hini gentañ o hanvout a-raok an holl draoù all. Da skouer, diouzh an danvez ez eo tarzhet ar spered rak deskrivet e vez hemañ evel ur meni "goadur" anadet diwar an danvez war an diwezhadou. Ha betek derou ar bloaz 1970 ne spurmantet gant ar skiant nep disoc'h na kelennadurezh all.

Setu bremañ pemp bloaz enta maz eo krog un dispac'h meizel d'ober e reuz e kelc'hiadoù uhelañ gouezoniezh Amerika, **Princeton**, **Menez Palomar**, **Pasadeña** h.a. D'ar mare ma chomas labour an NASA e skourr dre ziouer an

arc'hant ret evit kenderc'hel gant an arnodadennoù dre an egor e kavas an arbennigourion hag ar skiantourion amzer vak evit prederiañ. Un dizoloadenn veur a rejont : tennañ da zistroadañ an danvezelouriezh prederouriel, setu pezh emañ ar skiant oc'h ober gwirionez, o vezañ maz eo diazezet war an danvezelouriezh hentennoniel. Hag e korf tri c'hraf pouezus e tiskouezer emañ lod devoùoù skiantel bet lakaet war wel ergentaouik o tistroadañ an danvezelouriezh prederouriel.

Kraf Kentañ

Mard emañ pep tra o tont diouzh an danvez, e rank hemañ bezañ hollbadel hervez ar bomm a gleved digant skiantelourion derou an ugentvet kantved pa vezent, da geñver o banvezioù, o kanmeuliñ "saveleñoù hollbadel an alvez". Hogen pa studier pizh ar saveleñoù a vez o werediñ war an danvez e weler ez eo tonket d'an hollved mont da get. Hag evit a sell seurt argerzhioù, dre maz int mentadus da vat e c'haller o lakaat da gregiñ en ur mare na vez ket o sevel en tu-hont da **bemzek milmilion a vloavezhioù** en tremened. Mard eus bet un derou neuze d'an alvez, - ha diwar seurt devoud e ranker henn dezren - penaos deskrivañ hevelep derou ? Ha didalvoud ne vefe ket ar Bibl evel ma kreded betek bremañ ?

Eil Kraf

Gant studiañ ar c'heñverioù etre argerzhioù distrujañ an hollved ha reoù ar stlennataerezh e kaver liammoù jedoniel etrezo hag e komprener emañ freuzadur an alvez ar priz a ranker paeañ d'an emouezout ha d'an devezout da vezañ

gouest d'anadiñ. Ur pal zo neuze d'an hollved ha ne c'haller ken nagenniñ ar solvoud anezhañ.

Trede Kraf

Pep gwerc'henn zo dezhi, enta, un tu diavaez (an danvez) hag un tu diabarzh (an emouezvoud). Bezañ dall eo gwelout netra nemet an diavaez. Dizolein an diabarzh adalek an diavaez (ergorenn ar skiant) zo lakaat ar skiant en he rez ha war an tu-mat. Ha nep piv bennak a nac'h mont gant seurt hent emañ tonket dezhañ koll an hanter eus ar pezh emañ ar skiant o teskiñ bremañ d'an denelezh.

Hevelep anadurioù - ha kalz reoù all c'hoazh a vefe da zeskrivañ gant krafoù disheñvel - zo hiziv an deiz o tegas gouiziaded, dezho ar saozneg da yezh-labour, da reiñ un deveizadur nevez d'ar skiant p'emañ-hi evit ar wech kentañ o kevaniñ hag oc'h enkorfañ kement gouiziadur a zo e stern un hollad kenstag ha kempoell.

Speredel eo avat seurt deveizadur. Testeniañ a ra emañ kendro an alvez o testeniañ raklenadelezh un devez, o tiskouez n'emañ ket an hollved hep kaout ur pal ma tenn dezhañ bemdez, hag e vez pep devez enkorfet, eleze, pep den, o perzhiañ e pep krouerezh hervez derez an emdro maz eo savet hag ar rezid a vez gantañ.

Skol nevez ar skiantourion amerikan n'emañ ket emichañs hep kaout hec'h enebourion. Hag evel m'henn diskouez talbenn al levr emaoamp o paouez menegiñ, ober a reont un "nevegezh" anezhi. Ne c'hallont ket degemer e klaskfe remziad ar skiantourion nevez kaout un anaoudegezh diabarzh speredel, kravezel diwar-benn hentennoù gouezoniell. Ar pezh n'emaint ket dreist-holl evit gouzañv eo gwelout, neket hepken ar skiantourion met ivez

begenn ar gefredelezh saozneger o tegemer ar c'healiou nevez. Ken ma c'haller diogeliñ e vo dilezet kent pell ac'hann deveizadur danvezelour ar skiant gant nep a ra war he zro. Betek henn n'eus nemet kelc'hiadoù saoznegerion hag un nebeut gouiziaded rusianeger (ya, pegen iskis bennak e hañval bezañ) a zo bet tizhet gant an dispac'h. Buan avat e tarzho dre ar bed evel ar c'hurun rak en diavaez d'ar mennoziou nevez-mañ ne gaver netra gempoelloc'h diwar-benn diazezoù ha finveziou er skiant.



C'hwitadenn

An Andoueadegezh Skiantel

Gant ar C'hardinal **König**, Arc'heskob **Wien**,
Kadoriad ar Sekretourva Roman evit an Ankredourion.

Pa sellomp tostoc'h un tamm ouzh diazezoù skiantel an andoueadegezh, e kavomp raktal dirazomp lakaennoù faziek. Hag evit gwir, fazi, hep mar ebet, eo lavarout e c'hall ar skiant degas anatadennoù jedoniel diwar-benn bezoud Doue ha, dre se, diwar-benn ur bedveizadur kravezel pe diwar-benn bezoud ur feiz bennak. Ar pezh e vezer gouest d'anataat gant ar jedoniezh, ne vez ket ezhomm da grediñ ennañ. Ha mard eo gwir ez eo bevennet park ar ouezoniezh gant ar pezh a zo mentadus ha kantouezadus hep ken all n'eus tu na d'anataat na da nac'hañ war vezoud Doue dre seurt hent. Rak, evel, penngfluskour andanvezel ar bezoud, - hag ac'haleo eo e ranker loc'hañ e gwirionez, - ne c'hall Doue bezout nemet en tu all d'ar gweladus, en tu-hont d'an alvez kantouezadus. Pezh a dalv da lavarout ne c'haller kaout krog war e vezoud na dre hentennoù na dre anatadennoù gouezoniel.

Ergerzhout ha mestroniañ ar bed zo tu d'ober c'honvat : ac'hano an tech da reiñ dezhañ an displegadur nemetañ hep Doue. Hogen petra bennak ma c'hall seurt displegadur tremen hep Doue, nac'hañ war hemañ n'eo ket evit ober. Rak n'eo ket peogwir n'em eus ket ezhomm eus tra pe dra ma n'emañ ket hemañ o hanvout.

Diskouezet a walc'h eo bet gant prederourion ar bed kornogel e vez an den oc'h emskiantañ un ampar don o tennañ d'ar bezoud hag o trehontañ pep kantouezadur. Setu

perak ne c'hall ket an den tizhout e werc'heladur klok, e par doded e hanvoud, anez ober dave d'an drehontelezh. N'eus nemet gant seurt lakaenn eo e vez tu da zegas un anatadenn dalvoudel eus bezoud Doue.

Gant e Vonreizhad Bongoalek **Dei Verbum** Nnn 6, o taveiñ d'al Lizher d'ar Romaned (I-20), e weler emañ Goursened Vatikan II o tiskleriañ ; *"Tu zo, adalek an traoù krouet, da gaout anaoudegezh diarvar eus Doue, pennarbenn ha finvez pep tra, bennozh da luc'h naturel ar poell denel."* Hogen, pezh a vez en tu-hont d'an Doue sellet hepken evel pennarbenn ha pennfinvez, eleze pezh a vez oc'h ober kevrin andiraezadus Doue, ne c'hall dont betek ennomp nemet dre hent an Diskuliadurezh, da lavarout eo diwar-bouez **Ar Feiz** nemeti. Ne c'hall ket enta ar poell denel mont pelloc'h e seurt keñver diwar-bouez e nerzh piaouel nemetañ.

Dre ma vez seurt hanvoud sioc'han, koulz e barr e splannder hag e barr e reuzeudigezh o tioueriñ pep ster hag o strebotiñ dalc'hmat war an aters : pelec'h ez an ? peseurt ster zo da'm buhez ? peseurt eulad zo d'ar boan ha d'ar marv ? e vez ivez kudenn Doue o kinnig atav un daeadenn bouezek evel ster diwezhañ ha tralenat buhez an den.

Adalek an traoù krouet e teuy bepred ar reiz poellel hag aregel da stadañ ha da c'houlenn un derou hag un diwezh da gement a hanvez. Klask a ray enta respont "ya" e seurt doare da vezoud Doue. Hogen, zoken o lakaat e tisoc'hfen war un anatadenn boellel evit a sell ouzh e vezoud, c'hoazh ne vefe ket a-walc'h din, rak entuegezh d'an divezelezh, digoregezh d'ar speredelezh a rafe diouer din.

Petra bennak enta ma tenn an anatadennoù talvoudelañ dre ar poell da vastañ d'an unan pep diarvarded ergorel, c'hoazh ned int ket evit ren an disterañ nerzh-redi war spered an den, dre ma chom emstagoni an hinienn e dalc'h an atebegzh dieub. Ha dirak disenteziou a vez ken engouestlus evidon e c'hallan bepred, anat eo abegiñ diwar un diaester hag un teñvalder meizel bennak evit kaout un digarez da dec'hout diouzh heuliadoù hanvoudel ur "c'hengraderezh" seurt gant hennezh. Setu perak e chom beziadus ivez bepred an andoueadegezh skiantel, hep dezhi koulskoude bezañ rediv evit kelo.

Moarvat mar ne venner degemer evel anavezadus nemet pezh a vez anavezet gant ar skiantoù kantouezel, e ranker dezren ne c'hall ket ur werc'henn andanvezel bezañ anavezadus. Hogen n'eus azon skiantel ebet na gant ar rakveziad na gant an dianveziad meneget uheloc'h. Pell emañ zoken ar rakveziad diouzh kaout azon kantouezel bennak, evel ma terefe koulskoude ouzh kement gouziadur o tennañ d'ar skiantoù pervezh ; un darwirienn eo hep ken all. Hogen bez' ez eus moarvat e par ar skiantoù pervezh darwiriennoù hag a vez degemeret gant an holl, diouzh gallout disoc'hañ war dianvarrou a vez ungenezh e pep keñver. An darwirienn avat a zo kel anezhi amañ ne c'hall talvezout evel "par-kengrad" nemet da zalc'hidi ar verzhadelouriezh, ar gantouezelouriezh hag an danvezelouriezh, tamm ebet d'ar ouezoniezh dre vras.

Mar soñj da **Engels** e c'hall nac'hañ war ar penngfluskour, eleze war Zoue, e gounid an danvez, hemañ renet, gouez dezhañ, gant ul lusk dibaouez, seurt savlec'h n'eo ket koulskoude dibenn hogen derou un arguzennerezh ez eus anezhañ, da lavarout eo frouezh an dibab mennet a vez graet bewech a-raok arguzenniñ. Emañ

Engels oc'h arver al lusk evel anatadenn d'ar bennaenn fizikel diwar-benn miridigezh ar gremm-lusk. E seurt giz e vez o kemmeskañ stadadur an difreuzusted e par al lusk (pe welloc'h, evel ma lavarar peurvuiañ e par ar gremm, peogwir evit an holl argerzhioù fizikel e chom digemm sammad ar gremmoù) gant an haeradenn ned eo ket bet krouet seurt sammad-gremm.

Bez' e c'hall al lavarenn gentañ (a) bezañ degemeret evel unan skiantel, tra m'emañ eben (b) avat, war-bouez dezhi klask abeg ouzh meizad prederouriel ar pennderou, o trevonnañ bevennoù an domani kembeliek piaouel d'ar skiantoù pervezh.

Estreget maz eo diazezet pennaenn miridigezh ar gremm war gantouezadennoù. Dont a ra he gwiridigezh dezhi diwar ma n'eus bet merzhet betek-henn, e seurt keñver, nep anadenn displavarek. E tibennfe sammad bloc'hel an holl c'hremmoù diouzh ur gwered-krouiñ bennak, pe ne rafe ket, sed a zo dianavezadus e par kement enklask arnodel a zo, petra bennak ma chom hemañ an hentenn nemeti a ve arveradus e par ar skiantoù pervezh.

Emañ an danvezelouriezh daelerezhel o fougeal e ve anezhi ur bedvezadur soliet war diazezoù skiantel, hag o tiogeliñ ned eo he dodennoù nemet un dianlenad da witibunadur ar berzh graet hepken gant ar Skiant. Hogen ur goulenn atav war stign eo e gwirionez hini an dodenn a vez o klask, war sol ar berzh graet gant ar skiant nemeti, reiñ da grediñ n'eus bet, e par an amzer, nep derou d'ar bed.

Notenn

An destenn emeur o paouez lenn zo tennet eus ur brezegenn bet distaget gant ar C'hardinal König, d'ar 4 a viz C'hwevrer 1977 e Skolbenn Urbanat Roma.

Kedilizegezh

Adal an deiz ma teuas da vezañ Pab, e tisklerias Yann Baol II e chome al labour evit ar gedilizegezh war roll ar c'hrefen mallusañ da studiañ war hed ar bloavezhioù nesañ. Emañ an holl eskibion o skeiñ bremañ war an hevelep tach hag oc'h embann ez eo ret kenderc'hel peurastalus gant holc'h an unded etre an Ilizoù.

Tri ersav a c'haller kavout, hag int o sparlañ mallusted al labour en arempred ar gedilizegezh. An hini kentañ o vezañ un diseblanted plarik, evel pa vije kudenn an unded hag hini an Iliz hec'h-unan traoù didalvoud. An eil o vezañ ar merzhad ned eo ar gedilizegezh nemet un disivoud o vreiñ an Iliz Katolik. Hag an trede ar mennoz e tleer bevañ hag ober evel pa vije sevenet an unded endeo, eleze neuñ war lenn ur gedkealegezh feizel dismegañsus evit bezoud ha gwerchelezh pep Iliz.

Anat eo emañ an daou ersav kentañ o vont enep da vennoud ar C'hrist ha da hennad an Iliz. Ha daoust d'an diavaezioù, eman ivez an trede ersav ken enebet hag an daou all ouzh gwir holc'h an unded, rak bez' e vez o troukveskañ unded gant rezedadur dizerius.

Evit mont da vat gant hent an unded, e tleer neuze derc'hel kont eus daou ezhom, hag int diac'hinek evit ur gwel, an hini kentañ o vezañ ar ret maz eo dizarbenn keal an disrann etre kristenion aralliliz, hag an eil ar ret maz eo nac'h kement unded e gouwerzh a vefe kinniget dimp : e giz all e vefe koll an unded betek evel, da lavarout eo an

Iliz ha ganti degemenn an Aviel e-unan. Penaos ober neuze?

A-raok pep tra, ha dalc'hmat, e tleomp startaat ar bedenn evit an unded e stern pep Iliz hag ivez, seul wech ma vez tu d'henn ober, etre izili an amrizh Ilizoù. Rak d'ar mare-mañ e lavarfed a-walc'h e vije evel torret un tamm ganimp lusk ar bedenn evit an unded. Chom a reomp, war a hañval, evel kroaziet hon divrec'h ganimp dre skuizhder pe, a zo gwashoc'h, dre vihander hon feiz. Ha koulskoude kas ur bedenn hewel pe zihewel en un douez gant kristenion aralliliz a zo endeo darbenn hag ober an unded, peogwir o kemer hent ar bedenn e kejer ivez en un douez gant Andon nemeti pep unded : Jezuz Krist Hon Salver.

D'an eil emañ dimp, en hevelep doare, startaat ar c'henober etrezomp, en arempred ar vriegezh denel hag an herouezadur dleet d'an davanteion, war-bouez kenlabourat war un dro e stern aozadurioù aralliliz o pledin gant an hevelep trevelloù, evel da skouer "Yonez ha Hez", diouzh tu ar Gatoliged, pe "Feiz ha Sevenadur", diouzh tu ar Vlendestourion.

D'an diwezh e lavarimp e tleomp ivez diwaskañ strivoù evit bonnañ ar feiz en un douez. N'omp ket hep gouzout avat ez eo amañ dres e kejer gant an diaesterioù brasañ, neket moarvat peogwir e vezomp neuze en arvar da ziskouez an damantiz kleñvedek gant traoù eilrenk, hogen peogwir e vez an unded e par ar C'hrist ouzh aters. Moarvat e kredomp er C'hrist, en e Dad hag en e Spered. Seurt feiz avat n'eus tu ebet d'he disrannañ diouzh an Iliz a vez ouzh he degas dimp ha ma vezomp enni ouzh he buhezañ. N'eus tu ebet d'he disrannañ diouzh kement a zo retvezek d'un Iliz evelti gant he c'herrinoù hag he

gouniñvouriezhoù : diagoniezh, belegiezh, eskobiezh, pabiezh h.a.

Emeur o ren holc'hadoù e seurt keñver. Broñsoù kenglev a vez gwelet endeo o tigeriñ, hag int start pe startoc'h hervez ma vez d'ober gant Reizhvriaded, Anglikaned, Lutherianed pe Adreizhidi. Tu a zo neuze d'ober anaoudegezh gant seurt kenglevioù ha kenglevioù-arnod bet sevenet endeo evel, da skouer, kenglevioù an Domber e Frañs ; ivez ar c'henglevioù gant an Anglikaned hag al Lutherianed. Evit ma vefe gwir avat hon bonnadur feiz kevredin, e tleomp kaout mennozioù fraezh, pep hini ac'hanomp, diwar-benn feiz e Iliz. Rak peseurt ster a c'hallfe bezañ gant kenglevioù kedilizek diwar-benn Aberzh an Oferenn, diwar-benn ar gouezvoud gwerc'hel diwar-benn gouniñvouriezh an eskibion, ar veleion, ar Pab, diwar-benn Kerrin ar Briedelezh, diwar-benn Kerrin ar Binijenn, ma n'anavezomp ket, - pe mar sellomp evel un dra didalvoud -, kelennadurezh hon Iliz dimp diwar-benn an holl grefen-se.

Ent diac'hinadel, - hogen daoust hag e vo ken diac'hinadel ha ma kreder -, setu ma vezomp dre berzh holc'h an unded o tistrein d'hon feiz piaouel, eleze d'hon doare dimp da ren hon c'hatekizerezh ha d'embreger al lidadurezh. Mar ne fell ket dimp enta, gant ar gedilizegezh, disoc'hañ war ur feiz kevredin dizeriet, e tleomp adkavout hon feiz dimp evel m'emañ en he fezh, nemet ur feiz deuet da vezañ dilesoc'h a se dre berzh hini ar gristenion all aralliliz. Ha seul vui e klaskimp endonañ hon feiz, seul vui e teuimp ivez da dostaat ouzh ar re all e par Jezuz-Krist maz omp holl mennet da grediñ ennañ. Chom neuze hep gwellaat hon feiz a vije c'hwitañ war an unded, peogwir e

vijemp o klask he diazezañ en diavaez d'an Hini nemetañ, Hon Salver, a zo gouest d'hon unaniñ holl.

Ar gedilizegezh n'eus ket anezhi enta un dra deberzhiek, degaset war ar marc'had, hogen ur galv eo d'ar gristenion d'ober ul lammgresk dre ar bedenn, dre werediñ evit. an denion, diwar-bouez gwelloc'h meizidigezh eus o feiz. Bezañ kedilizek; n'eo ket neuze bezañ kristen diratozh, da lavarout eo evel ur feizad a vije o plavañ dreist d'an holl Ilizoù pe gollet war un "digenvezenn" bennak etre tachennoù liesseurt an Ilizou. Bezañ kedilizek a zo ivez bezañ kredour katolik stag ouzh ar bedenn, gennet gant ar garantez ha gwriziennet en e feiz.

Diwar gomzoù E Vriegezh an Arc'heskob **Bouchex, Avignon.**

Ha bremañ pezh a lavar ar Pab Nevez ...

Testenn tennet diouzh ar brezegenn graet gant ar Pab nevez dirak izili ar "*Sekretouriezh Roman Evit Unded Ar Gristenion*", e Roma, d'an 18 a viz Du 1978.

(...) Adframmidigezh an unded etre an holl gristenion oa unan eus paliou Eilvet Goursened ar Vatikan (Gw. Deved "*Unitatis Redintegratio*" niv. 1) hag adalek va dilennadur, e ris va mennoz groñs luskañ erounidigezh ar reoladoù hag an durc'hadurioù anezhañ, merzhout ma raen e oa se un dlead kezivik evidon. Talvoudegezh arouezel zo neuze gant ho kouezvoud amañ hiziv. Emañ o tiskouez, evit kel an Iliz Katolik, feal ha maz eo houmañ d'an durc'hadur kemeret ganti da genver ar Goursened, e fell dezhi, neket hepken derc'hel gant he hent davit

adframmidigezh an unded, nemet e klask ivez, hervez he galloud ha gant sentidigezh klok ouzh atizoù ar Spered Glan (Gw. "*Unitatis Redintegratio*" niv. 24) amplat e pep keñver he skoazell da seurt "luskad" meur o tiazerc'hel an holl gristenion (Gw. "*Unitatis Redintegratio*" niv. 4).

Ne c'hell ket ul luskad bennak chom harpet ; arabat e vo dezhañ arsevel kent ma tizhe e bal. Ha n'eo ket c'hoazh pengennet ganimp, zoken mar dleomp trugarekaat Doue evit an hent graet abaoe ar Goursened. (...)

O vont diouzh ali an abostol, e rankomp bezañ stegnet-holl da vont war-raok evit kenderc'hel gant ar redadenn (Gw. Filip. 3-13), diwar-bouez ur feiz dianav dezhi ar spont, pa oar e piv emañ o krediñ ha war biv e c'hell kontañ. Gant ar pres avat a vez warnomp da bengenniñ, gant ar mallus ma vez evidomp lakaat un termen da warzh dic'houzañvadus an disrann etre ar gristenion, e tleomp hepkoriñ "kement skañvboellegezh, kement gred anfur a vo gouest da noazout ouzh an unded da vont war-raok" (*Unitatis Redintegratio*" niv. 24). Ne vez ket pareet un droug bennak war-bouez diounit ampoaniuzoù, hogen war-bouez tagañ an arbennoù anezhañ.

Hag amañ e karfen dre spis degas da goun e oad kendrec'hel da genver ar Goursened e vez erzerc'hel gouezvoud an Iliz dreist pep tra pa vez dastrollet he holl dud evit lid ur gevradiezh nemeti, dirak un aoter nemeti, ma vez an eskob eno o ragwezhañ, gantañ war e dro e velegiezhvod (Gw. Reizhadur "*Sacrosantum Concilium*" niv. 41). Daoust ma ne vez ket graet gwell alies, er bed arnevez ma vevomp, lidoù kevradiel ken kanmoedek ha hennezh, e chom gwir evelkent e vez engouestlet holl feiz

an Iliz e kement lid kevradiezh a zo ; bez e vez diwar-henn ar gedunvaniezh ilizel, gant kement mentenn a zo dezhi, oc'h erzerc'han he bezoud hag o werc'helaat. Ha digenvezañ diwar did an elfennoù anezhi ne c'haller ket ober. Rak neuze e vefe anat warnomp ar seurt skañvboellegezh, emañ ar goursened o c'houlenn ouzhimp treiñ diwarni hag e chomfemp hep teurel pled ouzh an holl binvidigezhioù, darvennadoù ha keñverioù strizh a zo etre ar gevradiezh hag unded an Iliz.

N'on ket hep gouzout e vez seul boaniusoc'h evidomp chom hep gallout perzhiañ en un douez e ken bras kevren, seul dostoc'h m'emaomp evel breudeur e karantez ar C'hrist. Hag eñ n'em eus ket lavaret e teu an disrannoù etre ar gristenion da vezañ dic'houzañvadus ? Seurt gouzañvidigezh e tleomp bezañ broudet ganti da drec'hiñ war ar skoilhoù a zo c'hoazh o herzel ouzhimp d'ober bonnadur unvan hon feiz unvan ha da seveniñ, dre berzh ur gouniñverezh kerrinel unvan, adkevanidigezh hon c'hedunadiezhoù disrannet. Tremen hep diskoulmañ en ur gevret seurt kudennoù, bet disrannet ar gristenion ganto, ne c'haller ket. Bez e vefe karitez gwall sklerijennet fall, c'hoant ganti d'arwelaat diwar goust ar wirionez. Klask ar wirionez e par ar garitez oa ur pennstur, c'hwek an adarren anezhañ da gentañ Arlevier ar Sekretouriezh, ar parc'het Kardinal **Bea**, bet lidet ganeoc'h en deizioù-mañ dekvet pennbloaz e varv.



Amlien Torino

Kalz dudi am eus kavet o lenn war niverenn 150 **Imbourc'h**, ar brezegenn bet graet d'an 18 Ebrel 1982 e chapel Sant-Marzhin **Roazhon** gant an Ao. beleg **Barbotin**. Ha seul vrasoc'h oa va dudi m'emaon bremañ o studiañ kudenn *Amlien Santel Torino*. (1) Un degouezhenn eo houmañ hag a ra berzh bras d'an ampoent. Gant lavaredoù an Ao. Barbotin e kave din edon oc'h adlenn al levrioù pouezus, gouiziel zoken, nevez bet embannet hag o tennañ d'an Amlien (2). Hogen ret eo din amañ reiñ un nebeut diskleriadurioù diwar-benn ar gobidell.

Er bloaz 1981 e oa bet jedet betek tri milion niver an dud a oa deredet eus ar bed kevren da d**Torino**, kerbenn b**Piemont**, mann nemet e korf miz Gwengolo, evit arvestiñ ouzh an Amlien Santel a vez miret ha diskouezadennet eno. Perak kement a fougas en-dro d'un dra na gomzed betek neuze diwar e benn nemet diwar c'horre ? Ac'hanta, peogwir edo ar Bodad Skiantel, graet gant 300 imbourc'her, en o mesk eizh-warn-ugent gouiziad ha kevarouezour, sev arbennigourion stag ouzh pemzek skolbenn eus broiou disheñvel, o paouez embann e oa diaes difenn na oa ket **Amlien Torino** hini Jezuz Nazared.

Bremañ ez eo kendrec'het an holl amlienourion, bet o plediñ gant ar gudenn, n'eo ket ul livadur na seurt all ebet heñvel, ar skeudenn a weler war an Amlien, evel ma oa bet tu, betek ar bloaz 1978, da grediñ e oa, nemet e tleer, gouez dezho, sellout outi evel "*ar c'hoshañ luc'htres a zo war an douar...*" Pelloc'h e tisplegin peseurt doare zo gantañ. Neuze, peogwir e lavar ar skiantourion n'eus ket ul livadur anezhañ, hogen ul luc'htres, e ranker dezren ez eo diles an derc'h a weler war an amlien pa vez dispaket hemañ. Ur

seurt liñsel eo, dezhi pevar metrad hed, ur pezh gwiaderezh enta bet arveret en ur mare, anat eo, ma ne ouied ket c'hoazh petra oa al luc'htreserezh !

Penaos avat eo bet merket an amlieñ gant seurt louc'hadur digunvez o vont d'ober un derc'h hag eñ teirmentek (3), war ar marc'had ? Sellomp da gentañ ouzh doare diavaez ar skeudenn. An darn vrasañ anezhi zo graet gant merkoù korfel, tresoù goulioù gant gwad ha dourennoù, rak savelet eo bet hennad an elfennoù-mañ : toullou diwar dachou hir e parzh an arzornioù (4) hag ar chougou-troad ; kignadennoù diwar daolioù skourjez ; bloñsadennoù war an divskoaz hag an dremm : troc'hou en daoulin ha dreist pep tra, broudadennoù war ar c'hlopenn diwar c'hloazerezh gant un dra flemmus bennak.

Ret eo lavarout ez eo deuet ar skiantourion d'anaout ur bern traoù o klotañ pervezh gant danevelloù an Aviel, war-bouez dezho studiañ an Amlieñ.

Evit a sell ouzh an den skeudennet war ar pezh-gwiaderezh, o deus dizoloet an arbennigourion :

1) e oa bet skourjezet hennezh gant ur strilh roman anvet "*flagrum*", benveg hag a veze, dres a-walc'h, arveret en amzer Jezuz (5) hogen evit kastizañ tud eveltañ na oa ket keodedourion roman anezho ;

2) e oa bet flañchet tor e vruched dezhañ gant ur goaf roman hirveget, dres an hini anvet "*lonc'hê*" (6) gant sant Yann en e destenn c'hresianek (19, 34) ; kavet o deus war ar pezh-gwiaderezh betek roud eus ar gwad hag an dour kemmesket bet diveret eus gouli an taol-goaf, evel ma ouzer e voe kont evit Jezuz ;

3) e oa bet sanket war e benn, don a-walc'h, ur meni kabell graet gant sperm, *dres evel ma oa kont evit Jezuz* (7)

4) e oa bet douget ur bec'h pounner gantañ war e choug evel maz eo bet gant Jezuz, pezh a vez oc'h anadiñ dre berzh ur brondou ledan war an amlieñ ;

5) e oa bet gloazet e zaoulin gantañ, evel ma voe kont evit Jezuz o kouezhañ war an hent, ha treuzellenn e groaz war e choug ;

6) na oa ket bet torret e zivesker dezhañ, evel ma ouzer e voe kont evit Jezuz, petra bennak ma oad kustum d'henn ober peurvuiañ d'ar groazstagidi.

Amañ e fell din distreiñ war danvez ar brezegenn bet distaget gant an Ao. Beleg **Barbotin**, hag eñ o pouezañ dreist-holl, gant gwir abeg, war savlec'h an amlieñ bet kavet e-barzh ar bez. Rak, en abeg d'an amlieñ end-eeun eo e c'haller dezastum neket hepken en deus gouzañvet hag ez eo bet marvet Jezuz hogen ez eo bet dasorc'het ivez kaerañ pezh a zo ! Kent anataat an dasorc'h e ranker anataat ar marv. Ha sed a zo bet tu d'ober ivez, diwar studi skiantel war an amlieñ.

Adwelomp neuze bremañ pezh a lavar an Ao. beleg **Barbotin**. Ya, ret-mat oa d'al liñsel vras bezañ chomet er stad ma oa, eleze diflaket, hogen punet atav, dres e-giz ma oa bet graet al labour gant keneiled Jezuz, bet o sebeliañ e gorf. Ha setu perak ez eo bet sevenet ken pervezh an enlouchadur a vont bremañ d'ober estlamm ha preder an amlieñourion, betek degas ar re ampartañ anezho da ganttreiñ ouzh ar feiz kristen, evel maz eo bet kont evit Ian Wilson, ar gouziad saoz hag aozour al levr "*The Shroud of Turin*".

Diarvar eo bremañ ez eo stag hennad an enlouchadur ouzh hennad ar gremm bet en un douez o verkañ skeudenn ar marv hag o kas an dasorc'h da benn.

Penaos avat e reas ar C'hrist evit merkañ gant skeudenn e gelan tu-dialaez ha tu-dindan al liñsel stok ouzh e groc'hen ? Displeget eo bet an doare gant an arbennigourion diwar-bouez un arguzenn diazezet war an imboure'h istorel oc'h anataat e veze paket gwechall kelanoù ar Juzevion gant ur pezh-lien hir o c'holeiñ war un dro diaraog ha diadreñv ar c'horf. Setu perak, dres, em eus goveliet ar ger "**amlien**" evit diskouez gant an trobenn "**am-**" e veze goloet ar c'helan en e bezh diaraog ha diadreñv, gant ur seurt liñsel vras. Sklaer eo, diwar henn, e ranke div lodenn an amlien dont da vezañ merket gant al luc'htres war an tu ma stokent ouzh korf an Tiern Jezuz hag Eñ o tasorc'hiñ. Rak n'eus doare all ebet da zisplegañ an traou, adalek ma vez diazezet-start, - evel maz eo bremañ diwar-bouez anatenn skiantel, - ez eus gant an derc'h a weler war al lien hennad ul luc'htres gwirion. Dre berzh peseurt gremm avat ha peseurt argerzhad ?

Ret eo gouzout e oa bet luc'htreset endeo skeudenn an amlien santel, adalek ar bloaz 1898, gant un den anvet **Secondo Pia**, rak krog e oad neuze da welout an ardivinkoù kentañ o labourat. Hag aotreet eo bet an den, ur breutaer anezhañ, da dennañ e luc'htres. Lamet gantañ e blakenn diouzh an diskulgibell, e verzas **Secondo Pia** e oa un trelun e gwirionez ar ginlun a oa engortoz kavout ! ... hag e oa kalz fraeshoc'h seurt amprouenn c'hoazh eget skeudenn an amlien diwar sell noaz. Ar peb marzhusañ amañ emichañs oa dizoleiñ na oa skeudenn an amlien nemet un ginlun, hi hec'h-unan. Pebezh kevrin ! Ur wech diorreet, e teuas al lun da vezañ splannoc'h c'hoazh evel dres, ha gant al luc'htresou perveshoc'h-perveshañ bet tennet er goudevezh, e c'hallas ar skiantourion studiañ pishoc'h bepred ar stlennoù, niverus e pep keñver, a veze hag a vez atav ar pezh-gwiaderezh o tegas dezho. Gant al lunioù-liv

dreist-holl eo e kavont ar skoazell vrasañ hag ivez gant ar reoù teirmentek, peogwir - evel displeget uheloc'h - ez eo teirmentek al louc'hadur santel.

Daoust ha tu zo da welout aze ur gentel o tont dimp digant an Arloz ? Ya, da'm c'hredenn, ha sed amañ ar ster a zo da reiñ, war va meno, da seurt anadenn vurzhus.

N'eur ket hep gouzout ez eo bet pal ar skiantelourion en naontekvet kantved hag, abaoe, hini gouziaded andoueat stankoc'h-stankañ, klask anataat n'he doa ar gelennadurezh kristen diazez ebet, - ne oa anezhi nemet ur gravez denel evel ar re all. Ha forzh penaos, biken ne vije bet soñjet e c'halled arverañ ar skiantoù kantouezel evit difenn feiz ar gristenion ! Rak, zoken an Ilizoù, int o-unan, ne felle ket dezho, dre bennaenn, goulenn skoazell digant seurt skiantoù, peogwir ez eo anat ne c'hall ket hennad an traou douevel kouezhañ dindan an imboure'h kantouezel. Hogen mar bez hennad Doue o tiflipañ emichañs diouzh krabanoù ar c'hantouezerezh, disoc'hoù danvezel e labour ne reont ket koulskoude, dre heulret, ha sed a zo bet meizet ervat gant an amlienourion, da skouer. Kement ha ken bihan maz eo bremañ eilpennet an traou pa weler betek ar skiant kantouezel, hi hec'h-unan, o labourat ken berzhus enep da vennoziou ar skiantelourion ! Ha moarvat e vefe sebezemik un den evel **Renan** o welout ardivinkoù an Amerikaned oc'h arc'hwelañ hiziv an deiz evit degas ar ouziaded da ziskleriañ ez eo diaes difenn nad eo ket amlien Jezuz Dasorc'het an hini a vez dispaket gwech an amzer e **Torino** dirak an engroezioù !

Biken, emichañs, ne vo dielfennet, amañ war an douar, hennad ar gremm a zo bet e devoud luc'htres an Amlien Santel, anezhañ ur pezh-gwiaderezh boutin bet kavet evit ar wech kentañ en **Edessa** (Turkia). Troet eo ar ouziaded avat da zeskrivañ seurt hennad dre geñveliezh gant hini ar

gremm derc'hanel, rak, pa darzhas bombezenn **Hiroshima**, e voe dameuc'het war speurioù kompez diwar dro skeudennoù tud bet pulluc'het dre luc'hedenn an distruj. Un tamm enta evel ma c'hoarvezas evit skeudenn korf Jezuz, astaolet war wiad an amlien (dindan ur miliardvet-eilvedenn marteze, hervez lod arbennigourion) pa oa luc'hedenn an Arloz o tarzhañ, naren evit skeiñ taol ar marv c'honvat, hogen evit an adsav, na petra, d'ar Vuhez Klodus. Petra bennak ma oa speredel ha douevel luc'hedenn an Dasorc'h, e oa koulskoude gwerc'h danvezel ganti, rak, hervez ar gouiziad amerikan **Kenneth E. Stevenson**, e teu da vezañ saveletoc'h-saveletañ bemdez ez eo louc'hadur an amlien ur suilhadur, sev ul loskadur skañv diwar-c'horre, hogen unan andisplegadus anezhañ evit ar mare, paz eo andisplegadus an doare maz eo bet sevenet.

Evit va c'heloù din, goude bezañ lennet al levrioù gouiziel rakveneget, e kredan start bremañ e burzhud an Amlien Santel, anezhañ, gouez d'ar Pab **Paul VI**, "*un emaroueziad marzhus*" (8) bet roet dimp gant Hon Salver.

Notennoù

1 - Amlien : Ar ger-se a dalvez lien-sebeliañ, termen savet ganin diouzh skouer ar re gembraek : "*amdo*", "*amwisg*"; "*shroud*" e saozneg, "*suaire*" e galleg.

2 - Ian Wilson : *The Shroud of Turin*. Troidigezh c'hallek e-ti Albin Michel, Paris, 1978, dindan an talbenn : "*Le Suaire de Turin*".

Kenneth E. Stevenson & Gary R. Habermas : *Verdict on the Shroud*. Troidigezh c'hallek dindan an talbenn "*La verite sur le Suaire de Turin*", e-ti Fayard, 1981.

3 - Teirmentek : Gant binvioù diwezhañ ar skiant o deus kavet an arbennigourion amerikan teirmentegezh ar skeudenn, hep gallout evit c'hoazh reiñ displegadur ebet diwar-benn seurt anadenn.

4 - Arzornioù : Dre an daouarzorn ha n'eo ket dre ar palvoù-dorn eo e voe staget Jezuz ouzh e groaz, rak anat eo e vijet drailhet an daouarn gant pouez ar c'horf ha kouezhet hemañ d'an traoñ mar bije bet tached dre greiz ar palvoù.

5 - Flagrum : Netra nemet ur skourjezadenn evel an hini gouzañvet gant Hon Salver oa trawalc'h, hervez ar skiantourion, evit degas ar marv d'un den kreñv. Setu perak e varvas Jezuz buan a-walc'h war e groaz, eleze kent d'ar soudarded bezañ bet amzer da derriñ dezhañ e zivesker evel ma oad boaz d'ober d'ar groazstagidi pell o vervel.

6 - λονχη : Skrivet ganin "*lonc'hê*" e lizherennou romanek, dre ma veze distaget e seurt giz moarvat, ha n'eo ket "*lonke*".

7 - Kabell Spern : Oc'h isverkañ e skrivan an arroud-mañ, pouezus evel maz eo, rak mard eus bet miliadoù a dud o vervel war ar groaz e grez ar Romaned, n'eus ket bet nemeur kurunennet gant spern evel Jezuz. Diwar an devoud-mañ eo ez eo bet kanttroet Ian Wilson, ar gouiziad saoz amlienour, bet skrivet gantañ al levr skiantel kentañ rakveneget.

8 - Emaroueziad : Un dra bouezus o tisplegañ perak e kaver lerc'hioù ken niverus war an amlien eo an devoud da

heul na gaver meneg ebet anezhañ dindan bluenn an avielourion, nemet a zo aes da savelañ.

O vezañ ma oa ar Sabad o vont da gregiñ pa oa Jezuz da vezañ sebeliet, ez eo sklaer na oa ket bet amzer d'embreger al labour o tennañ da walc'hiñ ar c'horf evel ma oa boas ar Juzevion d'ober a-raok beziañ an hini marv. Setu perak moarvat e oa ar merc'hed o vont da gas da benn d'ar sul veure al labour n'o doa ket gellet ober d'ar gwener da noz, pa gavjont ar bez goull. Hogen dres en abeg d'ar c'horf bezañ chomet diwalc'h, eleze "**gwad ha goul holl**", e-giz ma lavarar, eo e kaver roudoù ha stlennoù ken stank oc'h amparañ al louc'hadur war al liñsel chomet peg ouzh ar c'horf. Setu ar pezh a lavar an arbennigourion. Hag ateged eo seurt arguzenn gant an istor. Sabad benniget, mennet a-dra-sur gant Doue, ha bet aozet en abeg dezhañ, evidomp an dasprenidi, releg meur ken prizius an Amlien Santel.

Un evezhiadenn evit echuiñ

N'eo ket dre maz eus hiziv ur bern kristenion, katoliged, adreizhidi ha reizhvriaded o krediñ e burzhud an Amlien Santel ma tle pep badeziad kantvout seurt anadenn evel ur bongoal.

Bez' ez eus devoudoù all war dachenn ar feiz katolik, da skouer, ha n'eus netra o rediañ an dud a feiz da grediñ enno, petra bennak ma weler ar peb brasañ o tuañ ganto. Sed a zo bet e-pad pell degont gwirionezioù evel Krouidigezh Dinamm Mari, Mamm Hon Salver, hag he Dec'horre d'an Neñv rak ned int bet diskleriet evel bongoaloù nemet abaoe un nebeut bloavezhioù hepken.

Evit a sell ouzh an Amlien Santel e ranker, evel dres, anzav n'eo ket bemdez e kejer gant un anadenn ken skogus

hag hounnezh, rak seul vui en he studier, seul vui e tesker diganti ur bern traoù graet da startaat feiz pep kredour e brasañ bongoal ar gristeniezh, sev : **Marv Gwirion ha Dasorc'h Gwirion An Hini a vez anvet Jezuz an Nazaredad**. Emañ neuze dilested an Amlien Santel ha dreist-holl dilested e ziskuliadurioù o kadarnaat en un douez daou vongoal o tennañ da Jezuz Hon Salver :

- E varv hag E zasorc'h ;
- E hennad evel Den ha Doue war un dro.

Ar peb skogusañ avat eo an dro c'hoariet gant Spered Jezuz d'ar skiantelourion andoueat : gwiriekaat ar **Bongoal** dre werc'h ar skiantou kantouezel int o-unan, pezh na oa bet gwelet morse c'hoazh. An Amlien ne vo biken diskleriet evel ur bongoal, pa n'eus ket ur bongoal anezhañ. Ne dalvo hiziviken nemet d'un dra : bezañ en arempred **Ar Bongoal** evel defraeshadur gouezoniell didrec'hus.



O tistreiñ war Gudenn *Dilested Amlien Torino*

Moarvat o deus dalc'het koun al lennerion o doa graet ur striv d'e vezout, eus ar skrid am boa embannet war **Imbourc'h** er bloaz 1983 (niverenn 163-164-165) diwarbenn "**Amlien Torino**". Evit gallout ober ul liamm etre stad ar gudenn da neuze ha pezh a zo c'hoarvezet abaoe war dachenn an enklaskoù, e rankor emichañs adlenn ar gentañ studienn-hont.

Ur wir skiant ez eo deuet da vezañ hollad an dizoloadennoù a zo bet sevenet, dre hir labourat, war al liñsel vrudet bet anvet gwerso, ganr gwir abeg "*ac'heiropoëitos*", da lavarout eo, "*andorngraet*", "*nanngraet-gant-dorn-an-dud*". Evit reiñ da seurt skiant dibar un anv bennak, ez eo bet savet zoken ar ger saoznek "*sindology*", gant an arbennigourion liesdiskiblezhat anezhi. Ha ganin, na petra, ez eo deuet seurt anv da vout "*amliouriezh*", pezh a roio tu morvat, ur wech ouzhpenn, d'ar bismigerion d'abegiñ va brezhoneg "chimik", hag i ken damantus all, koulskoude, d'hon yezhoù meur amezek, pa rank ar re-mañ ijinañ diwar ar gresianeg termen pe dermen a vez, forzh penaos, chimikoc'h c'hoazh eget va re-me. Ma!...

Dre va skrid kentañ e lavaren enta e oa bet pal skiantelourion an XIXvet kantved diskouez n'he doa ar gelennadurezh kristen diazez skiantel ebet. Ha setu maz eo bet eilpennet an traoù gant doare marzhus "*Amlien Torino*", pa denn hemañ end-eeun d'anataat ez eo bet marvet Jezuz e

gwirionez, ha neuze, dasorc'het, dres evel m'emañ danevellet an traoù e levriou an Aviel. Dasorc'h Jezuz avat ne vije ket endhu anataet, anez dezhañ ivez bezañ bet marvet, goullet-holl, o lezel war an Amlien merkoù liesseurt evit lakaat war-wel ned eo ket mojennoù ar pezh a zo danevellet gant an Avielourion, nemet ez eo deuet hevelep titouroù dre louc'h da vezañ danvez anadurezh istorel koulz ha gouezoniell, bennozh d'an arnodadoù bet sevenet warno gant gouiziaded niverus, en o mesk arbennigourion amerikan deuet ergentaouik da labourat war al liñsel gant begenn an ardivinkoù arnevesañ. Ya, tra vurzhodus : kement munud o tennañ d'an darvoudoù evel maz int bet displeget dre skrid, bremañ ez eus tost da zaou vil vloaz, a zo bet studiet gant amrizh arbennigourion diwar ar merkoù a gaver war an Amlien. Hag anzavet eo seurt lerc'hioù, abaoe bloavezhioù bremañ, evel titouroù o klotañ gant re an Aviel diwar-benn skourjezadur, sperngurunadur (1), kroazdougadur, kroaztachadur, stlesc'hoafadur (2) ha sebeliadur Jezuz anvet an Nazaredad.

Evit va c'heloù din, em eus e'm c'herz an holl skridoù ha levrioù skiantel a zo bet embannet war ar gobidell-mañ abaoe un nebeut bloavezhioù. Da geñver va studienn gentañ, em boa meneget endeo lod anezho, hogen abaoe Kendalc'h Etrevroadel Arbennigourion ar CIELT ("*Kendalc'h Etrevroadel ar Studi war Amlien Torino*") bet bodet d'ar 7-8 a viz Gwengolo 1989 e Pariz (ya, e Pariz, hag ar gelaouennerion c'hall o genoù bras o terc'hel atav d'ober skouarn vouzar !) ez eo kresket va levraoueg amlienouriezh gant an oberenn bouezek talbennet "*Anataidigezh Ouezoniell an Dilested*" a zo bet embannet warlene gant A. Upsinsky, anezhañ ur gouizadoniour arbennikaet war ar c'hevrankoù etrediskeblezhat.

Evel m'emaon o paouez lavarout, gant ur gouizadoniour eo ez eo bet skrivet al levr diwezhañ-mañ, o vezañ ma vez kefridi ar ouziadoniezh ober labour barnlez ouezoniell, pa vez diskloterezh etreskiantel. Rak, sevel a reas arvell da heul arnodad ar c'harbon 14, bet renet war an Amlien er bloaz 1988. Hag o vezañ ma oa fall disoc'hoù an arnodad evit an dilested, e oa bet brasoc'h bruderezh emichañs gant kelaouennerion ha yoc'hstlenn Pariz, diwar-benn seurt darvoud, eget ma reont bremañ gant kemm ar saviad c'hoarvezet adarre abaoe warlene, e gounid ar wirionez.

Diaes eo da lod, na petra, lonkañ dourenn Dasorc'h Jezuz-Krist, Doue ha Den. Henn kompren a ran, gant ma chomor kwer e diaouez pep defraeshadur skiantel.

Hervez diskoulm an arnodad enta dre garbon 14, ne save ket oad an Amlien kaezh en tu-hont d'ar 14vet kantved, daoust ma oa bet lies arbennigour all, eleze, gouiziaded ivez, o tisoc'hañ gwerso war diskoulmoù disheñvel, pa lakaent, int-i, hoali al liñsel da sevel dres betek ar mare ma oa Jezuz o vevañ ! Gant piv e oa neuze ar wirionez ? Gant tud ar c'harbon 14 pe gant ar re all ? Setu ma ranked barn ha skarat ! Pezh a voe graet da heul "*Kendalc'h Etrevroadel Pariz*" rakveneged, bennozh da labour diargadus A. Upsinsky, o tiskouez, evel barnour etre an div gevrenn skiantel, e oa ar frailh da vezañ lakaet war gont ar c'harbon 14.

Gant dizoloadenn J.B. Rimaudo avat, anezhañ un enklaskour war ar vezekniezh derc'hanel, ez eur aet pelloc'h choazh, o vezañ ma ne ouied ket betek vremañ, penaos e oa bet stummet derc'henn ar c'horf war an Amlien, lod o klask displegañ an dra diwar-bouezh un doare flac'h ("*flash*") e

saozneg). heñvel ouzh hini tarzhadenn Hiroshima o tameuc'hiñ skeudennoù tud war speurennoù kompez ar gêr distrujet ; un darzhadenn sioul avat, hini an Dasorc'h, na petra, hervez dalc'hidi al lakadenn-mañ !

Ac'hanta, nann, dilezet eo bremañ seurt martezeadenn, paz eo diwir, eme Rimaudo, e-keñver kalvezelezh, o vezañ ma n'eo ket louc'het derc'henn ar c'horf war al liñsel hervez argerzh ur flac'h, rak hemañ, moarvat, a vije bet trumm, forzh penaos. Dereziek, e gin, ez eo bet al louc'hadur, hervez an enklask bet sevenet gant an arbennigour-mañ warlene... Ha, kaerañ pezh a zo, e tegas hemañ ivez, war un dro, un displegadur fraezh da c'hwitadur ar c'harbon 14 bet oc'h amzeriadañ al liñsel er XIVvet kantved. Penaos ? Klask a rin henn diskleriañ, pegen kalvezel bennak e vo hep mar ebet, ar yezh ma rin ganti. Hogen, krouet eo bet ar brezhoneg evit bevañ, kreskin, ha zoken, merdeñ ken lark hag ar re all war donvor ar ouezoniezh. Bezet neuze, mar plij, damantus va fismigerion voas !

Anataet e oa bet endeo gant gouiziaded all eus ar Stadoù-Unanet, ne c'halle ket skeudenn ar c'horf war al liñsel bezañ diwar livadur denel, hogen diwar suilhatur dre vergladur ar c'helluloz e gwiad an Amlien. Ac'hanta ! Evit J.S. Rimaudo, e chom gwir bepred seurt haeriadenn.

Penaos avat ez eo tremenet an traoù diouzh e soñj ?

Hervezañ, e c'hall korf an den dedeurel protonioù, peogwir e kaver war-c'horre ar c'hroc'hen kraonelloù deuterion gouest da reiñ un niver kevatal a brotonioù hag a neutronioù war un dro pa vezont lakaet da zifloskiñ.

Gant ar protonioù neuze o skindagañ ar gwiad eo ez eo bet treset war an Amlien an derc'henn varzhus aouraval, azgell pe c'hell, eleze, gant arskeudoù o kemmañ hervez dislank bras pe vrasoc'h lodennoù ar c'horf diouzh al liñsel.

Sed evit pezh a sell ouzh an enlouc'hadur dre suilhatur a c'heller merzout hag estlammiñ outañ.

Hogen gant an neutronioù o tiflukañ ivez war an hevelep tro, hag i karget a garbon 14, ez eo aet al liñsel war vec'hiekaat eus an elfenn-mañ, kement ha ken bihan maz eo deuet ar gwiad da yaouankaat e-keñver amzeriadur. Gant gerioù all, dre berzh bec'h re vras ar c'harbon 14, ez eo bet berraet hoali an Amlien da geñver arnodad an amzeriadur a reas kement a drouz.

Studiet pishoc'h eo bet ar gudenn-mañ gant Rimaudo : jedet en deus, da skouer, kementad ar protonioù a rankfed strinkañ ouzh al liñsel da reiñ dezhi an arlivoù rakdeskrivet he deus bremañ, war-bouez degas en un douez ar c'hementad kevatal a neutronioù ret evit yaouankaat ar gwiad eus an XIIIvet kantvedad, evel maz eo c'hoarvezet gant an Amlien da geñver an amzeriadur dre garbon 14. Ha diwar seurt jederezh ez eo deuet ar gouizad-mañ, e-kerzh un arnodad all war ar c'hwimder rannigoù, da gaout dres enta, rak, gant ur skindagadenn brotonioù kreñvoc'h eget an hini a reas, e vije bet losket ar gwiad, ha gant unan skañvoc'h, ne vije bet louc'hadur ebet.

Splann e teue kudenn an amzeriadur da vezañ diwar se : ne c'halle an arnodad dre garbon 14 bezañ nemet faziek da heul bec'hiekadur al liñsel eus kementad atodel ar c'harbon 14 degaset gant neutronioù an deuterion diflosket.

Pelec'h avat mont da glask arbenn difloskidigezh an deuterion p'edo ar c'horf en e vez ? N'eus den barrek d'henn lavarout. Hag-eñ ne vije ket, koulskoude, seurt arbenn da vezañ klasket en ur gremm dreistnaturel kar da hini an Dasorc'h bet o c'horfiñ daou zevezh-pad e bez ar C'hroztached Jezuz-Krist ? Piv a virfe ouzhimp d'henn krediñ ? Hag-eñ ne gelenner ket hiziv an deiz e pep lec'h lakadennoù skiantel diazezet hiviziken direndael-glez, ha diwar lerc'hioù nemetken, eleze, hep da zen, evel evit darvoud an Amlien, bezañ bet biskoazh war-dro d'o gwiriekat ? An div skouer da heul henn diskouez splann : da gentañ, hini ar bing-bang darbennet e pep keñver bremañ; ha d'an eil, hini dispac'h ar c'hevandirioù anzavet kenkoulz all hiviziken hep an disterañ tabut (3).

Hogen, evel an Aveli, emañ ivez an Amlien o tiskuliañ d'ar vezeged, d'an hendraourion, d'ar jedoniourion ha d'an arbennigourion liesseurt, Gouzañv gwirion, Marv gwirion ha Dasorc'h gwirion un den bet kroztached. Klotañ a ra kenetrezo an holl wiriekadennoù kewer bet sevenet gant gouziaded. Perak e chomfe neuze diwirheñveloc'h an dastumenn hollek diwezhañ d'ober, pa vez kont eus Jezuz ar C'hrist, Doue ha Den, dasorc'het e gwirionez tri deiz war-lerc'h e varv hag e sebeliadur ?

Notennoù

- (1) "Sperngurunadur": ur meni helm, e gwirionez, graet gant spern, eo a voe sanket da Jezuz war e benn.
- (2) "Stlesc'hoafadur" : tu a vefe da lavarout ivez "skañv'hoafadur", rak ur "skañv" (liester : "skevent") eo a voe toullet e gwirionez gant taol goaf ar soudard roman.
- (3) Gant damkaniezhoù all, zoken, ne vije ket kemmet ar gudenn stignet amañ, bezañ ma chomo bepred burzhudus difloskidigezh ar c'hraonelloù deuterion.

Kevrinourion ha Radwerc'heged Rusia

Serafim Sarov

Diwar ar c'hentañ sell, e vefe techet an imboureher skortweliat da varn an dizunvaniezh etre ar gristenion evel un oberer-disperedelaat, pezh a zo bet diwir dalc'hmat hag a ro dre se pouez bras hiziv an deiz d'al luskad kedilizelour. Rak, birvidigezh ar gevrinouriezh hag ar radwerc'hegezh, da geñver zoken taolioù krisañ ar brezelioù kravezel, a denn da ziskouez n'he deus biskoazh ehanet an Iliz Dihewel da chom unvan en he donañ, dre berzh emell ar Spered Glan en he c'hreiz, prof dispar bet azavet gant ar C'hrist kent e C'houraskenn, ha sevenet-pervezh dre ar gristenelezh abaoe, war hed ar c'hantvedoù. Degont Serafim Sarov ne c'hall nemet kadarnaat seurt gwirionez, evel m'emaomp o vont da welout.

Dremm garv saw distrafuilh ur manac'h kozh sklaeriet gant kuñvelezh e selloù glas, ur vazh skoulmek e dorn an den, ul levitenn c'hloan war e gein, soledennoù rusk en e dreid, setu penaos en dije gallet diboufañ dirazoc'h amlun bagol ha dotu an argelrith bev a voe Serafim Sarov, unan moarvat eus brasañ mistri speredel Rusia gristen ar Reizhvriezh en I9vet kantved. Fellout a reas da hemañ bevañ e don ar c'hoadoù ha padal morse ne voe gwelet kement a dud o tont da welout seurt penitiour !

Anv gwirion an den oa Proc'hor MOCHNIN. Graet e voe Serafim anezhañ pa gemeras e wiskamant-lean ha

Sarov da c'houde, dre maz eas da vevañ e koadeier gouelec'h Sarov.

Ganet d'an 19 Gouhere 1759 e Koursk, e voe mesket ar bugel abred gant marzhoù dreistnaturel. Kouezhet da seizh vloaz, da skouer, diwar chafod un iliz ez adsavas dre vurzhud war e dreid, yac'h ha dibistig. Da zek vloaz, hag eñ klañv-bras, e voe pareet en un taol, da geñver ul lidkerzh dre gêr gant skeudenn ar Werc'hez... Ar c'henwerzh dalc'het gant e gerent ne gav ennañ deur ebet hag un deiz sed-eñ kuit e ser ur bagad fraied betek manati ar Groc'hoù e Kiev. Eno e kav Proc'hor ali digant ur manac'h ha kennerzh ivez da seveniñ e ratozh da gevaniñ ouzh an urzhoù-lean.

Dibabet e voe, diwar genali, ur manati kollet e-kreiz ar c'hoadoù anvet gouelec'h Sarov, er su da Nijni-Novgorod. Distro d'ar gêr e Koursk e kimiad Proc'hor diouzh e vamm ha da viz Du 1778, graet gantañ 600 kmd war droad, emañ ar paotr war dreuzoù ar manati. Naontek vloaz eo. Eizh vloaz war o hed e labouro eno evel mevel-kell, pober, kalvez, sakrist. Pep trevell a vo mat evitañ ha ne heugo ouzh netra, Kalet eo koulskoude reolenn ar gouelec'h. Kalet, na petra, deskiñ anavezout Doue ! Hogen derc'hel e grog gant drantiz a ray Proc'hor, skoazellet-start maz eo gant e levier speredel, an Tad Pac'hom, holiour al leandi.

Taget e vo c'hoazh an nevezad yaouank gant ur c'hleñved grevus-kenañ. Ha kalz diwezhatoc'h e tezevello penaos e voe pareet ur wech ouzhpenn gant ar Werc'hez. Da viz Eost 1786, e wisk Proc'hor sae venec'h Sarov. Hiviziken e vo graet Serafim anezhañ, pezh a dalv en hebreeg kement ha "flamminus"...

Gwelet e vo neuze Serafim o vont da gestal dre ar vro evit dastumm an arc'hant ret da sevel a-us d'e gell ur chapel d'ar Werc'hez dre anaoudegezh vat outi. Hir eo an hent ha meurbet poanous dre bloue Rusia sklavekaet. Padal, un doare e vo seurt troiad evitañ d'anaout ha da garout muioc'h e bobl.

Urzhet evel avieler ha beleg, e vo skoet hag estlammet zoken e genvenoc'h gant donded hag aketusted e bedenn. Arvestour an Diwelus anezhañ, e vo klevet alies o komz diwar-benn e weladurioù dreistnaturel. Ha setu ma varv holiour e gedunad, e dad speredel. Klask a ray Serafim diwar neuze terriñ e liammoù gant Sarov ha d'e 35 bloaz e kav dezhañ ez eo diazez a-walc'h e spered ha mestr a-walc'h war e voud evit respont hep reveg d'ar galv a vez ouzh e vountañ davit an digenvez hag ar c'hantaezouezerezh. Neuze, gant aotre holiour nevez ar manati, e kimiad Serafim diouzh al leand all evit sankañ e don ar c'hoadoù.

O Klask an Digenvez

Degouezhet c'hwec'h kilometrad pelloc'h e tibabo ul lec'hienn, gant an amboaz da grouiñ eno evitañ ur "*Menez Atos*" bihan, diouzh e vent, e-kreiz dervenenned, bezvenned ha saprenned ar wezeg. Sevel a ra neuze e beniti war grap un dorgenn douret gant ur stêr, dezhañ ken d'arrebeuri nemet un argelrzh, ur fornez hag ur pilgos.

C'hwezek bloavezh leun e chomo aze gant, evelkent, un astal sizhuniek bep bloaz, - eizh devezh war o hed kent ar c'horaiz bras, - tremenet er manati e ser e vreudeur. En digenvez e vez e bedenn o steuiñ gwiad an amzer o tremen. Eurvezh goude eurvezh en gweler o ren obererezhioù liesseurt : gwaznezhioù, lennerezh ar Skritur Santel h.a. tra

ma vez "pedenn ar galon" oc'h ambroug e labour evel manac'h koader. Padal ne chom ket emdred Serafim dic'houzvez d'an dud diwar dro. Rak forzh gweladennerion a spurmanter o kantren en ardremez, Darn o tont diwar eferusted, darn all war zigarez pe zigarez, holl e klaskont kejañ gant al lean. Hemañ avat n'eo ket darev c'hoazh evit seurt kefridi. Digenvez-rik e rank menel evit ar mare, dezhañ da c'hallout difraostañ bed e vuhez diabarzhel ha mont war-raok gant pleustridigezh Doue. Kement ha ken bihan ma vo gwelet o rouestkañ ar wenodenn a gas betek e "Venez Atos" evit herzel ouzh an dud estren d'ar manati da vont pelloc'h hag o tegemer hepken da geneiled ar gouezviled ma vez o lodennañ ganto baraennoù ar manati. Arzhed,- ar re-mañ an tostañ d'e galon, - bleizi, lern ha betek naered a gavo bod gantañ en un doare ingal. Ret eo zoken lavarout e teuas ken bras e vrud da vezañ evel strobinneller-loened ma voe difennet, betek Dispac'h Soviediz, hemolc'hiñ arzhed e gwezeg Sarov !... Tizhout a reas Serafim difraostañ ul logell d'ober ul liorzhañ ha gounit a ray eno avaloù-douar, ognon ha beterebez. Hogen diouzh savboent ar manac'h e vo c'hoazh re vat ar geustereunn evitañ ma tivizo en diwezh tremen gant geot hepken : geotennoù tener d'an hañv, geotennoù sec'h d'ar goañv !...

Hevelep buhez o tibunañ en un doare hetus evit al lean, e vo torret-feuls ar red anezhi er bloaz 1804 gant un darvoud euzhus : stropet ha gloazet gant tri den lammet warnañ, e chomo Serafim e par ar marv en e beniti, betek ma vo kavet eno gant ul lean all o tremen. Kaset raktal d'ar manati ez eo bihan goanag e genvreudeur d'e saveteiñ. Hogen, evit an deirvet gwech e teuy ar Werc'hez, gant Pêr ha Yann war he zro, da ziframañ he c'heneil diouzh skilfoù an ankoù. Hag ur gomz a vo zoken distaget ar wech-mañ gant Mamm Jezuz e mouez ouzh ar manac'h

illur: "Hemañ, emezi, zo diouzh hon gouenn dimp hon tri !"
Pebezh klod evit Serafim !

Goude diskuizhañ ur marevezh, e fello dezhañ distreiñ adarre d'e "Venez Atos", hogen diwar vuzhuz e bareidigezh ziwezhañ ken skogus ha ken arvestek, e kav da Serafim e tle ober ur gammed pelloc'h c'hoazh war dachenn an ankrerezh: embreger sioulder groñs pe gentoc'h tavezh groñs. An ankrerezh tennañ a c'hallfed ijinañ eo hounnezh, hep mar ebet. "Biskoazh, eme ar skivagner gallek Pascal, n'eo chomet mut sant ebet war an douar" ha padal e hañval seurt komzenn bezañ bet dislavaret gant Serafim, rak, bloavezhioù war o hed, e pleustro war seurt emgloastrevezh mut, kreizet war glask ar penndalc'h : kres ar C'hrist.

Bep sul bremañ e teu ur manac'h da gas dezhañ un tamm bara pe ur begad kaolgo. Ne vez torret ar sioulder endro d'ar meudoe, nemet gant trouz ar wezeg. Ken divrall o chom Serafim avat gant e reolenn ha ken distandur war un dro e hañval doareoù al lean bezañ, ma krog holiour ar manati da vezañ nec'het un tamm diwar e benn. Goulenn a ra outañ distreiñ gant ar re all. Hesent ouzh youl e vestr hervez ar C'hrist, sed-eñ kevanet ouzh e vreudeur adarre da viz Mae 1810. Nemet e vano bremañ c'hwezek vloaz-pad bac'het etre peder moger e gell. Da gentañ ne zigoro e c'henoù evit komz all ebet estreget komz Doue dre lenn kreñv levrioù an Nevezkevamod pe neuze evit ober addisplegoù diwar benn e lennadennoù. Tolpet drek e zor, e vez holl dud ar manati o selaou gant deoliezh vras kement pozenn a vez distaget gant Serafim. Un deiz avat, sed an nor o tigeriñ. Nemet e chomo den Doue pemp bloavezh c'hoazh hep darempred ebet gant ar manati. Hag e kreiz pep kreiz en gweler o vont da gomz gant e vreudeur evit o c'henteliañ koulz ha gant gweladennerion o tegouezhout eus pep lec'h. Ar Werc'hez, - Hi atav ! - a lavared, he doa

goulennet outañ kemmañ moneadur ha mont da gejañ gant e hentez.

"Kement a dud, eme holiour ar manati o klemm, a vez o tont da gavout Serafim amañ, ma ne c'haller serriñ dor ebet war ar manati a-raok hanternoz !" Drastus eo seurt buhez evit al lean. Kaimantet, bountet, sachet, mac'het a bep tu, e vez o vougañ bemdez bep un tamm. Ha padal e chom grizias bepred en e greiz galv an digenvez. Kement ha ken bihan ma vo lezet ur wech ouzhpenn da zistreiñ d'e c'houelec'hig don. Hiviziken avat e vo rannet e vuhez etre amzer ar c'hoad hag amzer ar manati.

Kevrinour hag Oberour

Setu bremañ Serafim gant e 65 bloaz. Ha goude hirsentiñ, goude hirbediñ bloavezhioù-pad, ez eo hep mar ebet dellezek-bras da vezañ anvet "*staretz*", eleze henaour, doazh ha tad speredel. E Rusia e vez bras e gwirionez war an dud hol ar "*staretz*", hemañ diouganour, dizaerouantour ha burzhudour war un dro. Pezh a zo aes da veizañ, rak, gant an ankrevezh oc'h arat e voud, gant ar rad o c'hlananat e galon mui-ouzh-mui bemdez, e kresk ennañ kement ar spletoù dreistnaturel, ken lemm e teu ivez e grafted speredel da vezañ ma tro pep hini davetañ evel dedennet gant ur galloud hollveziadel. Petra bennak avat ma vez alies e benn hag e galon gantañ war al leinoù, morse ne c'hwit e droad koulskoude da chom stag ouzh an douar. Sevel a ray, da skouer, kalz ilizoù, adreizhañ kouent merc'hed Diveyevo ha diazazañ eno ur "*c'hedunad miliner*", sev ur gouent graet evit koueriadezed yaouank o vevañ diwar labour ur vilin. Hogen, kement tra sevenet gantañ endhu a vez renet gant dorn ar Werc'hez : "Ne ran, emezañ, kammed ebet, ne sankan tach ebet na vefe diouzh c'hoant Mamm Doue"...

Ha, war lavar testoù da seurt darempredoù dreistnaturel, e teuas alies e vamm vat da gomz gantañ.

Nikolaz Motovilov

Evitañ da goshaat ne grenn ket c'hoazh war e strishadurioù-boued na war e binijennoù : "Emañ, emezañ, va buhez o vont diganiñ ha marv eo va c'horf ouzhin endeo; va epered avat zo del pa vije ganet dec'h !"

Bloaz kent e varv, c'hoant dezhañ da lezel un hêrezh speredel war e lerc'h e vo gwelet o terc'hel un diviz diziwezh e kevrediezh Nikolaz MOTOVILOV, ur c'hrennard bet pareet gantañ ur pennad a-raok. Ha bezit diwarvar : morse n'ankouay Nikozaz ar pezh en devo desket e seurt giz diwar deod ar staretz, e don ur frankizenn, dindan un oablarderc'hus o c'hortoz, kent dezhañ freuzañ, ma vije pengennet ar geennadurezh... Rak, pervezh ha karantezus e vo skrivet pep tra gantañ.

Er bloaz 1853 e varvo Serafim war e zaoulin dirak skeudenn ar Werc'hez ha nuñvrenket e vo gant an Iliz Reizhvriat er bloaz 1903.

Pezh e sko spered ar c'hristen pa vez o prederiañ war vuhez Serafim Sarov eo he heñvelidigezh ouzh hini benitiourion gantañ Egipt er 4vet kantved pe hini reoù Geltia en Iwerzhon hag e Breizh d'an hevelep mare. Forzh penaos, e chom Serafim skouer ar venec'h reizhvriat, o klask bepred un unvaniezh vev gant ar Spered Glan diwar heñvelerezh ouzh ar C'hrist, patrom krennus evit an den, patrom peurhegomz ouzh nep ene darev da vale war e lerc'h. Nemet e ranker lakaat amzer da brientiñ e vuhez evel meudoe, ha c'hwezec vloaz a dremenno Serafim gant e genvenec'h kent dezhañ bout e tro da sankañ e don ar c'hoadoù.

"Kres ar C'hrist, emezañ, n'eus mann a ve trec'h dezhañ. Da dizhout hevelep kres diabarzhel, da dizhout ar garantez wirion, ankrezezh ebet ne vo morse kriz a-walc'h evitañ. Na pet nozvezh n'en deus ket eñ tremenet o pediñ daoulinet war ur maen !... Hentoù dic'harvoc'h avat a vezo aliet gantañ d'e weladennerion : "Ar briwerc'h, a lavaro, n'eo ket ur berenn da vezañ debret en un taol", pe c'hoazh : "Arabat ober tra gant gourfred, hogen reiñ an tu d'hon c'heneil ar c'horf da chom feal ha da harpañ diorreidigezh ar briwerc'hioù."

Ar Bedenn

Dalc'hmat e veze Serafim o pediñ. E vound oa ur bedenn anezhañ. Hogen ar reolenn nemeti a c'hourlakay war leanezed yaouank ar "c'hedunad miliner" a vo pedenn Jezuz, eleze pedenn ar galon. Hag e lavaro da bep unan anezho : "Pa vi gant da labour, distag dalc'hmat ar bedenn-mañ : "Salver Jezuz Krist, Mab Doue, tostur ouzhin, pec'her maz on !" Ha pa bedi, skouarnfed ouzhit da-unan, eleze dastum da spered hag unvan eñ gant da galon. Pelloc'h, p'en devo Hon Salver, gant e c'hras en unaniezh sr Spered Glan, degaset un tamm fo da'z kalon, neuze, dizehan, e talc'ho da bedenn da redek..." N'eo mui enta an den hepken a vez o pediñ, hogen ar Spered Glan ivez gantañ en e greiz.

Seurt pedenn, bet ganet e manatioù ar Reter ha bet, war hed ar c'hantvedoù bet kizellet gant karantez ha deoliezh al leaned, a vez graet anezhi "*Hêsuc'hasma*", pezh a dalv, a gav din e gresianeg, kement ha "*gwalc'h sederni*".

Pa oar an den pediñ e gwirionez e vez Doue o c'hrataat e luc'h dezhañ, al luc'h ankrouet. Kalz gweladurioù a baras war spered Serafim, hogen treneuziet e voe ivez ha sklaeriaduret, pezh a zo danevellet-kaer gant Nikolaz

Motovilov, bet erouez ouzh an degouezhenn hag oberer enni zoken da geñver e gendiviz gant Serafim.

"Kregiñ-start a reas an Tad Serafim ennon, emezañ, dre va divskoaz ha lavarout din : "Ya mab, setu maz omp bremañ splujet hon daou e Spered Doue, perak ne fell ket deoc'h sellout ouzhin".

"N'on ket evit sellout ouzhoc'h, va zad", a respontis, dre m'emañ ho taoulagad o strinkañ luc'hed. Trellusoc'h eget an heol eo deuet ho tremm ds vezañ ha poan a ra da'm daoulagad."

"Na spontit ket, emezañ, rak diouzhtu war an taol ez oc'h deuet, c'hwi ivez, da vezañ ken splann ha maz on-me. Treantet oc'h e kefleunded Spered Doue, anez da se ne c'hallfec'h ket va gwelout evel ma'm gwelit."

Ha neuze stouet warnon e silas e'm skouarn : "Dougit trugaregezh d'an Arloz evit e vadelezh didermen en ho keñver... Perak avat, evelkent, ne fell ket deoc'h sellout eeun ouzhin ? Sellit krak ha dizaon, emañ an Arloz ganimp."

Kennerzhet gant e gomzoù, ha me da sellout ouzh e zremm. Ma krogas ennon un trefu deol. Imbroudit emañ dremm ho kendivizer o parañ dirazoc'h e-kreiz an heol pa vez hemañ en e gann da greisteiz. Gwelout a rit e vuzelloù o fiñval, e selloù o kemman, e vouezh a glevit, merzhout a rit e zaouarn krog en ho tivskoaz, hep deoc'h avat gwelout na dorn na zoken korf ebet : netra nemet al luc'h trellus o skediñ pellik en ardremez war gannder ar prad dindan an erc'h hag ar malzennoù gwenn o terc'hel da gouezhañ ...

- Petra verzhit ? eme din an Tad Serafim.

- Trugar didermen, a respontis.

- Petore trugar avat ? Gant petra dres eo graet ?

- Merzhout a ran, emezon, sederni ha kres ken bras e'm c'hreiz ma ne gavan ger ebet d'henn displegañ.

- Ac'hanta, mignon, a gendalc'has, setu petra eo ar c'hres ma komze an Arloz diwar e benn gant e ziskibled pa lavaras dezho : *"Va c'hres a roan deoc'h ; ar c'hres na c'hall ket ar bed reiñ (Yann 24,27), ar c'hres a zo dreist da bep reiz (Filip 4,7)"*.

- Petra verzhit ouzhpenn ? "Levenez didermen e'm c'halon".

Hag evit disoc'hañ e lavaras an Tad Serafim : "Pa vez Spered Doue o tiskenn war an den evit e c'hronnañ gant leunded ar gouezvoud anezhañ, neuze e vez an ene o tridal gant ul levenez angeriadus, rak gant al levenez e vez ar Spered Santel o kargañ kement boud a vez tizhet gantañ...

Hervez ar feizoniezh eo pouezus seurt komzoù, rak emaint o teurel sklerijenn war ar gelennadurezh boutin d'ar gristeniezh kevan diwar-benn dougedneuziadur an den hag unvaniezh hemañ gant Doue, ouzhpenn ma tiskouezont talvoudegezh ha lec'h ar c'horf e steuñv ar santelidigezh hag ar wennvedigezh. Rak, n'eo ket ene nemetañ Serafim, - na hini Motovilov kennebeut, - saw e gorf en e bezh a vez treneuziet ha klodouezet gant rad ha galloudegezh Doue.



Mar em eus kontet amañ hanez ur manac'h reizhvriat, n'eo ket peogwir ez eo marzhus hepken, hogen dre maz eo reizhvriat ivez ha dre ma felle din dre eno keinekaat an dodenn n'em eus graet, e derou va skrid, nemet riklañ warni e sigur unvaniezh an Iliz Dihewel evel diazez d'al luskad kedilizelour hiziv an deiz. Seurt dodenn e vefe ret mont donoc'h ganti moarvat, un deiz bennak, hag he flaenaat war he hed. Bezet a vezo, splann eo, diwar ar skouer degaset dimp gant Serafim Sarov, ned eo bet biskoazh an dizunvaniezh etre ar gristenion un elfenn noazus war

dachenn ar santelezh. Piv oar, a zo kaeroc'h, hag eñ ne vije ket adunvanet buan bremañ div Iliz ken tost an eil ouzh eben, evel maz eo hini ar Reter ha hini ar C'hornog, dreist-holl gant al luskad kedilizelour o skoazellañ, mar bije sent eus an izili anezho. Lavaromp da nebeutañ e vije bet renket moarvat an dizemglevioù en un doare disheñvel ha ne vije bet morse na Reizhvriezh nag Adaoziezh, da vihanañ evel kravezioù troc'het-krenn diouzh hini Roma hag enebour dezhi, mar bije bet santel ar pennoù o doa divizet stourm, war dachenn ar feiz, betek gant armoù ar bed. Gant se, hag o vezañ ma n'eus ket tu da seveniñ, evit c'hoazh, nep etrekeduniezh gant ar gristenion all, dodenn bennañ al luskad kedilizelour a zlefe bezañ bepred unvaniezh an Iliz Dihewel diazezet war santelezh hec'h izili, ur santelezh wirion atizet gant an un Spered Glan war sol an un badeziant. Rak evel m'emaomp o paouez gwelout, ar santelezh, e par an dud dre hini, n'eo ket mirlod un iliz welus hepken, pehini bennak e vefe.



An Islam

Talvoudegezh an Islam

Emañ an Islam o parañ evel ur moliac'h war skramm an Istor. Dres ur c'hantved war-lerc'h marv Moc'ammed, an diazeour anezhañ, edo ledet endeo beli Vuslimiz war ur rannved o vont adalek harzoù kreisteiz Frañs, dre Spagn, Norzhafrika, ar Reter Tostañ ha Kreizazia betek Siria. Evitañ da vezañ bet skarzhet, koulz lavaret, diouzh Kornogeuropa, en deus kavet an Islam, koulskoude, diazezoù start e Retereuropa, peurgetket er Balkanioù hag ivez en Afrika, en Indez hag e Gevredazia. Ken m'emañ ledet bremañ etre ar Mor Atlantel hag ar Filipinez, gant eizh-kant milion a dud en e c'hourc'hemenn, en o mesk gouennoù ken disheñvel hag Europiz, Arabed, Turked, Bantoued, Indeziz, Indoneziz, izili stag ouzh meuriadoù kentidik ar Filipinez. Divent eo enta bed an Islam.

Arabia kent Moc'ammed

War-dro ar bloaz 600 edo riezoù galloudus, Buzantion ha Persia, o ren war ar rannved muslimat, hag int e pep mare oc'h ober brezel an eil d'eben. A-raok Moc'ammed e oa rannet Arabiz e lies meuriad brezelgar, feuls an dizalc'hded-spered ganto.

O c'hravez oa anezhi hollzoueadegezh fraost, fetichennegezh kentidik o koleziñ ar gwez, ar mein, an heol, al loar hag ar stered. Ar **gKaaba**, anezhi un neved kozh-kenañ bet savet e Makka, ma komz Diodoros a Sikilia diwar he fenn, e kaved enni tric'hant tri-ugent arrizh pe fetichenn, bet degaset di gant meuriadoù eus pevar c'horn

Arabia. Ar **gKaaba** a c'haller gwelout enni dreist-holl ar "*maen du*" hollvrudet, Maen an Neñv, gouez da Vuslimiz, moarvat ur stervaen damgelc'hiek, hemañ o vezañ pemzek ktm. uhelder war ugent ledander. Seurt maen, kouezhet, emezeur, gwenn evel al laezh diouzh ar baradoz e grez Adam, a zo deuet da vezañ du gant pec'hedoù an denion. Gwall deuc'h eo bremañ, kement ez eus bet poket dezhañ gant pirc'hirined **Makka** oc'h ober an dro d'ar **gKaaba**. Gant Abrac'ham hag Ismael e vije bet adkavet ar **gKaaba**, ha tu zo c'hoazh, war a lavarar, da welout merk o zreid en diabarzh dezhi...

Goude dismantridigezh Jeruzalem e teuas bagadoù Juzevion da repuñ en Arabia, dreist-holl e kornad **Al Madina**, ha bras e voe o levezon dre ar vro en abeg da zeskadurezh uhel ar Rabbined.

Evit a sell ouzh ar gristenion a gejed ganto en Arabia kent Moc'hammed, e oa anezho izili d'ar skarennoù disivoudat bet harluet diouzh an Impalaeriezh Roman er pevarvet hag er pempvet kantved, sev : Arianed, Ebionited, Nestorianed, Unc'henezhiz h.a. Anac'horetet pe, mar karer, unleaned ha menec'h liesseurt, stank o niver, a oa deuet da chom tost d'ar menez anvet Serbal, ha savet e voe kouent santez Katell ouzh troad ar Sinai. Dister a-walc'h, euver zoken e oa spered seurt kristenion.

D'an hevelep koulz e kaved, ken e **Makka** ken en **Al Madina**, kalz eneoù kerseet gant ar fetichennegezh. Dedennusoc'h-dedennusañ e teue an undoueadegezh da vezañ evito, ha darempredoù stank-ouzh-stank a vagent gant kristenion Siria hag Abissinia ; **Hanifed** a veze graet anezho. Darn eus kantroidi gentañ an Islam, Zaid, Omayya, Waraka ha betek Moc'hammed zoken a lavare bezañ **Hanifed**.

Peseurt undoueadegezh a oa o kellidañ e kalonoù seurt tud, dreist-holl e kreizon Moc'hammed, ha peseurt ster a zo da reiñ da seurtanvet kefridi an ael Gabriel e par an diskuliadurezh vuslimat ? Diheñvel-krenn e vije bet, moarvat, buhez Voc'hammed mar bije bet kanttroet e barr pep gwirionez ouzh keennadurezh rik an Aviel. N'eo ket sklaer tamm ebet emell an ael Gabriel amañ. Gwir eo ne oa ket kennebeut skouer disivouderion gristen Arabia evit degas Moc'hammed d'ur gweladur feizoniel dinamm, rak - mar en doa darempredoù yac'hus gant kristenion vat ar broioù amezek, ne c'halle ket dastum kalz sklerijenn na kentelioù mat diwar skouer ar gristenion o vevañ war e dro, hag i troc'het diouzh gwir Iliz Doue.

Buhez Voc'hammed

En arabeg e talvez Moc'hammed kement ha **kanmeuladus, goubannet**. Ganet e voe hemañ er bloaz 570 e Makka. Ur pennhêr a oa anezhañ hag ur mab dalif d'un ezel da veuriad ar gKoreichited deuet da vezañ mistri war an dinaz. E diegezh a oa o tiskenn eus ar **C'hachenited** ma oa kenveget eno hag ennañ e oa bet fiziet gwarez ar **gKaaba**. Goude marv e dad e voe savet ar bugel gant ur vagerez vedouinat o kantren dre ar gouelec'h. Da c'hwec'h vloaz e kollas e vamm. Ma voe degemeret gant e dad-kozh ha da c'houde, gant un eontr dezhañ : **Abou Taleb**. Dre ma oa hemañ ur c'henwerzher, dalc'hmat o vale bro etre Siria ha Yemen, e c'houlennas Moc'hammed outañ un deiz aotren dezhañ mont da heul e garavanenn. Hag eñ daouzek vloaz d'an ampoent e oa neuze bras a-walc'h evit kregiñ da veizañ ster an darempredoù o doa e dud gant an trevadennoù yuzev ha kristen a gavent war o hent.

Dre maz eo difennet gant an Islam avat skeudenniñ korfoù an dud (hiziv zoken n'eus gwir ebet da dennañ luc'htresoù anezho) e tioueromp betek an disterañ skeudenn eus Moc'ammed. N'omp ket hep gouzout avat e oa dezhañ ur vent vrazik, gant ur c'horf lank ha divskoaz ledan, un dremm hegarat gant daoulagad ha blev du, dent gwenn-sin en e c'henou, hag ouzh e c'hroñj ur barv fetis evel hini ur gourozhaç'h. Un tres gourc'hemennus a oa dezhañ ivez hag eñ herrek ha deyoulet e gerzhed. Dornet ampart e oa evit seveniñ ur bern labourioù : dresañ e zilhad, ober arc'henadoù, skoazellañ e wragez da wriat ha d'aozañ boued. Anezhañ un den troet da c'hoarzhin, fonnus e oa e faltazi ha bras e varregezh war ar varzhoniezh hag ar gravez. Siwazh dezhañ, dizesk e oa ha moarvat ne ouie na lenn na skrivañ. Diwar ar c'homzoù bet distaget gantañ enta eo ez eo bet savet ar C'horan, skrivourion dezhañ o kevaotañ an destenn en e gichen. Desket en doa traoù diwar bleustriñ tud liesseurt e-kerzh e veajoù pe da geñver lennadennoù graet a vouezh uhel dirazañ evel ma oad boas d'ober neuze.

Kalz gwraez a voe da Voc'ammed. Hogen bennozh d'e zimeziñ gant C'halidja, un intañvez pinvidik anezhi, e c'hallas sevel e gein, bevañ dieub ha dizalc'h, ha mont war ar renk gant ar c'houvriaded e **Makka**. En ur ober un deiz e varvas e zaou vugel digantañ. Ober a reas neuze advibion dezhañ eus Ali, e niz ha Zaid, e sklav.

Diskuliadennoù

A bep un tamm e savas kemm ennañ dre berzh un emstourm kalet en bountas d'emdredañ war dorgennoù digenvez evel Menez Hira e-lec'h ma plije dezhañ mont da brederiañ dirak toull ur vougev. Eno e chome da yunañ ha

da bediñ. Muioc'h-mui e verze keal an undoueadegezh o pouezañ war e spered. Ma kavas dezhañ en diwezh e oa galvet da c'houzaviñ e genvroidi da ziwall diouzh droukvarnedigezh an ifern, war-bouez treiñ kein d'an arrizhegezh ha mont en arempred an Doue gwirion.

Da zaou-ugent vloaz, e 610, eo e voe graet an diskuliadennoù kentañ dezhañ, war a lavarer. O kouezhañ d'an douar e veze treuzet e gorf gant glizi. Ken e save eon d'e c'henou, e ziweuz o krenañ evel pa vije krog an drougsant ennañ. Forzh penaos n'eur ket hep gouzout e veze techet Moc'ammed da c'houzañv diwar varradoù o tennañ da glened an elfoù : pevar bloaz ne oa ken pa voe taget gant seurt droug. Trezerç'hiou ha gweledigezhioù a save dezhañ neuze. Ur wech, o krediñ ne oa anezhañ nemet ur c'hoariell etre daouarn Satan e klaskas en em lazhañ. War an taol avat, emezañ, setu Gabriel o c'harmañ dezhañ : *"Me 'zo Gabriel, ha te, Moc'ammed, darlavariad Doue... na spont ket !"* Gant seurt neñvannerç'h eo e krogas e remzi evel darlavariad ha diazeour ar gravez nevez. Graet e oa houmañ gant elfennoù o tennañ war un dro d'ar yuzeviezh, d'ar gristeniezh ha d'ar baganiezh, nemet e oa ac'helet war ar feiz en Allac'h, an **Undoue**, an Arloz hollveliek hag hollerouez, sev : un Doue, moarvat, trugarezus ivez hogen diwar ledvoz kentoc'h eget dre hennad, evel maz eo Doue ar gristenion e par Hinienn o **Zad neñvel**.

Diaes e voe da Voc'ammed kregiñ gant e gefridi : ne ganttroas nemet daou-ugent den ouzh Allac'h tro an tri bloavezh kentañ ma prezegas. A bep ma teue testenn ar C'horan gantañ, e stagas neuze da gomz ouzh an engroeziou. Islam, eleze, emblegerezh hag emro da vennoud Allac'h, - a reas eus an hent nevez a ginnige d'an dud. Aspedin a rae Arabiz da zistreiñ da feiz o hendad Abrac'ham, war-bouez dilezel ar baganiezh hag ar

fetichennegezh. An dasorc'h hag ar varn, ar baradoz hag an ifern a oa ivez lod eus e gelennadurezh.

Gant ar strafuilhet ma oa o spered, e krogas Makkaiz da heskinañ Moc'ammed hag e ziskibled kentañ, rak aon o doa n'ez aje da goll ar gounid bras a dennent eus pirc'hirindedoù ar **gKaaba**.

Mont a reas an traoù war drenkaat, hag o vezañ m'en doa Moc'ammed un toullad mat a ziskibled en Al Madina (ker an darlavariad), anvet Yatrib betek neuze, sed-eñ o tec'hel di d'an 25 Mezheven 622 evit saveteiñ e vuhez.

Al Madina

Eno e gwirionez e voe klokaet e gravez gant Moc'ammed, diazezet ar bongoaliou ha gouloc'h an Islam. Stank a-walc'h e oa ar Yuzevion en **Al Madina** ha spi en doa an darlavariad d'o gounit d'e vennoziou, peogwir e oa boutin dezho ar feiz en un Undoue - peogwir e oant ivez pobl al Levr hag ar Skriturioù dres, evit ac'hano, evel ar gristenion o-unan. Hag etrezek Jeruzalem eo e veze Moc'ammed hag e genfeizidi o treiñ o dremmoù pa vezent o pediñ. N'o doa ket c'hoant ar Yuzevion avat da goll o feiz. Disheñvel e oa o skriturioù diouzh ar C'horan, ha diouzh tilu David eo e tlee o Mesiaz diskenn, neket diouzh un arab bennak. Hep dale e krogas neuze d'enebiñ outo hag int outañ. Kement ha ken bihan ma roas urzh da dreiñ hiviziken an dremmoù etrezek Makka evit ober ar bedenn.

Muntradeg

Mestr e oa Moc'ammed war gêr Al Madina. Ne oa ket troet koulskoude ar meuriadoù nag ar c'hêrioù diwar dro d'ober degemer d'e gelennadurezh. Ma reas e vennoz

mont dezho dre an nerzh. Digredenn e oa ar bed, dalc'het ma oa gant an arrizhegezh hag ar pec'hed. Ne oa neuze netra d'ober, evit dieubiñ an denion, nemet mont gant **hent ar veli douarel**, eleze, skuilh dre ret gwad an nesañ, saotrañ e gaoued, bezañ ken ampart d'ober gant ar widre ha gant an nerzh, gant ar furnez ha gant ar vazh, rak **ne gerzher ket davit ar c'halloudegezh hep treuzañ stronkpoùl ar pec'hed...** Ret e oa ivez da Voc'ammed mont gant hent ar gwad, an trubarderezh hag ar strod. Setu perak e tisklerias un deiz d'e ziskibled : *"Lies darlavariad a zo bet kaset gant Doue dre ar bed. Gant Moizez e voe gourbannet e c'hras trugarezus, gant Salomon e furnez, gant Jezuz presour e voe meulet yonez, hollouiziegezh ha galloudegezh Doue, hag anadurezh a roas hemañ diwar-bouez e vurzhdou, nemet e chomas an denion beuzet en o fec'hedou hag en o digredenn. Ma voen-me erlusket gant Doue en e reizhded ha fiziet ennon ar gefridi da vont dre ar c'hleze."*

Edo an darlavariad o vont da gregiñ gant an aloubadegoù bras a vez dalc'hmat o tennañ da vestroniañ ar bed. Tro an dek vloavezh ma renas war **Al Madina**, e kaso da benn seikont-pevar brezeliadenn hag eñ e-unan o leviañ peder-warn-ugent anezho : setu penaos e teuas d'ober e renkoù war Arabia gevan. **"Brezelioù santel"** a vo graet gant Moc'ammed eus hevelep aloubadegoù.

Gant ar **"rhaziatou"** (skrapargadennoù) hag an ergerzhadennoù-preizhata e hado an darlavariad ar reuz dre ar vro, o taspugn pinvidigezhioù dirveur diwar goust an enebour. Gwallet e vo gantañ rank hengounel ar mizvezh nevet. Ma kavo diwar se d'e vrezelourion e vint aotreet d'ober kement mestaol a droy en o fenn. Sed amañ, da skouer, ar sturienn a vo roet dezho ur wech ma oant o vont da dagañ ur garavanenn, anezhi mil kañval renet gant tud

Makka : *"Emañ dor ar baradoz e skeud ar c'hleze. Neb a gouezho bremañ o stourm evit ar feiz e tigo ro ar baradoz evitañ, forzh peseurt pec'hed en devo graet."* Mar boe trec'h war dud **Vakka** en dro-se, e voe faezhet diwezhatoc'h avat da geñver emgann Oc'hod er bloaz 625. Kement ha ken bihan ma tivizas mont d'an enebour dre widre o skoulmañ gantañ ur rank hir hag o tiskleriañ edo ar **gKaaba**, gant he c'hloastroù hag ar maen du en he diabarzh, lec'hioù santelañ ar bed. Ne lakae neuze berz ebet war ar pirc'hirindedoù nemet e tlee Allac'h kemer lec'h an arrizhoù. Setu penaos e kouezhas Makka evel ur frouezhenn azv etre daouarn Moc'hammed ; rak zoken paganed ar gêr-se ne gredent ken en o fetichennoù. Galloudus-dreist e teuas an Islam da vezañ en un taol. Da heul aloubidigezh Vakka e vo beuzet ul lod bras eus Azia Greiz hag ar Reter Pellañ gant milourion an Islam.

Marv Moc'hammed

War-lerc'h ur weladenn diwezhañ da Vakka er bloaz 632 e voe taget gant an derzhienn. Gervel a reas e wragez ha retren e rannidi **Aicha**. Klask a reas, gant poan avat, ren ar bedenn, hag en un taol e c'harmas : *"Arloz ! me az ped, deus. da'm harpañ war va zremenvan. Tosta ouzhin, ô Gabriel ! Arloz, ro din da ziskarez, ar beurbadelezh e'z paradoz... an diskarez... ar gavantadiezh vinniget er bed all !"*

Hag e tremenas d'e 63 bloaz.

O vezañ ma n'en doa prientet netra evit a sell ouzh e hêrezh, e kemeras tro **Abou Bekr** diwar e varv d'ober diouzh bezañ anavezet evel **kalif** ("warlerc'hiad") an darlavariad. Douaret e voe Moc'hammed en Al Madina, ha

diwar neuze n'eus ket bet ehanet da zont da birc'hirinañ war e vez.

Ar C'horan

Ster ar ger **Koran** a zo "lennerezh", sev al lennerezh ent wellek. Aviel an Islam eo ar C'horan. U1 levr eo, kalz tenvaloc'h c'hoazh eget ar Bibl ha ret e vez kaout addisplegoù dalc'hmata dindan an dorn evit intent ar 114 **soura** (pennad) o vont d'ober ar C'horan gant ar mesket e vez an traoù ganto e-keñver marevezh.

Pa veze Moc'hammed o tegemer un diskuliadenn bennak e veze skrivet an danvez anezhi gant e rinwazed war bezh a gavent dindan o dorn : un delienn balmez, un tamm kroc'hen, ur skoaz dañvad pe gañval, ur blankenn vihan, ur maen sklat h.a. Ret e vo gortoz ur bloavezh war-lerc'h marv an darlavariad kent gwelout an urzh o tont digant Omar hag Abou Bekr d'ober un dastumadeg gant seurt dielloù ha d'o adskrivañ buan. Nebeut goude e teuy un urzh all evit ma ne vije aotreet nemet un destenn hepken, an hevelep hini evit ar bed muslimat en e bezh. Keñveriet gant ar Bibl e chom ar C'horan kalz war-lerc'h evit kel gwirionded al lavaredoù. Ur bern direizhderioù a gaver ennañ e-keñver an istor ha na gaver ket er Bibl. Da skouer, Mari, Mamm Jezuz, a zo anvet c'hoar Aaron ! ... Saoul a zo kammgemeret evit Gedeon h.a.

Kredenn an Islam

Unseurt eo Doue, hollc'halloudek ha trugarezus. Moarvat e vez mat Moc'hammed gourbeliegezh dizave Doue, e vennoud digemm, e c'halloudegezh diharz ha diharzadus. E santelezh avat n'eo ket evit he meizañ e

gwirionez nag e zivezegezh, na kennebeut e garantez. Rak trugarez Allac'h a zo bepred hag adarre trugarez diwar ledvoz. Ret eo d'an den plegañ dezhañ evit gwir. N'eus dezhañ Mab ebet. Chom a ra Doue Moc'ammed Doue al Lezenn Gozh yuzeviat dres d'ar mare m'emañ Diskuliadurezh treindedel an Aviel oc'h aloubiñ Europa, goude bezañ aloubet endeo an hanter eus ar Reter Pellañ ha Norzhafrika. N'anavez ket ar C'horan kennebeut emichañs Spered-Glan Doue o tont da wellaat ha da santelaat an eneoù. Ne wel nemet arvez douevel hag arlozel Allac'h, ha ne glask ket meizañ e c'hallfe ivez bezañ un arvez denel dezhañ, dres en abeg d'e garantez douevel evit an den. Rann o deus an aeled e kredenn an Islam, ha pep den a zo dezhañ daou ael, unan o skrivañ e c'hreadoù mat war an tu dehoù hag egile war an tu-kleiz ! Setu perak ez eo erbedet gant Moc'ammed tufañ war an tu-kleiz... bras-meurbet eo niver an darlavaridi : 124.000, hervez Moc'ammed ! Hogen n'eus nemet c'hwec'h e vefe pouezus o c'helennadurezh e gwirionez, en o mesk Jezuz, anvet gantañ "*spered Doue*"... kalz burzhudoù a zo bet graet gant Jezuz : pareañ klañvidi ha dasorc'hiñ marvidi. Prezeg a reas an Aviel, skoazellet gant Gabriel, anvet "*spered Doue*" ivez... Diouganañ a reas Jezuz donedigezh un darlavoriad all (Moc'ammed, na petra !) Saveteet e voe diouzh ar c'hroazstagerzh dre... erlec'hiadur ! Ha skrapet ! evit bezañ kaset d'an neñvoù, hogen war ur renk izeloc'h, na petra, eget Moc'ammed... Distreiñ a ray d'an deiz diwezhañ ha gantañ e vo lazhet an Enepkrist. Evel roue ar reizhded e chomo, Jezuz neuze da ren war an douar tro 45 bloaz... Dimeziñ a ray ha kaout bugale ; erziwezh e vo douaret en Al Madina, en ul lec'h miret evitañ e-kichen bez Moc'ammed !

Ar Varn Diwezhañ a zo un dra bouezus evit ar C'horan ha feiz an Islam. Bez' e vo un dasorc'hadeg e diwezh an

amzerioù. Graet eo an ifern evit an difeizidi : un ifern seizhrann hag eñ kalz gwashoc'h eget an hini deskrivet gant Dante.

Graet eo ar baradoz evit ar feizidi vuslimat, pouezet ma vez o greadoù e mentel Allac'h. Mont a ra Muslimiz kablus d'an ifern kentañ, an hini dic'harvañ, hag ur wech talet o fec'hedoù e vezont salvet. Deskrivet eo ar baradoz (souraoù 55-46) evel ul liorz espar gant stivelloù, perlez, paleziou marellvaen, diskoù aour ha gwin c'hwec'h. An disterañ feizad a vo dezhañ un haremad a zaouzek c'hourri ha tri-ugent ("*gwerc'hezad*"), o daoulagad du. Kantkementet e vo neuze nerzh pep gour, ha mil vloavezh e pado an disterañ pred plijadurezh. Koulskoude ne vo nemet ar sent hag ar verzhherion a gement a c'hallo moenat gwenvedigezh ar gwel eus Doue. Tu a vo d'ar merc'hed da vezañ salvet ivez. N'ouzer ket avat peseurt tonkad a vo dezho.

Evit ar braz eus Muslimiz n'eus rezid ebet d'an den war an douar rak rediet eo gant un devez bezhel digant Doue d'ober evel ma ra. Emañ Doue o vennout ar mad hag an droug war un dro. Emaomp amañ dirak bongoal pennañ an Islam : ar c'houzañvegezh. Gant seurt tonkadegezh e chom morzet pep enraog ha betek pep c'hoant da wellaat, da ganttreiñ, da nevezñ.

Ar Pleustroù Kravezel

Sed amañ pere eo "**Pemp peulvan ar feiz**" a zo lakaet war wel gant an Islam. Gourbann ar feiz, ar Bedenn Arlidel, ar yun, an aluzon hag ar birc'hirinded da Vakka.

Gourbann ar feiz a zo dastumet en ur bozenn hag a zo evel lugan an Islam. "**N'eus ken Doue nemet Allac'h ha Moc'ammed an darlavoriad anezhañ...**" Dibunet e vez ar sturienn-mañ da geñver pep pedenn ha hiboudet e vez

ouzh skouarn ar babig nevez-c'hanet koulz hag ouzh hini an tremenvaniad.

Ar Bedenn Arlidel a vez graet pemp gwech bemdez. Degaset e vez koulz ar bedenn da soñj d'ar feizidi gant mouezh ar muezzin o c'hervel diwar lein ar "minared" (*uhelgomzer*). Alies ez eo dall ar muezzin evit na welje ket ar merc'hed war al leurdoennoù pe war ar porzhioù en-dro d'an tiez. Kent kregiñ gant ar bedenn e tle pep unan gwalc'hiñ e-zremm, e zent gant ur vlefichenn bennak, e zaouarn hag e zivrec'h, e dreid. Ma ra an dour diouer e vez kemeret traezh. Dleet eo d'ar feizad treiñ e zremm trema Makka ha ledañ e ballenn-bediñ dindan e dreid. D'ar gwener avat, pa vez graet ar bedenn e diabarzh ar voskeenn e vez awalc'h d'an dud tennañ o botoù hepken, o vezañ ma kaver pallennoù eno endeo. Ar pedennoù - pozennoù en arabeg o vont d'o heul - a vez graet ne vern pelec'h gant stouadennoù, daoulinadennoù ha meidoù daouarn. Adalek ma vez dek den bodet en un douez e tle ar bedenn bezañ renet gant an iman. Hemañ n'eus ket ur beleg anezhañ, rak n'eo ket anavezet ar velegiezh gant an Islam. Dibabet e vez an imaned enta o terc'hel kont eus o deoliezh, o beli, o levezon. Renkadennoù a vez graet evit pediñ, o tiwall mat na chomje an disterañ lec'h goull o etre an dud, d'an diaouled da c'hallout en em silañ dre eno d'o heskinañ...

Ar yun a bad tro mizvezh ar Ramadan, da lavarout eo, navet miz an deiziadur muslimat. Adalek ar beure pa c'haller diverzout ur reunenn zu diouzh unan wenn, betek an noz (ha neuze e vez heñvel c'hoazh) n'eus gwir ebet da gemer nag an disterañ tamm boued nag an disterañ takenn died. Difennet eo ivez butuniñ ha tufañ. Diouzh an noz avat e vez aozet predoù mat hag ar gwir o devez ar priedoù da gaout darempredoù revel betek an deiz war-lerc'h.

An aluzon a zo evit muslimiz ur gread-glanaat o tennañ d'ar madoù a van gantañ. Disheñvel eo an aluzon hervez

maz eo islamiz mestr pe get war ur vro bennak. Pa vez ur vro dindan ur renad islamat e kemer stumm un truaj (etre an 1/40vedenn hag an dekvedenn eus ar c'horvoder). Er broioù all e ro muslimiz ar pezh a c'hallont. Kalz eus an arc'hant o tont diwar an aluzonoù a dalvez da skoazellañ estrenion, beajourion ha pirc'hirined moan o yalc'h. Setu perak e veizer gwelloc'h an doug heverk emañ muslimiz o tiskouez evit an herberc'h : n'eus ket a letioù en Arabia hogen degemeret mat e vezer e pep lec'h koulskoude.

Ar birc'hirinded da Vakka zo un doare galloudus da virout e unded da ved an Islam. Rak neb a ra seurt beaj a genbouez da greskiñ niver ar gannaded c'hredus ha, zoken, baranek a vo gwelet da c'houde o tifenn meurded an Islam war diriadoù ken disheñvel ha Java, an Indez pe Afrika. Liammet eo ar birc'hirinded avat ouzh lidoù mibilius ha kentidik : ret eo, da skouer, stekiñ ouzh maen du ar **gKaaba** pe boket dezhañ, evañ dour diouzh an eienenn Zem-Zem, redek buanoc'h-buan en-dro d'an nevedenn, gweladenniñ lec'hiennoù liesseurt stok ouzh Makka, stlepel mein evit degounañ Abrah'ham oc' h argas an diaoul diwar e dro, aberzhañ ul loen bennak deiz diwezhañ ar birc'hirinded. Digant ar baganed, moarvat, eo ez eo bet deuet seurt arlidoù d'an Islam. Evit klozañ an abadenn e vez gwelet an dud o kas o c'hammedoù betek bez an darlavariad en Al Madina. Tost da gant-mil feizad a vez bep bloaz o vont di, rak un dlead groñs eo evit kement muslimad a c'hall henn ober mont da birc'hirinañ. Hogen tu zo deoc'h bepred da dalañ un den all da vont en ho lec'h.

Boazioù ha Difennoù Liesseurt

An Amdroc'h

Evel ar yuzevion e ra muslimiz ivez gant an amdroc'h. Ne gomz ket ar C'horan anezhañ koulskoude. Dre hengoun enta hag evit kemer skouer diwar Voc'hammed eo ez eo bet miret an amdroc'h gant an Islam. E lies bro muslimat e vez mac'hagnet ar merc'hed, pezh a dalv kement hag an amdroc'h evito.

Ar Brezel Santel ("Djihad")

Emañ an istor o testenianñ ez eo dre ar c'hleze peurgetket ez eo bet en em ledet feiz an Islam. Rak, keit ha ma ne voe ket rediet an dud d'asantiñ dezhi, ne reas ket houmañ berzh bras. Ha gant aer Armeniz er c'hantved diwezhañ e tiskoueze fraezh an Islam n'en doa kollet seurt ebet eus e nerzh ar bongoal da heul : lazhañ... stourm betek ma ne vo ken kravez all war an douar nemet hini Allac'h.

Lieswregiezh ha Sklavelezh

Emled hag enkrog an Islam a zo da lakaat evit un darn vat e devoud al lieswregiezh hag ar sklavelezh. Marc'hadourion sklaved Zanzibar a seller, da skouer, evel gwastadourion an Islam dre ar broioù du, betek e kalon Afrika. Ha kaer zo lavarout - diaes eo ober diouzh ma ne vije ket dedennet tud aneilgenezh (2) gant un divezouriezh ken laosk ha maz eo ar vuhezegezh islamat.

Tu zo da bep muslimad da gaout peder gwreg ha serc'hed sklav kement ha ma kar. Dibrietaat a c'hall ober ivez diouzh ma tro en e benn, gant lavarout evelkent teir gwech diouzhtu : "Argaset out !". Ar gwir en deus avat d'adkemer gantañ unan eus e wragez kentañ, - ha mard eo stag ouzh skarenn ar Chiited (hini C'homeiny hag e warlerc'hidi) e c'hall skoulmañ dimezioù war dermen netra

nemet evit e blijadur. Aotreet eo ar gwaz gant ar C'horan da skeiñ gant e wreg (3). Un ensavadur douevel eo ar sklavelezh e gwirionez evit an Islam : merc'hed sklav a vez gwerzhet evel chatal war marc'hallac'hioù Arabia hag Afrika ha paotred sklav a vez mac'hagnet pa venner kaout spazhidi evit diwall ouzh ar moskeennoù.

Boued ha died

Berzet eo ar c'hig-moc'h, ar gwad hag an died (4).

Difennoù ha Boazioù Liesseurt

Berzet eo ivez ar c'hoari-dargouezh, difennet kizellañ dremm ha korf an den. En abeg da seurt difenn eo moarvat ez eo bet diorreet en un doare marzhus arz an arabeskennoù hag emichañs hini ar skritur (5).

Pa vez drouklazh e lakaer atav lezenn ar c'heveleb da dalvezout, ha pa vez laeroñsi, e vez troc'het daouarn an den kablus.

An Diskanttro

Neb a vez o tiskanttreiñ, da lavarout eo o renaviañ an Islam, a vez droukvarnet d'ar marv. Hervez addisplegerion vrudetañ ar C'horan e teu kement gread (*daed*) bet sevenet gant un diskanttroad da vezañ aner ha didalvoud evitañ war an douar hag er bed all. Un den da lazhañ eo. Tennen e vez e wreg digantañ ha berzet outañ kement hêrezh a c'hallfe degouezhout dezhañ.

Goude marv Moc'hammed e voe lazhet gant Abou Bekr an holl diskantroidi a gaved e Makka. Kalz Muslimiz ivez, deuet da vezañ kristen etretalud, a voe paket neuze

ha lakaet d'ar marv en Egipt, Turkia, Indez, Arabia, Persia, Norzhafrika, Java hag Afganistan.

Hiziv c'hoazh e rank kement muslimad kanttroet ouzh ar gristeniezh bezañ war evezh. heskinet e c'hall bezañ e pep stumm ha, zoken, bezañ kaset d'ar bed all dre un taol-trubard bennak. Moarvat e kaver bremañ kalz diskibled kuzh d'an Aviel rak un toullad mat a dud e Marokko hag e Tunizia a weler o kemer kentelioù diwar-benn ar gelennadurezh kristen.

Ar C'horan hag an Aviel

Evel m'en deus gallet al lenner merzhout endeo, diwar ar pezh a zo skrivet uheloc'hik, skort ha direizh eo gouziadur Moc'ammed diwar-benn an Aviel ha zoken diwar-benn ar Bibl dre vras.

Isa eo an anv a zo roet da Jezuz gant ar C'horan. Traoù reizh ha direizh a lavar hemañ war e zivoud. Moarvat eo reizh paz embann ez eo Jezuz ar Mesiaz, ganet gant ur Werc'hez ; pa vez ivez oc'h ober anezhañ ar Ger, bet graet gantañ burzhudoù bras. Hogen, envel Jezuz Abostol Doue pe zoken Spered Doue a zo diberveshoc'h endeo. Direizh eo, c'honvat, en holl d'an holl, pa lavar ez eo chomet Jezuz hep diskleriañ e oa Doue pe c'hoazh hep mervel war ar groaz, un den all o vezañ bet staget outi en e lec'h ; ivez, pa lavar e vo skrapet da vezañ kaset d'an neñv,... e tistroy war an douar evit dimeziñ, kaout bugale ha, gwashañ pezh a zo, evit diskanttreiñ diouzh ar groaz ha kanttreiñ ouzh an Islam... Diarvar eo ouzhpenn-se d'an arbennigourion e krede Moc'ammed en un ases Treinded, unan iskis avat, pa oa amparet, emezañ, gant an Tad, ar Werc'hez hag ar Bugel! ... It da glask pelec'h en doa desket seurt traoù!

Kalifoù Ha Disivoudoù

Kant vloaz goude marv Moc'ammed o doa tizhet Muslimiz diazezañ un impalaeriezh trec'h a bep hent da hini Roma p'edo houmañ en he barr. Evel m'hon eus gwelet, kentañ kalif pe warlerc'hiad an Darlavariad a voe Abou Bekr, unan eus e dadoù-kaer. Gantañ e vo darbleget kement dispac'h ha diskanttro a c'hoarvezo goude marv Moc'ammed. An eil kalif a voe Omar, anezhañ ur gwastadour a-raok pep tra peogwir ez eo gantañ eo e vo aloubet Persia, Siria hag Egipt. Mervel a ray drouklazhet gant ur sklav dezhañ. Eñ an hini eo a savas an deiziadur muslimat er bloaz 622. Da heul Omar e teuy Otman, diazezer testenn ar C'horan ha kendalc'her an aloubadegoù. Drouklazhet e vo ivez gant Muslimiz. War ar bedervet renk e kaver Ali a ranko derc'hel penn ouzh darsavioù niverus, atizet gant Aicha, bet gwreg da Voc'ammed. Drouklazhet e vo d'e dro er bloaz 662 ha raktal goude e varv e vo krouet gant e ziskibled skarenn ar Chiited, dre fealded ouzh tiegezh Moc'ammed hag Ali.

Hêrezhel e voe ar galifiezh diwar neuze, ha sed amañ da heul an amrizh tiernac'hoù a vo gwelet o lerc'hiadiñ an eil eben :

I. An Ommayaded, gant o c'hêrbenn e Damask, goude bezañ bet an Al Madina, a welor oc'h aloubiñ al Ledenez Iberiat en he fezh. Dindan o ren e teuy Muslimiz da dreñ war ar sevenadur gresianek, hag ur prantad skedus-dreist a baro neuze, gant an Ommayaded war bed ar skiantoù, ar varzhoniezh hag ar brederouriezh. Hogen goude droukverzh Poatev, war harzoù Breizh, koulz lavaret, er bloaz 732, e steuzio beli an Islam da vat war Gornogeuropa.

II. An Abfassided, gant o c'hêrbenn e Bagdad, e vo persat o sevenadur ha chiitat o c'hredenn. Troet-kenañ e vo an diernac' h-mañ war ar sonerezh hag an arz. Dindan o ren avat e vo gwelet ar vuhezegezh o vont war euveraat.

III. Ar Fatimided, gant o c'hêrbenn e Kaero, Egipt - o devo da stourm a-enep d'ar groazidi gristen. O gourbeliad meur ("*sultân*") a vo Saladin (1137-1193).

IV. An Ottomaned, anezho Turked, zo anavezet evit an impalaeriezh divent a savjont war dismantrou an Abfassided. Aloubet e voe Kêrgustentin ganto e 1453, ha hanter-kant vloaz diwezhatoc'h e kouezho ar Balkanioù dindan o beli. E grez Soliman lañ e tizho ar Riez Ottoman barr he brud, adalek ma vo bet aloubet Egipt ganti. Ne goazho he nerzh nemet en XVIIIvet kantved, dindan taolioù an Aostrianed hag ar Rusianed peurgent. Aet e oant da lakaat ar seziz war Wien lies a wech. Diskaret e vo Turkia gant brezel 1914, ha diwar neuze ne ray ken nemet difenn he riez e stern he gladvonnoù.

Penaos intent ar berzh graet gant an Islam ?

Ret eo gwelout da gentañ e oa rannet-kenañ kristenion ar reter pa savas Moc'ammed war leurenn ar bed kravezel. Edo Buzantion o heskinañ he disivouderion, anezho Nestorianed ha Yakobited dreist-holl. Diwezhatoc'h, e Spagn e vo heñvel gant an Arianed. Alies e teuy seurt kristenion war skoazell an alouberion, evel ma reas Kopted Egipt, da skouer. Goulezek hag emc'hraus a-walc'h e voe ar galifed en o c'heñver ha gwelet e vo kristenion ha muslimiz o lodañ savadurioù ha zoken ilizoù evel hini Sant Yann-Vadezour e Damask.

Arbennoù diabarzhel a zo ivez da verzh an Islam : plaen hag aes eo kemennadurezh ar C'horan ; neb a c'hall

diskleriañ : "N'eus nemet un Doue hepken, ha Moc'ammed an darlavariad anezhañ.." hennezh a oar, koulz lavaret, pep tra diwar-benn e gravez. N'eus ket enta da vezañ prederiet - evel ma vez ar gristenion re alies - gant kudennoù rouestlet o tennañ d'ar feizoniezh.

Gwelet hon eus ivez pouez ha levezon spontus al lieswregiezh war ar poblañsoù a gouezhe dindan renad an Islam. Arabat disoñjal kennebeut e roas ar galifed diouzhtu pep aotre d'ober dimezioù kemmesk, gant ma vije muslimat kement bugel a vije ganet diwar seurt unvaniezhoù. Sed a zegasas dour forzh pegement da vilin an Islam e pep lec'h.



Daoust hag un arouez vat evit an dazoned eo ar pezh a vez anvet hiziv **Dihun ar Bed Muslimat** ? Diaes eo henn lavarout rak bez' e c'hallfe seurt ersav kravezel, mesket maz eo betek re hiziv gant ar riezvroadelouriezh, bezañ trec'het en diwezh war dachenn ar gevredigezh. Ensavet ez eus bet endeo e Turkia ur renad a zo aet betek difenn kelenn an Islam er skolioù, pezh a zo deroù un trec'h eno endeo evit an digravezeladur. Ha deurus e vefe gouzout penaos e troy an darvoudoù en Iran dindan un nebeud bloavezhioù. Rak mar chom dizalc'h hevelep riez pa ne vo ken eus imaned levezonus, piv a oar hag-eñ ne drec'ho ket ar riezvroadelouriezh eno ivez war ar gravez ? Tu 'zo da soñjal, ouzhpenn-se, ne vo ket heñvel emdro an Islam er broioù muslimat hervez ma vint pe ne vint ket bet dindan veli Rusia. Ha primoc'h ez ay marteze an digravezeladur war-raok er broioù islamat o devo tizhet chom dizalc'h koulz e-keñver ar C'hornog hag e-keñver ar Reter, rak, zoken o venel neptu, e kendalc'hint da vezañ levezonet gant stuzegezh disperedelaus ar C'hornog a zo o vougañ o

c'hreveziou dre an diabarzh. Gwir eo, evel ma ne oar ket an Amerikaned an droug a reont d'o muslimiz en o rezid, kenkoulz-all ne oar ket ar Rusianed kennebeut ar vad o deus graet d'o re war-bouez o derc'hel e sujidigezh, pezh a daol d'atizañ o feiz e Doue.

Notennoù

(1) Aicha a oa pried yaouankañ ha muiañ-karet Moc'hamed. War a seblant he deus c'hoariet - gant muioc'h a chañs - roll intañvez Mao en hon amzer.

(2) **aneilgenezh**. Ar ger-mañ a zo diskleriet e-mesk ar gerioù all. Talvezout a ra stad an hini n'eo ket bet (**an-**) nevezet (**-eil-**) e natur (**genezh**) gant ar vadeziant.


(3) Padal, eme ar C'horan, leun a zamant, arabat eo d'ar gwaz skeiñ gant ur vazh re dev ! Arabia n'eo ket bro romantou an Daol-Grenn ez eo.

(4) Abegoù a yec'hedouriezh a oa moarvat d'an difenn-se.

(5) N'omp ket sur e vefe ul liamm etre ar berz lakaet war ar skeudennañ-tud hag arz Arabiz. E-touez ar Gelted o deus an troellennoù ul lec'h bras en o arz ivez.

Adnotenn : Evit pezh a zo eus divezouriezh revel Muslimiz e vefe arabat krediñ e klot evelato gant an dirollerezh rik. Ar gwaz n'en deus ket ar gwir da dostaat ouzh e wreg pa vez o tougen pe o vegañ, a gav dimp, hervez reolenn ar C'horan. Dleet eo d'ar gwaz ivez rannañ e aked en un doare kevatal-rik etre e briedoù (ha rak-se, a-hervez, ne gemer muslimiz deol zo nemet ur wreg, evit bezañ sur da chom hep pec'hiñ). Ouzhpennomp n'eo ket aes kennebeut reolenn ar yun d'ar bleustrerion.

Addisplegoù all a vefe tu da ober moarvat ; hogen dre vras ne ginnig ket an Islam ar beurvadelezh evel un uhelvennad da vezañ tizhet gant an holl, pezh a ra evelkent ar gristeniezh.



Taolenn

Trugarekadennoù	I
Raklavar	III
An Diskuliadurezh pe Emell Doue.....	1
Ar Bibl en e bezh mammenn hon feizh kristen	13
An Eztaol Feizh diazezek	21
Kenevezouriezh	25
Buhez Doue.....	31
An Dreinded	37
Doue an Tad	41
Ar Spered Glan	47
Doue Krouer	51
Dispac'h an Aeled	55
Kudenn Adam hag ar Pec'hed	61
Ar Gwerv emzenet	65
Ster Gwirion Kroaz Hon Salver	73
An Ifern	81
Adenkorferiezh	85
Dasorc'hidigezh kristen ar c'horfoù	95
Ster ar Silvidigezh kristen	101
Petra eo ar c'herrin	115
Danvez ha furn ar c'herrin	121
Ar Vadeziant hag ar Gouzoumenn	125
An Askeviuniadur - Eliadenn ar Glañvourion	131
An Urzh	135
Ar Briedelezh	141
Ar Gevradiezh ha Gouezvoud ar C'hrist	151
Ster hengounel an Tresolwezadur	163
Kevradiezh ha Pec'hed	179

Kevradiezh ha Dasorc'h	187
Aberzh an Oferenn	193
Debriñ kreud ar C'hrist hag evañ E wad	207
Ober ur pred gwirion eo keduniñ	213
Emmanouel pe annezerezh ar Rad ennomp	219
Gant petra eo graet frouezh ar c'hedunadur	227
An Terkoniadoù ret evit Keduniñ	233
Ar Chem hag an Doare.....	243
Stummidigezh an Avieloù & Ginivelezh ar Feiz diles.....	245
Kudenn ar ster	249
Tonkad ur plac'h yaouank anvet Mari	253
Speredelezh ar vuhez kristen - Azasaerezh div nouez ...	257
Ur c'hraf o sellout ouzh emskiant Jezuz	261
Kevredigezh kristen	269
Hag anataet e vo bezoud Doue hepdale gant ar skiant.....	293
C'hwitadenn an andoueadegezh skiantel.....	299
Kedilizegezh	303
Amlen Torino	309
O tistreiñ war gudenn dilested Amlen Torino	319
Kevrinourion ha Radwerc'heged Rusia	325
An Islam	337
Taolenn	357



Dolet gant 'Keneid Imbourc'h'

Niverenn-wask ar gelaouenn 'Imbourc'h'
CPAPP : 50015

An atedeg : Y. Olivier

Geriadurezh

A

Aberzh : *sacrifice.*

Aberzh-anrezhadur : *sacrifice-immolation.*

Abostol ar Broadoù : *Sant Paol.*

Adamek : *adamique.*

Adamelezh : *adamité.*

Adaozat : *réformé, protestant.*

Adaoziezh : *Religion Réformée.*

Adarren : *répétition.*

Adeiladerezh : *édification.*

Adeiladiñ : *édifier.*

Aderouesaat : *re-présenter, réactualiser.*

Aderouesâdur : *re-présentation, réactualisation.*

Aderouezañ : *rendre présent de nouveau.*

Aderouezadur : *réactualisation.*

Adkevanet : *réintégré.*

Adkevanidigezh : *réunification.*

Adreizh : *réforme.*

Adreizhidi : *(des) réformés.*

Aer : *lazhadeg.*

Agentel : *antérieur.*

Akuitañ ganti : *réussir.*

Al Madina : *Médine (Arabia).*

Alvez : *cosmos.*

Alvez-danvezel : *physico-matériel.*

Amañ nomañ : *hic et nunc.*

Amberzañ : *réserver.*

Amdroc'h : *circoncision.*

Ameun : *éloigné, indirect.*

Amezat : *ambient.*

Amgant : *cadre.*

Amlun : silhouette, profil.
Ampar : dimension.
Amparadoù : composantes.
Amparañ : constituer.
Amparet : constitué.
Ampar ilizel : dimension ecclésiale.
Amplegad : condition.
Amreal : activité, agissement.
Amrizh : divers.
Amsaviñ : remplacer.
Amzeriadañ : lecl'hañ en amzer.
Anad : apparence (choses).
Anadenn : phénomène.
Anadennel : phénoménal.
Anadiñ : paraître.
Anadurezh : évidence.
Anadennonieczh : phénoménologie.
Anaezet : affecté.
Anaouderezh : activité cognitive.
Andamantiz : intolérance.
Andesaveletoc'h : plus indéterminé.
An Dibec'hkrouedenn : L'Immaculée Conception.
Andiouerus : indispensable.
Aneilgenezh : irrégénéré (dre ar vadeziant, da lavarout eo, roet un eil natur (genezh) dre ar vadeziant).
Anforc'hellek : formel.
Anfreuzadus : irréfutable.
Angeriadus : inexprimable.
Angerzh : passion.
Angorzhañ : concerner.
An kez : ce, cet, cette.
Ankeveladus : incommunicable.
Ankrerezh : ascèse (kv. "ancr" ascète e kbg).
Ankrouet : incréé.
Annouez : exhorter.

Anrezhadur : immolation.
Anrezhañ : immoler.
Anrezhel : victimaire.
Anster : sans sens, non sens.
An Toc'hor : le mourant (ivez : an Tremenvaniad).
An un : le même, an hevelep.
Anvent : infini.
Araez : moyen.
Araezioù : moyens.
Arbenn : cause physique.
Arbenn-bezañ : raison d'être.
Arbenn pennañ : cause principale.
Arbennigourion : (des) spécialistes.
Arbennoù : causes, raisons, motifs.
Arc'hwel : fonction.
Ardaolet : attribué.
Aregele : discursif.
Arempred : service.
Argel : symbole.
Argelek : symbolique.
Argelrzh (g) : icône.
Argerzh : processus.
Argraf : affaire.
Argreskus : progressif.
Ariouriezh : arianisme.
Arlevier : président.
Arlid : rite.
Arloañ : appliquer.
Arloañ-daouarn : imposition des mains.
Arloz : Seigneur.
Armerzhel : économique.
Arnevezour : moderniste.
Aroarek : oisif.
Arouesaat : signifier.
Arouezegezh : signification, caractère de signe.

Arouezennelezh : *symbolisme*.
Arreet : *répété*.
Arrizh : *idole*.
Arrizhegezh : *idolâtrie*.
Arselladoù : *considérations*.
Arsellout : *examiner*.
Arskeud : *arliv*.
Arstalek : *constant*.
Arvan : *apparence (personne)*.
Arvanoù : *apparences*.
Arvez : *aspect*.
Arvezet : *considéré*.
Arveradus : *utilisable*.
Arwarzh : *prestige*.
Arwelaat : *s'exprimer, se manifester*.
Arzal'het : *sauvegardé (ivez : "gwardet")*.
Arzerc'hel : *sauvegarder (ivez : "gwardiñ")*.
Askenn : *pignat ("esgyn" e kembraeg)*.
Askeviunadenn : *réconciliation*.
Askeviunadur : *réconciliation*.
Askoemp : *rechute*.
Askoemped : *relaps*.
Atebegelezhioù : *responsabilités matérielles, objectives*.
Atebegezh : *responsabilité*.
Atodel : *supplémentaire (ivez : "dreistat")*.
Atodiñ : *ajouter*.
Averlad (b) : *hostie*.
Azav : *promesse*.
Azavet : *promis*.
Azaviñ : *promettre*.
Azbevaerezh : *réanimation*.
Azon : *caractéristique*.
Azrek : *contrition*.
Azverat : *restaurer*.

B

Baranek : *fanatique*.
Baranegezh : *fanatisme*.
Barnerezhel : *judiciaire*.
Barr-lizadurezh : *niveau de corruption*.
Bastus : *suffisant*.
Bec'hiekaat : *dont da vezañ bec'hiet ; "enrichir" e galleg e yezh ar fizik pe ar gimiezh*.
Bedveizadur kravezel : *"weltanschauung" religieuse*.
Begozh : *menace*.
Belegiezhvod : *presbyterium*.
Benargas : *répudiation ("ben" = plac'h)*.
Berzhus : *efficace*.
Berzhusted : *efficacité (ivez : "gwerchegezh")*.
Betek evel : *en tant que tel*.
Beved : *vie matérielle, biologique*.
Bezanterezh : *assistance (ivez : "arvezidi" ls)*.
Bezantiñ : *assister (ivez : "arvezañ ouzh")*.
Beziad : *réalité, fait*.
Beziadelezh : *réalité*.
Beziadoù krai : *faits bruts*.
Beziadus : *possible dans l'être*.
Bezhelel : *éternel ("bezh" evel "bezhviken", "bizhviken")*.
Blendestour : *Protestant*.
Blenfrouezh : *prémices*.
Bloaziadur : *datation*.
Bon (en e von) : *intrinsèquement, en 'son' fond*.
Bongoal : *(b) dogme*.
Boniek : *radical*.
Bonnañ : *professer, publier*.
Bonreizhiad vongoalek : *constitution dogmatique*.
Boudelezh : *entité*.
Boztalañ : *satisfaire*.
Boztaladenn : *satisfaction*.

Boztalerezh : *satisfaction.*
Bleinekaat : *polariser.*
Bredoniezh : *psychologie.*
Brellañ pep merk : *brouiller toutes les pistes.*
Briegerzh : *dignité.*
Briwer'h (g) : *vertu.*
Briwer'h douedaveel : *vertu théologique.*
Briwer'hioù : *vertus.*
Briwer'hioù enskuilh : *vertus infuses.*
Briwer'hioù diazezel : *vertus cardinales.*
Buziad : *bénéficiaire.*

C'h

C'hweluniad : *syndicat.*
C'hwymder rannigoù : *accélérateur de particules.*

D

Daelerezhel : *dialectique.*
Damkanad : *théorie (une).*
Damkanel : *théorique.*
Damkaniezh : *théorie (la) en général.*
Dangorenn : *sujet.*
Danseulad : *substrat.*
Darbar : *contribuer.*
Darbenn : *recevoir, admettre, reconnaître.*
Darbenner : *receveur.*
Darbennet : *reçu, admis..*
Darblegañ : *soumettre.*
Dargouezh : *hasard.*
Darlakaat : *prétendre.*

Darlavariad : *prophète.*
Darnodiñ : *expérimenter.*
Darsav : *insurrection, rébellion.*
Darvennad : *exigence.*
Darvennadoù : *exigences.*
Darvennañ : *exiger.*
Darvennet : *exigé.*
Darvennout : *exiger par une personne.*
Darvoudenn : *accident (prederouriezh).*
Darvoudennoù : *accidents.*
Darwirienn : *axiome.*
Dasprenat : *se rapportant à la Rédemption.*
Datgan : *proclamation, annonce, déclaration, manifeste (ger kenorin moarvat gant "diougan").*
Daveadur : *relation.*
Daveerezh : *relation active.*
Daveiñ : *faire référence à, renvoyer à.*
Daveoù : *références.*
Davoud : *futur (le).*
Davoudel : *futur, se rapportant au futur.*
Dazgwered : *réaction.*
Dazeilat : *alternatif.*
Dazlammad : *répercussion.*
Dazhlad : *célébration (ivez : "lidadur").*
Dazhladenn binijennel : *célébration pénitentielle.*
Dazhliñ : *célébrer (ivez : "lidañ").*
Dazreet : *réitéré.*
Dazroadur : *Tradition (ster ar feizoniezh ; treuzkasadur ar gwirioneziou kristen diazezet war ur c'helenn arstalek).*
Deberzhiek : *contingent.*
Dec'heriadenn : *expression en mots.*
Dec'hmegeañ : *imaginer.*
Dedalvezet : *appliqué.*
Dedaolet : *produit naturellement.*

Dedeurel : produire naturellement ; "kenderc'hañ" produire artificiellement, industriellement.
Dedeuzet : fondu.
Defraeshaat : démontrer.
Defraeshadur : démonstration, preuve.
Degont : cas.
Degounadenn : souvenir rappelé.
Degounañ : rappeler.
Dehêrañ : adopter.
Dehêred : enfants adoptifs.
Dehêridigezh : adoption.
Dehuzianterezh : propitiation (kmb : "dyhuddiant").
Dehuziantus : propitiatoire.
Del : evel (kv. "del" e kmg).
Delanvad : influence.
Delec'hiet : localisé.
Dellidoù : mérites.
Delodet : attribué.
Deltu : courage, dynamisme.
Dendouevel : humano-divin.
Dendouevelezh : humano-divinité.
Derc'h : image mentale.
Derc'havet : élevé.
Derc'henn : image objective.
Derc'hennadur : représentation.
Derc'hennañ : représenter.
Derc'houezañ : représenter dans une assemblée.
Derc'houezour : représentant dans une assemblée.
Dereadelezh : convenance.
Derezek : progressif.
Derez-mann : degré zéro.
Desellet : considéré.
Desellout : considérer.
Deskrivad : description.
Despizadur : définition.

Despizet : défini.
Desteriañ : interpréter.
Destlek : canonique.
Deurus : intéressant.
Deuterion : deutérium.
Devarn : sentence.
Deved : décret.
Deved : rite.
Devedeg : rituel (livre).
Devedel : rituel.
Devoud : fait.
Devoudad : effet.
Devoudañ : produire.
Devoudel : effectif, réel, de fait.
Devoudelaat : rendre effectif.
Devredad retvezek : décision nécessaire.
Devriegezh : caractère de ce qui est sérieux, le sérieux.
Dezev : pensée (ivez : prederenn), idée, intention.
Dezevel : mental.
Dezevout : penser.
Dezgeriad : formule.
Dezgeriadur : formulation.
Dezgeriet : formulé.
Dezreadurioù : déductions, conclusions.
Dezren : déduire.
Dezvarn ar greadusted : jugement de crédibilité.
Dezvarn ar gredendalc'husted : jugement de crédentité.
Dezvennerzh : intention dans son évolution active.
Diabezh : tout (an diabezh = "le tout", e galleg).
Diac'hinadel : paradoxal.
Diac'hinek : contradictoire.
Diac'hinel : contraire.
Dianlenad : conséquence.
Dianlenadoù : conséquences causales.
Dianvarroù : conclusions.

Dianveziad : conséquent.
Diarc'hañ : exiger.
Diarc'het : exigé.
Diarsell : perspective.
Diatoradus : irrécupérable.
Diavaeziadenn : manifestation, extériorisation.
Diawelerezh : visions(des).
Diazerc'hel : concerner, s'adresser à.
Dibafalus : impalpable.
Dibennach : absurdités.
Dibistri : antidote.
Dic'heriadus : inexprimable.
Didalvoud : nul (ivez : "diwerc'h").
Didralen : relatif.
Dienaet : certifié, démontré.
Diended : certitude.
Dierremañ : invalider.
Dierremek : invalide.
Dierouez : absent.
Digehuzad : acquittement.
Digehuzañ : acquitter.
Digenvezenn : ger tost ar ster anezhañ da "no man's land".
Digevaotre : illicite.
Dihustell : énigme.
Dihuzañ : consoler.
Diles : authentique.
Dilesoc'h : plus authentique.
Dinodiñ : apparaître.
Diogelaat : rendre sûr, assurer.
Diogelded : sécurité.
Diogelenniñ : prouver.
Diorreadurezh : développement moral, intellectuel.
Diouerek : déficient.
Diouerñ : renoncer.
Diounit : administrer (remède, etc.), servir à table etc...

Diouzerc'h : préfiguration.
Diouzerc'hañ : préfigurer.
Diouzh hennad : de la nature, de l'ordre de.
Diouzh kemez : dans la logique de.
Direet : réduit (diwar : "diren").
Dirgel : secret.
Dirveur : énorme.
Dirvoudel : objectivement réel sur terre.
Diskanttreiñ : apostasier.
Diskantroad : apostat.
Diskarez : pardon.
Diskareziñ : pardonner.
Dislank : distance entre, esaouenn, hed etre.
Disnevet : sacrilège.
Disnevetad : profanation.
Dispac'h ar c'hevandrioù : dérive des continents.
Dispresourder : indélicatesse.
Distantur : extraordinaire.
Divezegezh : moralité, caractère moral.
Divizerezh : décision dans son évolution active.
Diwar anadurezh : à l'évidence.
Diwar did : arbitrairement.
Dizaerouantour : exorciste.
Dizalc'hadenn : absolution.
Dizalc'hidigezh : cession.
Dizave : absolu.
Dizereadenn : absolution.
Dizeren : absoudre.
Dizeurediñ : divorcer.
Doazh : sage (liester : doazhion).
Doazhourion : Docteurs.
Dodennoù : thèmes.
Douedaveel : théologal.
Doueveladur : déification.
Douegedneuziadur : déiformation.

Douegedneuziekaat : dont da vezañ "douegedneuziek", heñvel ouzh Doue ("déiforme").
Douegedneuzius : déiformant.
Douested : densité, intensité.
Douevel : divin.
Dougen trugaregezh : rendre grâce.
Dre areg trabedoniel (diouzh eztaol trabedoniel) : métaphysiquement parlant.
Dre dra : effectivement.
Dre gevambroug : par concomitance.
Dre greiz amveziadoù goubarzhel : dans des circonstances particulières.
Dre hennad : par essence.
Dre heñvel benn : au même titre.
Dre o ferzh : par eux-mêmes.
Dreistad : supplément.
Drouksaviad : mauvaise situation.
Durc'hadur : orientation.
Durc'haet : orienté.

E

E dave da : en référence à.
E devoud : en fait (ivez : "le fait de", "la cause de").
E diaouez : en présence.
E diazalc'h : dans la dépendance de.
E diazalc'h gwerc'hel : en lien réel.
Eeun : prochain, direct.
E gin : au contraire.
Eginbeurbadel : d'embryon d'éternité.
Eginglodekadur : glorification en germe.
Eginzasorc'hidi : germes de ressuscités.
Egor : espace.
Egorelezh : espace, étendue.
E gourhêrezh : dans la lignée de.

E gouwerzh : au rabais.
E gwered : en acte ; e galloud : en puissance.
E kenfeur : en proportion, proportionnellement.
E kenfeur keñveriek : dans une mesure relative.
Eliadenn : onction.
Eliadenn Eoul Santel : onction d'huile sacrée (Saint Chrême).
Emarsellout : s'examiner.
Emblegoni : résignation.
Emblegerezh : soumission volontaire.
Embregadur : entreprise (opération).
Emdarzek : spontané.
Emdreantek : recueilli.
Emdreanterezh : recueillement.
Emdred (g) : retraite.
Emdredañ : se retirer.
Emdroadur : évolution.
Emelladenn : démarche.
Emeskarzhañ : s'abaisser, s'anéantir, se vider.
Emesteuziñ : s'anéantir.
Emframmoù : structures.
Emged kristek : don de soi christique.
Emgediñ : se donner.
Emgelenn : conseil.
Emgerc'hegezh : égoïsme.
Emgloastrevezh : autoclaustration.
Emnac'h : renoncement, abnégation.
Emouezout : (emouezvoud) conscience.
E mouez ouzh : en l'honneur de.
Empleg : implicite.
Emskiantekaat : conscientiser.
Emstagoni : adhésion morale.
Emyoulek : volontaire.
Emziskouez : apparition.
Emzioueroù : privations.
En ardizh : exposé à.

En arempred : au service de.
Endonañ : approfondir.
Endhu : ainsi.
Enebañs : image.
En e dudenn : en sa personne.
En e c'hounid : à son profit.
En ergeñver da : par référence à.
En he c'hrai : en elle-même.
Enkelat : latent.
Enkreridigezh : inauguration.
Enlen : inhérent à (ouzh).
Enmanusted : immanence.
En o c'hrai : en elles mêmes, en eux-mêmes.
Ensav : instance.
Entezadur : assimilation.
Entuegezh : disponibilité.
Ent digeñver gant : indépendamment de.
E reizh : à la manière de, en manière de.
E reizh ur : à la manière de, en manière de.
Ergerzhioù-kospañ : expéditions punitives.
Ergorel : objectif.
Ergorelezh : domaine de l'objectif, objectivité.
Ergorenn : objet, chose objective (e prederouriezh).
Erlec'hiadur : substitution.
Erlusk : élan.
Erluskañ : susciter.
Erouez : présent, actuel.
Erouezel : actuel.
Erouesaat : actualiser, rendre présent.
Erouezvezh : présent ; temps présent.
Erounidigezh : application, exécution.
Erremmek : valide.
Ersav : attitude, réaction à.
Ersellegezh : prudence (vertu cardinale).
Erzerc'had : manifestation.

Erzerc'hadenn : manifestation.
Erzerc'hañ : manifester.
Erzerc'het : manifesté, révélé.
Ersav : attitude.
Eskoridigezh : émergence.
Eskoriñ : émerger.
Esteuzidigezh : anéantissement, destruction totale.
Etreenn : milieu.
Etrekeduniezh : intercommunion.
Etretaluad : entre temps.
Eulad : signification.
Eulañ : ultime.
Eulavouriel : eschatologique.
Ezdalc'h : exempt.
Ezgeriañ : exprimer.
Ezholed : candidat désigné.
Ezkaelet : exclus.
Eztaolad : expression.
Eztaol-azrek : acte de contrition.
Eztaol standurel : expression courante.
Eztaol-feiz : acte de foi.
Eztaoliñ : exprimer.

F

Feizoniezh : théologie de la foi.
Feizoniour : théologien de la foi.
Frammadelouriezh : structuralisme.
Frammadurezh : économie.
Flañchell : bistouri, scalpel.
Fraied : copains.

G

Galloud : puissance en philosophie (geriou eus prederouriezh St Tomaz).
Gavaelañ : saisir.
Gennet : habité.
Geriañ : exprimer.
Gladvonn : frontière nationale.
Glanaeret : aéré.
Glenadiñ : adhérer moralement.
Glenañ : adhérer à (ouzh).
Glenn : douar (barzhoniel).
Glennel : terrestre.
Godinebiñ : commettre un adultère.
Goñvoregezh : tempérance.
Gouateg : support.
Goubadur : résolution.
Goubarañ : abstraire mentalement.
Goubarzhel : particulier.
Goubet : résolu, décidé.
Gouezoniour : savant (un).
Gouezoniezh : science.
Gouezoniel : skiantel.
Gouezvoud (g) : présence.
Gouezvoud gwerc'hel : présence réelle.
Gouezvoud gwerc'hel : présence réelle, pe c'hoazh : kantveziadelezh: bezañs louerel, eleze nann kealel hepken e spesou ar bara hag ar gwin.
Gouezwel : parousie = vision (gwel) de la présence (gouez).
Gougevaniñ : s'intégrer.
Gougonez : gloire.
Gouziaded : (des) savants.
Gouziadoniour : épistémologue.
Gouziadur : connaissance (une).
Goulezek : tolérant.
Goulezegezh : tolérance.
Gouloc'h : culte.

Gouiniñv : administrer.
Gouiniñverezh : ministère.
Gouiniñverezh trebadek : ministère permanent.
Gouiniñvour : ministre.
Gouiniñvouriezh : ministère.
Gounit (e) : au profit de.
Gourambred : ferme propos.
Gourampeget : imposé.
Gouraskenn : Ascension.
Gourbannañ : proclamer, exalter.
Gourbannet : exalté.
Gourbeliad : souverain.
Gourbeliegezh : souveraineté (ivez : riegezh, emveliegezh).
Gourfred : outrance, excès.
Gourozar'h : patriarche.
Goursav : extase.
Goursenedoù : Conciles Oecuméniques.
Gouvennet : pressenti.
Gouviad : notable.
Gouwerzh : rabais.
Gouzañvegezh : caractère fataliste.
Gouzaviñ : avertir, faire part.
Gradus : gratuit.
Gread : acte (sk. "gread noterial" acte notarial).
Gremm : énergie.
Gwarediñ : sauvegarder (ivez : arzerc'hel).
Gwaredet : sauvegardé (ivez : arzalc'het).
Gwastadour : pionnier.
Gwarzh : scandale.
Gwazad : service en tant qu'équipe.
Gwazaduriou : services (organismes).
Gwazañ : servir.
Gwazerezh : service.
Gwaznezh (g) : office religieux.
Gwazourion : serviteurs.

Gweinerezh : *ministère en acte.*
Gweinerezh kerrinel : *ministère sacramental.*
Gweiniezh : *ministère (condition de ministre).*
Gweiniñ ampoaniuzoù : *servir, administrer des analgésiques (anesthésiants).*
Gweinourion : *ministre (ger gwelloc'h eget "maodiern", zoken war an dachenn bolitikel).*
Gwel gwennvedikaus : *vision béatifiante.*
Gwellek : *optimal ; ent wellek : optimalement.*
Gwengel : *mythe.*
Gwengelek : *mythique.*
Gwerc'h : *action, efficacité.*
Gwerc'h : *action effective, efficiente.*
Gwerc'h : *efficace.*
Gwerc'hegezh : *efficacité.*
Gwerc'hel : *réel.*
Gwerc'helaat : *se réaliser.*
Gwec'heladur : *réalisation.*
Gwerc'helezh : *réalité.*
Gwerc'helour : *réaliste ag.*
Gwerc'henn : *réalité (une).*
Gwerc'h kentizhel : *efficacité immédiate.*
Gwered : *action, effet.*
Gwered : *acte en philosophie ; opposé à "Galloud" puissance.*
Gweredel : *actuel.*
Gweredidik : *opératif (ger skolastek).*
Gwerediñ : *agir.*
Gwered-krouiñ : *action créatrice.*
Gwerv : *Verbe divin ; kv. kbg "gwerf".*
Gwerv Emzenet : *Verbe Incarné (ivez : keddenet, emgreudet).*
Gwerzh e warant, he gwarant : *digne de foi.*
Gwezhierzh : *activité.*
Gwezhriad : *acte.*
Gwezhriadenn : *action.*
Gwezhiañ : *agir.*

Gwid : *vice.*
Gwir destlek : *droit canonique.*
Gwiriegezh : *véracité.*
Gwirioneziou bezhel : *vérités éternelles. ("bezh" evel "bezhviken", "bizhviken").*
Gwirvoud : *réalité.*
Gwirvoudel : *réel, le plus réel, transcendant.*
Gwirvozek : *volontaire.*
Gwitibunadur : *généralisation.*
Gwitibunañ : *généraliser.*

H

Handarzhañ : *procéder.*
Hanez : *histoire événementielle.*
Hanezel : *historique.*
Hanezour : *historien.*
Haeradenn : *affirmation.*
Haeriñ : *affirmer, prétendre.*
Halek : *profane.*
Hanc'her : *vocable.*
Hanvoud : *existence humaine.*
Hanvoudelour : *existentialiste.*
Hanvout : *exister.*
Haremad : *contenu d'un "harem".*
Heberzh : *qualité (bonne).*
Heboell : *raisonnable.*
Hegaristiezh : *eucharistie.*
Hengounelour : *traditionaliste.*
Hennad : *essence, nature.*
Hennadel : *essentiel, par essence, concernant l'essence.*
Hennen : *cela, ceci.*
Hennvoud : *essence.*
Hentennoù : *méthodes.*
Hentennoniel : *méthodologique.*

Heñvelerezh : imitation.
Hepket : sauf, hormis.
Hepkoriñ : éviter, se passer de.
Herouezañ : favoriser.
Herouezadur : promotion.
Hevoudañ : donner du bien être.
Hewalc'h : vénial.
Hez : paix intérieure, morale.
Hoali : padelezh ar vuhez.
Hoal : droit.
Hol (g) : autorité.
Holc'h : (ad) recherche.
Holiegezh : autorité.
Hollandioueradus : absolument indispensable.
Hollerouez : omniprésent.
Hollveziadel : universel.
Holiour : supérieur.
Honniñ : affirmer.

I

Izegad : minimum.
Iliz blendestour : Eglise protestante.
Ilizoniel : ecclésiologique.
Ilizoniezh : ecclésiologie.

K

Kadwaznac'her : objecteur, qui refuse le service militaire.
Kaerañ pezh a zo : qui mieux est.
Kaimantal : demander à outrance, fortement solliciter, "casser les pieds".
Kalvezel : technique.
Kalvezelezh : technicité, perzh ar pezh a zo kalvezel.

Kanforzh : infiniment.
Kaniadiñ : consentir à, admettre.
Kanmoedek : solennel ("moed" : toniusted, meurdez).
Kantaezañ : sentir.
Kantaezouezel : contemplatif.
Kantaezouezelezh : contemplation.
Kantaezouezerezh : contemplation active (connaissance affective : gouezerezh kantaezel).
Kantouestlañ : consacrer.
Kantouestlet : consacré.
Kantouezadennoù : expériences, observations expérimentales.
Kantouezadur halek : expérience profane.
Kantouezadus : perceptible de façon expérimentale.
Kantouezañ : expérimenter.
Kantouezel : expérimental.
Kantouezelouriezh : empirisme.
Kantreol : normal.
Kanttreiñ : convertir, se convertir.
Kantvezet : considéré.
Kantvout : considérer.
Kavandad : camarade.
Kavantadiezh : camaraderie.
Kealiadurezh : idéologie.
Ked : don ; kedoù : dons.
Kedanaout : reconnaître.
Keddenañ : se faire homme.
Kederouez : présent ensemble.
Kedilizelour : oecuméniste.
Kedgredek : solidaire.
Kediadenn : copulation.
Kedilizegezh : oecuménisme chrétien.
Kediñ : conférer.
Kedkealegezh : syncrétisme (attitude).
Kedrann : composante.
Kedunadur : communion.

Kedunadenn : *(une) communion.*
Kedunadenn & kedunadur : *communion.*
Kedunadiezh : *communauté de religions.*
Kedunadoù : *communautés ecclésiales particulières ; (ivez : kedhiniennoù).*
Kedunan : *en union.*
Keduner : *communiant (un).*
Keduniñ : *communier.*
Keduniezh feizadel : *communion des fidèles (feizad : fidèle).*
Kedunlusk : *d'un même mouvement.*
Kedunvenn : *à l'unisson de leurs volontés.*
Kedunvouezh : *d'une seule voix.*
kedunyoul : *d'une seule et même volonté.*
Kedyoul : *acceptation active.*
Kefle : *pacte, alliance.*
Kefleunazrek : *pleine contrition.*
Kefleunded : *perfection, plénitude ("keveswelled").*
Kefleunder : *plénitude.*
Kefleuniañ : *accomplir.*
Kefleuniet : *accompli.*
Kefredelezh : *intelligentsia, milieu intellectuel.*
Kefredour : *intellectuel (un).*
Kefridiel : *officiel.*
Kehentiñ : *communiquer.*
Kehenterezh : *communication.*
Kehoazus (ent) : *publiquement.*
Kehuz-gwerediñ : *cause efficiente.*
Keinekaat : *donner corps, consistance, illustrer (kv. "cefnogi" e kbg).*
Kembeli : *compétence.*
Kembezus : *compatible.*
Kempennelouriezh : *réformisme.*
Kemperzh : *contexte.*
Kempoell : *logique.*
Kempoellded : *cohérence.*

Kenaozañ : *composer.*
Kendave (e kendave gant) : *en relation avec.*
Kenderc'hañ : *produire.*
Kenderc'her : *producteur.*
Kendro : *évolution.*
Keneliñ : *engendrer (o komz diwar benn Eil Nouez an Dreinded).*
Kenelwerinat : *national-socialiste.*
Kenelwerinelouriezh : *national-socialisme.*
Kenemell : *entremise conjugée, commune.*
Kengej tregemmus : *contact transformant.*
Kenglevioù : *accords (ivez : kengradoù).*
Kengraderezh : *assentiment.*
Kenilañ : *inciter, exciter.*
kenilour : *animateur.*
Kenneziñ : *augmenter.*
Kennez : *augmentation.*
Kennezvoù : *propriétés, vertus.*
Kensteuiñ : *combinaison.*
Kenstumm : *conforme.*
Kentizhek : *prochain, immédiat.*
Kentizhel : *immédiat, direct.*
Kentoc'h meiz : *à plus forte raison.*
Kenvegañ : *honorer.*
Keñveliel : *analogique.*
Kerrinel : *sacramentel.*
Kerrin : *sacrement (kalz livusoc'h eo ur ger evel "kerrin" hag en e gichen e chom evel mut, zoken e brezhoneg, an anvad "sakramant").*
Kevamsavadus : *interchangeable.*
Kevan : *total, entier.*
Kevanek : *intégrant ("parzh kevanek" = "partie intégrante").*
Kevaniñ : *intégrer.*
Kevaniñ ouzh an Urzhoù : *entrer dans les Ordres.*
Kevanlosk : *holocauste.*

Kevanroez : *totalité, intégrité, intégralité.*
Kevaotañ : *rédiger.*
Kevaraezañ : *permettre, donner le moyen, rendre possible.*
Kevastenn : *étendre, appliquer (a - ouzh).*
Kevatallodek : *également réparti.*
Kevateb : *correspondant.*
Kevazasiñ : *adapter, conformer.*
Kevelus : *commun.*
Kevelep : *analogue.*
Keveskemm : *réciproque.*
Keviunad keveskemm : *consentement mutuel.*
Kevradiel : *eucharistique.*
Kevradiezh : *eucharistie (kevradiñ : rendre grâces, faire eucharistie).*
Kevrank : *rencontre face à face, match ou combat.*
Kevrater : *contractant.*
Kevredik : *public.*
Kevreizh : *proportionné.*
Kevren ouzh : *se rattacher à.*
Kevrinel : *mystique.*
Kewer : *honnête, probe (kv. "cywir" e kembraeg).*
Kewir : *exact, conforme, fidèle, sincère.*
Kewirded : *exactitude, conformité, fidélité, sincérité.*
Kezivik : *primordial, positif.*
Kiminiadezh (b) : *kérygme, annonce.*
Klodekaat : *glorifier.*
Klodouezadur : *Transfiguration du Christ.*
Klodouezañ : *transfigurer (o komz eus ar C'hrist war ar Menez-Tabor).*
Klodouezet : *transfiguré.*
Klufanerezh : *flatterie.*
Koanlec'h : *cénacle.*
Koanlid : *cène.*
Koan Santel : *Sainte Cène.*
Koanveur : *cène.*

Koleziñ : *vénérer.*
Komz Emgreudet : *Parole Incarnée (ivez : "enkorfet", "keddenet", "emzenet").*
Kondonel : *intime.*
Kor : *cycle.*
Korvoder : *revenu (le).*
Korvoñ : *exploiter (ster gwashaat).*
Koul : *coulpe.*
Kouvrant : *affectueux.*
Kouvrantiezh : *affection.*
Kraided : *réalité en soi, réalité nominale.*
Kraidedenn : *réalité (une) en soi (kraided : réalité en soi).*
Kraidedel : *relatif à la réalité en soi.*
Krafted : *perspicacité (kv. "crafter" e kbg).*
Kravez : *religion.*
Kravezel : *religieux.*
Kredadusted : *crédibilité.*
Kres (g) : *peoc'h (ger kemowek)*
Kreud : *chair.*
Kreudel : *physique, charnel.*
Kreudelezh : *situation charnelle, somatique.*
Kristoniel : *christologique.*
Kristoniezh : *christologie.*
Krouedenn : *créature.*

L

Laesañ : *léguer (da / à).*
Lakaennoù : *prémises (e pep kempoellad - "syllogisme" - e kaver div lavarenn gentañ a vez graet "kentlakaenn" hag "eilllakaenn" anezho).*
Liesdiskiblezhat : *pluridisciplinaire.*
Lankad : *phase.*
Loazioù : *ressources.*

Lavaradurezh : langue.
Laz : intérêt.
Lazenn : cause.
Lazoù : intérêts.
Ledad : étendue.
Ledvoz : condescendance forcée.
Lerc'hadek : successif.
Lerc'hadiñ : succéder.
Lerc'hiad : conséquence (ivez : "heuliad").
Lerc'hiad kemezel : suite logique.
Lerc'hiadour kentizhek : successeur immédiat.
Leterc'hadek : métaphorique.
Levenezekaat : kreñvoc'h, donoc'h ha speredeloc'h eo eget "laouenaat".
Leviadurezh : politique (une).
Levierion : dirigeants ls.
Lezenn : lezenn gravezel ar yuzevion.
Lezenn ar c'hevelep : loi du talion.
Lod pe bezh : partie ou tout.
Lomañ : ici-bas.
Lourel : coneret.
Louc'hanvegad : caractère sacramental.
Luc'htres : photographie.
Luoz : armées.
Lusked : motivation.

M

Mab trafadel : fils éternel.
Makka : La Mecque (Arabia).
Marellvaen : marbre.
Marvidi : (les) morts, les défunts.
Mazaviant : pardon.
Mazaviñ : pardonner.
Meid : geste ; **meidou** : gestes.

Meizaderezh : conceptualisation.
Menec'h : fréquent.
Mentenn : dimension.
Merater : masseur.
Merzhadelouriezh : sensualisme.
Merzhad : sentiment, impression.
Merzhidik : sensible.
Mestonkañ : condamner.
Meudoe : cénobite (kv. "meudwy" e kbg).
Meveriañ : méditer.
Mezekniezh dere'hanel : médecine nucléaire.
Milour : soldat.
Mirlod : apanage, domaine réservé.
Moenat : jour de.
Moended : tendresse.
Moneadur : comportement.
Muslimad : musulman (tostoc'h eget ar ger gallek ouzh "muslim", ger arabek orin, o talvezout "feizad", "kredennour").

N

Naouiñ : apparaître.
Navitse : pour autant.
Neges : message.
Neñvannerc'h : oracle.
Nepek : nul.
Nesaelezh : proximité, intimité.
Neuzelezh : apparence ("neuzelezh varvel" = apparence mortelle, de mort).
Neuzelouriezh : docétisme.
Neved : temple.
Nevedenn : sanctuaire.
Nevediadezh (b) : sacerdoce.
Nevedlog : tabernacle d'autel.

Nevegezh : *gnose.*

Nevet : *sacré.*

Nevezkevamoud (g) : *Nouveau Testament, Nouvelle Alliance* (kv. "kevamod" = *alliance e kbg*).

Nevezkevamoudel : *néotestamentaire.*

Nouez : *personne* ; **nouezioù** : *personnes* .

Nouezdenel : *relatif à la personne humaine.*

Nouezdenelour : *personnaliste.*

Nouezelezh : *personnalité.*

Nuñvrenket : *canonisé* (renket = *santel*).

No... No... : *pe... pe...*, stumm bigoudennek da geñveriañ ouzh ar c'hembraeg "neu... neu..."

O

Oadourion : *adultes.*

Oberiat : *actif.*

Olkarantez : *manque d'amour.*

Ouzh ar bon : *au fond.*

Ouzh aters : *en question.*

Ouzh denesâd : *à l'approche de.*

Overez : *vanité.*

P

Parc'het : *vénéré.*

Par-kengrad : *point d'accord.*

Parzh : *partie* ("parzh kevanek" = "*partie intégrante*").

Paskourion : *Pasteurs.*

Pec'hed-hil : *péché originel.*

Pedenn-drugaregezh : *prière d'action de grâces.*

Pengennet ganimp : (bezan pengennet gant unan bennak : *evit un den, bezan degouezhet e penn e labour*).

Pennaenn : *principe.*

Pennarbenn : *cause première.*

Pennarbennat : *se rapportant à la cause première.*

Penndalc'h (ar) : (*l*)*'essentiel.*

Penndalc'hel : *essentiel, capital* ; (ivez : *hennadel*).

Penndevoud : *principe.*

Pennfinvez : *fin dernière.*

Penngfluskour : *premier moteur.*

Penniliz : *cathédrale.*

Penn-Riez : *Chef d'Etat.*

Pennvon : *principe fondamental.*

Pep kenfeur en e reizh : *toute proportion gardée.*

Perzhiat : *participant.*

Peurarstal : *persévérance.*

Peurastalus : *persévérant.*

Peurbadel : *éternel* (evit un den).

Peurboellad : *persévérance.*

Peurboelladus : *persévérant.*

Peuremged : *don total de soi.*

Peurhegomz : *tout à fait parlant.*

Peurvarradur : *achèvement, consommation.*

Peurvoud : *l'Être parfait.*

Peurvoudel : *ontologiquement parfait.*

Pezh pe lod : *tout ou partie.*

Piaoued : *habitus, acquis.*

Piaouedel : *habituel, d'habitus.*

Piaouel : *propre.*

Plaenaat : *expliquer, exposer.*

Pleustridigezh : *recherche, fréquentation.*

Pleustrour : *pratiquant (un).*

Presour : *délicat, prévenant, bienveillant.*

Presoured : *délicatesse, prévenance, bienveillance.*

Purdan : *purgatoire.*

Purdanel : *du purgatoire.*

R

Rad (b) : grâce.
Rad-piaouedel : grâce habituelle.
Rad-yonaat : grâce sanctifiante (justificatrice).
Rad erouezel : grâce actuelle.
Radwerc'heg : charismatique.
Ragampegadoù : conditions préalables.
Ragampoentañ : anticiper.
Ragemaozerezh : préparation.
Ragorel : excellent.
Ragwezhañ : présider une assemblée liturgique.
Raklenadelezh : antériorité causale.
Rakveziad : antécédent, présupposé.
Rakwezat : préalable.
Ratozhiegezh : résolution.
Ratreañ : réparer.
Razas : assurément.
Realañ : se comporter.
Realezh : comportement.
"Redintegratio" : adframmidigezh.
Reizhidigezhus : qui apporte la justification.
Reizhoniell : juridique.
Reizhvriaded : orthodoxes.
Reizhvriezh : orthodoxie, ensemble des églises et des doctrines orthodoxes.
Renad : régime.
Reñverek : excessif.
Reoladoù : normes.
Restañ : rapporter, citer.
Retvez : nécessité.
Retvez-araez : nécessité de moyen.
Retvez-arc'heb : nécessité de précepte.
Retvezek : nécessaire, essentiel.
Reveg (g) : ténacité.
Revoud : existence.

Rezedadur : nivellement.
Rezid : liberté.
Riezel : étatique.
Rikdezevet : bien intentionné.
Rinek : secret.
Rinwaz : secrétaire.
Rinwerc'h : vertu, propriété efficace.
Rizhenn lennegezhel : genre littéraire.

S

Sacrosantum concilium : goursened nevetsantel.
Sal-uhel : chambre-haute.
Saveladur-ster : détermination de sens.
Savelek : établi, déterminé.
Savelenn : loi physique.
Savelidigezh : institution, evel "ensavidigezh".
Saviad : situation.
Saviadelezh : "situationalité".
Savlec'h : position.
Saw : maïs (ger kernowek).
Sederni (g) : sérénité.
Sennoeroù : sens.
Seulad : strate.
Sev : à savoir, c'est-à-dire.
Skarat : trancher un problème, prendre une décision.
Skarenn : secte.
Skiantelourion : des scientifiques.
Skindagañ : irradier.
Sklaeriaduret : illuminé.
Skogusted : impact.
Skolbredouriezh : (anv) Scolastique.
Skolbredouriezhel : (adanv) scolastique.
Skortweliat : superficiel.
Skouarnfediñ ouzh : être à l'écoute de.

Skrivour : copiste.
Soliegezh : bien-fondé.
Solvoud : fondement.
Solwez : substance.
Solwezel : substantiel.
Speredelour : spiritualiste.
Spesoù kantouestlet : espèces consacrées.
Spletoù : avantages, dons.
Stadadur : constatation.
Stervarnour : exégète.
Stervaen : aérolithe, météorite.
Stlennadoù : informations.
Stlennataerezh : l'informatique.
Stlesc'hoafadur : percement du côté avec une lance ("stles" = "kostez", diwar ar c'hembraeg "ystyls").
Stokelloù : touches.
Stronkpoull : le cloaque.
Stropañ : attaquer (individuellement).
Stuz-emesteuziñ : état d'anéantissement.
Stuzegezh : culture, manière de vivre collective, mœurs.

T

Talet : payé.
Talvoudekadur : mise en valeur, valorisation.
Talvoudel : valable.
Taraz : risque.
Tebek : probable.
Tegañ : confirmer.
Terkoni : disposition morale générale.
Terkoniad : disposition morale.
Testoù gwelat : témoins oculaires.
Teveziñ : présider une assemblée ecclésiastique (an arlevier eo Jezuz e-unan).
Tidel : arbitraire (anv).

Tidelezh : arbitraire, (adanv).
Tiernac'h : dynastie.
Tilu : famille, lignée.
Tiriad : territoire.
Tizhwerc'h : portée (ivez : "odol").
Tomazour : thomiste.
Toc'hor : mourant ; **Toc'horion** : mourants (ivez : Tremenvaniad (idi)).
Tostennañ : flatter.
Tosturiñ ouzh : avoir pitié (kv. "tosturi" e kbg).
Tonkadegezh : caractère fatal et fataliste.
Trabedel : métaphysique.
Trabedoniel : métaphysique.
Trac'hoant : convoitise.
Trafadel : éternel, d'éternité divine.
Trafadelezh : éternité de Dieu.
Tragouzel : éternel (o komz eus Doue).
Tralen : absolu.
Tralenat : absolu.
Tralended : absoluité, caractère absolu.
Travoud : être physique.
Tre arouesaat : transsignification.
Trebadout : subsister.
Trefouezhiantelaat : transfonctionnalisation ("fouezhiant" diwar "ffwythiant" = fonction).
Tregemmañ : transmuter.
Trehontel : transcendant.
Trehontelevh : transcendance.
Trehontvoud : Etre Transcendant.
Treiñ krampouez diwar yod : noyer le poisson.
Trelankañ : dépasser.
Trelusker : catalyseur.
Treouestl : initiation.
Tresolvezadur : transsubstantiation.
Treüded : identité d'être vivant (hevelepted da badout).

Trevekaat : *exploiter, (ster gwellaat).*
Trevnañ : *organiser.*
Trevonnañ : *dépasser, déborder.*
Trevourel : *civil.*
Trewerc'hel : *métaréel, "sur-réel" (Martelet).*
Trewerc'helezh : *métaréalité, "sur-réalité".*
Treuzez : *transgression, délit.*
Treuzdevezet : *mal interprété.*
Trezerc'h : *hallucination.*
Trezerc'hel : *entretenir.*
Trugaregezh : *grâce, reconnaissance ; "dougen trugaregezh" = rendre grâce, exprimer sa reconnaissance.*
Trugarek : *reconnaisant.*
Tudenn (en e dudenn) : *en sa personne.*

U

Unc'henezhiz : *monophysites.*
Undoueadegezh : *monothéisme.*
Ungenezh : *homogène.*
Unleaned : *ermîtes.*
Unnuez : *personne unique.*
Unvaniezh nouezel : *union hypostatique.*
Urzhadevion : *ordinands (unander : "urzhadou").*
Urzhazel : *hiérarchique.*
Urzhiadurezh : *ordonnancement.*
Urzhiadurezh ar Silvidigezh : *Economie du Salut.*
Urzhidigezh : *ordination.*
Unseurt : *unique.*
Ur pe c'hoñvor : *une certaine mesure.*

W

War sol : *sur la base.*

War stign : *(question) en suspens. ouverte.*

Y

Yoc'h : *masse.*
Yoc'hstlenn : *mass-media.*
Yolwalc'herezh : *impétration (reiñ he gwalc'h d'ar bedenn : "yol").*
Yolwalc'hus : *impératoire.*
Yolerezh : *oraison (acte d'oraison).*
Yon : *juste, ag.*
Yonez : *justice.*
Yonder kentidik : *justice primitive.*
Yonidigezh : *justification.*
Yonez ha hez : *justice et paix.*
Yor : *Seigneur.*

Very truly yours,
[Signature]

Dear Sir,
I have the honor to acknowledge the receipt of your letter of the 10th inst. in relation to the matter mentioned therein. I am sorry to hear that you are not satisfied with the result of the examination. I will be glad to re-examine the matter if you wish. I will also be glad to refer the matter to a third party if you so desire. I am, Sir, very respectfully,
Your obedient servant,
[Signature]